


AR

bed

kelziek



Revue mensuelle-N°13-Janvier 1960 Kelaouenn vizek - Niv.13 - Genver 1960
Abonnement annuel : 7 nouveaux frs.Koumanant-bloaz : 7 lur nevez.
"AR BED KELTIEK", 21, rue Dixmude, Brest - K.R.1.907-07-Rennes.

111
111
111
111
111
111
111
111
111

BLOAVEZH MAT I

111
111
111
111
111
111
111
111
111
111
111
111
111
111
111

B O D A D E G V E U R

S K O U R R B R E I Z H

A R C ' H E N D A L C ' H K E L T I E K

Kastellin, 11 Du 1959

D A N E V E L L S K R I D

111 20 a dud o deus kemeret perzh er Vodadeg Veur. An Ao.F.Kervella
111 a voe anvet da gadoriad, an Dim.I.Martin da sekretourez.

111 1. LABOUR AR MINTIN

111 Danevellskrid ar Vodadeg Veur a warlene a zo lennet da gentañ.
111 Goude se, danevellskrid kadoriad ar Skourr. Pouezañ a ra dreist-
111 -holl war ar pezh a zo, d'e soñj, pennañ kefridi SKOURR BREIZH : reif
111 lusk d'un Emsav ar Brezhoneg Komzet. Merk ispisial ar Skourr eo bet
111 kement-mañ azalek an derou : pep tra dre ar brezhoneg. Ret eta en em
111 welout, en em zaremprediñ, en em vodañ, an aliesañ ar gwellañ.
111 Goulenn a ra kas priz ar skod eus 500 da 700 lur.
111 Erfin, degas a ra da soñj e vo ret sevel (evel ma raio pep hini
111 eus ar 6 Skourr) un danevellskrid diwar-benn buhez sevenadurel ar Vro
111 e 1959.

111 Goude bezañ burutellet kement-mañ un nebeut, divizout a reer
111 gortoz ma vo degouezhet an izili a dle dont d'an abardaez, evit
111 reizhañ a-gevret an nebeut kudennoù-mañ.

111 Ronan Huon a gomz dimp eus Kendalc'h Din Edin, eus ar blijadur
111 o deus bet oc'h adkavout mignoned kozh eus an holl vroioù keltiek.
111 Un degemer brav a vo graet dezho, ofisiel e Din Edin, hag ez prevez,
111 en un doare plijus-tre, gant Maer Glasc'hu. Lenn a reas un nebeut
111 notennoù diwar-benn "AR BED KELTIEK", hag ivez ur pennad savet gant
111 Arzel Even war d-"Talvoudegezh Hêrezh ar Pbloù Keltiek"

Da greisteiz e voe kemeret ar pred a-gevret. 111

2. LABOUR AN ENDERVEZH 111

Adlennet eo danevell ar c'hadoriad evit an izili a oa ezvezant d'ar beure. 111

Lennet eo danevell an teñzorier : chom a ra er c'hef d'an 11 a viz Du : 5.680 lur. 111

Ret eo d'an teñzorier dilezel e garg en abeg d'e labour ha d'e vec'hed. 111

Reiñ a ra ar sekretourez un nebeut diskleriadurioù war ar mererezh. Divizet e oa bet warlene e vije diskleriet ar gelaouenn. Sed a zo bet graet e penn kentañ ar bloaz. N'eo deuet an aotre avat nemet evit niverenn Ebrel. 111

Un nebeut arc'hant a zo bet gounezet evel-se, met, dres en hevelep amzer, kreskiñ a rae un tamm brav priz ar moulañ, eus 4.690 lur ar miz da 6.744. 111

Ret eo lavarout ivez, ma n'eus bet ezel nevez ebet, ez eus 8 koumananter nevez. Chom a ra avat 24 ezel ha n'o deus ket paeet o skod. Panevet se hor bije tapet aes fin ar bloaz. 111

Ingalet e vez bep miz well-wazh, en un doare distag, 250 follenn DALC'HOMP er skolioù, er c'helc'hioù. Goulennet ez eus bet ivez evit ingalañ er beilhadegoù. Dipitus eo zoken ne vije ket tu da greskiñ al lodenn-se. D'ur goulenn a draoù arnevez, Roparz Hemon a respont : "Me oar e c'hellfe bezañ kant gwech dudio soc'h, bravoc'h, ha dreist-holl diouzh spered ar yaouankiz a vremañ. Hogen, atav ar memes diskan: ret e vefe kaout kenlabourerien ampart." 111

Resevet lizhiri digant izili :

Per Even a skriv : "Amañ e Treger e klaskimp lakaat beilhadegoù dindan levezon ar SKOURR, rak diaes eo ober gwelloc'h evit ar yezh komzet eget seurt abadennoù laouen, ken plijus." 111

Andrev Latimier a lavar : "Souezhet on alies gant spered boure'hiz kalz ac'hanomp. Da skouer, daou goumananter, pe izili eus ar SKOURR o chom en hevelep parrez hag o chom hep en em zarempredif ! ... pa vijec'h o c'hortoz kentoc'h darempredoù hegarat, kenlabour, bruderezh." 111

Da lavarout eo, e pep korn e santer ez eus ezhomme eus darempredoù estreget dre lizher pe dre baper. 111

Al lizher pouezusañ war gement-mañ, a gredan, a zeu digant Yann Ar Beg : "Kinnig a ran e vije bodet ar C'huzul bep tri miz e Kastellin. Studiet e vije ar c'hudennoù a sell ouzh pep kevredigezh a zo er C'huzul. N'eo ket labour a vankfe. Unan eus ar bodadegoù trimiziek a c'hellfe bezañ dediet d'ar SKOURR." 111

Un dra all :

Goulennet ez eus bet meur a wech digant an izili kas din chomlec'hioù tud hag a c'hellfe bezañ dedennet gant AR BED KELTIEK. Keloù am eus bet digant 5 ezel. Ar re all n'anavezont den marteze ? Ar priz kentañ a ya gant an Ao.Boucher, a gasas 8 chomlec'h war un dro. 111

Er Vodadeg Veur warlene, e voe studiet, dreist-holl, kudenn an darempredoù etrekeltiek, ha divizet pellik a-walc'h eus ar pal merket er reolennoù : "Derc'hel bev sevenadur, uhelvennadoù ha yezhoù ar pobloù keltiek, lakaat ar pobloù kelt d'en em anavezout ha da genlabourat war an holl dachennoù." 111

111 E gwirionez, e-mesk izili ar SKOURR, n'eus ket kement-se a dud a
 111 ve gouest da labourat en un doare efedus war an tachennoù-se. Met
 111 bez' ez eus koulskoude un niver brav : tud a anavez yezhoù keltiek,
 111 tud hag o deus darempred gant Kelted tramor. Ha ne vije ket reizh
 111 gwelout an dud-se o sevel ur seurt "Komision". Dezhio d'en em glevout
 111 evit rannañ al labour hervez galloud pe c'hoant pep hini.

111 Neuze marteze e krogfe ar ger "etrekeltiek" da gaout ur ster
 111 gwirion evidomp.

111 Gant ar soñj aesaat kement-mañ eo e roan va dilez evel sekretourez
 111 ar SKOURR. Met bez' e c'hellan kenderc'hel evel en diaraog da ober
 111 war-dro mererezh AR BED KELTIEK.

111 ---
 111 Burutellet eo an nebeut kudennoù a-us, ha divizet goude votadeg :

- 111 1) Kas da 700 lur ar skod.
- 111 2) Derc'hel ur vodadeg bep tri miz, an hini gentañ da vezañ e
 111 Kastellin d'an 11 a viz C'hwevrer 1960.
- 111 3) Envel an Dim.Martin da defizoriez ar SKOURR.
- 111 4) Envel da sekretour ar SKOURR Youenn Olier.

111 Kement-mañ betek ar bloaz a zeu, ma vo adanvet ar Poellgor.

111 ---
 111 An Ao.Y.Olier a asant strollañ an danevelloù war ar vuhez
 111 sevenadurel e Breizh e 1959.

111 ---
 111 Bez' e c'hellomp trugarekaat a-greiz kalon an Ao.Dubourg evit
 111 bezañ dalc'het e-pad 3 bloaz, daoust dezhañ bezañ sammet a labour
 111 a-hend-all, ar garg a defizorier.

111 ---
 111 RADIO. - Adskridoù ar respontoù graet gant ar R.T.F. e Pariz da
 111 lizhiri ar Prezidant Pleven a zegas dimp dindan ur stumm hegarat un
 111 "n'eo ket posupl ..." da vat.

111 Koulskoude, tud KEVREDIGEZH SELAOUERIEN AR RADIO n'int ket fall-
 111 galonet evit se. Emaint o soñjal embann melloù skritelloù da ledañ
 111 dre ar Vro.

111 Lod anezho a soñj ne vefe ket fall marteze, peogwir ne c'heller
 111 ket klevout ar Vretoned er Radio, sevel pladennoù evit ar skolioù,
 111 oc'h embann pennadoù tennet eus oberoù hor gwellañ skrivagnerien, ha
 111 pa vefe tro, lennet gant ar skrivagnerien o-unan.

111 Se a c'hellfe bezañ ur rann eus ar gevredigezh.

111 ---
 111 An Ao.J.P.Boucher, ijinour, a zispleg dimp emeur oc'h adsevel karte-
 111 nnoù kadastr dre bastell-vro. Ar re a zo bet adsavet gantañ evit pastell
 111 Speied a zo ledet gantañ dirazomp. Reolenn start ar Melestradur a zo
 111 "skrivañ ar ger evel ma vez distaget er vro". Ur chañs eo gwelout tud
 111 barrek war o yezh evel an Ao.Boucher o labourat war an dachenn-se. Ar
 111 c'hartennoù-se a servij, goude, da ziazez evit sevel kartennoù bras.
 111 Al labour-mañ ne oa ket bet graet abaoe 100 vloaz. Salv ma savo an Ao.
 111 Boucher ur pennad war ar gudenn. Plijus e ve dimp gouzout hiroc'h.

111 ---
 111 Ur stal levrioù-bugale a zo bet savet gant Per Denez en ur c'horn.
 111 Chom a rafec'h da follenniñ, ken brav eo ar skeudennoù. Pep hini a ra e
 111 zibab. Ha poent eo kimiadifi, sur, ar wech-mañ, d'en em welout d'an
 111 nebeutañ e miz C'hwevrer.

111 IVONA MARTIN

AL LORZIF

A R

R O C' H E L L E G

(Trede Pennad)

111 Diazez ar roc'helleg a zo karrezek, 3:3 m. En tu d'ar gevred e
111 sav da war-dro 2 droatad. Un diribin serzh a zo eta en tu-se, tra ma
111 tiskenn goustadik war-du ar gwalarn.

111 Ar barr a zo graet gant bruzun taouarc'h treazhek dreist-holl,
111 a-us d'ur gwelead mein bihan. Rak eno hepken e c'hellan kaout spi da
111 welout ar pemp pe c'hwec'h brugenn am eus degaset en hañv tremenet
111 diouzh runioù Tir Konell o teurel bleuñv : nemet ar ouenn Erica Carnea,
111 ec'h argarzh ar brug an douaroù razek, ha re a raz a zo en douar-mañ.

111 En o c'hichen em eus lakaet div voudennad tin-lann, hag o deus
111 diskouezet, en doare ma'z int en em ledet abaoe pevar miz, en em ober
111 mat-tre diouzh ar vuhez e kêr.

111 Menegiñ a ran diouzhtu an div orkizenn hag an had kalied am eus
111 daspugnet ivez war aodoù Loc'h Swilli. An "orchis", hag a vrezhonekafen
111 da v-"boked-an-divgellig", diwar skouer an iwerzhoneg, a zo bet roet
111 dezho un takadig amdek traezhek e traoñ an duchenn, en tu d'ar c'hreis-
111 teiz. Heñvel outo, e kar an Nierembergia, desavet e-pad an hañv, ha
111 plantet en o c'hichen, heol a-zioc'h o fenn hag un tammig glebor ouzh
111 o zreid. Gant ar c'halied (Armeria Maritima) emañ oc'h ober un
111 arnodenn, kement ha gwelout hag-eñ e c'hell ur blantenn a gresk tre en
111 aod en em ober diouzh goularded un hanter leviad en douaroù.

111 Ar seurt Armeria-se a zere mat-tre evit ober gwrmennoù glas-gwer,
111 stank ha tev. O bleuñv a denn da re ar jenofl, pezh a dalvezje dezho
111 o anv gwenedek, "(k)alied". Ur seurt kalied brasoc'h, hañval a-walc'h
111 o delioù ouzh re ar stlañvesk, a zo deuet diwar had ivez e-pad an hañv,
111 en ur pengenn a-gostez, ma em boa taolet, ouzhpenn, had Aubrieta
111 (beler-kerrég), Iberis, Sempervivum (bod-kantin), ha pink allwoodii
111 alpinat.

111 Ar beler-kerrég, hag a vez dezhañ bleuñv mouk a bep seurt arlivoù
111 etre roz hag arc'hlas, adalek derou Meurzh, a chom izel a-ruz. Ar
111 gwellañ eo reiñ tro dezhañ d'en em ledañ war ar roc'helloù, da c'holeiñ
111 anezho a-ispilh. Ar bod-kantin a vez gwenn-glan e vleuñv war lenn
111 glas-dalbec'h e zelioù. An daou seurt-se n'int ket milzin. Ar pink
111 alpinat a c'houlenn avat un dizouradur disi dindanañ. Ober a ra
111 bodennoù geot arc'hant, izel, hag e vleugn adalek Mae betek Here.
111 Lakaet em eus anezhañ war un uhelgompezenn heoliek, ha 6-8 cm. donder
111 da vihanañ evit e wrizioù da c'hwiliañ an diazez mandraezhek temzet
111 gant ludu-koad.

111 Plant tolzennek a bep seurt a zere mat-tre evit ar roc'helleg
111 ivez.

111 E-doug miz Here em eus lakaet amañ hag ahont, a-dakadoùigoù, ivinoù
111 roz-kamm, eus ar ouenn Cyclamineus, hag a dle o bleuñv melen-aour
111 degas soñj eus balafenned o parañ ; ivinoù treuz-erc'h, en traoñ en tu
111 d'an hanternoz, e-kichen al letonenn, peogwir ne vouzhont ket ouzh an
111 disheol, hag e vez tremenet o amzer war an douar pa zeu poent mediñ
111 ar geot ; re ar Chionodoxa, holl a-gevret : ar plant-mañ a reer anezho

e saozneg "klod an erc'h", dre ma vezont en o brud, evel an daou seurt 111
meneget diouzhtu ken abred ha C'hwevrer-Meurzh. 111

Peder zorzhell bara-an-hoc'h (Cyclamen) eus ar gouennoù Coum ha 111
Repandum am eus ranket kaout diouzhtu da lakaat er roc'helleg ivez. 111

Goude un nebeut bloavezhioù, e sav ur familhad stank en-dro da bep hin 111
eus ar seurt-se. Setu perak em eus lakaet anezho 30-40 cm. an eil 111

diouzh eben. O bouetaet em eus gant ur meuzad rotel-delioù, met n'em 111
eus graet nemet o damc'holeiñ. Evit an ivinoù, er c'hontrol, em eus 111

miret peurvuiañ ar reolenn, dre sankañ anezho e toulloù don ha 2 1/2- 111
-3 gwech o sav, gant ul livadenn draezh en deun. 111

An holl blant-se o deus "charreet o Gouel-Mikael" eta e-pad miz 111
Here. Evit an hanter zousenn Ixia (lili-an-ed), em eus gortozet derou 111

miz Du. Ar re-mañ o deus ar brud da vout kizidik. Ezhomm a zo d'o 111
diwall diouzh an avel yen ha diouzh ar rev. Abalamour d'o bleuñv 111

steredheñvel kreizennet-teñval emañ oc'h ober an taol-arnod ganto. 111
Renket em eus ar plant e doare ma vo atav ur rummad anezho en o 111

bleuñv e pep korn, nemet e-pad ar goañv bras evel just. Ret eo gortoz 111
ma teuy ar raktres-se da wir ! Ha raktaolenn al livioù a c'houlenn 111

ivez ma vo kemmet lec'hiadur lod anezho. Anzav a ran ne c'hellan ket 111
diawelout an daolennad anezho. 111

ALAN HEUSSAFF

(16.11.59)

Eil Pennad

GERIOÙ KELTIEK

Notenn. - Hol lennerien o devo merzet hep mar e oa ur fazi er 111
c'hentañ pennad, embannet warlene (Niv.10, p.110) : ar gerioù manavek 111
maase hag ollagh a zo bet lakaet e lec'h ar gerioù skosek crodh ha 111
spréidh (niverenn 8). 111

AL LOENED (Kendalc'h)

<u>BREZHONEG</u>	<u>KERNEVEG</u>	<u>KEMBRAEG</u>	<u>IWERZHONEG</u>	<u>SKOSEG</u>	<u>MANAVEG</u>
1.logodenn	logosen	llygoden	luch	luch	lugh
2.razh	logosen vras	llygoden Ffrenig	franeach	radan	roddan
3.naer	sarf	sarff, neidr	nathair	nathair	aarnieu
4.prefiv	pryf	pryf	péist	cruimh	beisht
5.evn, labous	edhen	edn, aderyn	éan	eun	eean, ushag
6.kilhog	culyek	ceiliog	coileach	coileach	kellagh
7.yar	yar	iâr	cearc	cearc	kiark
8.gwaz	goth	gŵydd	gé	gèadh	guiy
9.houad	hos	hwyad	lacha	tunnag	tunnag
10.alarc'h	alargh	alarch	eala	eala	ollay
11.amprevan	pryf	pryf	feithid	speach	beishteig

111	12.kelienenn	kelyonen	cylionyn,	cuileog,	cuileag	quailag
111			cylionen,	cuil		
111			gwybedyn			
111	13.gwenanenn	gwenenen	gwenynen	beach	beach,	shellan
111					seillean	
111	14.pesk	pysk	pysgodyn	iasc	iasg	eeast

NOTENNOU

111 2. B.razh, koulz hag A.radan, M.roddan, a zo germanek a orin.
 111 N'eus ket a c'her keltiek, war a hañval. Ar ger kembraek a dalv kement
 111 ha "logodenn c'hall", ar ger iwerzhonek kement ha "Gall".

111 4. A.cruimh a zo kar d'hor ger preñv.

111 5. B.labous a dle bezañ romanek a orin, evel hogos an holl
 111 c'herioù oc'h echuiñ gant cc e brezhoneg-krenn (lapoucc, laboucc er
 111 c'h-"Catholicon"). Hep mar ez eo kar da L.locusta "kilhog-raden" hag
 111 ivez "grilh-vor", da G.langouste "grilh-vor", ha d'hor ger legestr.
 111 Ar gerioù-se a gaver meneget alies en oberoù E.Ernault, hogen ar gudenn
 111 a zo diaes-tre da ziluziañ.

111 10. B.alarc'h a zo bet amprestet en 19-vet kantved digant ar
 111 c'hembraeg. Er skridoù brezhonek kozh ne gaver nemet cing (brezhoneg-
 111 -krenn), sin, sign, diwar G.cygne.

111 11. B.amprevan a vez implijet er skridoù naturouriezh gant ster
 111 ar ger latin insectum. Ster amprevan e brezhoneg-pobl (ha zoken e
 111 brezhoneg lennek) a zo war un dro ledanoc'h ha diresisoc'h. E yezh-
 111 -pobl ebet ne gaver ur ger da glotañ ouzh ar ger gouiziek insectum
 111 (hag a dalv e gwirionez kement ha "troc'het ennañ" !) Er yezhoù
 111 keltiek all n'eus ket bet kavet gwelloc'h eget "preñv", pe "krouadur
 111 askellek" (E.feithid), pe zoken "gwespedenn" (A.speach).

ROPARZ HEMON

C'HOARIVA IWERZHONEKUR PEZH-C'HOARI GANT JARL PRIEL C'HOARIET E DULENN

111 Bep abardaez, etre ar 14 hag an 19 a viz Kerzu, e voe displeget
 111 e c'hoariva iwerzhonek Dulenn "Ar Spontailh", oberenn vrudet J.Priel.

111 An droidigezh a zo bet graet gant Róisín Ní Shéaghda. Rener an
 111 displegadenn oa Séamus O Tuama, he fried. O-daou int anavezet-mat e
 111 Breizh.

111 Kinkladur ha gwiskamantoù a oa dereat. (Ali a oa bet goulennet
 111 digant Alan Heussaff). An aktored a oa holl ampart-kenañ war o micher.
 111 Ar pezh-c'hoari a reas berzh hag a voe degemeret gant ar skridvarnour-
 111 ien gant meuleudi e-leizh.

KELTIA KOUERIEK VREIZH A RA TROUZ : D'ar 14 Kerzu e voe aozet displegadegoù kouerien e Breizh (ar wech kentañ abaoe pell ma weler Breizh o stourm a-dolpad hag a-gevret eus ur penn d'ar Vro d'egile). 111

Da heul devezh-enebiñ miz Here e departamant Penn-ar-Bed, ne oa bet graet mann gant ar gouarnamant da wellaat stad al labourerien-douar. Ar gouerien a gavas dezho eta e oa ret skeiñ adarre. 111

Pezh a c'houlennont eo : 1) indeksadur ar prizioù e-keñver al labour-douar, 2) gwarez kevredigezhel ha kelennadurezh vicherel par da re al labourerien all. 111

E Kemper, Montroulez, Landerne, Kaodan, Naoned, Sant-Brieg, Roazhon, e voe graet bodadegoù ha dibunadegoù bras, daoust d'an amzer fall. Diaes jediñ niveroù an dud deredet eus ar parrezioù. Hervez kazetenoù a-du gant ar gouarnamant, e oa 10.000 e Landerne, e Montroulez hag e Roazhon, 15.000 e Kemper, 20.000 e Sant-Brieg. 111

Pep tra a voe sioul, zoken e Montroulez, m'o doa ar gouerien lavaret kemer an ti-hent-houarn ha mirout ouzh an trenioù da dremen. 111

Nec'het e vez Breizhiz o welout gouarnamant Pariz o tispign arc'hant bras en Afrika, tra ma'z eus dienez ha dilabour er Vro. Evel ma voe diskleriet e Naoned : "E-kichen an aozadurioù a venner sevel, arabat ankounac'haat an diazezoù rekis." 111

DRE AR BED DOUAR AR PEOC'H ; ANTARKTIKA : E derou miz Kerzu e voe sinet emglev etre ar Stadoù-Unanet, Rusia, Breizh-Veur, Arc'hantina, Chili, Aostralia, Zeland-Nevez, Frañs, Belgia, Norvegia, Japan ha Suafrika evit neptuekaat Antarktika. E-pad 30 vloaz, ne vo savet er rann-se eus an Douar diazezelec'h-brezel ebet. Digor e vo d'an holl da ober studioù gouiziegezh. Ensellet e c'hello bezañ gant ne vern pehini eus ar sinerien evit suraat e talc'h ar re all d'an emglev. 111

BEAJ EISENHOWER : Eisenhower a reas e miz Kerzu brasañ hag hirañ beaj biskoazh graet gant ur Prezidant eus ar Stadoù-Unanet. D'ar 4 e te-gouezhas e Roma. Degemeret e voe gant ar Prezidant Gronchi ha gant ar Pab. Neuze e nijas da Ankara, Karachi, Delhi, Teheran, Aten. Eus Aten ez eas gant al lestr-reder "Des Moines" da Duniz, hag ac'hano da Vro-C'hall. 111

D'an 19 e tigore e Pariz emzivizoù etre Eisenhower, Macmillan, Adenauer ha De Gaulle. 111

KUDENN ALJERIA ER BROADOU UNANET : Ar mennad kinniget gant ar Stadoù afrikat-aziat evit goulenn kendivizoù etre gouarnamant Frañs hag ar vroadelerien aljeriat ne voe ket degemeret gant Bodadeg Veur ar Broadoù Unanet e miz Kerzu. Hogen ar Stadoù-Unanet a chomas neptu, pezh a feukas Bro-C'hall. 111

BODADeg AN EMGLEV ATLANTEK E PARIZ : Kannaded eus broioù an Emglev Atlantek en em vodas e Pariz d'ar 15 Kerzu. En devezhioù a-raok e oa bet brud eus dizunvaniezh etre an izili. Bro-C'hall dreist-holl a veze tamallet dezhi gant ar Stadoù-Unanet kemer un hent diforc'h diouzh hini ar re all, hag enebañ ouzh kendeuzadur an nerzhioù atlantek. An Ao. Herter, Sekretour-Stad ar Stadoù-Unanet, a zisklerias n'o doa ket ar Rusianed diskroget diouzh o menoz dizober an Emglev Atlantek ha 111

111 rediañ an nerzhioù amerikan da zilezel Kornog Europa.

111 An amiral amerikan Boone a lavaras e oa sklaer : 1) o deus ar
111 Soviedoù nevezet o armoù nukleel hag ordinal, 2) e c'hellont tagañ e
111 ne vern pelec'h war o harzoù, 3) ez eo o listri-spluj ken kreñv ha
111 biskoazh, 4) ez eo atav er broioù atlantek emañ ar riskl brasañ.

111 DOUR-BEUZ E PROVAÑS : D'an 2 Kerzu, diwezhat en noz, ur fardell vras
111 a-dreuz ur stêrig a dorras trumm gant pouez an dour dastumet da heul
111 glaveier pounner. An draonienn a voe aloubet gant ar froud, a yeas da
111 skeiñ un nebeut war-lerc'h ouzh kêr Frejus. Braouac'hus e voe an dis-
111 mantr. Ouzhpenn 400 a dud a voe lazhet, hag un niver brasoc'h c'hoazh
111 a gollas kement tra o doa. En devezhioù kent, an holl vroioù en tu
111 kornok eus ar Mor Kreiz a voe skubet gant korventennoù.

111 KIPRENEZ ; AN AOTROU MAKARIOS ANVET DA BREZIDANT : D'an 13 Kerzu e
111 votas Gresianed Kiprenez da envel ur Prezidant. An Arc'heskob Makarios
111 a voe anvet gant 144.501 a vouezhioù, 71.753 o vont gant e gevezer
111 Clerides, danvez-prezidant an Unaniezh Demokratek (Tu Dehou), harpet
111 gant ar gomunourien. Kerkent ha ma voe kemennet disoc'h ar votadeg, e
111 reas an Arc'heskob ur c'halvadenn d'ar bobl, o c'houlenn peoc'h ha
111 kenlabour etre Gresianed ha Turked an enezenn.


111 VOTADEG E NIGERIA : Votadeg a voe e Nigeria e Kerzu evit envel ur
111 Parlamant. Hini eus an teir c'hostezenn vras a oa war ar renk ne
111 dizhas gounit an niver-muiañ. Nigeria a vo emren e miz Here er bloaz-
111 -mañ. Bez' e vo unan eus brasañ Stadoù Afrika, enni ouzhpenn 30 milion
111 a dud.

111 ROUE BELGIZ E BRO-GONGO : Ar roue Baldoen a reas ur weladenn dic'hortoz
111 e Bro-Gongo. D'ar 17 Kerzu e tegouezhas e Kerstanley. Degemer brav a
111 voe graet dezhañ gant an Europiz a chom eno. Bagadoù Afrikiz, avat, a
111 oa en em vodet ivez da youc'hal : "Emrenerezh !". Gaz-daeraouifi a voe
111 taolet outo. Er rannvro anvet Kongo-Izel e vez boikotet ar votadeg
111 gant an darn vrasañ eus ar boblañs.

111 INDEZ HA PAKISTAN : Ur gudenn a oa chomet hep diskoulm e-pad bloavezh-
111 ioù a voe plaenaet e 12 devezhiad emzivizoù e-kerz miz Here : kudenn
111 an harzoù etre Indez ha Pakistan ar Reter. Sinaiz o kinnig aloubiñ an
111 div vro a laka anezho da dostaat an eil ouzh eben. An tabutoù etrezo a
111 goazh a-feur ma kresk ar riskl o tont eus ar Biz.

111 INDEZ HA SINA : An Ao.Nehru a zisklerias e Parlamant Delhi d'ar
111 27 Du e vije difennet diouzh ret harzoù Bro-Natal ouzh un argad o tont
111 eus an hanternoz. Goulenn a reas digant an holl Indeziz bezañ unanet
111 evit herzel ouzh Sina.

111 D'ar 15 Kerzu e reas Nehru diskuliadurioù war an doare ma voe
111 gwallgaset ar boliserien indezat paket gant Sinaiz e rannvro Ladakh
111 e miz Here. Lakaet e voent en ur foz goloet gant un tamm lien-koaret
111 hepken, e-pad meur a zevvezh. N'o doe da zebriñ nemet bara sec'h. Ret
111 e voe dezho ivez kousket war an erc'h, e menezioù yen-sklas. Goulenn-
111 ataet e voent e-pad eurvezhioù, rediet en diwezh da sinañ paperenn
111 oc'h anzav e oa bet graet brav dezho, e oant bet maget ha prederiet-
111 -mat, e oant bet paket war zouar e piau Bro-Sina, o doa klasket



KANNAD AR YAOUANKIZ - 35

Hep poan ebet, hep torr-penn,
Forzh pelec'h, e giz pe c'hiz,
Pep den a c'hell deskiñ lenn
BREZHONEG EEUN en ur miz.

- 111 **PLAD-NIJ MARIJAN** Marijan he doa
111 labouret en he fark
111 a-hed an deiz, ha
111 bremañ e oa aet d'he zi d'ober koan. N'he doa ket bet pell da vont. Eus
111 he frenestr (ne oa nemet ur prenestr en he zi bihan) e c'helle gwelout
111 he fark, o teñvalaat e damsklerijenn an abardaez.
111 Un dra bennak a droe en oabl. Ur c'harr-nij, a soñjas Marijan. Ne
111 rae trouz ebet. Met ar vaouez kozh ne oa ket nec'het gant se. Ar
111 c'hirri-nij a rae trouz. Hemañ ne rae ket. Ha goude ?
111 Nec'het e voe avat o welout ar c'harr-nij o chom a-sav, hag o
111 tiskenn goustadik, goustadik ... dres e-kreiz he fark.
111 Marijan a grogas en he loa-bod, kentañ tra a gavas dindan he dorn,
111 a wiskas he botoù-koad, hag a gerzhas war-eeun d'he fark, sonn he fenn.
111 ---
111 Marijan he doa gwelet meur a gemm e doareoù ar bed en he buhez hir.
111 Edo o vont war he fevar-ugent vloaz. Doareoù-bevañ Marijan n'o doa ket
111 kemmet kalz koulskoude. Atav an ti bihan er Rufa, en un draoniennig,
111 hag ar park war an uhel, skubet hañv-goañv gant an avel. En ti-se e oa
111 bet gwaz ha bugale. Bremañ ne oa mui nemet Marijan. Labour, labour.
111 Tristidigezh a-wechoù, a-wechoù levenez. Ar Meurzh o tont goude al Lun,
111 ar Merc'her goude ar Meurzh, hag evel-se betek ar Sul. Ha neuze al Lun
111 o tont adarre.
111 Triwec'h vloaz e oa p'he doa gwelet ur c'harr-tan evit ar wech
111 kentañ, e Plabenneg.
111 - N'eo ket un dra gristen, - he doa lavaret.
111 Abaoe he doa gwelet kirri-tan a bep seurt, bihan ha bras. Biskoazh
111 ne oa bet en unan. Ur wech hepken he doa kemeret an treñ : evit mont
111 d'ar Folgoad. Klañv e oa bet : dislonket he doa, ur vezh, dre ar pren-
111 estr. Distroet oa d'ar gêr war he zroad, dindan ar glav. An tamm "-dont"
111 eus he bilhed mont-dont a oa atav war he siminal, e-kichen an horolaj
111 kouevr dindan ar voull wer.
111 Gwelet he doa marc'hoù-houarn, marc'hoù-tan. Gwelet he doa tankoù
111 an Alamaned, ha re an Amerikaned. Bremañ e wele bemdez kirri-nij.
111 - N'int ket traoù kristen. Foei ! - eme Varijan.
111 E gwirionez, ne rae forzh.
111 ---
111 Met dont en he fark, war he zamm-douar ! Flastrañ he c'haol ! Ya,
111 war he c'haol e oant diskennet, an amprevaned lous-se !
111 He daoulagad a oa mat evit ur vaouez eus he oad. Ar c'harr-nij,
111 war ar marc'had, a lugerne. Ruz-tan e oa, kelc'hiek evel ur plad bras.
111 Ur bugel en dije gwelet diouzhtu e oa disheñvel diouzh pep karr-nij all.
111 Met Marijan ne ouie netra diwar-benn ar c'hirri-nij : eviti e oant holl
111 ken iskis ha ken iskis.
111 Dont a reas tost, ken tost ma stokas he fri ouzh bord ar plad.
111 - Ata ! - a huchas.
111 Kerkent e teuas er-maez dre un norig e-kreiz ar c'harr-nij ul loen,
111 un doare labous a-boan brasoc'h eget ur yar, gwenn e gorf, du e benn, o
111 hejañ peder brec'h, du ivez. Un all a zeuas war e lerc'h, hag un all.
111 Pemp en holl, o sellout ouzh Marijan.

Marijan a reas sin ar groaz. "N'int ket diaouloù," a soñjas. "Mod all e vijent tec'het."	111
- Chou ! Chou ! Dichou ! - emezi, evel ma reer evit pellaat yer.	111
N'eo ket pellaat a rejont, met tostaat er c'hontrol. Ur gordenn a oa ganto. Gant ar gordenn-se, e klaskent stagañ Marijan ouzh o c'harr-nij !	111
- Stagañ ac'hanon ! Stagañ ac'hanon ! - eme Varijan.	111
Ha tapout krog er gordenn gant he dorn kleiz, ha skeiñ gant he dorn dehou. He loa-bod a rae "flak, flak" war bennoù blot al loenedigoù.	111
An emgann ne badas ket pell. Tec'hout a rejont dre an norig e-barzh ar c'harr-nij, a savas diouzhtu en aer ken buan hag al luc'hed.	111
Marijan a chomas e-kreiz he fark, an tamm kordenn c'hoazh en he dorn. Nebeut a zroug a oa bet graet : ur gaolenn hepken troc'het. Marijan a zastumas anezhi. "Da ober soubenn warc'hoazh," a soñjas.	111
En ur zistreiñ e taolas ar gordenn e-barzh ar c'hraou.	111

antronoz (Sul e oa) e teuas eus Brest goude kreisteiz he merc'h-vihan Anna gant an eilmestr he fried d'he gwelout. An eilmestr en doa kaset gantañ un transistor nevez prenet. Dre fouge, hag evit ober souezh d'ar vamm-gozh.	111
N'eo ket an transistor a lakaas Marijan da souezhiñ, met gwelout un den tregont vloaz o c'hoari gant ar voest-se evel ur bugel.	111
Koulskoude ne lavaras nemet :	111
- Añ !	111
Ar voest a reas muzik, ha neuze e teuas ar c'heleier.	111
- Kompren a rit, mamm-gozh ? - eme Anna.	111
Marijan a gomprenne galleg pa gare. Ha pa gare, ne rae ket.	111
- 'Gomprenan ket, - a respontas.	111
- Emañ ar paotr o lavarout e tigrsko koust ar vuhez.	111
- Añ !	111
- O, klevit 'ta !	111
Tevel a rejont da selaou ur c'heloù burzhodus.	111
- Biskoazh kemend-all ! - eme Anna. - Mamm-gozh, c'hwi oar petra eo ur plad-nij ? ... Ur c'harr-nij o tont eus al Loar, pe eus ar stered!	111
- Unan a zo bet gwelet dec'h da noz, - eme an eilmestr. - Gwelet eo bet en oabl eus Lambezelleg, eus Gouenou, eus Milizag ...	111
C'hoarzhin a reas. Anna a c'hoarzhaz ivez.	111
- Ha soñjal, - emezañ, - ez eus tud sot a-walc'h da grediñ seurt traoù ! Gwelout a reont ur goulenn en abardaez, gouloù un tour-tan, pe ul labous, pe me oar ! Hag e kav dezho o deus gwelet ur plad-nij !	111
Ar paotr a oa desket-bras. Bet oa e Brest e skol ar micherioù.	111
- Añ ! - eme Varijan.	111

Pa voe aet an daou bried kuit, ez eas Marijan da sellout ouzh ar gordenn, a oa atav er c'hraou. Un dra iskis oa, hanter gordenn, hanter chadenn. Ne ouie ket e petra oa graet.	111
"Kordenn Añjela a zo uzet," a soñjas Marijan. "Staget e vo gant an dra-mañ, kuit din da brenañ ur gordenn nevez."	111
Hag ez eas da stagañ Añjela he gavr gant ar gordenn chomet war-	111
-lerc'h ar plad-nij.	111
ROPARZ HEMON	111
(Pep gwir miret-strizh)	111

C.C.P.P. N° 36.242.	111
Le Gérant : Mlle V. Martin, 21, rue de Dixmude, Brest-St. Marc.	111
Ronéotypé par Rinciaux, 1, rue Alain Fournier, Brest.	111

bed a anavezomp, a-boan ur c'hant bennak a gantvedoù. Ouzhpenn se, 111
 disteroc'h c'hoazh, hag a-bell, eo hini istor ar Skiant. Netra souezhus 111
 eta ma n'eus bet kavet betek-hen netra asur. Marteze ne vo biken. Ne 111
 c'heller nemet berrdaolennañ an darvoud. 111


Bez' e kreder e rede war c'horre an Douar hanter domm pikolioù 111
 fulennoù tredan. A drugarez dezho, e voe krouet en-dro d'hor planedenn 111
 un aergelc'hiad aezhennoù. Hep aergelc'h d'he difenn diouzh skinoù an 111
 heol, ne oa tu da vuhez ebet da ziwanañ. Dour a voe ganet en aergelc'h- 111
 -se, hag a yeas d'ober morioù gant ar glav. Hep an dour ne c'heller ket 111
 ijinañ kennebeut ar vuhez. 111

Dre un degouezh dispar, e poullouigoù dour klouar, dre ober ar 111
 skinoù dreistmouk, e voe kendeuzet trenkennoù aminaet diwar an hidrogen, 111
 an oksigen, an nitrogen hag ar c'harbon. Dre gengejañ etrezo, e teuas 111
 an trenkennoù-se da vezañ protidennoù, hag a yeas d'ober, liammet evel 111
 ur chadenn, un danvez gludheñvel : koloidennoù. Diwar ar c'holoidennoù 111
 e voe ganet, sur a-walc'h, kentañ dreistviruzenn ar bed. Ur c'horf bev 111
 a oa anezhi, da lavarout eo, ur c'horf gouest da engehentañ korfoù all 111
 kar dezhañ. 111

Ur verrskeudenn n'eo ken eus orin ar vuhez. Kement-se n'eo ket 111
 faltazi avat. Startaet eo bet gant arnodennoù resis. 111

Deuet eur a-benn d'ober sintezenn dreistviruz marelladur ar butun 111
 diwar gorfoù kimiek. Gwelloc'h c'hoazh a zo bet graet e 1953 er Stadoù- 111
 -Unanet : adkrouiñ en un arnodva an doareoù taolennet uheloc'h. Graet 111
 ez eus bet aezhenn-dour berv en ur gambr-gloz, lakaet enni hidrogen, 111
 metan hag amoniak. E-barzh ar c'hemmesk aezhennoù-se e voe lakaet da 111
 darzhañ elfennoù tredan krefiv-tre. Ur sizhunvezh e padas an arnodenn. 111
 Kavet e voe erfin un drenken aminaet, hervez ar vartezeadenn. 111

ALAN TORAVEL 111



LENNEGEZH

DREVEZC'HOARI 111
 GOUEZELEK 111
 EN 111
 "ABATI" 111

Un drevezc'hoari gouezelek a vez diskouezet bep bloaz goude 111
 Nedeleg gant c'hoarierien an "Abati" e Dulenn. 111

Ur yalc'had-skoazell a vez roet gant ar Gouarnamant d'ar Strollad, 111
 war an diviz ma tiskouezint traoù gouezelek a vare da vare, ma 111
 talc'hint d'an drevezc'hoari (Nedeleg) dreist pep tra. Kalz dispignoù a 111
 dle bezañ e gwirionez evit aozañ gwikefreoù, kinkladurioù ha gwisk- 111
 amantoù ken liesseurt hag ar re a zo bet graet ganto en abadenn ar 111
 goañv-mañ, "Gráinne na Long". Etre 6 hag 8 c'hoari heñvel a oa kinniget 111
 da Zulenniz er c'hoarivaoù all d'an hevelep mare. N'eo ket souezhus eta 111
 m'o deus savet ar bismigerien gustum o mouezh evit klask disteraat an 111
 hini gouezelek, ha goulenn zoken ma ve ehanet a reiñ moneiz ar baerien- 111
 -dailhoù evitañ. 111

C'hoariva an "Abati" a oa ur greizenn vuhez en Emsav broadel 111
 kent 1914. N'eo ket mui koulz e vrud. Skrivagnerien 'zo, evel Seán O 111
 Cathasaigh (O'Casey) o deus nac'het zoken aotre da ziskouez o oberennoù 111

I S T O R

D I S K A R A N A R A B E D

(11-vet-19-vet kantved)

Pempvet pennad hon istor an Arabed

(Rann I)

En 11-vet kantved, edo impalaeriezh an Arabed war an diskar. Kouezhañ a reas dre wanderioù a-ziabarzh, dizunvaniezhoù ha melestrerezh fall, ha dre wask nerzhioù a-ziavaez.

Alouberien a zeuas a bep tu : Europiz eus an hanternoz, Berbered eus ar c'hreisteiz, Turked hag Aziiz all eus ar reter.

G W A N D E R I O Û A - Z I A B A R Z H

Evel hon eus lavaret, ne oa bet biskoazh an impalaeriezh arabek kreizennet-start evel an impalaeriezh roman. Kalifed Bagdad koulskoude a oa bet bras o galloud. Tamm-ha-tamm e lezjont o ministred da ren en o lec'h er gêrbenn, tra ma teue gouarnourien ar rannvroioù da vezañ peuzdieub. En 11-vet kantved ne oa mui an anv "Kalif" nemet un titl a enor. Edo ar veli etre daouarn ar "Sultan". (Ar Sultaned kentañ a oa renerien a ouenn bersiat).

An douaroù a voe ingalet etre mistri, pennoù-brezel alies, evel en Europa en amzer ar c'hladalc'helezh. Gant un diforc'h bras avat : ar renerien a chome er c'hêrioù, e-lec'h sevel kestell war ar ploue.

Ne oa mui a c'halloud kreñv a-walc'h da herzel pell ouzh an alouberien.

B R E Z E L I O Û A R G R O A Z

Etre 1096 ha 1291 e voe aozet gant Europiz argadadegoù evit ad-c'hounit an Douar Santel d'ar Gristeniezh. Anvet int "Kroaziadegoù" pe "Brezelioù ar Groaz", hag e voe 8 anezho. Awenet e voent gant ar Feiz, hag ivez, ret e anzav, gant c'hoant uhelidi ar C'hornog da veajiñ ha da derriñ pennoù, ha c'hoant marc'hadourien Italia da astenn o zachenn genwerzh.

An digarez a voe kemeridigezh Palestina gant an Turked, a viras ouzh ar birc'hirined kristen da weladenniñ al Lec'hioù Santel. Ne c'hellomp ket amañ danevellañ an darvoudoù dre ar munud. E 1099 e voe savet ur rouantelezh kristen e Jeruzalem, dindan ar Flandrezad Jafrez Boulun. Stadoùigoù kristen all a voe savet en Antioc'h, Edesa ha Tripoli. Krakvevañ a reas ar Stadoù-se e-pad daou gantved, hep gallout en em astenn kalz. Taget e voent gant Islamiz o tont eus ar Reter hag eus Egipt. O gwashañ enebour, Salah ad-Din (Saladin), o vezañ unanet Egipt ha Siria, a gemeras Jeruzalem e 1187. Jeruzalem a voe daskoret dre emglev d'ar Gristenien en 13-vet kantved, hogen kollet ganto adarre e 1244. Daoust da gadarned an Urzhioù karget da ziwall al Lec'hioù Santel (Templourien, Herberc'hourien), e rankas ar Gristenien dilezel Azia-Vihanañ e 1291.

Levezon don o devoe ar C'hroaziadegoù da skoulmañ darempredoù sevenadur koulz ha darempredoù kenwerzh etre Europa hag ar Reter-Kreiz. Hogen evit an Arabed ne voent ket ken drastus hag an aloubadegoù all. Un etrec'hoari ne voe ken.

111 KOLL IBERIA

111

111 Iberia, - Spagn ha Portugal hiziv, - a oa bet gounezet gant an
111 Arabed en 8-vet kantved. Ne oant diazezet-start, avat, nemet er gevred
111 d'ul linenn o tremen dre g-Coimbra, Toledo ha Pamplona. Er gwalarn, ne
111 oa ket ken kreñv o dalc'h. Pobladoù kristen a chome diganestr zoken en
111 hanternoz da veneziou Kantabria.

111 Ur galifelezh distag diouzh an impalaeriezh a oa bet savet e diwezh
111 an 8-vet kantved, gant Cordoba da gêrbenn. Eno, dreist-holl dindan Abd
111 al-Rahman II (822-852), e vleunias ur sevenadur na vije ket bet kavet e
111 bar en amzer-se, nemet marteze e Bizantion. Padout a reas betek an
111 12-vet kantved, prantad ar mezeg-filozofour Averroes.


111 Istor ar c'hantvedoù-se, evelato, a zo leun a vrezelioù a-ziabarzh,
111 a emsavadennoù, a argadadegoù o tont eus Afrika. Arabat kredif ne oa
111 nemet ur stourm eeun etre Islamiz ha Kristenien. Islamiz en em ganne
111 etrezo. Kristenien en em ganne etrezo. Islamiz a gevrede alies gant
111 Kristenien a-enep Islamiz ha Kristenien all. Ur skouer hepken : an
111 haroz meur Ruy Diaz de Bivar, "El Cid", a vrezelekaas, gwech a-du gant
111 ar Gristenien, gwech a-du gant an Islamiz (ha gwech war e gont e-unan).
111 E-pad mareoù hir e veve Islamiz, Kristenien ha Yuzevien kichen-ha-
111 -kichen hag e peoc'h.

111 Galloud ar Galifed a wanaas. Islamiz strizhsperedet, deuet eus
111 Maroko, a renas e-lec'h an Arabed, a oa bet hael peurliesañ e-keñver
111 kredennoù ar Gristenien hag ar Yuzevien. Ar vistri nevez ne oant mui
111 Arabed e gwirionez, hogen Maoured. Ma'z eas eneberezh ar Gristenien
111 war galetaat, hag o youl da adc'hounit al ledenez war greskiñ. Rouant-
111 elezhioù kristen Kastilha, León, Navarra, Aragon a strivas a-gevret
111 (pe a-wechoù digevret) da vountañ an "dud divadez" war-du ar c'hreis-
111 teiz. Cordoba, Valencia, Sevilha a voe kemeret en 13-vet kantved.

111 Ur rouantelezhig vuzulmat a chomas evel dre vuzhud, er gevred
111 pellañ, gant he c'hêrbenn e Granada. Ne gouezhas nemet e diwezh ar
111 15-vet kantved, dindan daolioù Ferdinand a Aragon hag Izabel a Gastilha,
111 er bloaz end-eeun ma tizoloe Kristoc'h Kolomb Amerika, 1492.

111 Menegomp, evel notenn da echuiñ ar pennad-mañ, un darvoud c'hoazh,
111 a ranker menegiñ, hag eñ distag, mar karer, diouzh istor koll Iberia.
111 (Disoc'h trec'h ar Gristenien e voe, a roas tro da Gataloniz, Spagniz
111 ha Portugaliz da sevel ur galloud-mor). E 1498, Vasco da Gama a dizhas
111 Bro-Indez, o vezañ tremenet e-biou da Gab ar Spi-Mat. Un hent-kenwerzh
111 nevez a voe digoret. Ar broioù e dalc'h an Arabed a gollas kalz eus o
111 zalvoudegezh arboellerezhel, hag al listri arabek a voe argaset gant
111 listri-brezel Portugal diouzh Mor Indez.

111

111 

111

111 Komz a raimp en niverenn a zeu eus al levr nevez embannet :

111

111 "KANAOUENNOU SANTEL HA KOMPLIDOÙ AR SUL"

111

gant M.GLANNDOUR

111

111 Niv.9 SKOL. Priz : 4 lur nevez. Priz koumanant SKOL : 10 lur nevez.

111 Kont-red Post : Rennes-1911-06, Revue SKOL, Plouézec, C.d.N.

111

=====

KELTIA	KUDENN AL LABOUR-DOUAR E BREIZH : An Ao.Rochereau, 111
	Ministr al Labour-Douar e Pariz, a reas un dro-enklask 111
	e Breizh e derou miz Genver. E Roazhon, Sant-Brieg, 111
Kemper ha Gwened	(meneg ebet eus Naoned) e welas kannaded ar gouerien 111
ha pennadurezhioù	all. Ar C'hentañ Ministr Debré a dle mont da Vreizh 111
ivez. Ret eo ober	trouez evit bezañ klevet ! 111
	111
DRE AR BED	BEAJ EISENHOWER : Ar Prezidant Eisen- 111
	hower a zistroas d'ar Stadoù-Unanet d'an 111
	22 Kerzu goude e dro vras en unnek bro. 111
Goude kuitaat Pariz e tremenas	dre Vadrid ha Rabat. 111
	111
BODADEG AR BARR :	Ar vodadeg gortozet a bell 'zo etre renerien Rusia, 111
ar Stadoù-Unanet, Breizh-Veur ha Bro-C'hall a dle bezañ graet e Pariz e	kreiz miz Mae. 111
	111
AOZADUR EKONOMEK NEVEZ :	Ar Stadoù-Unanet a ginnigas d'an 12 Genver 111
sevel un aozadur ekonomek nevez da gemer lec'h AKEE (Aozadur Kenlabour	Ekonomek Europa). 20 Stad a vefe en aozadur nevez, en o zouez Kanada 111
hag ar Stadoù-Unanet. Ar pal a vefe diskoulmañ kudennoù ar c'hevezerezh-	-kenwerzh en Europa, ha reiñ harp d'ar broioù isdiorroet. Kanada hag ar 111
Stadoù-Unanet a zo gwall chalet gant an daou c'hronnad arboellerezhel	bet krouet en Europa : Kenvarc'had ar 6 ha Strollad ar 7. 111
	111
ENEPYUZEVEGEZH :	E miz Genver ez eus bet displegadegoù enepyuzev en 111
Alamagn ar C'hornog : hevoudoù livet war sinagogennoù, da skouer. War	un dro e weler darn eus ar yaouankiz o tistreiñ d'an naziegezh. Ne chom 111
mui nemet nemet etre 30.000 ha 40.000 Yuzev en Alamagn. Displegadegoù	enepyuzev a zo bet ivez e broioù all, dreist-holl en Aostria. 111
	111
KEMMOU MINISTRED E GALL :	E miz Kerzu, Ministr gall an Deskadurezh a 111
roas e zilez, da heul kinnig ar gouarnamant da skoazellañ ar skolioù	dishual. E miz Genver, Ministr an Arc'hant, Pinay, a voe lakaet da 111
guitaat diouzh ar gouarnamant, ha Baumgartner, gouarnour Bank Frañs,	lakaet en e lec'h. Tabut a zo etre Pinay hag ar C'hentañ Ministr Debré. 111
Pinay, evel kalzik izili eus an Tu Dehou, a oa ivez a-enep politikerezh	a-ziavaez ar Prezidant. 111
	111
KEMMOU EN ARME RUSIAN :	E bodadeg ar Sovied-Dreist, e Moskov, d'ar 14 111
Genver, Kruchtchev a levaras e vije digresket niver soudarded Unaniezh	ar Soviedoù : 1,2 milion a vo kaset d'ar gêr, diwar an 3,6 milion 111
bremañ dindan en armoù. Daoust da se ne vo ket bihanaet nerzh-brezel	Rusia. Er c'hontrol, gant he bannadelloù e c'hell skeiñ ne vern pelec'h 111
war an Douar, ha dizale he devo un arm nevez "sabatus" ! 111	111
	111
EMRENEREZH KIPRENEZ DAILET :	Diaesterioù a savas e-doug ur vodadenn e 111
Londrez e miz Genver, etre Selwyn Lloyd, Ministr breizhveurat an	Diavaez, an Arc'heskob Makarios, anvet prezidant, hag an Dr.Kutchuk, 111
anvet isprezidant Kiprenez. Abeg an tabut oa an daou ziazezlec'h-brezel	a dle bezañ miret en enezenn gant ar Saizon. Deiz an emrenerezh a zo 111
bet daleet eus an 19 C'hwevrer d'an 19 Meurzh. 111	111
	111
E KONGO AR VELGIZ :	E dibenn Kerzu, pa zegouezhas ar roue Baldoen e 111

111 Kerleopold, kêrbenn Kongo ar Velgiz, e voe degemeret gant Afrikiz o
 111 youc'hal "emrenerezh !". Bez' ez eus dizurzhioù er vro, ha ret e vo
 111 diskoulmañ abred meur a gudenn. Belgiz a ginnig an emrenerezh kammed-
 111 -ha-kammed. Kongoiz, avat, a fell dezho kaout o emrenerezh diouzhtu.

111 EMRENEREZH KAMEROUN : An darn eus Kameroun a veze melestret gant Bro-
 111 C'hall abaoe ar Brezel-Bed kentañ a zeuas da vezañ Stad dizalc'h d'ar
 111 1-añ Genver 1960. Koulskoude ne voe ket un deiz a levenez. Brezel a-
 111 -ziabarzh ha dispac'h a zo er vro, hag en derc'hent e oa bet reustl e
 111 Douala, hag un 40 a dud lazhet. Tamallet e vez d'ar C'hentañ Ministr
 111 Ahidio bezañ re a-du gant ar C'hallaoued, hag un emsav a-enep dezhañ a
 111 zo bet aozet gant ur gostezenn anvet U.P.C., skoazellet, a lavarar,
 111 gant Ginea.

111 UNANIÑ AFRIKA ? : E-pad ar weladenn graet da Vro-C'hana e miz Genver
 111 gant Macmillan, Kentañ Ministr Breizh-Veur, an Dr.Nkrumah, a reas ur
 111 brezegenn heverk en Akra, dirak un engroez vras. Emañ an drevadenneler-
 111 ien, emezañ, o klask sevel Stadoù dishual en Afrika. Hogen o stagañ a
 111 fell dezho gant liammoù arboellerezhel : bez' e vefe "balkanidigezh"
 111 Afrika. Afrikiz a dle en em unaniñ da c'hounit o emrenerezh leun,
 111 emezañ c'hoazh, peurzieub diouzh yev an estrenien. Pedet e vo an holl
 111 gostezennoù politikel a stourm en Afrika evit ar frankiz d'en em vodañ
 111 e Gana hevlene, evit krouiñ "un nerzh ramzel da beurdrec'hiñ an
 111 drevadennelezh ha da raktresañ krouidigezh un Unaniezh ar Stadoù
 111 afrikat".

111 HARZ-LABOUR AN DIR A ECHU ER STADOÙ-UNANET : Harz-labour micherourien
 111 an dir er Stadoù-Unanet a echuas e miz Genver. Padet en doa 8 miz. Ar
 111 vicherourien, avat, a oa bet roet urzh dezho da adkregiñ gant o labour
 111 e miz Du 1959, hervez al lezenn anvet lezenn Taft-Hartley. Hep mar e
 111 kresko priz an dir er mizioù da zont.

111 =====
 111 ooo
 111 =====

111 GANIDIGEZH : Plijadur hon eus o kemenn da izili Skourr Breizh ha da
 111 Iennerien AR BED KELTIEK ganidigezh ur plac'hig, Gwenn, d'ar 14 a viz
 111 Kerzu, e Kervrazza, Kongo, e ti an Ao.Pinault. Hor gwellañ gourc'hem-
 111 ennoù d'ar plac'hig ha d'he c'herent.

111 =====
 111 ooo
 111 =====

111 UR GELAOUENN WENEDEK NEVEZ

111 Bet hon eus niverenn gentañ (niverenn Nedeleg) ur gelaouennig
 111 liesskrivet "evit ar bobl" e rannyezh Wened, "ARIEU" hec'h anv.
 111 Tud 'zo a lavar ez eus bremañ kelaouennoù brezhonek ouzh gwalc'h
 111 ha betek re zoken.
 111 Necazh, ur bern gwazhioù-dour a ra ur stêr vras.
 111 Ar re a venn kaout "ARIEU", skrivent da : M.Le Mentec Gw., 31,
 111 rue de la Villemarqué, Vannes.

amañ hag ahont

CHAOSER ASOUAN HAG HENSAVADURIOU EGIPT : Pa voe savet kentañ chaoser Asouan war an Nil e 1902, e voe mantret arzkarourien ar bed-holl gant un darvoud fall : templ Filae, unan eus mistrañ hensavadurioù Egipt, a vije beuzet bep bloaz e-pad nav miz, war var bezañ displeberet, pe zoken kouezhañ en e boull.

E miz Genver 1960, e voe kroget gant al labour sevel ur chaoser nevez, kalz brasoc'h, en Asouan : ul lenn, dezhi tost 500 Km. a hirder, a c'holoio un darn vat eus traonienn an Nil e Bro-Nubia, en Egipt hag e Soudan.

N'eo ket templ Filae hepken a vo beuzet, hogen ivez temploù Abou Simbel, gant o zelwenoù ramzel, an aridennad sfinsoù a gas da dempl Amon e Wadi, hag un niver bras a aspadenoù diouzh hensavadur Egipt, ha re all koshoc'h c'hoazh, darn anezho peuzdianav pe a-vec'h studiet gant an hendraourien. Pep tra a vo dispennet gant an dour a-benn un nebeut bloavezhioù.

Gouarnamantoù Egipt ha Soudan o deus roet aotre d'ar ouizieien estren d'ober furchadenoù, keit ha ma'z eus amzer. An hanter eus ar c'havadenoù a vo roet d'ar furcherien. Aotre a vo roet ouzhpenn da ziskar gant evezh lod eus an temploù evit o adsevel maen-ha-maen, dres evel m'emaint, war zouaroù uhel, pe zoken e broioù all.

Meneg a zo da sevel murioù-gwarez en-dro d'an temploù brasañ, na c'hellont ket bezañ loc'het.


Siwazh, ret e vefe kaout arc'hant, arc'hant e-leizh (nebeut avat e-skoaz a vez dispignet da ober ur vombezennig atomek). An egiptourien a zo nec'het, ha n'eus den poellek ebet na dle bezañ nec'het ivez.

7.000m. E DON AR MOR : Ar batiskaf amerikan "Trieste" a ziskennas betek 7.000m. e don ar Mor Habask d'an 8 Genver. Ar splujadenn a badas 6 eur. An "Trieste", savet gant ar Suisad Auguste Piccard hag e vab Jacques, a voe prenet gant an Amerikaned e 1958. Jacques Piccard hag ul letanant amerikan, Donald Walsh, a oa ennañ e-pad ar splujadenn diwezhañ. Klasket e vo mont donoc'h c'hoazh.

TELESKOPOU-RADIO NEVEZ : Emeur o sevel er Stadoù-Unanet daou deleskop-radio ramzel, unan heloc'h hag unan diloc'h. An hini heloc'h a saver evit ar verdeadurezh-vrezel e Sugar Grove, Virginia ar C'hornog. A-benn 1962 e tle bezañ prest. E bouez a vo 20.000 tonellad. Treuz ar roued aluminiom a dalvez da zameuc'her a vo war-dro 200 m. Pakañ a ray skin-arouezioù o tont eus astroù 38.000 milion bloavezh-gouloù diouzhimp, 19 gwech pelloc'h eget an astroù paket gant teleskop optikel Menez Palomar.

An teleskop-radio diloc'h a vez implijet a-benn bremañ. Ne vo peur-echuet avat nemet e 1961. Emañ e Clark Lake, en hanternoz da San Diego, Kalifornia. Savet eo war strad kompez ul lenn disec'het e menezioù Santa Rosa. Ur rouedad hirgarrezek eo, graet gant orjalenoù kouevr 270 m. a hed, a-ispilh tost 500 m. an eil diouzh eben. E-kreiz ez eus un dra a anver al "lagad", gant un enskriverez emlusk, a dres linenoù war baper, o klotañ gant an arouezioù degemeret.

Brasañ teleskop-radio ar bed betek-hen eo hini Jodrell Bank, e Bro-Saoz.



Hep poan ebet, hep torr-penn,
Forzh pelec'h, e giz pe c'hiz,
Pep den a c'hell deskiñ lenn
BREZHONEG EEUN en ur miz.

KANNAD AR YAOUANKIZ - 36

111 AN AMPREVAN
111 NA C'HELLED KET
111 LAZHAN

E-kreiz un nozvezh tomm a viz
Gouere eo e klevas Mikael an

111 amprevan evit ar wech kentañ.

111 Ar paotr ne c'helle ket kousket. Treiñ-distreiñ a rae war e wele.
111 Dre ar prenestr digor-bras ne zeue trouz ebet. Ar maeziou, dindan an
111 oabl diloar, a oa beuzet en un tamder arnev, evel marv.

111 An trouzig a glève a zeue eus ar gambr. Bez' e oa evel trouz ur
111 vilin-dour, met gwan-gwan. Ya, eus ar gambr e teue, eus un tu bennak
111 e-kichen ar siminal.

111 Mikael a selaouas e-pad ur pennad mat. Elumiñ a reas ar gouloù. An
111 trouzig a davas kerkent. Ar paotr a savas hag a yeas war e dreid noazh
111 betek ar siminal. Strakañ un alumetezenn a reas da welout e-barzh an
111 oaled. En ur faoutig e kavas neuze un amprevan, seurt n'en doa gwelet
111 biskoazh ; c'hwec'h troad hir, ur c'horf melen moan-moan, ur penn ruz,
111 ennañ daoulagad glas. Mikael ne blije ket dezhañ an amprevaned. Doñjer
111 a raent d'e galon. Flastrañ a reas al loen fall gant ar beg a chome eus
111 an alumetezenn. Neuze e tistroas d'e wele, hag e c'hellas kousket en
111 diwezh.

111 Antronoz en doa ankounac'haet an amprevan. Met diouzh an noz, pa'z
111 eas d'e wele, a-boan mouget ar gouloù, setu an trouzig o tont adarre
111 eus an oaled. Mikael a savas evel en noz kent, a strakas un alumetezenn,
111 hag a gavas an amprevan en e doull. Ma ne oa ket an hevelep hini, e oa
111 e vreur, ken heñvel e oa outañ. Mikael a flastras al loenig hag a
111 daolas ar c'horf dre ar prenestr.

111 War-dro un eur eus ar mintin e tihunas ar paotr. Fraoñval a rae ar
111 rodig-vilin en deñvalijenn. Hag eñ lammat eus e wele ha mont da welout.
111 Edo an amprevan en e faoutig. Mikael a flastras anezhañ. En dro-mañ e
111 lakaas ar c'horf er voest-alumetez, a oa goull. Serriñ a reas ar voest
111 hag he lezel war ar siminal.

111 Da seizh eur hanter, pa savas, e voe souezhet, ha spontet, o
111 kavout ar voest toullet, ha netra e-barzh.

111 Sofij an amprevan a chomas war e spered a-hed an deiz. Kontet en
111 dije a-walc'h da dud an ti pezh a oa c'hoarvezet. Met ne gredas ket,
111 dalc'het gant un doare mezh. Pa zeuas an noz, e c'hortozas pell amzer
111 en deñvalijenn. Trouz ebet.

111 Tremen hanternoz, edo ar c'houked o tont warnañ, pa glevas mouezh
111 an amprevan adarre. Mikael ne zaleas ket da sevel. Ur wech c'hoazh e
111 flastras al loenig. Troc'hañ a reas ar c'horf e tammoù, a lakaas en ur
111 voest houarn, a serras start, ken start he ma c'hellas.

111 Pa zihunas, golo ar voest a oa un tammig a-dreuz, damsavet : al
111 loen a oa tec'het kuit !

111 Mikael ne oa ket ur paotr aonik, ha kouslkoude e santas evel ur
111 barrad yenijenn o vont eus e gilpenn betek e dreid.

En ur wiskañ e zilhad, e reas e venoz mont da c'houlenn ali di- 111
gant un den a anaveze, ur c'helenner kozh gouiziek-bras war zoareoù an 111
amprevaned. Goude merenn, e pignas war e varc'h-houarn. Met ne reas 111
nemet an hanter eus an hent. "Ne c'hellan ket", a soñjas : "henezh ne 111
grede ket va istor ; goap a raio ac'hanon." 111

Hag e-lec'h mont da di an den-se, e reas un dro vras dre ar 111
maezioù. Ken skuizh edo o tistreiñ d'ar gêr en abardaez ma kouezhas 111
evel ur sac'had plom war e wele. 111

Daoust d'e skuizhder, avat, ne gouskas banne. Edo an holl amzer e 111
selaou, o selaou. En diwezh e savas evit mont da welout en oaled. 111

An amprevan a oa en e faoutig. Ne gane ket. Ne fiñve ket. Mikael 111
a bakas anezhañ gant ar piñsetez. E gas a reas gantañ a-dreuz ar gambr 111
hag e lezel da gouezhañ er pladig-ludu war an daol-noz. Ha marv e oa ? 111
Ar paotr a strakas un alumetezenn. 111

- Bremañ e vi losket ! - emezañ. 111

Postaat a reas an alumetezenn ouzh al loenig. Hemañ a sachas e 111
c'hwec'h troad hir ouzh e gorf o santout ar flamm. Met ne glaskas ket 111
tec'hout. Ar flamm a lipas e benn, e gorf, a voe duet-holl. 111

Mikael a gemeras neuze ur werenn-greskiñ, a oa e godell e borpant, 111
da sellout ouzh an amprevan. Bev e oa. Hejañ a rae e benn, goustadik. 111
E zaoulagad glas a oa heñvel ouzh daoulagad un den, ha ken trist, ken 111
trist ma voe kalon ar paotr en un taol karget a drez. Ne oa mui ul 111
loen doñjerus a wele, met ul loenig paour, glac'haret ... ha feiz ! 111
koant, evitañ da vezañ bremañ liv al ludu. 111

Mikael a lakaas anezhañ war un delienn eus ur wezenn a greske el 111
liorz, tre e-kichen prenestr e gambr, hag a serras ar prenestr. 111

En noz war-lerc'h e kane an amprevan en oaled kreñvoc'h eget bis- 111
koazh. Mikael a yeas da sellout outañ. Met e lezel a reas en e 111
faoutig. Bruzun gwastell a ginnigas dezhañ zoken. An amprevan ne 111
zebras ket diouzhtu. Antronoz vintin, avat, ne chome ket ur vruzunenn. 111

Diwar neuze e kanas an amprevan bemnoz, bravoc'h ha laouenoc'h 111
atav. Mikael a gouske sonn bremañ. Dihuniñ a rae koulskoude, ur wech 111
da vihanañ, da selaou al loenig a oa deuet da vezañ e vignon. Bep tro 111
e roe dezhañ tra pe dra da zebrif : tammoùigoù kig, frouezh, sukr. 111
Pep tra a veze kavet mat. 111

An hañv a dremenas. D'an deiz diwezhañ a viz Gwengolo, derc'hent 111
Gouel-Mikael, a soñjas ar paotr e vije brav reiñ d'al loen gwelloc'h 111
c'hoazh eget kustum : lezel a reas ur podad mel digor war an oaled. 111

Ar mintin a oa gleb ha teñval. Mikael a savas. Ar pod a oa bet 111
leun a vel a oa goullo. E-kichen, astennet war e gein, edo an amprevan, 111
e gof c'hwezhet evel ur baloñs, lipet gantañ ar mel betek ar banne 111
diwezhañ. E c'hwec'h troad a oa pleget, e benn a-dreuz. Mikael a 111
gemeras anezhañ en e zorn : marv e oa ! 111

An amprevan na c'helled ket lazhañ a oa en em lazhet ! 111

"Re a vadelezh," a lavar ar re fur, "a ra muioc'h a zroug a- 111
-wechoù eget falloni." 111


ROPARZ HEMON 111

(Pep gwir miret-strizh). 111

=====
C.C.P.P. N° 36.242. 111

Le Gérant : Mlle Y. Martin, 21, rue de Dixmude, Brest-St. Marc. 111

Ronéotypé par Rincazaux, 1, rue Alain Fournier, Brest. 111



Revue mensuelle-N°15-Mars 1960

Kelaouenn vizek-Niv.15-Meurzh 1960

Abonnement annuel : 7 NF.

Koumanant-bloaz : 7 LN.

"CC.RENNES-1907-07, AR BED KELTIK, 21, rue Dixmude, Brest".

111 PROFOÙ KASET D' "AR BED KELTIK" ABAOE AR 1-añ A VIZ GENVER :

111 An Ao.L.Bothorel, 7 LN. - An Ao.Abad Rimpot, 3 LN. - An Ao.

111 Abad Klerg : 3 LN. - An Dim.M.Gourlaouen, 13 LN. - An Ao.P.Pennec, 3 LN.

111 - An Ao.P.Lemoine, 3 LN. - An Ao.J.Renault, 3 LN. - An Dim.M.Minicou.

111 3 LN. - An Dim.I.Martin, 13 LN. - EN HOLL : 51 LN.

111 Skoazell (90 LN.) hon eus bet ivez digant Kef "Kuzul ar Brezhoneg".

111 Trugarez a-greiz kalon d'ar brofourien.

YEZHOU

B u h e z

a n I w e r z h o n e g

111 GERIADURIOÙ Chom a reer souezhet o welout pegen diwezhat eo Iwerzhoniz

111 e keñverioù 'zo war dachenn adsevel o yezh. O soñjal, da

111 skouer, en niver a c'heriadurioù hon eus evit ar brezhoneg, ne c'heller

111 ket kaer kompren perak ne oa ket tu, e-pad ar bloavezhioù tremenet, da

111 gavout ur geriadur mat saoznek-iwerzhonek el levrديوù. Hini Mac Kenna

111 a oa diviet. Bremañ avat ez eus bet embannet unan klok, gant T. de

111 Bhaldraithe, savet hervez an doare-skrivañ degemeret gant ar Stad, gant

111 kenlabour tud a vicher evit ar gerioù gouizie. Chom a ra ul labour

111 kevatal da ober evit kaout ur geriadur iwerzhonek-saozneg, gant un

111 doare-skrivañ reoliek. Geriadur An Duinnín a zo heñvel a-walc'h ouzh

111 hini Ernault, gant e stummoù rannyezhe, pe stummoù pell a-walc'h

111 diouzh ar re degemeret bremañ. Ma'z eus anezhañ ur gwir vengleuz ivez,

111 n'eo ket aes gouzout pegen kozh, pegen marv eo lod eus ar gerioù a zo

111 ennañ. En iwerzhoneg kennebeut hag e brezhoneg, n'eus ket a c'heriadur

111 hollek er yezh end-eeun. Warlene ez eus deuet er-maez ur geriadur a

111 brederouriezh holliwerzhonek. Estreget diskleriañ ar gerioù, e ro o

111 c'hevatal e saozneg, alamaneg, galleg ha latin.

111 REIÑ LAÑS Ar Strollad-Enklask evit advuhezekaat an iwerzhoneg, savet

111 ouzhpenn bloaz 'zo a-berzh Stad, a dle reiñ e zanevell hep dale.

111 Goulennet e vo bet alioù e-leizh a dud, a gevredigezhioù, a-zivout

111 an hent gwellañ da bleustrif evit ledanaat tachenn ar yezh er vuhez

111 kevredigezhel.

111 Daoust ha gouest, ha youlet, e vo ar gouarnamant da zivizout ar

111 reoliadurioù rekis evit reiñ lañs d'ar yezh ? Ret e ve derc'hel kont

111 eus digasted an darn vuiañ, ret e ve diwall a greskiñ ar pilpouserezh

111 diouzh un tu, ar goaperezh divergont diouzh an tu all, ha derc'hel kont

111 eus ar gwirvoud, hep dilezel uhelvennad ar re a stourmas da zieubiñ

111 ar vro.

111 Ur c'hammed war an tu mat eo bezañ divizet reiñ hiviziken muioc'h

111 a bouez d'ar c'homz eget d'ar skrivañ e kelennadur an iwerzhoneg. Ken

lll alies, pa'm eus klasket toullañ kaoz dre ar yezh-mañ, ez eo chomet va
 lll c'henbrezeger sa'o'het, o klask gerioù eus ar re voutinañ.
 lll Gouest e oa, avat, da zibunañ e-leizh a grennlavarioù hag a werz-
 lll ennoù.

lll Diouzh an doare ma'z eo bet divizet aozañ ar servij-pellwelerezh,
 lll ne c'heller gortoz netra zispac'hus digant ar gouarnamant. Anat eo ne
 lll vo feuket kevrennad ebet eus ar boblañs. Ar Stad a ray war-dro ar
 lll servij evel ma ra war-dro Radio Eireann. Ne vo ket fiziet en ur
 lll gompagnunezh estren, rak ezhomm a zo da ziwall ar vuhezgezh rak an
 lll diroll. Met ne vo ket fiziet e Gael Linn kennebeut, daoust ma kinnige
 lll ar priz izelañ evit kas ar servij en-dro.

lll Ranket o deus an holl anavezout dreistelezh labour Gael
 lll "MISE ÉIRE" Linn adarre koulskoude, o welout ar film "Mise Eire",
 lll anezhañ ar c'hentañ film hir en iwerzhoneg penn-da-benn. Taolenniñ a ra
 lll ar stourm evit dieubiñ ar vro adalek 1900 betek 1921, en ur ober gant
 lll filmoù berr bet graet da geñver an darvoudoù end-eeun, ha gant skeud-
 lll ennoù difiñv. Ul labour enklask eus ar c'hentañ. Emeur o tibunañ ar
 lll film peder gwech bmedez, evit an eil sizhunvezh, en unan eus fiv-
 lll skeudenndioù bras Dulenn.

lll Unan bennak en deus lavaret e vije gounezet d'an iwerzhoneg en
 lll deiz ma vije gwerzh dezhañ er marc'had du. Ma ! deiz ar c'hentañ dis-
 lll kouez e oa brav o stal gant ar plac'hed a ra micher eus soulwerzhañ
 lll tikedoù-kinema e Dulenn : gwerzhet e oa an holl dikedoù evit "Mise Eire"
 lll en abardaez-se ! Holl ziskouezioù an endervezh a zo miret evit bugale
 lll ar skolioù e-pad pemzektez da vihanañ.

lll Digant Gael Linn e vez roet skoazell-arc'hant da vugale
 lll AR VUGALE skolioù evit tremen ur skourrad diouzh an hañv er Gouzelva
 lll ha deskiñ komz reizh iwerzhoneg eno. Ne ouzon ket hag ez eo kement-se a
 lll drugarez d'ar skoazell-se ez eus bet kresk ken bras e 1959 e niver ar
 lll skolidi. E pep korn eus ar Gouzelva, hag er-maez anezhañ zoken, e vez
 lll digoret skolioù-hañv iwerzhonek nevez. E Tir Konall e oa 1900 skoliad
 lll e-keñver 1400 e 1958, deuet, div drederenn anezho, eus ar C'hwec'h
 lll Kontelezh (an Hanternoz, e dalc'h ar Saozon).

lll Aesoc'h e seblant bezañ sevel skolioù-etre holliwerzhonek prevez
 lll eget skolioù kentañ derez. Nevez ' zo e oa war ar gelaouenn INNIU ul
 lll lizher-klemm digant un den hag en doa klasket kaout aotre da zigeriñ
 lll ur skol-gentañ prevez e Dulenn. Aotre a ranker kaout digant merour ar
 lll skolioù-kentañ er barrez, ar person. E teir farrez e oa bet nac'het
 lll outañ. N'eus nemet daou pe dri zi-skol e Dulenn ma vez desket enno pep
 lll tra dre an iwerzhoneg. Ha c'hoazh ! An tamm kelennadurezh relijiel a
 lll vez roet d'ar vugaligoù, na oar ar pep brasañ anezho e gwirionez nemet
 lll un nebeut gerioù iwerzhonek, a vez roet e saozneg. Bugale desavet en
 lll iwerzhoneg n'o deus ket tu, e-pad o bloavezhioù kentañ er skol da
 lll vihanañ, da zeskiñ katekiz en o yezh c'henidik.

ALAN HEUSSAFF

lll =====
 lll =====
 lll Dlead pep Breizhad emskiantek eo skoazellañ SKOL SANT ERWAN.
 lll Petra eo reiñ arc'hant e-skoaz ar stourm kalonek renet gant mistri
 lll ar skol-se, a-enep skoilhoù a bep seurt, e-kreiz diseblanted yen ?
 lll CC.RENNES-863-85, Abbé LE CALVEZ, Plouézec, C.d.N.

SKRIDoù NEVEZ

111 SKOL, niv.9, Genver 1960 : KANAOUENNOÙ SANTEL HA KOMPLIDOÙ AR SUL,
 111 gant M.Glanndour. (Koumanant-bloaz, 10 LN. : "Revue Skol, Plouézec,
 111 C.d.N., KR.Roazhon-1911-06"). Liesskrivet, 64 a bajennoù.

111 Ret e vo lenn aketus ar c'hentskridig "Kemenn hag Alioù", lakaet
 111 gant Maodez Glanndour e derou an dastumad kanaouennoù santel-mañ, evit
 111 kompren n'eo ket un dastumad heñvel ouzh ar re bet embannet betek-hen.
 111 Ken fetis eo ar c'hentskridig-se ma ne c'heller ket e grennañ en un
 111 nebeut linennoù. Distagañ a rin hepken : " ... gant an implij a reomp
 111 muioc'h-mui eus yezh ar bobl el Liturgiezh, e rankomp kaout kanaouennoù
 111 santel nevez o reiñ tu d'ar fideled da gemer perzh oberiant e lid
 111 Sakramant an Aoter. Mennout a reomp lakaat hor c'hristenien da gaout o
 111 lod eus pinvidigezhioù al levr-ferenn. Ar pajennoù-mañ a glask respont
 111 d'an ezhommoù-se."

111 N'on ket gouest, siwazh, da varn talvoudegezh an oberenn-mañ
 111 e-keñver ar Feiz, nag he zalvoudegezh e-keñver ar sonerezh (tonioù
 111 e-leizh a vez roet). Pezh a c'hellan lavarout eo n'em eus biskoazh
 111 lennet netra kaeroc'h na fromusoc'h en ul labour relijiel. Un benn-
 111 oberenn eo en hol lennegezh.

111 AR FEST-NOZ, kontadennoù gant Youenn Olier, embannet gant AL LIAMM,
 111 208 a bajennoù. Priz : 8,50 LN.(war Iafuma, 12 LN.). Lakaat 0,60 LN.
 111 evit ar mizoù-kas. Kas an arc'hant da : P.Bodenan, Verger St-Yves,
 111 Stank ar C'hoad, Kerfeunteun, Fin., KR.Roazhon-212-23.

111 An oberenn bouezusañ e komz-plaen war dachenn al lennegezh-dudiañ
 111 abaoe donedigezh "An Teirgwern Pembroke" gant Jarl Priel. Ne ouzon ket
 111 ha klotañ mat a ra ar ger "kontadenn" ouzh an trizek pezh berr-mañ,
 111 taolennet enno tammoù-buhez ha stadoù-ene. En ur wir gontadenn ez eus
 111 un derou, un irienn, ha dreist-holl un diwezh. Amañ n'eus ket, koulz
 111 lavaret. Ur poent en amzer hepken, o teuziñ buan en tremened, en
 111 dazont, pe en diamzer.

111 Tudigoù, peurliesañ sammet gant an tonkadur, hag o terc'hel penn
 111 ouzh ar reuz gant gouzavusted damwan, damgadarn. Kalonoù o plegañ
 111 d'ar blanedenn diouzh an diavaez, hag o chom disuj en diabarzh. Al
 111 lec'h a c'hell bezañ Gwaien, Gwened, Roazhon pe Vro-Loren. An temz-ene
 111 a van atav heñvel.

111 Da Youenn Olier ne vo ket graet an tamall a veze graet d'hor
 111 skrivagnerien gwechall : bezañ divarrek da dresañ ha da livañ resis.
 111 Un tamall graet re vuan marteze, rak Gwilhom, Kadig, Inizan, P.Martin
 111 ha re all a ouie diskripañ ar bed dre ar munud pa garent. Hor skriv-
 111 agnerien a hiziv, avat, o deus kalz muioc'h a c'herioù da zibab. Ivez,
 111 ne skrivont ket evit ur bobl dizesk, hogen evit lenneien gouest da
 111 glask ur ger en ur geriadur diouzh ret, ha gouest da zegemer un dro-
 111 -frazenn souezhus hep krial : "Se n'eo ket brezhoneg, se ne vez ket
 111 lavaret !"

111 En ur aozañ va "Geriadur Istorel" em eus merzet, splannoc'h eget

ISTOR

DISKAR AN ARABED

(11-vet-19-vet kantved)

(Rann II)

111
111
111
111
111
111
111
111
111

111 C'hwec'hvet pennad hon istor an Arabed

111

SIKILIA

111

111 Sikilia, e piaou impalaeriezh Vizantion, a oa bet aloubet gant an
111 Arabed en 9-vet kantved. Un arme kaset eus Tunizia, gant harp un
111 amiral bizantat emsavet a-enep e impalaer, a zouaras en enezenn e 827.
111 Palermo a voe kemeret e 831 ha dibabet da gêrbenn. A-benn diwezh ar
111 c'hantved e rankas Bizantiz en em dennañ da vat, hag e teuas an enezenn
111 da vezañ ur rannvro stag ouzh Tunizia. Eus Sikilia e kase an Arabed
111 argadadegoù e kreisteiz Italia, ha kêr Roma hec'h-unan a voe darbet
111 dezhi kouezhañ dindan o beli.

111 Ur brezel a-ziabarzh a wanaas o galloud. E 1061, an Normaned,
111 diazezet e kreisteiz Italia, a zouaras e Messina. Tregont vloaz goude
111 e oant mistri war hogozik an holl enezenn. D'o zro e voent trec'het
111 gant ar remziad Hohenstaufen e 1194.

111 Ur sevenadur islamek skedus-meurbet a vleunias e Sikilia, ha ne
111 deas da get nemet pell goude donedigezh ar renerien gristen. An
111 Normaned, dreist-holl Rojer II (1130-1154), hag an Alamaned, dreist-
111 -holl Frederig II (1194-1250), a voe dedennet gant ar sevenadur-se,
111 a badas betek ar 14-vet kantved, o lezel, avat, nebeut a roudoù war e
111 lerc'h. (Ur goulenn a vez graet alies eo perak e komz ar bobl e
111 Sikilia ur rannyezh romanek e-lec'h ur rannyezh c'hresianek pe arabek.
111 Ar respont eo e voe adpoblet an enezenn gant Italianed eus an hanter-
111 noz).

111

BERBERED HA BEDOUINED

111

111 Ar Verbered n'int ket Arabed. "Numided" a veze graet anezho gant
111 ar Romaned. Ur yezh dezho o-unan o deus (a zo bet klasket tostaat e
111 keñverioù 'zo ouzh ar yezhoù keltiek). Bevañ a reont en hanternoz
111 Afrika : er Sahara, en Aljeria, e Maroko. O vezañ degemeret kredenn an
111 Islam, ez ejont da heul an Arabed e Spagn. En 11-vet kantved, oc'h
111 ober o mad eus gwanadur an impalaeriezh arabek, e savjont un impalaer-
111 iezh dieub, en em astennas eus an Niger betek aodoù ar Mor Kreiz.

111 E-keit-se, meuriadoù Bedouined diazezet e kreisteiz Egipt a
111 aloubas Libia ha Tunizia. Ar broioù-se a oa bet pinvidik e gre ar
111 Romaned, gant douaroù kanouc'hellet ha labouret-mat, ha kêrioù e-leizh.
111 Kendalc'het o doa da vezañ pinvidik dindan an Arabed. Gant ar Vedouined
111 e voent gwastet ha dizalbadet, troet, evit un darn vras, da ouelec'h-
111 ioù, hag ar gouelec'hioù-se a zo chomet betek hon deizioù.

111

TURKED HA MONGOLED

111

111 Gwashañ enebourien an Arabed a dlee dont evelato eus ar Reter.
111 E kreiz Azia, etre Mor Kaspia ha Gouelec'h Gobi, da lavarout eo

111

e Turkestan, o doa bet an Arabed o c'hentañ darempred gant an Durked. 111
 Ken abred hag an 9-vet kantved, e veze degaset en impalaeriezh 111
 arabek sklaved a ouenn durk, lesanvet "Mamelouked" pe "tud perc'hennet". 111
 Soudarded vat e oant. Implijet e vezent ivez evel melestrourien. Tamm- 111
 -ha-tamm e teujont da vezañ mistri, hag e kreiz an 13-vet kantved e 111
 kroujont ur sultanelezh, a renas Egipt ha Siria betek 1517. Lakaet o 111
 doa e Kaero ur C'halif arabek, a oa e garg ur garg-a-enor hepken. 111

En 11-vet kantved, avat, e oa deuet Turked all, gounezet d'ar 111
 feiz islamek, anvet "Seldjoukided" pe "diskennidi Seldjouk" (hemañ ur 111
 penn-brezel brudet). Aloubet o doa Persia, kemeret Bagdad e 1055, 111
 trec'het Bizantion hag ar Fatimided er C'hornog (ar Fatimided a oa ur 111
 rummad renerien arabek, diskennidi Fatima, merc'h ar Profed, a oa 111
 neuze mistri en Egipt). Donedigezh ar Seldjoukided e Palestina eo a 111
 voe pennabeg Brezelioù ar Groaz. 111

En 13-vet kantved, eus pelloc'h c'hoazh en Azia, e teuas evel un 111
 dour-beuz aloubadeg ur bobl all, Mongoled. Gant o rener Djengiz Kan 111
 (1162-1227) en o fenn o doa tizhet Persia. E 1258 edont e Bagdad. 111

XX

"A R B E D K E L T I E K"
 evit bevañ

en deus EZHOMM

=====

eus
 ho koumanant

Koumanant-bloaz : 7 lur nevez
 da gas da :
 C.C.RENNES-1907-07
 AR BED KELTIEK,
 21, rue Dixmude, Brest.

XX

nemet "Otomaned". Ar Seldjoukided a oa deuet a-benn da c'hounit digant 111
 Bizantiz Anatolia, na oa bet biskoazh aloubet gant an Arabed. E 1300, 111
 Osman I a grouas ur sultanelezh e Bitinia. E 1354, Soliman I a dreuze 111
 an Dardanellou. Un darn vras eus ar Balkanioù a voe gounezet. Kêr 111
 Vizantion (Kergustentin) a gouezhe e 1453, da vezañ anvet Istanboul. 111
 A-benn ur c'hantved goude e voe gounezet Siria, Irak, Arabia, Egipt, 111
 Libia, Tunizia, Aljeria, dindan Soliman II pe Soliman Veur (1520-1556). 111

Diwar neuze e koazhas nerzh-emastenn impalaeriezh an Otomaned, 111
 evel ma vo gwelet er pennadoù da heul. Hogen an Arabed a oa bet faezhet 111
 Ne oant mui nemet sujidi an Durked. O relijion a viras c'hoazh levezon, 111
 dreist-holl dre ma oa an Durked o-unan dalc'hidi Feiz ar Profed. Rener 111
 ar Vuzulmiz a oa Sultan Istanboul. An turkeg a oa ar yezh-Stad. An em- 111
 savioù aozet a vare da vare a-enep galloud an Nor Dreist ne oant ket 111
 atizet gant c'hoant an Arabed d'an emrenerezh, hogen steuet gant 111
 Turked emzispac'het ouzh o Sultan. 111

 (1) Pezh a anver hiziv "Reter-Kreiz" a veze anvet peurliesañ 111
 "Reter-Nesañ" betek 1940. Degemeret eo bet an anv "Reter-Kreiz" da 111
 heuliañ giz an Amerikaned. Ni eo a zo bremañ tud ar "Reter-Nesañ" ! 111

Lazhañ a rejont ar C'halif, 111
 ha terrif ar galifelezh. Ne 111
 dejont ket kalz pelloc'h eget 111
 Irak. Hogen ar vro-se, rannet 111
 diouzh ar C'hornog, a voe 111
 rivinet hag a bunec'has pell 111
 amzer, kollet ganti he c'hen- 111
 werzh hag war un dro he sked 111
 sevenadurel. 111

Er 15-vet kantved e ti- 111
 wanas ar galloud meur a dlee 111
 aotrouniekaat betek hor 111
 c'hantved-ni broioù ar Reter- 111
 -Kreiz (1), galloud ar re a 111
 zo stag outo an anv a "Durked" 111
 e spered Europiz, daoust 111
 n'int, da gomz ez strizh, 111

AR BED

111
111
111
111
111

111 E DON DONAÑ AR MOR HABASK : Ar batiskaf "Trieste", ennañ ar Suisad
111 Jacques Piccard hag an Amerikan Don Walsh, a ziskennas d'an 23 Genver
111 betek don donañ Foz an Inizi Marianez er Mor Habask : ouzhpenn 11 Km.
111 Ar foz a zo kalz donoc'h eget ma kreded. Loened, ur pesk ha doareoù
111 chifretez, a voe gwelet en defvalijenn glok war ur strad bouk-kenañ.
111 Daoust n'eus ket a blant en donderioù-se (ar plant a rank kaout gouloù),
111 ez eus loened eta.

111

111 BRASAÑ "FRIKER-ATOM" AR BED : D'ar 5 C'hwevrer e voe digoret e-kichen
111 Jenev, gant ar C'helenner Nils Bohr eus Danmark, brasañ "friker-atom"
111 ar bed, savet dre genlabour 12 Stad ar Greizenn-Imbourc'h Nukleel
111 Europat. 6 vloaz a zo aet d'e sevel. Ar pal eo kas war-raok an enklask
111 war fizik an uhelenergiezh.

111

111 ROLLOÙ-SKRIDOU KAVET EN ISRAEL : Kalz brud a zo bet er bloavezhioù
111 diwezhañ gant ar rolloù-skridoù kozh dizoloet e kevioù Murabaat e Bro-
111 -Jourden, warno tammoù eus ar Bibl ha skridoù relijiel all. Rolloù all
111 a zo bet kavet nevez 'zo, en dro-mañ en Israel, e-tal ar Mor Marv. En o
111 zouez ez eus daou dammig ler, bet miret gwechall, a greder, en ur
111 filakterenn pe voest-tilsam, warno arroudennoù diouzh Levr an Ermaez-
111 iadeg. Bez' e oa ivez ul lizher, ha n'eo ket bet digejet c'hoazh.
111 E-kichen an dielloù-se e oa pezhioù-moneiz eus ar c'hentañ hag an eil
111 kantved goude J.K., ha kantadoù begoù ha garennoù saezhioù, ar re-mañ
111 e koad livet ruz ha du. An traizoù-se a oa bet kuzhet en ur c'hev mar-
111 teze gant Yuzevien o tec'hout rak ar Romaned.

111

111 KERZHERIEN : Ur c'hiz nevez a zo deuet e Breizh-Veur : ober kerzhadennoù
111 hir. Ur vaouez 56 vloaz, an Doktorez Barbara Moore, ganet e Saratov,
111 Rusia, he deus gounezet brud o vale eus Birmingham da Londrez, neuze
111 eus Din Edin da Londrez, ha neuze, e miz C'hwevrer, eus beg-douar
111 hanternoz Bro-Skos betek Penntir Kernev-Veur (1.600 Km.). An Doktorez
111 a zo debrerez-c'hlasvez, hag a fell dezhi diskouez e teu he nerzh hag
111 he yec'hed diwar ar chug-tomatez, ar frouezh kriz, h.a., a zebr. Ur
111 plac'h 18 vloaz, avat, Wendy Lewis, he deus graet an hevelep hent, ha
111 debriñ a ra kig ha "kement tra a c'hell lakaat dindan he dent". Barbara
111 he deus c'hoant bremañ kerzhout a-dreuz ar Stadoù-Unanet, ha Wendy
111 kerzhout eus Londrez da Roma.

111

111 "LATIN HA GRESIANEG" PE "RUSIANEG HA SINAEG" ? : Ha gouzout a rit-hu
111 ne c'heller ket daremprediñ Skolioù-Meur Oxford ha Cambridge (zoken ar
111 re a studi skiantoù) hep bezañ desket latin ? Ar reolenn strizh-se a
111 vo torret hep mar dizale. Dont a reer da gompren ez eo pouezusoc'h en
111 amzer bremañ evit ur skiantour bezañ gouest da lenn ar skridoù gouiziek
111 embannet e Rusia hag e Sina eget bezañ gouest da zigejañ prezegennoù
111 Cicero. E-lec'h "latin ha gresianeg" e kinniger bremañ "rusianeg ha
111 sinaeg". Souezhus eo niver an dud a weler o teskiñ rusianeg, daoust na
111 deont ket peurvuañ kalz pelloc'h eget al lizherenneg. Gwerzhet-mat e
111 vez ivez, a lavarar, al levrioù-deskiñ sinaeg. Piv a savo e brezhoneg
111 ul levr "Rusianeg hep Poan", pe "Sinaeg e 40 Kentel" ?

UN ADPLANEDEENN DIANAV : E miz C'hwevrer e voe dizoloet gant diazez- 111
lec'hiou dispenn-roudoù ar Stadoù-Unanet un adplanedenn dianav o treifi 111
en-dro d'an Douar, en ur dremen e-biou d'an daou benn-ahel. Da gentañ e 111
kreded e oa bet taolet gant ar Rusianed. Hogen ar re-mañ a lavar o deus 111
roet da c'houzout bep gwech m'o deus taolet adplanedenoù. 111

===== 111
===== 111
===== 111

AR MIZ

MACMILLAN EN AFRIKA : Kentañ Ministr Breizh-Veur a echuas d'ar 5 C'hwe- 111
vrer e kêr Ar C'hab un dro-enklask en deus graet en Afrika, o teraouif 111
e Gana, hag o vont dre an holl vroiou stag e doare pe zoare ouzh ar 111
C'hommonwealth. Ne voe ket degemeret-mat e pep lec'h. Pa zegouezhas e 111
Blantyre, Bro-Niasa, d'ar 26 Genver, e voe graet displegadegoù bras 111
gant Afrikiz en e enep. Ur wech c'hoazh e teuas a-wel c'hoant an dud a 111
liv d'en em ren. "Un den, ur vouezh" eo ar slogan a glevas dre-holl er 111
reter. 111

EMZISPAC'H EN ALJER : Ar Jeneral gall Massu, a oa e penn an arme e rann-111
vro Aljer, a voe lamet e garg digantañ d'an 22 Genver. Tamallet oa 111
dezhañ bezañ graet diskleriadurioù d'ur c'helaouenner alaman a-enep 111
politikerezh Prezidant Frañs e-keñver Aljeria. Hemañ a zisklerias ne 111
vije kemmet mann en e bolitikerezh. 111

Emzispac'h a darzhas en Aljer d'ar 24 Genver. Trevadennerien 111
europat, displijet gant kement-se, a savas bardelloù e kreiz kêr. Goude 111
un devezh a zisplegadegoù a-enep ar gouarnamant, e voe emgann, hag 28 111
den lazhet, muioc'h glozet. Stad-seziz a voe embannet. E penn an emzis-111
pac'herien edo un depute yaouank, Lagaille, ha perc'henn ur c'hafedi, 111
Ortiz. D'ar 25 Genver da noz, ar C'hentañ Ministr Debré (a oa bet e 111
Roazhon o klask sioulaat koueriated Vreizh) a nijas da Aljer d'ober 111
enklask. Distreiñ a reas buan da Bariz. D'ar 26 e tegouezhe e Pariz ur 111
bagad deputed aljeriat deuet da ziskleriañ ar wirionez, emezo, d'ar 111
C'hallaoued. An emzispac'herien, gronnet gant soudarded al Legion Estren 111
ha re all, en em zaskoras d'ar 1-af C'hwevrer. Lagaille a voe harzet 111
ha kaset da Bariz. Ortiz a c'hellas kemer an tec'h. 111

GALLOUDOÙ ISPISIAL DA C'HOARNAMANT BRO-C'HALL : Da heul darvoudoù 111
Aljer, e voe galvet Parlamant Bro-C'hall d'en em vodañ d'an 2 C'hwevrer. 111
Antronoz e voe roet galloudoù ispisial d'ar gouarnamant e-pad 12 miz. 111
D'ar 5 e voe adaozet ar strollad-ministred. Soustelle, ministr ar Sahara 111
hag an Energiezh Atomek, a voe lakaet er-maez. D'ar 6, tri ministr 111
(Justis, Diabarzh ha Nerzhioù Armet) a nijas da Aljer. D'an 10 e voe 111
graet kemmadoù en Aljeria. Tri jeneral a voe dilec'hiet, an arme- 111
dachenn (he doa kemeret perzh en emzispac'h) divodet, servij psiko- 111
logek an Arme torret, ar melestrezezh hag ar polis adaozet. Kemmet e 111
voe dre zekred al Lezenaoueg-Kastiz e-keñver an torfedoù-enep-Stad, 111

- 111 kresket galloud al lezioù-barn-brezel da gastizafi ar vuzulmiz emsavet.
 111 Bez' e vo ivez votadeg kantonel en Aljeria kent diwezh an nevez-amzer.
 111 Tud harzet en Aljer (9 anezho) hag e Bro-C'hall a vo holl barnet e
 111 Pariz. D'ar 17 e voe embannet kemmadennoù all e melestrerezh Aljeria.
 111
 111 DISPLEGADegoù LABOURERIEÑ-DOUAR E BRO-C'HALL : Un displegadeg kouerien
 111 a voe aozet en Amiens e miz C'hwevrer evit enebif ouzh politikerezh ar
 111 gouarnamant e-keñver al labour-douar ha goulenn indeksadur ar prizioù.
 111 En endervezh e voe dispac'h ha krogadoù gant ar polis. Ouzhpenn 100
 111 den a voe lazhet. Displegadegoù all a voe graet d'an 18 e Chartrez hag
 111 e Clermont-Ferrand.
 111
 111 MARV AR C'HARDINAL STEPINAC : D'an 10 C'hwevrer e varvas ar C'hardinal
 111 Stepinac, Primad Yougoslavia, d'e 61 bloaz, en e gêriadenn c'henidik,
 111 Krasic. Aloisius Stepinac, mab ur c'houeriad, a oa bet labourer-douar
 111 hag ofiser en arme a-raok bezañ beleg. E 1946 e voe harzet gant gouarn-
 111 amant Tito ha barnet da 16 vloaz labour-ret, war zigarez bezañ
 111 "kenlabouret" gant an Alamaned. Dibizioniet e voe, avat, goude 5 bloaz,
 111 ha rediet da chom e Krasic hep kemer perzh e renerezh an Iliz. Nebeut
 111 war-lerc'h e voe anvet da Gardinal gant ar Pab. Brudet oa ar C'hardinal
 111 Stepinac dre ar bed evel unan eus harozed an Iliz heskinet.
 111
 111 KENDALC'H BROADOÙ AFRIKA : Eil Kendalc'h Broadoù Afrika, ennañ dileuridi
 111 eus 30 broad, a voe digoret gant ar Prezidant Bourgiba e Tuniz d'ar 25
 111 Genver. An dileuridi a zisklerias e oa poent skarzhañ diouzh douar
 111 Afrika aspadennoù diwezhañ an drevadennelezh. Politikerezh Bro-C'hall
 111 ha Suafrika a voe taget dreist-holl. Ur pikol dibunadeg a dremenas
 111 dirak kannaddi Bro-C'hall evit enebif ouzh mennad ar C'hallaoued da
 111 darzhañ ur vombezenn atomek er Sahara.
 111
 111 BOMBEZENN ATOMEK ER SAHARA : D'an 13 C'hwevrer e voe tarzhet un vombez-
 111 enn atomek gant ar C'hallaoued er Sahara. Klemmoù bras a voe graet
 111 raktal er broioù arabek. E Gana e voe skornet ar madoù gall. Gouarnamant
 111 Maroko a reas d'e ganradour kuitaat Pariz hag a zinac'has an emglev bet
 111 skoulmet 4 bloaz 'zo gant Bro-C'hall a-zivout ar politikerezh-diavaez.
 111
 111 TUNIZIA HA BIZERTA : E miz Genver, ar Prezidant Bourgiba a zisklerias
 111 e rankje ar C'hallaoued ober da vat o fourchasoù da guitaat Bizerta
 111 a-benn 15 devezh. Diwezhatoc'h, avat, e lavaras e oa spi da reizhañ an
 111 traoù dre gendiviz.
 111
 111 EMRENEREZH KIPRENEZ DALEET : Diemglev a zo atav etre Kipreneziz hag ar
 111 Saozon a-zivout an diazezlec'hioù-brezel a fell d'ar re-mañ mirout en
 111 enezenn. Deiz an emrenerezh, daleet betek an 19 Meurzh, a zo bet daleet
 111 c'hoazh hep deiziad merket.
 111
 111 BEAJOÙ KRUCHTCHEV : Kruchtchev a zo aet e miz C'hwevrer da weladenniñ
 111 Indez, Birmania hag Indonezia.
 111
 111 LISTRİ-SPLUJ KEVRINUS : Meur a wech endeo ez eus bet spurmantet listri-
 111 -spluj dirak aodoù Arc'hantina. Ne ouzer ket eus pelec'h e teuont,
 111 hogen peurliesañ e kreder ez int listri rusian. E miz C'hwevrer diwezhañ
 111 e voe kaset biñsaskelloù, distrujerien, fourgadennoù ha korvetennoù eus...

merdeadurezh-vrezel Arc'hantina da glask ul lestr-spluj (pe zaou pe dri, 111
ne ouzer ket) er Golfo Nuevo, 1100 Km. er c'hreisteiz da Vuenos Aires. 111
Soudarded a voe kaset ivez da virout ouzh "alouberien" da zouarañ ! 111

E-pad tost teir sizhun e voe handeet al listri-spluj, pe an 111
teuzioù listri-spluj, a oa bet dizoloet, a lavared, dre radar, hep 111
bezañ gwelet gant nikun. 111

D'an deiz ma skrivomp al linennoù-mañ, ar chaseerien a oa c'hoazh 111
chomet o fri war ar gloued. A bep seurt brudoù a rede, holl ken iskis 111
ha ken iskis. 111

Da skouer :

Bez' e oa an arm kuzh nevez bet meneget gant Kruchtchev. 111

Bez' e oa listri-spluj alaman, chomet o verdeñ abaoe fin ar 111
brezel, en o bourzh Nazied, marteze Adolf Hitler e-unan ! 111

Bez' e oa ur plad-nij kaset eus ur blanedenn all, sur a-walc'h eus 111
ar Werelaouen. Hervez ar c'heleier diwezañ e vefe ar blanedenn-se 111
goloet-holl a zour, ha n'eo ket souezh e kasse Gwerelaoueniz listri- 111
-spluj-nij da weladenniñ morioù an Douar ! 111

FUZEENNOÙ RUSIAN ER MOR HABASK : Ur vannadell liesrann a voe taolet 111
gant ar Rusianed er Mor Habask d'an 21 Genver, war-hed 12.300 Km. (An 111
taolva, war a greder, a zo tu bennak e-kichen harzoù Persia). Kouezhañ 111
a eure, eme Voskov, 2 Km. hepken diouzh ar pal tizhet. Ar bikernenn a 111
voe heuliet dre radar, dre ardivinkoù-lagad ha -skouarn, betek ar penn. 111
Un eil bannadell a voe taolet d'an 2 C'hwevrer. Teurel an div vannadell-111
-se, eme ar Rusianed, a zo un arnodenn a-raok kas bannadelloù etrezek 111
planedennoù. 111

MARMOUZIEN AN EC'HONDER : D'ar 4 Kerzu e voe taolet gant an Amerikaned 111
ur marmouz 88 Km. a-us d'an Douar. Al loen a oa serret e-barzh ur 111
glozenn heñvel ouzh ar re a dleer implij da gas un den en ec'honder. 111
Diskenn a reas dre harp un harz-lamm er Mor Atlantek, ha kavet e voe 111
gant un distrujer. Yac'h-pesk e oa an aneval. 111


D'an 21 Genver, en Enez Wallops, Virginia, e voe strinket ur 111
vounika, "Miss Sam", en ur gambrig stag ouzh ur glozenn. Ar glozenn a 111
voe harzlammet ha paket gant ur viñsaskell. An arnodenn a oa bet aozet 111
gant Melestrerezh Broadel an Aeryageerezh hag an Ec'honder. 111

=====
=====
=====
KUZUL AR BREZHONEG eo ar greizenn karget da zastum arc'hant evit 111
ar Yezh ha d'o ingalañ etre ar strolladoù a gemer perzh er Stourm. 111
Kasit ho profoù da : CC.NANTES-1316-63, L.Morvezen, 6, Av. de la 111
Gare, Concarneau. 111

EMVOD KASTELLIN

=====
=====
=====
War niverenn a zeu AR BED KELTIEK e vo roet keloù eus an Emvod 111
dalc'het d'an unnek a viz C'hwevrer diwezhañ e Kastellin gant SKOURR 111
BREIZH AR C'HENDALC'H KELTIEK. 111

Na c'hortozit ket evit aozañ emvodoù bihan, mar gellit, ha kasit 111
dimp keloù diouzhtu. 111




Hep poan ebet, hep torr-penn,
Forzh pelec'h, e giz pe c'hiz,
Pep den a c'hell deskif lenn
BRÉZHONEG EEUN en ur miz.

KANNAD AR YAOUANKIZ - 37

- 111 **AR MARC'HIG DU** Ne blijje ket da Visantig
111 mont d'e wele da eizh
111 eur e-pad an hañv, pa
111 vez ken hir an deiz ma seblant padout da viken.
111 Da eizh eur bep abardaez, hag eñ o c'hoari el liorz, e teue
111 mouezh e vamm eus tu bennak :
111 - Visantig ! Poent mont da gousket !
111 Ha ret e oa mont, rak d'an eur-se e veze atav e dad er gêr, ha ne
111 vije ket bet brav disentiñ.
111 "Da gousket ! Me lavar deoc'h !" a soñje Visant. "Ha penaos e
111 c'heller kousket pa vez ken lugernus an heol, ha pa glever ar vugale
111 all o c'harmif hag o c'hoarzhin ahont er parkeier ?"
111 Ne dalveze ket ar boan tabutal koulskoude. "Pa vi eizh vloaz," he
111 doa lavaret e vamm, "e c'helli chom un tammig pelloc'h da c'hoari."
111 Hir amzer en doa eta da c'hortoz. Ne oa nemet seizh vloaz.
111 Visantig, lakaet en e wele, a serre start e zaoulagad d'ober d'e
111 vamm krediñ en doa c'hoant kousket. E vamm a boke dezhañ hag a yae
111 kuit, en ur serrif an nor didrouz war he lerc'h.
111 Kerkent, e tigure Visantig e zaoulagad. Ha neuze e teue ar marc'hig
111 du.
111 Ar marc'hig du a zeue war ar voger. Visant ne oa ket sot. Gouzout
111 a ouie ne oa nemet skeud skouarn al lestr-bleuniou war an daol e-kichen
111 ar prenestr, taolet gant an heol a-us d'e wele. Un den bras n'en dije
111 ket kavet marteze e oa heñveloc'h ouzh ur marc'h eget ouzh ur c'hi, pe
111 ur pemoc'h, pe n'eus forzh petra. Met ar paotrig en doa lakaet en e
111 spered e oa ur marc'h. Gwelout a rae e benn, e c'houzoug, e vruched,
111 e zaoudroad a-raok, hag ivez un tamm eus e gein hag eus e gof.
111 Ar marc'hig du a lamme eus an tu d'ar voger d'egile. Da lavaret
111 eo, seblant a rae da lammat. Fival a rae, e gwir, met goustadik-
111 -goustadik, dre ma troe an heol en oabl. Visantig ne wele ket anezhañ
111 o vont kuit. Kousket edo pell a-raok.
111 ---
111 En hañv-se, Visantig a gouezhas klañv. Neuze, avat, e rankas chom
111 en e wele a-hed an deiz. A zo gwashoc'h, n'en doa tamm ebet c'hoant
111 sevel, na mont da redek el liorz, na debriñ ar frouezh a oa eno.
111 Sec'hed bras en doa. Tud a zeue en e gambr : e vamm, e dad, ar medisin.
111 A-boan ma wele ha ma kleve anezho. Re bounner oa e benn. Poan en doa o
111 treiñ anezhañ. Kousket, dihuniñ a rae bep eil tro. Gwech e oa deiz,
111 ha gwech e oa noz.
111 Un abardaez e tihunas. Gouzout a rae e oa abardaez, rak ar
111 marc'hig du a lamme war ar voger. Feiz ! lammat a rae, ha n'eo ket evel
111 kustum ober seblant. Lammoù bras a rae. Ha zoken, e-lec'h chom peg ouzh
111 ar voger, e tremene en tu all d'ar gwele, a gleiz da zehou, hag a zehou
111 da gleiz.
111 - Chom paoc'h, marc'hig du ! - eme Visant. - Ne welez ket ez on
111 klañv ?
111 Ar marc'hig du a chomas a-sav hag a sellas ouzh Visant.
111 - Pign war va c'hein ! - eme ar marc'h.
111 - Pignat war da gein ? Te a zo re voan. Me a vefe troc'het e daou!
111

- Laka da sac'h-levrioù war va c'hein neuze, ha pign war-c'horre. 111
Gra buan ! 111
- Ar paotrig a gemeras e sac'h ler, hag a reas evel m'en doa lavaret 111
ar marc'hig. Kerkent edont er-maez eus ar gambr, ha n'en doa ket bet 111
Visant amzer da welout dre belec'h oant tremenet, dre an nor, dre ar 111
prenestr, pe a-dreuz ar voger. 111
- Ar marc'hig, Visant war e gein, a c'haloupe war un hent bras. En 111
daou du d'an hent e oa gwez, hag ar gwez-se a oa du evel ar marc'h, ha 111
moan eveltañ : skeudoù gwez e oant e gwirionez, nemet sonn en o sav 111
e-lec'h bezañ a-led war an douar. Er parkeier tro-war-dro e weled 111
skeudoù gwez all, skeudoù kleuzioù, skeudoù saout, skeudoù defived, 111
skeudoù kezeg, hag al loened-se o vale, o redek, pe o tebrifi skeudoù 111
geotenoù. 111
- Pelec'h emaomp ? - eme Visant. 111
- E Bro ar Skeudoù, - eme ar marc'hig du. 111
- Degouezhout a rejont dirak ur stêr. Ur pont du, ken moan hag ur 111
follenn baper, a dreuze ar stêr-se. 111
- Diwall, marc'hig ! Re voan eo ar pont ! Ni zo o vont da gouezhañ 111
er stêr ! 111
- Met ar marc'hig a oa dija war ar pont. Skeud ur vag a riskle war 111
an dour. Hag en dour e oa skeudoù pesked o neuñ. Skeudoù laboused a 111
nije en aer, hag unan a ziskennas hag a bakas ur skeud pesk en e veg. 111
- E penn ar pont e save skeud ur c'hastell. Skeudoù soudarded a 111
ziwalle an nor. 111
- Hola ! paotr tev ! - eme gabiten ar soudarded. - Petra fell dit? 111
- Fellout a ra dezhañ, - eme ar marc'h, - gwelout Roue ar Skeudoù. 111
- Visant ne voe ket gwall blijet o klevout ar c'habiten oc'h ober 111
"paotr tev" anezhañ. Koulskoude e tiskennas diwar ar marc'h. C'hoant 111
bras en doa da welout Roue ar Skeudoù. 111
- Deus e-barzh ar c'hastell, - eme ar c'habiten. 111
Visant ne oa ket aet mat dre an nor m'en em gavas er-maez ! Ar 111
c'hastell ivez a oa moan evel baper ! 111
- Mat ! - eme ar c'habiten o c'hoarzhin. - Te ne ouzout ket mont e- 111
-barzh un ti ! Ne ouzout ket e ranker kerzhout A-HED AR VOGER ! 111
- Da heul ar c'habiten, Visant a zegouezhas en ur sal vras. Eno e oa 111
kalz tud : aotrounez, itronezed, bugale, holl skeudoù. Unan, azezet war 111
ur gador, ur gurunenn du war e benn, a oa Roue ar Skeudoù. 111
- Kemer ur gador, va bugel, - eme ar Roue, o tiskouez skeud ur 111
gador. 111
- N'eo ket ur gador an dra-mañ, - eme Visant. - Me ne azezin ket ! 111
- Ne azezi ket ! Ne azezi ket ! 111
- En un taol e voe trouz spontus. Ar skeudoù a fivve, a save o di- 111
vrec'h, a oa mesket holl evel ur vrumenn du. 111
- Ne fell ket dezhañ azezañ ! Ne fell ket dezhañ sentiñ ouzh hor 111
Roue ! Krouget e vo ! D'ar groug ! D'ar groug ! 111
- Pa zihunas Visant, e oa deiz bras anezhi. E-kreiz ar gambr e welas 111
... ar marc'hig du ! ... Nann, ne oa ket ar marc'hig du, Ur marc'hig du 111
all e oa, e koad, ur planken ha peder rod dindanañ. 111
- Mont a ra gwelloc'h ? - eme vamm ar paotrig o tont er gambr. - 111
Sell ! En noz-mañ n'ec'h eus graet nemet krial "marc'hig du". Ha da dad 111
a zo aet er mintin-mañ da brenañ unan dit. Brav-eo, n'eo ket 'ta ? 111
- ROPARZ HEMON 111
- Le Gérant : Mlle Y. Martin, 21, rue de Dixmude, Brest - C.C.P.P. N° 36.242
Ronéotypé par Rincazaux, 1, rue Alain Fournier, Brest-



Revue mensuelle-N°16-Avril 1960 Kelaouenn vizek-Niv.16-Ebrel 1960
Abonnement annuel : 7 NF. Koumanant-bloaz : 7 LN.
"CC.RENNES-1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, Brest"

EMVOD KASTELLIN

D A N E V E L L S K R I D g a n t R . H U O N

BEUREVEZH :

1) Buhez ar SKOURR hag "AR BED KELTIEK"

Ronan Huon a lenn danevell an Dim.Martin (gwelout pelloc'h).
Penaos dastum izili ha koumananterien nevez ? Kinnig a reer
goulenn digant an Dim.M.Gourlaouen anvioù ar re o deus heuliet Skol
OBER. Goulenn ivez roll koumananterien an Emsaver Yaouank. An Ao.Yann
Ar Beg a lavar e c'hellfe ingalañ skouerennoù er bodadegoù a bep seurt
a vez graet e Kemper.

2) Emvod miz Mae

Kinnig a reer Karaez d'an 12 a viz Mae. Ar vodadeg a vo diwar-benn
KUZUL AR BREZHONEG. Ar Ao.Klerg o vezañ ar rener a zivizo da vat eus al
lec'h hag an deiz.

Mare Emvod an Hafv a vo divizet neuze e miz Mae.

3) Emvodoù lec'hel

O vezañ ma'z eus ur strollad fonnus a izili e Roazhon, ha re
yaouank dreist-holl, e vo ret ober emvodoù lec'hel e Roazhon. An Ao.
Yann Ar Beg a ginnig ma vefe klasket ober ivez e Naoned.

4) Kannadiezh SKOURR BREIZH e Kendalc'h Keltiek Kembre 1960

Ar C'hendalc'h a vo dalc'het en Aberystwyth goude an Eisteddfod.
Meur a hini a garfe mont. Diaes eo dezhe lavarout bremañ.

ENDERVEZH :

KAOZEADENN DIWAR-BENN "AL LIAMM"

gant Ronan Huon

1) Stad embannadurioù AL LIAMM

Er bloaz-mañ ez eus bet embannet : An Teirgwern Pembroke, gant
J.Priel, ur pezh levr 215 pajenn ennañ, - Fest-Noz, gant Y.Olier, 208
pajenn, - Deizadurioù, - Follennoù bruderezh.

323.000 lur kozh a zo bet rentet d'an Ao.Goinard ha d'an "Entente Culturelle". 111

2) Gwerzh al levrioù 111

286 goulenn levrioù a zo bet. War-dro 1200 levr a zo bet gwerzhet hep kontañ ar re gwerzhet a zorn da zorn. Al levrioù gwerzhet ar muiañ a zo : 1) Yezhadur Roparz Hemon, 2) Ar Geriadur Brezhonek-Gallek, 3) Ar Geriadur Gallek-Brezhonek, 4) "An Teirgwern Pembroke", 5) Skol Izel Roparz Hemon. 111

Abaoe warlene ez embann AL LIAMM follennoù bruderezh evit derc'hel al lec'h na vez ket roet deomp er c'helaouennoù. Ur seurt kazetenn vloaziek eo. Kaset e vez dre ar post d'ur bern tud ha da stalioù-levrioù, ur wech pe ziv ar bloaz. 111

3) Evit 1960 111

Skol Izel Roparz Hemon a zo diviet. Ur pevare embannadur a vezo graet er bloaz-mañ. Moulet e vo 4000 skouerenn. Ma'z eus tu e vo embannet ivez "An Tri Boulomig Kalon Aour" gant Roparz Hemon. Moulet e vo un deiziadur ha follennoù bruderezh evit 1961. 111

4) Stad ar gelaouenn AL LIAMM 111

Dispignoù ar bloaz : 770.202 lur kozh. 111
 Enkefadurioù : 706.791 - 111
 200.000 lur a brofoù a zo bet. Daoust da se e kollomp 63.411 lur. 111
 Ar priz a zo gwall izel : 1.200 lur ar 6 skouerenn. Hogen an teñzorier n'eo ket a-du evit e greskiñ. 111

5) An danvez 111

Klemm a ra ar rener dre na vez ket kaset dezhañ kalz a skridoù er mare-mañ. Aet e vije hor skrivagnerien da hesk ? 111

6) Bruderezh 111

Klasket ez eus bet lakaat bruderezh er c'helaouennoù-mañ, hag o deus nac'het : La Liberté du Morbihan, L'Echo de Lannion, L'Ouest-France, Le Télégramme, Le Progrès de Cornouailles, Le Petit Bleu, Ouest-Matin, La Bretagne à Paris. 111
 Degemeret eo bet war gelaouenn ar C'huzul, Ar Soner, L'Avenir ha La Terre Bretonne. 111

An teñzorier a ginnig aozañ koumanantoù strollet. Tud 'zo a-du, re all a-enep dre ma ve ret reiñ re a arc'hant war un dro. 111
 An teñzorier a ginnig aozañ ivez ur referendom evit gouzout peseurt skridoù a garfe al lennerien kaout er gelaouenn. 111

===== 111
 ===== 111
 AL LIAMM, kelaouenn lennegel daouviziek, koumanant-bloaz 12 LN. - 111
 P.Le Bihan, 6, Domaine des Hocquettes, Suresnes, CC.PARIS-5349-06. 111

111
111 MEREREZH SKOURR BREIZH AR C'HENDALC'H KELTIEK
111
111
111

111 E miz Genver 1951, da lavarout eo bloaz hanter goude ma voe savet,
111 SKOURR BREIZH AR C'HENDALC'H KELTIEK en devoa 6 ezel.

111 Ha bremañ :

111 Mar keñveriomp daou vloavezhiaed, da skouer 1953/54 ha 1958/59,
111 setu ar stad :

111 E 1953/54 : 87 ezel paeet ganto o skod.

111 E 1958/59 : 105 ezel -

111 Ne gontan ket, evel just, an dud a laka o anv, hag a chom diseblant
111 ha diflach-kaer goude se.

111 War un dro, kelaouenn ar SKOURR, "AR BED KELTIEK", he deus
111 kresket :

111 E 1953/54 : 40 pajenn.

111 E 1958/59 : 144 pajenn.

111 Kement-mañ hep na ve, koulskoude, kresket priz ar skod. (Azalek
111 Genver 1960 hepken, eo bet kaset eus LN5 da LN7).

111 Ouzhpenn, strewet ez eus bet, e-doug ar bloaz, er skolioù,
111 kelc'hioù, klañvdioù, kloerdioù, 3.100 skouerenn eus "DALC'HOMP",
111 follenn vizek, skrivet e Brezhoneg Eeun, dreist-holl evit ar re
111 yaouank hag an deskerien.

111 Evit gallout en em vataat eus prizioù timbroù izeloc'h, mes ivez
111 evit gallout ledanaat kelc'h al lennerien, diskleriet eo bet "AR BED
111 KELTIEK" evel kelaouenn abaoe derou 1959. Neb a gar a c'hell bremañ
111 koumanantiñ. Ret eta ober bruderezh ha klask koumananterien nevez.

111 8 hepken a zo bet gounezet warlene. Ne c'heller ket rebech amañ pezh a
111 damaller alies d'hor c'helaouennoù : bezañ holl heñvel, en doare ma
111 c'heller mat-tre tremen gant unan anezho.

111 Warlene, skoulmet eo bet ar roll, just a-walc'h, gant skoazell
111 KUZUL AR BREZHONEG, a roas LN90. Met, ma vije bet paeet o dle gant an
111 holl, ne vije bet ezhomm skoazell ebet.

111 Ur gudenn eo, anat. Koulskoude, nec'husoc'h eo gwelout an di-
111 seblanted. C'hoazh ur wech, kasit anvioù ha chomlec'hioù tud hag a
111 blijfe dezho lenn traoù ARNEVEZ, ha feiz, AES, e brezhoneg.

111 Kaset e vez bep miz niverennoù evit ober bruderezh, ar gwellañ
111 doare eo sur-mat.

111 IVONA MARTIN

111 ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡

111 ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡

111 ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡

111 ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡

111 ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡

111 ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡

111 ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡

111 ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡

111 ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡

111 ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡

111 ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡

111 ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡

111 ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡

111 ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡

CCP.RENNES-1907-07,AR BED KELTIEK,
21,rue Dixmude,Brest

AL LIORZH

oo
o AR GOUNIT FROUEZH o
oo

Digant ur c'henskriver em eus bet al linennoù-mañ :

"A-du on gant mirout penntiez e Breizh, kentoc'h eget bodañ ar vicherourien e kêriadenoù kras. Yac'hoc'h buhez hini ar micherour labouradegoù o tremen darn eus e amzer war ar maez, aesoc'h e vuhez danvezel zoken. En abeg da se e kavan pouezus ho liorzhouriezh, nemet da'm meno e vije bet gwelloc'h da gentañ heñchañ hor pobl war ar gounit legumaj ha frouezh. A-raok kened, bara. Ar gounit frouezh a c'hellfe ober eus Breizh unan eus liorzhoù Europa, ha reiñ d'ar Vretoned ur vuhez denel yac'h, kempouezet-mat."

Ret din anzav ne soñjen ket kement e mad (speredel) pobl Vreizh hag e plijadur lennerien AR BED KELTIEK, ha me o skrivañ diwar-benn ar bleuñv. Hep bezañ skuizh gant ar Bed (na gant an Emsav !), evidon-me al liorzh eo al lec'h da zistennañ ar spered, goude al labour er burev.

D'ar mare ma tiwrizienn muioc'h-mui an dud, ma tioueront ar c'henstok gant an douar, tra ma'z a o faltazi gant ar beajoù etresterel, e kavan koulzet-mat mennad ur gelaouenn-gelc'h evel ANTAIOS (alamanek) : degas soñj d'an DUD ez int stag ouzh an DOUAR-mañ, hag o deus ezhomm eus e vagadur. Boued, met kened ha bleuñv ivez. Pe e tinerzhint, evel an Titan Antaios, kerkent ha ma voe dibradet gant Herkules.

Da'm c'henskriver ha habaskteriñ, ne vez ket gwallegat ar gwez frouezh ganin. Muioc'h e pledan dezho eget da legumaj. Deuet on da zegemer ez eo gwelloc'h, pa n'eo ket ec'hon ho tachenn, reiñ an douar da wez frouezh kentoc'h eget da legumaj. Ar re-mañ a zo tu d'o frenañ gwelloc'h marc'had eget frouezh, da vihanañ e Dulenn. Ar gwez frouezh, ur wech diblaset-mat, a gemer nebeut a amzer. Ha kenedekaet a reont al liorzh gant o bleuñv hag o delioù hag o frouezh ivez ! - kement ha brousgwez all.

Skrivañ a rin pennadoù diwar-benn ar frouezh. Hogen ne lavaran ket ez on den a veli war an dachenn. Gwelloc'h em bije kavet ivez kregiñ dre ar penn kentañ, dre ar plantañ. N'eo ket ar mare. A-zivout enebourien ar frouezh e komzin, ar re-se a ranker diwall diouto da bep mare eus ar bloaz, koulz lavaret.

oooooooooooooooooooooooooooooooooooo
o LOUEDENNOU o
oooooooooooooooooooooooooooooooooooo

Ar gwez hag ar brousgwez frouezh a c'hell bezañ taget gant amprevaned ha louedenoù en o c'hef, skourroù ha delioù, pe en o frouezh end-eeun. Peseurt trubuilhoù a c'hoarvez, se a vez diouzh an amzer, al lec'hiadur, an diazez (douar). Gwerjeoù 'zo a hañval teurel e-leizh a frouezh hep ma vije damantet tamm dezho. Me a gav gwelloc'h diwall.

Ur reolenn a vrezelouriezh eo tagañ an enebour pa vez an aesañ da dizhañ. E-pad an diskar-amzer hag ar goañv eo e tleer "ober o stal"

		111
<u>SUJIDIGEZH SUAMERIKA</u>	Kontomp da gentañ, berr-ha-berr, penaos e voe sujet Suamerika gant Europiz. (Amañ e vo implijet	111
ar ger "Suamerika" evit merkañ ar broioù er c'hreisteiz d'ar Stadoù-		111
-Unanet, da lavarout eo Meksik, an Inizi, Kreiz-Amerika hag Amerika ar		111
C'hreisteiz).		111
E 1492 e voe kavet an Inizi gant Kristoc'h Kolomb, hag e 1498		111
aodoù Venezuela. E 1500, ar Portugalad Alvares Cabral a zegouezhas dre		111
chafñs war aodoù Brazil. Hep gortoz, Spagn ha Portugal o doa divizet, e		111
1494, dre emglev Tordesillas, rannañ etrezo ar Bed Nevez hervez ul		111
linenn o vont a benn-ahel da benn-ahel, 370 lev er c'hornog da Inizi ar		111
C'hab Gwer, kement tra a oa diouzh tu ar c'huzh-heol da Spagn, kement		111
tra a oa diouzh tu ar sav-heol da Bortugal.		111
Aloubadeg ar Spagnoled a voe buan graet. An Inizi a voe kemeret e		111
derou ar 16-vet kantved, Meksik diwar 1519, Perou diwar 1531, Arc'hant-		111
ina diwar 1536, Chili diwar 1539. A-benn diwezh ar c'hantved, ar		111
Spagnoled a oa mistri eus Kalifornia betek kreisteiz Chili. E 1509 e oa		111
bet diazezet un drevadenn gant Portugaliz e Brazil, daoust ma chomjont		111
e-pad pell e-tal an aod, hep mont don e diabarzh ar vro.		111
Ar pobloù trec'het a voe holl anvet "Indianed". Disheñvel-bras e		111
oant, avat, an eil re diouzh ar re all. Azteked Meksik, Maiaed ledenez		111
Yukatan, Inkaed Perou o doa tizhet ur bazennad uhel a sevenadur. Er		111
broioù all ne oa nemet meuriadoù gouezidi pe damouezidi.		111
Renet e voent holl gant Spagnoled pe Bortugaliz, an darn vuiañ		111
anezho soudarded, kargidi ha beleien kaset eus Europa. Melestrerezh ar		111
Spagnoled a oa kreizennet-strizh, Lima ha Meksiko ar c'hreizennoù		111
pennañ, an urzhioù o tont rag-eeun eus Madrid.		111
Gant an amzer, an Europiz diazezet e Suamerika a veskas mui pe vui		111
gant an Indianed. Ur boblad hironed a ziwanas, katoliked o komz spagn-		111
oleg pe bortugaleg, intret o spered gant sevenadur Spagn pe Bortugal,		111
hogen diforc'h koulskoude diouzh pobloù ar "vammvro". Degaset e oa bet		111
ivez, evel sklaved, morianed eus Afrika. An holl dud-se a zeuas da		111
vezañ diseblant-kaer e-keñver pezh a c'hoarveze en tu all d'ar Mor		111
Atlantek. Tamm-ha-tamm e teujont da sellout ouzh Spagn ha Portugal evel		111
ouzh broioù estren ; gwashoc'h zoken, broioù mac'homerien. Ret eo		111
soñjal e oa bet lakaet en arigrap pinvidigezhioù Suamerika da greskiñ		111
galloud an div vro europat, hep damant ouzh mad Amerika.		111
		111
<u>ATIZ NORZAMERIKA</u>	Nebeut a zarvoudoù en istor an denelezh a zo bet	111
	pouezusoc'h eget emsav Norzamerika ouzh Bro-Saoz,	111
	etre 1775 ha 1783. Diskleriadur ar 4 a viz Gouere	111
1776 a lakaas e go menozioù a frankiz, n'o deus ket paouezet abaoe d'en		111
em ledañ dre ar bed. A-raok fin ar c'hantved o doa ar menozioù-se		111
tizhet Bro-C'hall, ha lakaet un dispac'h da darzhañ eno e 1789. Kealioù		111
a zemokratiezh, a frankiz evit pep broad d'en em ren, a c'hounezas		111
kornog Europa en 19-vet kantved, o c'henel pezh a voe anvet "Dihun ar		111
Broadelezhioù", eus Iwerzhon betek Gres. E dibenn an 19-vet kantved e		111
tizhas ar menozioù-se Rusia, Azia hag Afrika, o tichadennañ nerzhioù		111
chomet morgousket betek neuze.		111
Suamerika, aes kompren, a voe tizhet ken buan hag Europa.		111
		111
<u>AN EMZIEUBIDIGEZH</u>	E Suamerika a-bezh e kreske an enebiezh ouzh	111
	melestrerezh Spagn. Un tamm lealded a vane c'hoazh	111
evelato e-keñver ar roue.		111

- 111 Un darvoud, a seblante dister da gentañ, a enaouas an tangwall. E
 111 1806 e voe taget Buenos Aires gant ar Saozon. Ar besroue a zilezas e
 111 garg hag a dec'has da Spagn. Tud ar vro, chomet o-unan, a ziarbennas ar
 111 Saozon, hep skoazell digant ar vammvro. War un dro o doa dizoloet e
 111 oant gouest d'en em zifenn ha d'en em ren.
 111 E 1810 e voe furmet ur "junta", pe gouarnamant-da-c'hortoz, e rann-
 111 vroioù ar stêr Blata (a zeuas diwezhatoc'h da vezañ Arc'hantina). Er
 111 bloaz-se ivez e voe emzispac'h e Chili hag en Uruguay. E 1811, Paragway,
 111 an hini gentañ eus holl Stadoù Suamerika, a c'hounezas hec'h emrenerezh.
 111 Pelloc'h en hanternoz, Simon Bolivar a gemeras penn an emsav. E
 111 1819 e save "Kolombia Veur" (a dlee en em rannañ, oc'h ober Kolombia,
 111 Venezuela, Ekuador). Tro-ha-tro, Nikaragwa, Kosta Rika, Honduras,
 111 Salvador, Gwatemala (1821), Perou (1824), Bolivia (1825) a voe dieubet.
 111 Goude ur stourm hir, etre 1810 ha 1821, Meksik a dorras yev Spagn.
 111 Ar bloaz 1826, ma rankas soudarded diwezhañ ar Spagnoled kuitaat
 111 Chili, a verk diwezh beli Spagn war douar-bras Amerika.
 111 An div enezenn vras, Haiti ha Kuba, a voe un tammig disheñvel o
 111 flanedenn. Rann gornog Haiti a oa bet roet gant Spagn da Vro-C'hall e
 111 1697. An enezenn a-bezh a voe perc'hennet gant Bro-C'hall e 1795. Un
 111 emsav broadel, renet etre 1796 ha 1802 gant Toussaint Louverture a-enep
 111 ar C'hallaoued, a voe mouget da gentañ. Hogen an emrenerezh a voe
 111 embannet e 1804. Ar rann reter a voe restaolet da Spagn e 1809, en em
 111 zieubas e 1821, en em roas adarre da Spagn e 1861, en em zieubas un eil
 111 gwech e 1865, hag a zo hiziv ar Republik Dominikan.
 111 Kuba ne grogas evit mat gant ar stourm evit ar frankiz nemet e
 111 1868. An emsaverien a voe faezhet e 1878. Un emsav all a darzhas e 1895.
 111 E 1898, goude brezel etre Spagn ha Stadoù-Unanet, e voe lakaet an
 111 enezenn dindan warez ar re-mañ. Ne c'hounezas hec'h emrenerezh leun
 111 nemet e 1934.
 111 E Brazil e voe nebeutoc'h a feulster. Pa voe aloubet Portugal gant
 111 Napoleon, e tec'has ar gouarnamant hag al Lez (an adrener hag an
 111 tiegezh roueel) da Rio de Janeiro e 1808, da chom eno betek 1821. E
 111 1815, Brazil a voe troet da rouantelezh, renet gant mab an adrener, ar
 111 priñs Don Pedro. E 1822 e voe embannet an emrenerezh, atav dindan Don
 111 Pedro. Ar Republik a voe savet e 1889 hepken.
 111 E derou an 20-vet kantved, Suamerika a oa dieub, nemet tachennoù,
 111 dister o gorread e-keñver ar peurrest, e dalc'h Bro-Saoz, Bro-C'hall,
 111 an Izelvroioù hag ar Stadoù-Unanet : lod eus an Inizi, un tamm eus
 111 Honduras, hag an teir Gwiana.
 111 Setu aze braslinennet-eeun un istor luziet-kenañ e gwirionez.
 111
 111 EMZALC'H AR SPAGNOLED Portugaliz, hiziv ken aheurtet da virout o
 111 impalaeriezh tramor, o doa lezet Brazil da
 111 zispartiañ diouto hep re a sach.
 111 Spagniz, avat, en em zifretas e pep giz evit derc'hel Suamerika
 111 dindan o beli. Pezh o deus graet a zo nebeut anavezet er-maez eus
 111 Spagn, hag a dalv ar boan kontañ.
 111 Bro-Spagn, aloubet gant Napoleon, en em savas a-enep an alouber,
 111 gant skoazell ar Saozon, ken na voe argaset ar C'hallaoued en tu all
 111 d'ar Pireneoù, ha pelloc'h zoken. Ar re o doa kenlabouret gant ar
 111 Frañsizien, Godoy hag all, a voe diskaret. Paotred an dos de mayo (an
 111 emzispac'h a-enep ar C'hallaoued e Madrid, d'an 2 Mae 1808) a gave
 111 dezho e oa Spagn o vont da adkemer he renk e-mesk pennañ galloudoù

ar bed. Hep gortoz zoken fin an dieubidigezh diouzh ar C'hallaoued, e
voe bodet ar Cortes (Parlamant) e Cadiz, hag embannet ur C'henreizhadur
d'an 19 a viz Meurzh 1812. 111

Hervez ar C'henreizhadur-se e oa Spagn, pe gentoc'h "ar Spagnoù",
ur vro unvan ha dirannadus, oc'h en em astenn en daou du d'ar Mor
Atlantek, ha betek Mor Sina. Nep den, ganet hag o chom er vro-se, n'eus
forzh a be.ouenn, Europad, Indian, Morian, Aziad pe Hiron, a vije
kèodedad gant gwirioù leun. Ne vije nemet ur Parlamant, ur c'hannad dre
70.000 den. Bez' e oa, en ur ger, an enteuzadur klok : Filipiniz,
Suamerikiz, Afrikiz, Andaoulziz, Kastilhiz, Euskariz, Kataloniz, h.a.,
kevatal dirak al Lezenn. 111

Se a oa daou vloaz goude emsav Buenoas Aires. Re ziwezhat e oa.
Netra ne c'helle mui herzel ouzh an doug d'ar frankiz a vroude poblou
ar Bed Nevez. An enteuzadur a chomas un hufvre. 111

Kollet ganti douar-bras Suamerika, e vane c'hoazh div drevadenn
vras gant Spagn : Kuba hag ar Filipinez. Emsav ar Filipinez (kemeret en
diwezh gant ar Stadoù-Unanet e 1898) n'eo ket darn eus ar studiaden-
-mañ. Istor Kuba a zo dudius-meurbet : 111

A-hed an 19-vet kantved, e talc'has Spagn da Guba evel ma talc'h
ur c'hi d'un askorn. Etre 1868 ha 1878 hepken, e varvas 100.000 a
Spagnoled yaouank evit klask mirout ar "rannvro tramor". Dinerzhet ha
rivinet e voe Spagn gant ar brezel-se. Trec'h e voe e 1878, o rankout
koulskoude prometñ da Gubiz o emrenerezh. Ugent vloaz goude, war-
-lerc'h krizderioù euzhus, loskadegoù ha bac'hadegoù ar jeneral Weyler,
e voe lakaet Kuba dindan askell ar Stadoù-Unanet. 111

War douar-bras Suamerika zoken e klaskas Spagn meur a wech ad-
lakaat he zroad, oc'h emellout e politikerezh ar Stadoù nevez, o vont
betek ober brezel da Berou, Chili, Bolivia hag Ekuador (1864-1879). 111

FRANKIZ SUAMERIKA Istor ar Stadoù dizalc'h, evel ma oar an holl, n'eo
ket bet etrus : dizurzhiou, brezelioù diabarzh ha
diavaez, taolioù'reveulzi, diktatourien, breinadurezh politikel. Keuz
a zo bet alies da velestrezezh Spagn, fall ha ma oa. Hogen ur gentel
anat a zo da dennañ diouzh kement-se : ur wech kroget, netra ne vir
ouzh c'hoant ur bobl da vezañ dieub. 111

AR BIKEREZ

(hervez ur varzhoneg gant Han Yu, Bro-Sina, 8-vet kantved) 111

-I-

Ar bikerez o nijal
A dremen e-tal ho tremm,
Ha souden, en ur sourral,
E spin ho poc'h, hag e flemm.

-II-

C'hwi a zo hir ho puhez.
He buhezic zo ken berr !
Skornet e vo didruez
Gant frim an diskar-amzer.

-III-

M'ho ped, e-lec'h he flastrañ,
Diskouezit ho kalon vat,
Ha lezit hi da sunañ
Un dakennig eus ho kwad.

AR MJZ

- 111
111
111
111
111
111
111
111 DIVANKADENN : En hon niverenn diwezhañ, p.33, linenn 9, e tleer lenn
111 "gloazet", ha n'eo ket "lazhet".
111
- 111 KOUERIEK VREIZH HA GOUARNAMANT BRO-C'HALL : Kentañ Ministr Frañs, Debré,
111 a oa e Roazhon d'ar 1-añ Meurzh evit studiañ kudenn ar baourentez e
111 Breizh. Dileuridi a-berzh ar gouerien a nac'has mont d'e selaou. E-kerz
111 ur vodadenn gant parlamantidi hag ekonomourien, ar C'hentañ Ministr a
111 lavaras o doa ar Vretoned "re a vugale". Unan eus ar re a oa eno a
111 savas neuze hag a guitaas ar sal.
111
- 111 KREN-DOUAR EN AGADIR : Peuzdistrujet e voe kêr Agadir e Maroko gant ur
111 c'hren-douar. Ar gwallzarvoud a c'hoarvezas en noz etre an 29 C'hwevrer
111 hag ar 1-añ Meurzh, nebeut a-raok hanternoz. Hogos kement ti a oa e kêr
111 a voe diskaret. Savadurioù bras, evel ostalerioù ha kazarnioù, a gouezhas
111 evel tiez-kartennoù. Da heul ar c'hren-douar e teuas un taol-reverzhi,
111 an tarzhioù-mor o vont betek 300 m. diouzh an aod. An tan a grogas e
111 lec'hioù 'zo. Skoazell a voe kaset diouzhtu gant gouarnamant Maroko,
111 gant an Amerikaned, ar C'hallaoued, ar Spagnoled, h.a. E-pad 15 devezh
111 da vihanañ e furchas ar saveteerien e-touez an dismantrou, gant spi da
111 gavout tud chomet bev. Hag un nebeudig anezho a voe kavet e gwirionez.
111 Etretant e oa bet savet ur gêr-deltennoù evit herberc'hiañ ar repuidi.
111 Ouzhpenn 10.000 den, a greder, a zo bet lazhet.
111
- 111 BEAJOU PENNOÙ-STAD : Eisenhower a zo aet nevez 'zo d'ober un dro e
111 Suamerika. Kruchtchev diouzh e du a zo aet da Indez, Birmania, Indo-
111 nezia hag Afganistan. D'ar 15 Meurzh e tlee mont da Vro-C'hall. Hogen
111 tapout a reas ar grip, hag e rankas daleañ e veaj betek an 23.
111
- 111 BODADEG DIZARMAÑ : Ur vodadeg evit studiañ an dizarmañ a zigoras e
111 kreiz miz Mae e Jenev, enni dileuridi eus dek Stad.
111
- 111 PREZIDANT FRANÑS HAG AR PARLAMANT : Ouzhpenn an hanter eus deputeed ar
111 Vodadenn Vroadel o doa goulennet digant Prezidant Frañs gervel ar
111 Parlamant (na dle en em vodañ nemet e diwezh Ebrel) evit pleustriñ war
111 gudennoù al labour-douar. Ar Prezidant a nac'has.
111
- 111 DIAZEZLEC'HIOÙ ALAMAN E SPAGN ? : Skignet e voe, e diwezh C'hwevrer, ar
111 brud e vije bet kendivizoù etre Spagn hag Alamagn Gornog evit sevel
111 diazezlec'hioù-brezel alaman e Spagn. Alamagn Gornog, a lavarer, a zo
111 re enk, hag a rank lakaat pourvezioù-brezel tu bennak en Europa. Ha setu
111 trouz, dreist-holl gant ar Saozon (ar re a zalc'h Jibraltar, a-enep da
111 youl ar Spagnoled !). N'eus netra, evel ouzer, a ra spont evel gwelout
111 Spagn hag Alamagn o tostaat an eil ouzh eben, ha brezelioù e-leizh a
111 darzhas en Europa er c'hantvedoù tremenet abalamour da se.
111
- 111 KENREIZHADUR NEVEZ E GANA : D'ar 6 Meurzh, deiz-ha-bloaz emrenerezh
111 Gana, ar C'hentañ Ministr, an Dr. Nkrumah, a zisplegas dre skingomz

petra vo ar C'henreizhadur nevez kinniget gantafi. Ar c'hentañ Prezidant hag ar Parlamant a vo anvet gant ar bobl, war an diazez "un den, ur vouezh". Ar Prezidant a vo penn an arme. Gwir en devo da vetoñ lezennoù degemeret gant ar Parlamant. Gant ar Parlamant, avat, e vo ar galloud-lezenniñ, hag ar galloud-se ne c'hello ket bezañ lamet digantafi. Gana a zeuio da vezañ Republik hep kuitaat ar Gumuniezh Vreizhveurek. Prest e vo da zaskoriñ hec'h emrenerezh pa vo savet un Unaniezh Hollafrikat.

GINEA HAG ALAMAGN RETER : O kas ur c'hannadour da Alamagn Reter e derou miz Meurzh, Ginea he deus graet pezh n'eo ket bet graet c'hoazh gant Stad ebet en tu-mañ d'ar Rideoz Houarn. Tamall a ra da Alamagn Gornog bezañ skoazellet ar C'hallaoued da ober o bombezenn atomek er Sahara.

DIZURZH E KONGO AR VELGIZ : Stad "dalc'hidigezh-vrezel" a voe embannet d'ar 14 Meurzh e Katanga, rannvro ar mengleuzioù kouevr e reter Kongo ar Velgiz. En derc'hent e oa bet krogadoù etre daou strollad politikel e Kerelesbed ha tro-dro, hag emgannoù gant gofioù ha saezhoù kontammet etre meuriadoù. 13 den da vihanañ a zo bet lazhet ha muioc'h glozet.


KORC'HWEZH EN ENEZ-VAORIS : Enez-Vaoris, er reter da Vadagaskar, a voe gwastet gant ur c'horc'hwezh e diwezh C'hwevrer, an hini gwashañ, a lavarar, abaoe 1892. Herr an avel a dizhas 290 Km/eur.

LESTR TARZHET E KUBA : Al lestr gall "La Coubre", a 4.310 tonellad, karget a bourveziou-brezel, a darzhas e porzh La Habana d'ar 4 Meurzh. Kalz a zistruj a voe graet tro-war-dro, 70 den lazhet ha 250 glozet. Ar C'hentañ Ministr Fidel Castro a damallas ar Stadoù-Unanet da glask mirout ouzh Kuba da gaout armoù (o reiñ da intent o doa ijinnet an taol).

ETREZEK AR WEREIAOUEN : D'an 11 Meurzh e voe taolet gant an Amerikaned eus Kab Canaveral, Florida, un adplanedenn nevez d'an Heol, "Pioneer V" ("Difraoster V") hec'h anv. Taolet e voe gant harp ur fuzeenn "Thor-Able" teirran. Pa voe degouezhet war-hed 8.000 Km. diouzh an Douar, e voe kaset ur skinarouez eus Jodrell Bank, Bro-Saoz, a zistagas ar voullenn diouzh trede rann ar fuzeenn. Er voullenn-se, dezhi 66 cm. a dreuz, ez eus ardivinkoù e-leizh, en o zouez ar galloudusañ skingaser bet taolet betek-hen en ec'honder. Bez' ez eus ivez peder elvenn, d'ar bateriennoù-tredan da vezañ adkarget gant an Heol. "Difraoster V" a droio etre an Douar hag ar Werelaouen. Muzuliañ a ray ar skinoù, an dachenn vagnetek, stankted ar meteoritennoù, efed ar flistradennoù strinket gant an Heol, ha traoù all c'hoazh. Tu da vo d'e heuliañ, a greder, betek miz Gouere. Goude se e vo aet re bell diouzhimp evit bezañ merzet dre skin a-raok 1963 ... marteze.

=====
 ooo
 =====

nevez embannet
GERIADUR ISTOREL AR BREZHONEG gant Roparz Hemon
 (B-BIVIDIK)
 Embannet gant PREDER. - liesskrivet. - priz : 7,50 LN.
 CCP.PARIS-16.093-13, Dr.G.Etienne, Maen ar Ya, Châteaulin.



Hep poan ebet, hep torr-penn,
Forzh pelec'h, e giz pe c'hiz,
Pep den a c'hell deskifñ lenn
BREZHONEG EEUN en ur miz.

KANNAD AR YAOUANKIZ - 38

AR MOUEZHIOÙ BURZHUDUS

Pa veze kaer an amzer, ez ae ar vugale da c'hoari en ur park bras a-dreñv an ti. E penn ar park e oa un dorgennig, hag ouzh troad an dorgennig-se gwez-avaloù. Brav e oa bezañ eno, zoken pa ne oa ket a avaloù da zastum diwar ar geot pe da laerezh diwar ar brankoù. Rak eno e kleved ar "mouezhioù burzhudus".

Pa huched "A", ur vouezh a-bell a responte "A". Ha pa huched "O", ur vouezh a responte "O". Pa c'hoarzhed, e kleved unan bennak o c'hoarzhin war ho lerc'h.

Evel just, ar mouezhioù-se ne vezent kavet burzhudus nemet gant ar re vihanañ eus ar vugale. Ar re vrasañ a ouie e oa an "heklev". Un den en doa graet ur gentel dezho un deiz, displeget dezho e oa son o mouezh distaolet eus a-bell.

Lelig n'he doa nemet c'hwec'h vloaz. N'he doa ket komprenet ar gentel. N'he doa ket ezhomm. Gouzout a rae e oa ar mouezhioù-se mouezhioù tud a veve tu bennak e penn an draonienn, pelloc'h eget an dorgennig, met tostoc'h eget tour an iliz, a save ahont a-us d'ar c'hoad etre an daou venez.

Ur mintinvezh e fellas dezhi mont da welout an dud-se.

Ar vugale all a oa aet da redek. Lelig, chomet hec'h-unan, a gemeras penn he hent etrezek korn uhelañ ar park bras, a dremenas dreist ar c'hleuz, a dreuzas ur park bihan, a dremenas dreist ur c'hleuz all, en em gavas en ur park dianav.

Neuze e kavas dezhi e oa aet pell a-walc'h. He divharig a oa skuizh. Azezañ a reas war ar geot. Eus godell he zavañjer e tennas tammoù paper bet troc'het gant he mamm eviti diwar ur gazetenn. O displegañ a reas hag o ledañ war an douar, meinigoù warno da virout na dajent gant an avel. Bez' e oa un aotrou, un itron, un dimezell hag ur paotrig. Bez' e oa ivez ur c'hi, met ar c'hi n'en deus netra d'ober en istor.

Lelig a reas ur c'hoari : an dud-se a oa tud ar "mouezhioù burzhudus". Ur garrezenn a voe graet en-dro dezho gant meinigoù all.

E-giz-se edont en o zi. Lelig o c'hleve o kaozeal hag o c'hoarzhin etrezo. Skeifñ a reas war an nor : - Tud zo en ti ? - a c'houlennas.

- Ti ! - a respontas ur vouezh.

- Me a c'hell mont e-barzh ?

- Barzh !

Lelig a zigoras an nor hag a lavaras seven : - Penaos emañ ar bed ganeoc'h ?

- Neoc'h ! - a respontas an itron.

- Mat !

- Mat ! - eme an dimezell.

- Marteze ho tirenkan ?

- Kan ! - eme an aotrou.

- Va anv zo Lelig.

- Lig ! - eme ar paotrig.

E-giz-se ez eas ar gaoz e-pad ur pennad. Lelig a voe buan

enoet-marv. Ma lavaras : - Biskoazh n'em eus gwelet tud sotoc'h egedoc'h. 111

- Doc'h ! - eme an itron. 111

- Mat, kenavo ! 111

- Vo ! - a respontjont holl a-unvouezh. 111

Lelig a rae c'hoarioù seurt-se alies. Gwashañ 'zo, dont a rae da grediñ, pe da zamgrediñ, e oa an traoù-se ijinnet en he spered traoù c'hoarvezet e gwirionez. 111

Setu perak, o tistreiñ d'ar gêr, azezet ouzh taol (poent merenn e oa), e kontas d'he daou vreur Herri ha Frañsez, a oa koshoc'h egeti, he doa gwelet tud ar "mouezhioù burzhudus". An daou baotr a reas goap anezhi. 111

He zad hag he mamm n'o doa ket klevet. Met he moereb Felisi, a oa en he c'hichen, a lavaras o sellout outi, tefival he daoulagad a-dreuz he lunedoù : - Ret e vo kas ar plac'h-mañ d'ar skol, da lakaat un tammig skiant en he fenn. 111

Goude merenn, Lelig a gontas an istor d'he c'hoar Tereza, n'he doa nemet tri bloaz. Tereza, war he c'hador uhel, a selaouas en ur lipat he biz-meud. Met ne lavaras netra. Pa voe bet kaset Tereza d'he gwele d'ober kousk-endervezh, e kontas Lelig an istor d'ar c'hazh Tobi. Met Tobi ne reas nemet skrabañ e skouarn. 111

Lelig a oa gwall nec'het. Nec'het gant petra ? Klevet he doa an dud-se o kaozeal etrezo en o zi. Penaos eta e c'hellent komz, ma ne oant gouest da lavarout nemet fin ar pezh a lavared dezho ? Ha, forzh penaos, pehini anezho a lavare ar ger kentañ ? 111

Edo o treiñ kement-se en he spered, pa welas an amezeg, an Aotrou Kervoaz, o labourat en e liorz. Hag hi ha redek diouzhtu da gontañ dezhañ hec'h istor. 111

An Aotrou Kervoaz a selaouas gant evezh, harpet e zaouarn war droad e bal sanket en douar. Un den hegarat e oa. 111

- Ya, - emezañ, - me a anavez mat an dud-se. 111

Lelig en em lakaas da zaisal, ken laouen e oa o vezañ kavet un den a grede anezhi. Neuze e chomas a-sav. 111

- Aotrou Kervoaz, - emezi, - penaos e reont da gaozeal etrezo ? 111

- O ! - eme an Aotrou Kervoaz, - O ! - hag e kemeras e vouchouer da dorchañ ar c'hwez diouzh e dal. - Te gompren, Lelig vihan, e tastumont fin kement tra a glevont. Se a c'hellont lavarout hag ad-lavarout pa garont. Pa fell dezho lavarout "Brav an amzer", e lavaront "Zer". 111

- Ha petra lavaront pa fell dezho lavarout "Fall an amzer" ? 111

- "Zer" ivez. Te wel, Lelig, pe e lavarer "Brav an amzer", pe "Fall an amzer", e oar an holl peseurt amzer a ra. A-walc'h eo eta lavarout "Zer". An hanter, ouzhpenn an hanter eus ar pezh a lavarer eo evit "uzañ teod", pe mar karez gwell, kaozeal evit ar blijadur da gaozeal. An dud-se n'int ket kalz disheñvel diouzh ar re all. Uzañ nebeutoc'h o zeod a reont hepken. 111


ROPARZ HEMON

(Pep gwir miret-strizh).

C.C.P.P. N° 36.242

Le Gérant : Mlle Y. Martin, 21, rue de Dixmude, St. Marc, Brest.

Ronéotypé par Rincazaux, 1, rue Alain Fournier, Brest.



Revue mensuelle-N°17-Mai 1960

Kelaouenn vizek-Niv.17-Mae 1960

Abonnement annuel : 7 NF.

Koumanant-bloaz : 7 LN.

"CCP.RENNES-1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, Brest"

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

111

NOZVEZHIOÙ TREGER

D'ar 26 Meurzh diwezhañ, e kloze Rojer Laouenan, rener STROLLAD NOZVEZHIOU TREGER, e c'hoañvezhiad labour fonnus gant ur Veilhadek Veur dalc'het e sal-gêr Louaneg, brasañ ha marteze kaerañ hini a gaver war ar maez e Breizh.

Ouzhpenn 150 karr a voe kontet war blasenn ar vourc'h, hep menegiñ un nebeut kariolenoù deuet diwar-dro da gas tud da nozvezhiañ. Pezh a roas tro dimp da jediñ un engroez tost e niver ouzh 1500 ene.

Mat-tre ar stal ganimp eta, evel ma welit. An traoù, kroget da 9 eur diouzh an noz, ne oant ket c'hoazh echu pa zistrois d'ar gêr, da un eur diouzh ar beure !

AN ARVESTOU

Gant nozvezh Louaneg, e felle dimp e gwirionez ober un taol-arnod e-keñver ar c'hrouiñ hag an arnevesaat, - peogwir, evel ouzer, n'eus ken koulz lavaret, e Treger, a zanvez hengounel o tennañ d'ar sevenadur gwerinel breizhek, dimp da c'hallout diazezañ warnañ pep abadenn, na zoken krouiñ un aergelc'h dioutañ e-unan, evel ma c'hell Kerneviz ober bepred, gant o doare-kanañ, ha pèrgen gant o c'horolloù.

Anzav a ranker evelkent n'eo ket marv amañ c'hoazh ar speredegzh vreizhek, na dreist-holl ar yezh, pezh a zo ar pep retañ e fin ar gont, peogwir ez eo hi a c'hom atav douar-hadañ hor sevenadur, pegen dibourc'het bennak e vemp a-hend-all.

Neuze, kement hag adsevel pep tra adalek ar sol, hon eus soñjet e rankemp hadañ war dachenn strujus Treger, n'eo ket greun kozh ha dizeriet hogen an hini nevez-flamm a c'heller prenañ bemdez e ne vern pe stal a welomp en-dro dimp, - zoken e reoù ar varc'hadourien "skoubidou". Ha setu, evit gwir, pezh hon eus graet. Un nevezinti vadoberus eo bet, a c'hellit krediñ, evit ar bobl, Nozvezh Louaneg.

Merzit kentoc'h :

- Un tiegezh eus Lanuon, o kanañ liesvouezhiek, eilet gant ur plac'h yaouank ouzh ar piano.

- Ul laz-kitaroù, ennañ div blac'h yaouank, o brozhioù glas hag e c'horfennoù gwenn, o kanañ en ur seniñ gant e binvioù tonioù nevez pe boblek, - evel "Son ar C'hafe" da skouer, - hervez an doare arnevez stag ouzh ar c'hoari-kitar, hag e-ser, ur paotr yaouank oc'h eilañ ar sonerezh gant ur gourrebed-boud, pe mar kavit gwell, ur gourrebed-leur.

- Ur gontadenn gaer, bet troet diwar ar saozneg gant an Aotrou Bourdelles : "Jobenn Gaezh ha Frañsez Kere", ha distaget penrvat, kerreizh ha fromus war un dro, gant Rojer Laouenan, rener ar STROLLAD.

- Ur "sterenn" evit hon nozvezh, rak ret oa dimp kaout ur sterenn 111
 vreizhat ivez : Eliana Pronost, bet paeet, mar plij, da zont da ganañ 111
 dimp eus Roazhon ; anezhi ul Leonadez, meurdezus atav he c'han, ledan 111
 ha distaget peurlvat ar c'homzoù ganti, ken na oa ur marzh he c'hlevout. 111
- Ur bourdarvest, bet aozet un nebeut deizioù a-raok gant Maria 111
 Prad, ezel eus ar STROLLAD, ha displeget ijinek-meurbet gant daou ezel 111
 all, hag int o rendaelif diwar-benn kudenn loskus an deiz : "Lakaat 111
Brelevenez e Lanuon". Ur c'hraf tenn da zirouestlafi, da vihanañ diouzh 111
 gwelout hon daou ebeul buket an eil war egile, ha gant flemmadennoù, 111
 ken na findaone d'ar pennadurezhioù en em gave eno : ur brezhoneger, 111
 depute-maer Louaneg, hag ur Gall galleger, isprefed Lanuon, hemañ o 111
 c'houlenn hep astal digant ar parlamantour treifi dezhañ e galleg kement 111
 louf brezhonek a veze laosket gant an daou babor ! 111
- Un abadenn furlukined : "An Armolud", da lavarout eo "Ar Breo- 111
 limer". Ur paotr oc'h ober evel ardivink, hag un all evel breolimer. 111
 Nemet tra ma eve al lemmer-kontilli gwin mat her dre ma c'helle, e 111
 ranke egile, ar paotr-mekanik, lonkafi skudelladoù dour hag a weled o 111
 tiverañ goude se war ar vreolim dre ur fri koad bet marc'het dezhañ 111
 war e fri gwirion. Hag e teue neuze an arvesterien, gant c'hoarzhadeg 111
 vras, da lemmani o c'hontilli war ar vreolim, ouzh hec'h ober div 111
 c'holoenn gastelodenn. 111
- Ifig Droniou, fentigellour touet, ezel eus ar STROLLAD, o laka- 111
 at ar saliad tud da sklokal gant e sorc'henn : "Devezh va Eured". 111
- Un abadenn blijus, ha kentelius ivez, gant bugale SKOL SANT 111
 ERWAN Ploueg-ar-Mor, o tisplegañ un nijadenn, pe welloc'h ur vannadenn 111
 graet betek war al Loar gant ur mic'hieg, Malo e anv, en e fuzeenn 111
 gartofis ! 111
- Yann Derrien, eus Louaneg, ezel eus ar STROLLAD, bet evitañ ar 111
 veilhadeg en e vro c'henidik un trec'hlid gwirion, ha gant gwir abeg, 111
 pa'z eus ennañ danvez ur c'hanaouenner-pobl awenet-souezhus. Ken ez eo 111
 pec'hed n'eus ket bet desket da dud eveltañ skrivañ ha lenn o yezh. 111
- Hag evel-se, tudañ, war-hed 31 abadenn, bet displeget e-doug an 111
 nozvezh gant ur strollad c'hoarierion dregeriat. Un druez e ve evit 111
 tud an Emsav chom hep o skoazellañ. Rak gant ar strollad-se ha stroll- 111
adoù all eveltañ e pep rannvro vrezhonek eo e vo graet ar gwellañ 111
labour e-keñver ar bobl war dachenn ar Yezh. Na kalonekaus e oa evid- 111
omp gwelout ur bobl a-bezh e Louaneg o c'hoari hag o c'hoarzhin yac'h, 111
en o yezh deuet da vezañ evite adarre ur benveg kevredigezhel e 111
gwirionez, distag-krenn diouzh pep folklorach marvus. 111
- 111
- Dirak an traoù o tont da vat gant kement a verzh, e c'hell SKOURR 111
 BREIZH AR C'HENDALC'H KELTIEK bezañ laouen. Rak evidon-me n'em eus 111
 graet abaoe tri miz nemet broudañ STROLLAD NOZVEZHIOU TREGER da gemer 111
 hent an arnevesaat war dachenn al liesc'hoariva, va soñj o vont bepred 111
 etrezek ar yaouankizoù na vezont mui dedennet nemet gant abadennoù 111
 diouzh ar c'hiz. 111
- Setu perak e reomp amañ adarre ar galv hon eus graet endeo war 111
 "AR BED KELTIEK", o c'houlenn start digant ar vrezhonegerien donezonet 111
 war ar c'hanaouennerezh, ar c'hontadennerezh, ar fentigellerezh hag ar 111
 bourdarvesterezh, stagañ gant al labour, ha kas dimp hep gortoz danvez 111
 ijinek ha diouzh giz an deiz, skrivet, ar muiañ ma vo gallet, en ur 111
vezh eeun ha glan. 111

111 AR YEZH

111 Pa lavaran yezh eeun ha glan, e soñjan e mennad meur Roparz Hemon,
 111 sevel ul lennegezh pobl aes ha dereat war un dro, dre lakaat da dal-
 111 vezout nerzhioù-unvaniñ ar brezhoneg, evit ober anezhañ, hervez hor
 111 galloud, ur benveg boutin d'an holl rannvroioù brezhonek. Rak aon am
 111 eus na vefe degaset dimp evit beilhadegoù Treger, a-berzh ar vrezhon-
 111 egerion dudiet gant hon oberenn, danvez-c'hoari leun a c'herioù pe
 111 droiennoù diaes da gompren er rannvro (nemet Tregeriz, evel reizh, e
 111 vefe aozerion ar skridoù-se).

111 Me a gav din e c'hellfed ober un dra : kas an danvez din-me, pe
 111 c'hoazh d'an Ao.Klerg, rener KUZUL AR BREZHONEG, en ur reiñ aotre dimp,
 111 bep tro dre lizher, da c'hwannat an testennoù, diouzh o lakaat da
 111 glotañ gant geriadurezh hag ijin an tregerieg. Ar gwellañ, moarvat, e
 111 vefe sevel an danvez e Brezhoneg Eeun, da lavarout eo gant gerioù
 111 anavezet dre-holl er brezhonegva. Se a c'hellfemp klask ober ivez, an
 111 Ao.Klerg ha me, kerkent ha degemeret ar skridoù ganimp.

111 -----
 111 Ur gudenn startoc'h-startañ e vo, e gwirionez, hini ar brezhoneg
 111 war al leurioù-c'hoari, zoken e diabarzh un hevelep rannvro. Abaoe ma'
 111 omp krog gant NOZVEZHIOU TREGER, n'hon eus ket bet a drabas er
 111 c'heñver-se. Met bez' hor bezo, hep mar, pa vo anv mont d'ober abad-
 111 ennoù e kornioù all, pelloc'h diouzh Lanuon.

111 Da skouer, dalc'het e voe ar veilhadeg kentañ e Rospez, stok ouzh
 111 Lanuon. Dre ma reas berzh an nozvezh eno, bennozh da varregezh an Ao.
 111 Rogard, penndispleger ar STROLLAD, hemañ ne baouezo ken d'ober an
 111 hevelep micher evit pep beilhadeg : gouzout a ra an tu da gas ar
 111 c'hoari war-rack. Hogen, pa'z aio ar STROLLAD e Treger Vihan pe e
 111 Gouelou, e vo diaesoc'h brezhoneg Lanuon da intent eno.

111 Neuze, gwir eo, ar penndispleger a beurzesko e vicher, ha gant e
 111 vicher, e yezh. N'eo ket eñ hepken, avat, en devo da strivañ evit
 111 bezañ komprenet, hogen ar c'hoarierion all ivez. Anat eo ne ray ket
 111 ar STROLLAD kenkoulz berzh diwar neuze, ma ne roomp ket dezhañ ar
 111 benveg dereat a ranko deskiñ ober gantañ war al lec'h. Ret e vo d'ar
 111 benveg-se diwanañ diouzh skridoù ar rolladur, reizhet e Brezhoneg
 111 Eeun, pe neuze marc'het war ar rannyezh, hervez ar gerioù hag al
 111 lavarennoù implijet en destenn.

111 Ne vern penaos, e vo ret ivez d'an displegerion gourdonañ ouzh
 111 an doareoù-distagañ disheñvel diouzh hini ar Brezhoneg Eeun, peogwir
 111 ez eo diazezet skrivadur hor yezh peurunvan war zistagadur al leoneg.

111 -----
 111 Aet on pell, re bell marteze, gant ar c'hraf. Hogen ezhomme oa,
 111 peogwir e fell dimp ober labour peurvrat e-keñver ar yezh a vo komzet
 111 ouzh ar bobl e-doug hon Nozvezhioù sevenadurel. Setu perak em eus
 111 kavet mat, er goañv tremenet, sevel e stern STROLLAD NOZVEZHIOU TREGER
 111 ha gant asant an izili all ul "Laz Heñchadur Sevenadurel", fiziet ar
 111 renadur anezhañ e STROLLAD TREGER SKOURR BREIZH AR C'HENDALC'H KELTIEK.
 111 Al Laz a ranko kregiñ gant e gefridi adalek da vloaz, rak n'eo ket hep-
 111 ken kudennoù lavar ha displegerezh a vo da ziluziañ, hogen reoù all
 111 ivez, o sellout dreist-holl ouzh diorroadur ar werin hervez penn-
 111 sturioù an Emsav.

PER EVEN

111 (Kas ar skridoù d'an Ao.P.Even, 7, Bd.Guy Ropartz, Gwengamp.)

PROFOU D'AR BED KELTIEK: An Ao.Bihannic, 3 LN. - An Ao.A.Gwilhou, 3. 111
 - An Ao.R.Brisson, 3. - An Ao.Y.Ar Beg, 3. - An Ao.J.Konan, 3. - 111
 An Dim.O.Chevillotte, 3. - An Ao.A.Allain, 3. - An Dr.Y.Ezel, 3 - 111
 An It.A.Noury, 8. - En holl : 32 LN. - Trugarez d'ar brofourien ! 111
 ===== 111
 EVIT MA VEVO "AR BED KELTIEK", kasit priz ho koumanant evit 1960 d'ar 111
 gont-chekennoù hep gortoz. Klaskit koumananterien nevez. 111
 ===== 111

KANV

PAOLINA TORKOL

D'ar 6 a viz Ebrel, e Brest, ez eas da anaon an Dimezell Paolina Torkol. 111

An Dimezell Torkol, eus Gwaien, a gemeras, er bloavezhioù kent ar brezel, ar garg da zerc'hel ar stal levrioù brezhonek digoret e Brest gant "Emglev Sant Iltud". Nebeut a dud hiziv a zalc'h soñj eus ar stalig-se, er straed Algesiras. Nebeutoc'h a dud c'hoazh a oar pebezh stourm kalet a voe renet eno gant ur Vretonez leal, speredek ha kalonek : stourm ouzh an dienez, stourm ouzh an dic'hoanag, stourm ouzh an digompren a-berzh Bretoned diemskiant, ha siwazh, ivez a-berzh Bretoned emskiantek 'zo. 111

Paolina Torkol a zo aet d'he renoz diwezhañ, divrud, hogen garanet-don an eñvor anezhi, gant he dremm hael hag he daoulagad sklaer, e kalon he mignoned. 111

Tud a dremen evel-se, er pezh a anver an "Emsav", hep dastum klod nag enorioù, hep zoken ar bennozh Doue. Hogen gant o foan hag o labour e savont diazez start ar Brezhoneg advevet. 111

N'eus ket pell c'hoazh, e roe harp da aozañ kasadenn AR BED KELTIEK d'ar goumananterien. Digant ar re-se e c'houlennomp ur bedenn evit ene "an Dimezell Pauline". 111

AR C'HORAIZ E SANT-MARK

Adarre e voe graet er bloaz-mañ prezegennoù hag ofisoù ar C'horaiz e brezhoneg en iliz Sant-Mark, Brest. Ar wech kentañ e teuas 110 den, an eil gwech (deiz gweladenn an Aotrou'n Eskob Fave) 300, an trede gwech 150. Ar brezegennerien oa an Aotrou A.Seite, eilrener skol gristen Gwiseni, hag an Aotrou Colleau, kure e Plouvian. Danvez ar prezegennoù : 1) Sakramant ar Gouzoumenn ha Levezon ar Spered Santel en eneoù ; 2) Ar C'hristen a zle "bevañ" e Feiz, ha nann ober div lodenn ; 3) Ret klask ha goulenn, hag ur wech anavezet, sentiñ hep distro penn-da-benn ouzh youl an Aotrou warnomp. 111

SKOL AR C'HOZHVARC'HAD

Keloù mat a zeu dimp eus Skol ar C'hozhvarc'had, renet gant an Aotrou Dubourg. Eno e vez roet ul lec'h bras d'ar Brezhoneg : deskiñ lenn, kanaouennoù, h.a., hag ivez (pezh a zo a bouez), lakaat ar skolidi da gomz Brezhoneg muiañ ma c'heller. 111

111 Evit echuiñ an trimiz e voe graet un abadenn hollvrezhonek : 5
 111 kanaouenn, ur pennad eus "An Daou Gozh en Ospital", hag ur pennad eus
 111 "Gurvan". War a skriv dimp an Ao. Dubourg : "Kavout a ra din eo kalz
 111 gwelloc'h un dra verr ha memes dister e brezhoneg hepken eget un dra
 111 vras ha plijusoc'h marteze, met gant un tamm galleg da heul, evit
 111 plijout d'ar ... C'hallaoued."

111 *****
 111 *****
 111 *****
 111 *****

AR MIZ

111 DISPLEGADegoU Kouerien Vreizh : D'ar 7 Ebrel, e-doug un displegadeg
 111 kouerien a-enep politikerezh-labour-douar gouarnamant Bro-C'hall, e
 111 voe kann gant ar bolised en-dro d'an ti-hent-houarn e Kemper. Un
 111 displegadeg all a voe e Sant-Brieg. Re all, bihanoc'h, e Naoned hag e
 111 Gwened. Kouerien Il-ha-Gwilen a oa bet kaset gant o renerien da Laval
 111 (perak ?). E Sant-Brieg e voe kinniget d'ar gouerien chom hep prenañ
 111 mekanikoù nevez, boikotiñ ar stalioù a werzh margarin, hag ar varc'had-
 111 ourien-demziou a zo a-enep an indeksadur. E Kemper e voe kinniget
 111 ouzhpenn chom hep paeañ an tailhoù war c'hounid al labour-douar. A zo
 111 muioc'h, 72 a vaered eus departamant Penn-ar-Bed o deus roet o dilez,
 111 ha 75 all o deus lavaret ober ivez gant asant o c'huzul-kêr.

111 KUDENN AR GREUNVAEN : Ar greunvaen a vez en amzer-mañ nebeutoc'h
 111 implijet eget gwechall evit sevel tiez hag hentoù. Niver ar c'hreun-
 111 vaenourien a ya eta bepred war goazhañ, koulz ha niver an deskarded
 111 war ar vicher. Ur vodadeg a voe graet e Dinan d'an 2 Ebrel gant CELIB
 111 evit pleustriñ war ar gudenn. Kinniget e voe lakaat ijinerezh ar greun-
 111 vaen da glotañ ouzh ezhommoù an disaverien hag an ijinerien, brudañ
 111 perzhioù-mat ar greunvaen, studiañ ar marc'hadoù estren, gwellaat stad
 111 ar vicherourien. Er vodadeg e oa deuet dileuridi kaset gant ar c'hreun-
 111 vaenourien hag ar re a implij ar greunvaen, koulz ha maered, kuzulierien-
 111 veur, parlamantidi, h.a.

111 KREIZENN NUKLEEL E BRENNILIZ ? : Emeur o vont da sevel ur greizenn
 111 nukleel e-kichen Brenniliz, e Menezioù Arre. Boulc'het e vo al labour
 111 e fin ar bloaz-mañ. 4 bloaz e pado. Uraniom a vo implijet da zanvez-
 111 -leskiñ, ha dour-pounner da voderator. Ar galloud a vo 80.000 Kw. da
 111 gentañ, hag a c'hello bezañ kresket betek 300.000 Kw. Mil den a vo
 111 lakaet da sevel ar greizenn, a roio labour, pa vo echu, da 150 den.

111 BEAJOU POLITIKERIEU : Kruchtchev a reas un dro e Frañs e miz Ebrel.
 111 Macmillan, Kentañ Ministr Breizh-Veur, a voe pedet gant Eisenhower da
 111 zont da gaozeal gantañ e Kamp David, Maryland, e diwezh miz Meurzh.
 111 Gouzout a reer bremañ o deus komzet dreist-holl eus ar bannadelloù :
 111 gouarnamant Breizh-Veur en deus divizet dilezel e vannadell "Blue
 111 Streak" evit kemer unan a dle bezañ graet gant ar Stadoù-Unanet (o
 111 tiskouez pebezh follentez e oa klask kevezañ gant an daou C'halloud
 111 meur war dachenn an armoù giz nevez). Prezidant Frañs a yeas da Vro-
 111 -Saoz ha da Norzamerika. Chou En-Lai, Kentañ Ministr Sina, a yeas da
 111 Indez d'an 19 Ebrel da zivizout gant Nehru diwar-benn an tabut etre an
 111 div vro a-zivout an harzoù.

<u>KUDENN AL LABOUR-DOUAR E GALL</u> : Displegadegoù a voe graet e kêrioù a Vro-C'hall gant kouerien a-enep politikerezh ar gouarnamant. E Sens, d'ar 7 Ebrel, e voe krogad etre ar gouerien hag ar bolised. Ar re-mañ a implijas gaz-daeraouiñ.	111 111 111 111
<u>TRUBUILH E SUAARIKA</u> : Ouzhpenn 60 den a voe lazhet ha 200 gloazet e Suafrika d'an 21 Meurzh e krogadoù etre Afrikiz ha polised. Displegadegoù a oa bet aozet gant ar gostezenn anvet ar C'hendalc'h Hollafrikat evit enebañ ouzh al lezenn a redi pep Afrikad da zougen ur paper-tremen, ne vern pelec'h ez a. An Afrikiz, war urzh ar C'hendalc'h a dlee bale er-maez hep paperoù-tremen, ha mont d'an ti-polis nesañ da vezañ paket. Ar brasañ dizurzh a darzhas 50 Km. er c'hreisteiz da Johannesburg. Eno ar bolised, gronnet gant un tolpad Afrikiz, a dennas e-kreiz an engroez, o lazhañ pe o c'hloazañ gwazed, merc'hed ha bugale. Kabal a voe ivez e Langa, e-kichen Kêr-ar-C'hab.	111 111 111 111 111 111 111 111 111 111 111
Ar bolised, da heul an darvoudoù-se, a zisklerias ne vije mui goulennet o faperoù digant Afrikiz evit ur mare. Hogen A.Luthuli, Prezidant ar C'hendalc'h Broadel Afrikat, a zevas e baper-tremen, hag a alias an holl Afrikiz d'ober eveltañ.	111 111 111 111
An 28 Meurzh a voe embannet da "zevezh-kañv" gant ar C'hendalc'h Hollafrikat. Er c'hêrioù bras, an Afrikiz a chomas er gêr e-lec'h mont da labourat. En abardaez, ilizoù kristen, skolioù, burevioù ha tiez poliserien a voe tangwallet e kêr Worcester, 100 Km. diouzh Kêr-ar-C'hab. E Kêr-ar-C'hab e voe trouz ivez, ar bolised o vont d'an dispac'herien gant bizhier ha gaz-daeraouiñ.	111 111 111 111 111 111 111
D'an 30 Meurzh, mintin abred, 234 a dud a bep gouenn, Afrikiz, Aziiz, Europiz hag Hironed, a voe harzet, en o zouez A.Luthuli. E-pad an deiz, un 30.000 a Afrikiz a reas dibunadeg e Kêr-ar-C'hab da enebañ ouzh an harzadennoù. Divodañ a rejont avat hep dizurzh. "Stad-diwall" a voe embannet gant ar gouarnamant, ha kemenn kaset da "Arme ar Geodedourien" (un doare gward-bro, ennañ tud wenn hepken) e c'hellje bezañ engalvet dizale.	111 111 111 111 111 111 111 111
D'an 9 Ebrel, an Dr.Verwoerd, Kentañ Ministr, a voe laosket warnañ daou denn revolver gant un den gwenn, e-doug lid-digeriñ un diskouezadeg e Johannesburg. Ne voe nemet gloazet.	111 111 111
Argadadegoù-polis hag harzadegoù Afrikiz a gendalc'has a-hed ar miz. Holl renerien Emsav an dud a liv, pe dost, a zo bremañ bac'het. Urzh a zo bet roet d'an Afrikiz da gemer o faperoù-tremen adarre.	111 111 111
<u>AN "APARTHEID" HAG AR BROADOU UNANET</u> : Kudenn politikerezh gouarnamant Suafrika a voe lakaet dirak Kuzul Surentez ar Broadoù Unanet, e New York, d'an 30 Meurzh, war c'houlenn ar Stroll Aziat-Afrikat. Ur mennad a voe degemeret d'ar 1-añ Ebrel, o pediñ gouarnamant Suafrika da zilezel an "Apartheid". Breizh-Veur ha Frañs a chomas hep votiñ.	111 111 111 111 111
<u>DISPAC'H E KOREA</u> : Ouzhpenn 100 den a voe lazhet e Seoul, kêrbenn Korea ar C'hreisteiz, d'an 19 Ebrel, pa dennas ar bolised war dud, studierien peurgetket, enebourien d'ar gouarnamant. Ar votadeg er miz tremenet, a roas adarre ar galloud d'ar Prezidant Syngman Rhee, a vije bet aozet en un doare disleal. Ar strollad-ministred a rankas reiñ o dilez, ha Syngman Rhee a voe pedet gant an Amerikaned da habaskaat un tamm e bolitikerezh e-keñver enebourien e c'houarnamant.	111 111 111 111 111 111 111 111 111 111
=====	111
<u>GERIADUR ISTOREL AR BREZHONEG</u> gant <u>Roparz Hemon</u> , embannet a gaineroù 100 pajenn, a c'hell bremañ bezañ rakprenet : 2 gailer 12 LN, - 5 kaier 30 LN. CCP.16-093-13-PARIS, Dr.G.Etienne, Maen-ar-Ya, Châteaulin.	111 111 111

SKRIDOÙ NEVEZ

- 111 GERIADUR A GORFADUREZH galleg-latin-brezhonek, diouzh an anvadur
 111 etrevroadel P.N.A., Rann I, A-LI, gant Abanna. Liesskrivet. Embannet
 111 gant PREDER. Priz : 7,50 LN., "CCP.PARIS-16.093-13, Dr.Etienne,
 111 Châteaulin, Fin."
- 111 GEIRIADUR BACH LLYDAWEG-CYMRAEG. Liesskrivet. Embannet evit studierien
 111 Skol-Veur Aberystwath.
- 111 AL LIAMM, niv.78, Genver-C'hwevrer 1960. Moulet. Daouviziek. Koumanant-
 111 -bloaz : 12 LN. (war baper kaer : 15 LN. - koumanant-skoazell : 20 LN.).
 111 "CCP.PARIS-5349-06, P.Le Bihan,6,Domaine des Hocquettes,Suresnes,Seine."
- 111 BARR-HEOL, niv.22, Meurzh 1960. Liesskrivet. Trimiziek. Koumanant-
 111 -bloaz : 5 LN. "CCP.RENNES-91764, Abbé Le Clerc, rect.Buhulien, C.d.N."
- 111 WANIG HA WENIG, niv.6, Meurzh 1960. Liesskrivet. Trimiziek. Koumanant-
 111 -bloaz : 1,50 LN. "CCP.RENNES-1705-96, Journal WANIG HA WENIG,
 111 Plouézec, C.d.N."
- 111 LABOUR, stagadenn vrezhonek, niv.4. Liesskrivet. 2, rue de la Herse,
 111 S.Malo.
- 111 TREDE DISKULIADUR, niv.19, Genver 1960. Liesskrivet. Rua Matias Aires
 111 183 (Consolação), São Paulo (Brasil).
- 111 CELTIA, niv.2, Nevez-Amzer 1960. E brezhoneg ha galleg. Liesskrivet.
 111 Koumanant-bloaz : 10 LN. "CCP.RENNES-754-82, J.Quatreboeufs, Merdrignac,
 111 C.d.N."
- 111 AR VRO, niv.5, Meurzh 1960. Moulet. Trimiziek. E brezhoneg ha galleg.
 111 Koumanant-bloaz : 10 LN. "CCP. NANTES-1493-79, J.Desbordes, 14, rue
 111 Colbert, Concarneau, Fin."
- 111 Petra a zo gwelloc'h, embann skridoù gouiziek a-raok ur geriadur,
 111 pe embann ur geriadur a-raok embann skridoù gouiziek ? En istor ur
 111 yezh, evel reol, e teu ar skrid da gentañ, ar geriadur goude. Dre se ez
 111 eus dizurzh : daou, tri, pevar ger da envel un dra hepken, ur ger
 111 hepken da envel meur a dra, gerioù diseurt da envel traoù unseurt, ha
 111 gerioù unseurt da envel traoù diseurt.
- 111 Peurliesañ n'eus ket tu da ober ken. Ar ouiziegezh a gresk atav,
 111 a gemm atav, hag ar yezh a rank heuliañ. Gwech an amzer, e klasker
 111 lakaat urzh. Buan e teu dizurzh adarre.
- 111 Urzh a zo bet lakaet nevez 'zo e geriaoueg ar gorfadurezh. E 1950
 111 e voe diazezet ur geriadur klok e latin. Gant harp ar geriadur-se en
 111 deus Abanna savet ur Geriadur a Gorfadurezh, a zo deuet ar rann I
 111 anezhañ er-maez e miz Meurzh.

N'eus ket kalz a skiantoù o deus bet ar chañs-se. Ur chañs eo ivez evit Breizh kaout d'an ampoent rik un den, brezhonegour ampart ha mezeg war un dro, d'ober e vad eus ar geriadur latin nevez. 111

Ret e vo lenn aketus raklavar Abanna. Tro am bo da bleustrifñ dre ar munud e lec'h all war ar c'hrafiou embreget er raklavar-se. Amañ ne rin nemet tennañ evezh war ar poent na oa ket bet meneget c'hoazh, a gredan : aes a-walc'h eo lakaat da dremen en hor yezh ur ger eeun, hogen diaesoc'h reiñ ur gwiskamant brezhonek d'ur ger kevrennek. Poellek e kavan an diskoulm kinniget gant Abanna. E gwir, poellek eo ar raklavar penn-da-benn. 111

Pep tra er geriadur-se a ziskouez preder ha labour, koulz an danvez hag an aozadur. Gourc'hemennou a zo dleet d'ar skrivagner, hag ivez d'ar skriverezer ha d'al liesskriver. Setu klokaet ar striv boulc'het gant an Dr.Ch.Laurent ha me er "Geriadurig a Gorfadurezh" e 1927, ha gant Per Denez e "Korf an Den" e 1943. 111

Ni Bretoned a zo paotred ar geriadurioù. Setu amañ un all, anvet Geiriadur Bach Llydaweg-Cymraeg, savet gant Arzel Even evit e studieren e Skol-Veur Aberystwyth : gerioù ar Brezhoneg Eeun renket hervez urzh al lizherenneg ha troet e kembraeg, ul labour graet-mat, gant un den a oar an div yezh. Ret eo dimp kaout levrioù da studiañ ar yezhoù keltiek hep mont dre ar saozneg pe ar galleg. Spi am eus e vo kendalc'het en hent-se. 111

An Teir Barzhoneg, gant Jakez Konan, e niverenn 78 AL LIAMM, a zo graet gant klotennoù-diabarzh, un doare-barzhoniañ diaes hag a glot mat ouzh hor yezh. An div diwezhañ, Buhez ha Nevez-Amzer, a blij din kenañ. Ur varzhoneg a dle bezañ stummet gant evezh hag ampartiz. Re eus barzhonegoù hor barzhed yaouank (ha kozh) a zo heñvel ouzh an troioù-brec'h graet gant plac'hedigoù, o neudennañ perlezennou faos forzh penaos an eil war-lerc'h eben. 111

Danvez a bep seurt a gaver e BARR-HEOL, atav buhezek, atav speredek. Stagadenn vrezhonek LABOUR a zo mat. Hogen un druez eo e ve ret d'ar rener A.Toraval kaout da gontañ war skrivagnerien ar rummad kozh, kentoc'h eget war re ar rummad yaouank. WANIG HA WENIG, avat, a embann oberoù skrivagnerien ar rummad da zont, ha den ne glemmo. TREDE DISKULIADUR a zalc'h gant e hent war un dachenn risklus, da'm meno. Hogen e vrezhoneg a zo eus ar gwellañ. Ken risklus all e seblant din bezañ hent CELTIA. Anzav a ran koulskoude ne gomprenan grik er c'hudennoù dreistvedel. E-barzh AR VRO n'eus nemet ur pennad brezhonek, Broadelouriezh, gant Youenn Olier. 111

ROPARZ HEMON

E TI AR FICHEREZ-VLEV

Un itron a zo aet da lakaat livañ he blev en ur saloñs-kened. AR FICHEREZ-VLEV (oc'h echuiñ he labour).- Setu ! Touet e vefe bremañ n'hoc'h eus mui nemet daou-ugent vloaz ! AN ITRON (fuloret).- Bremaik, o tont en ti-mañ, em boa eizh vloaz ha tregont ! 111

"AR STIVELL"

111
111
111
111
111
111
111

111 LEVRAOUEG - RED BREIZH

111 "BLEIMOR-SANA" : An Ao.G.Kreac'h, 33, str. A. Daudet, Champrosay-DRAVEIL
111 (S. et O.)

111 "BLEIMOR-SANA"

111 Perak ar gasadenn-mañ, a lavarot marteze en ur lenn ar follenn-
111 -mañ, pa'z eus bremañ kement a oberoù a dalvoudegezh evit ar re glañv ?

111 Gwir eo. Mes houmañ a zo graet gant Breizhiz evit Breizhiz.
111 Eizh vloaz 'zo hon eus boulc'het an erv-mañ, abalamour ma soñjomp
111 eo ret deomp-ni ivez reiñ da glevout hor mouezh evel Breizhiz war bep
111 tachenn eus hor buhez, mar hon eus c'hoant chom ni hon-unan.

111 Setu perak hon eus kredet sevel BLEIMOR-SANA, Kenstroll ar
111 Vretoned hag ar Bretonezed klañv.

111 Kavout a reot amañ un heklev eus hol labour, dindan an anv
111 AR STIVELL.

111 Bez' hon eus ul levraoueg-red, savet evit ar re glañv, mes digor
111 ivez d'an holl a garfe bezañ izili anezhi. Bez' hon eus ouzhpenn : ur
111 servij prestañ kelaouennoù ha pladennoù, ur strollad skaouted ha
111 skaoutezed Bleimor, "Sant Herve". Ober a reomp diskouezadegoù ha
111 gwerzhadegoù levrioù, kelaouennoù, pladennoù, evit ma vo brudet,
111 anavezet ha karet gwelloc'h hor Bro.

111 LABOUR AR BLOAZ TREMENET

111 Er bloaz-mañ hon eus gwelet pe genskrivet gant nav c'hlañvdi ha
111 pevar zi all goude-klañvdi. Gallet hon eus reiñ teir abadenn (kan,
111 dañs, biniou ha bombard) da re glañv all, gant skoazell ar C'helc'h
111 Keltiek "Dalc'hmat" eus Savigny amañ, pe re Blougastell-Plouie,
111 sikouret gant sonerien Lann-Bihoué e Breizh.

111 Hep dale ez aimp da glañvdioù "Joffre", Corbeil, ha da Ospital
111 ar Soudarded "Percy" e Clamart.

111 UN NEBEUT NIVEROÙ

111 E strollad "Sant-Herve" ez omp bremañ 6 ezel. E "Levraoueg ar
111 Stivell" ez omp 8, hag ouzhpenn, e prestomp levrioù pe gelaouennoù
111 d'un 10 keneil bennak.

111 War an 40 levr prestet er bloaz-mañ, un 10 bennak a oa e
111 brezhoneg.

111 Nebeut eo, a lavarot. Mes an amzer eo a vank evit ober gwelloc'h,
111 hag ivez skoazell tud a volontez vat, hag o defe ur feiz virvidik
111 en hor Bro.

111
111

DISKOUZADEGOU

Evit ma vije anavezet ha karet gwelloc'h hor Bro, ur 15 diskouez-adez a zo bet savet diwar-benn Breizh e-pad ar bloaz, gant levrioù, kelaouennoù, luc'hskeudennoù, pladennoù, ha gant skoazell Kelc'h Keltiek Savigny pe Skaouted Bleimor Pariz ez aemp er c'hlañvdioù, er pardonioù, pe e gouelioù breizhek ar vro.

Gellet hon eus evel-se gwerzhañ 30 levr e-pad ar bloaz, un 20 anezho istorioù Breizh pe levrioù-studi brezhonek. N'eo ket kalz a dra, ha koulskoude ez eo evidomp unan eus hol labourioù plijusañ e-keñver ar re yac'h. Ar re-mañ a vez ken laouen o welout kement a draoù breizhek er gouelioù. Ha paeet e vezomp eus hor skuizhder o welout an dud souezhet gant an holl draoù brav-se diwar-benn hor Bro. Plijus eo ivez respont o goulennoù ken niverus, hag a ya eus kanaouennoù Botrel betek istor banniel Breizh.

BRUDEREZH

Kaset hon eus pennadoù-skrid war hor C'henstroll da veur a gelaouenn, ha 7 bennak o deus komzet anezho. Kement-se a sikour ac'hanomp da vezañ anavezet gwelloc'h ha da resev pe da c'hallout prenañ levrioù nevez ha pladennoù.

"AR STIVELL"


Levraoueg-red Breizh. Savet evit ar re glañv. Bremañ, war ali hag het AR BED KELTIEK, ez eo digor d'an holl. Dastum a ra skridoù a bep seurt e brezhoneg, e galleg pe e yezhoù all, diwar-benn Breizh hag ar broioù keltiek, hag o frestañ da gement den en devez c'hoant bezañ ezel eus al Levraoueg.

Ar re glañv ne baeont nemet ar mizoù-kas, mar gellont. Ar re all a bae ur skodenn-vloaz a 5 LN., hag ar mizoù ret evit kas dezho ar skridoù. Met ma vefe unan bennak hag a garfe bezañ ezel, hag a ve diaes dezhañ paeañ e skodenn (evel ur soudard, ur martolod pe ur studier), skrivet deomp an dra-se hep aon. Rak skoazellet e c'hellomp bezañ gant izili a enor, a baeo ur skodenn a 10 LN. ar bloaz.

NOTENN GANT "AR BED KELTIEK"

AR BED KELTIEK a zo eürus da embann al linennoù a-us, kaset dezhañ gant renerien "AR STIVELL". Goulenn a ra digant e lennerien ha digant izili SKOURR BREIZH AR C'HENDALC'H KELTIEK harpañ an oberenn-se dre gas levrioù, kelaouennoù pe arc'hant. Chomlec'h ar Sekretour, an Ao.Kreac'h, a zo merket e krec'h ar bajenn 57.

AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, Brest, CCP.RENNES-1907-07, - 7 LN.ar bloaz.




Hep poan ebet, hep torr-penn,
Forzh pelec'h, e giz pe c'hiz,
Pep den a c'hell deskiñ lenn
BREZHONEG EEUN en ur miz.

KANNAD AR YAOUANKIZ - 39

- III
 111 UN ENDERVEZH HIR Glav, glav, glav,
 111 netra nemet glav
 111 adalek ar mintin.
- 111 Herri en doa lakaet e vrec'h meur a wech er-maez eus ar prenestr "da
 111 WELOUT ha ne baoueze ket", daoust ma wele sklaer a-walc'h gant e zaou-
 111 lagad. Goude merenn, e oa aet zoken da vale er porzh.
 111 - Herri ! Deus en-dro diouzhtu ! Da vamm he deus difennet !
 111 Madalen ar vatezh he doa garmet evel-se. Mamm Herri a oa aet e
 111 kêr da brenañ traoù. Ne oa den en ti nemet Herri ha Madalen. Sur e oa
 111 ar paotrig eta da glevout, bep tro ma felle dezhañ ober un dra blijus :
 111 - Arabat ! Da vamm he deus difennet !
 111 Aet e oa eta da guzhat er sal-degemer, hep gouzout da Vadalen.
 111 Aet e oa en e "kastell", da lavarout eo dindan an daolig, a-dreñv ar
 111 gador-vrec'h vras, er c'horn e-kichen ar siminal.
 111 Ne oa ket bet pell eno pa voe digoret an nor.
 111 - N'eus forzh. Gortoz a rin. Amzer am eus. Trugarez.
 111 Se oa mouezh an Itron Killivere, o komz ouzh Madalen. Eus e doull-
 111 -kuzh, Herri a welas an itron gozh o tont er sal, he c'hi bihan Fousou
 111 etre he divrec'h. An itron a azezas war ar gador-vrec'h dirak ar
 111 prenestr, a lakaas Fousou war an tapis, a dennas traoù eus ar sac'h
 111 lien du a zouge atav ganti, hag a stagas da ober dantelezh. Dantelezh !
 111 Hañv-goañv e veze gwelet an Itron Killivere oc'h ober dantelezh !
 111 Fousou a hejas e gorf un tammig hag en em lakaas da basaat.
 111 Sellout a reas a dro war dro, evel diaes e benn.
 111 - Petra zo, Fousou ? - eme e vestrez.
 111 - Rao ! rao ! rao ! - eme Fousou e pekineg. Pekineg e tlee bezañ,
 111 rak Fousou oa ur c'hi pekinat.
 111 - Chom sioul, Fousou.
 111 - Rao ! rao ! rao !
 111 E vestrez a gomprens sur-mat ar yezh-se, rak sellout a reas eeun
 111 ouzh "kastell" Herri.
 111 - Herri ! - emezi. - Te zo aze ! Deus amañ 'ta ! Fousou ne raio
 111 ket a zroug dit.
 111 Evel p'en dije bet aon ouzh ar c'hi divalav-se !
 111 - Deus amañ. Deus da bokat din.
 111 Herri a savas hag a dostaas goustadik. Bremaik e vije paket etre
 111 divrec'h an Itron Killivere. Se a oa evel sankañ en ur sac'had ludu.
 111 Madalen, avat, a zigoras an nor. Ruz oa he fenn.
 111 - O ! - emezi. - Amañ emañ ! Me zo bet o klask ar paotr fall-se e
 111 pep lec'h. Gouzout a ra eo arabat dezhañ mont er sal-mañ.
 111 - Lezit anezhañ, - eme an Itron Killivere. - Chom a raio ganin.
 111 Fur e vo. N'ho po ket ezhomm ober gwad fall.
 111 Madalen a serras an nor. Ha setu Herri prizoniet. Graet e voe
 111 dezhañ azezañ war ur gador e-kichen an itron gozh, goulennet outañ ha
 111 mont a rae d'ar skol, pe anv en doa e vestr, pet bugel a oa en e glas,
 111 petrâ a zeske, hag all hag all. A-benn ur pennad, an Itron Killivere
 111 hec'h-unan a seblantas kavout hir an amzer. Huanadiñ a reas.
 111 - Mat ! - emezi, - peogwir n'eo ket distroet c'hoazh da vamm,

ez an da gontañ dit un istor. Te a blij dit an istorioù, me laka. 111
 - Ya, - eme Herri, seven. 111
 An Itron Killivere a gontas dezhañ istor ur paotrig anvet Raoul, 111
 n'en doa ket sentet ouzh e dad, ha da heul e oa c'hoarvezet gantañ a 111
 bep seurt troioù fall. Daoust ma lavare an itron gozh e oa un istor 111
 gwir, Herri a oa speredek a-walc'h da welout e oa un istor ijinnet a- 111
 -ratozh da ziskouez e tle ar vugale sentiñ atav ouzh o c'herent. Echu 111
 an istor, e teuas un huanad all. 111
 - Mat ! - emezi o sellout ouzh he montr, - Te a oar istorioù ivez, 111
 marteze. Ha ma klaskfes kontañ din unan ? 111
 Kontañ un istor ! Evel just e ouie istorioù, kalz bravoc'h eget 111
 an hini he doa kontet dezhañ. Peseurt istor, siwazh, kontañ dezhi ? 111
 "Tro ar Bed e Pevar-ugent Devezh" ? "Kant Mil Lev dindan Vor" ? Nann, 111
 re hir e vije. Istor gangstered Chicago ? Nann, arabat spontañ an 111
 itronezed kozh ! Un istor berr, eeun-tre, da vezañ komprenet hep poan, 111
 zoken gant ur vaouez, a vije gwelloc'h. Herri a lavaras eta : 111
 - "Ur wech e oa bet un den o vale gant e gi. Ar c'hi a oa o vont 111
 a-dreuz an hent. Neuze e oa deuet ur c'harr-tan, hag ar c'hi a oa bet 111
 flastret gant ar c'harr-tan. Hag an den a oa aet da glask saveteiñ e 111
 gi. Hag an den a oa bet flastret ivez. Evel-se e oant marv o-daou." 111
 - O pebezh istor koant ! - eme an Itron Killivere o c'hoarzhin. - 111
 Met pebezh istor trist ! 111
 Hag e reas an neuz da ouelañ. Herri a soñjas e oa sodez. Dres e 111
 voe digoret an nor ur wech c'hoazh. Un aotrou hag un itron a voe kaset 111
 er sal gant Madalen. An Itron Killivere o anaveze, rak en em lakaat a 111
 reas da gaozeal ganto, diwar-benn o yec'hed, da amzer, ha neuze 111
 diwar-benn Herri. 111
 - Kont d'an aotrou ha d'an itron, Herri, an istor ac'h eus kontet 111
 din. 111
 Herri, avat, a chomas mut. An Itron Killivere a gontas an istor 111
 en e lec'h. An aotrou a lavaras : 111
 - An istor-se a ya donoc'h eget ma kredit. Ur skeudenn eo eus ur 111
 c'hoant kuzh e kalon ar bugel-mañ : c'hoantaat a ra e vijec'h marv, 111
 c'hwi hag ho ki. 111
 - O, Paol, te a lavar traoù ! - eme e wreg. 111
 An Itron Killivere a c'hoarzhaz. Herri a soñjas e oa aet e skiant 111
 digant an den-se. "C'hoant e vijec'h marv, c'hwi hag ho ki" ! An Itron 111
 Killivere, forzh penaos, a oa kozh a-walc'h da vervel. Met he c'hi, 111
 zoken ur c'hi divalav evel Fousou, o nann, mil gwech nann ! 111
 E vamm a zegouezhas neuze. 111
 - Petra rez-te amañ, Herri ? Direnkañ an dud ! - emezi. 111
 - N'en deus direnket ac'hanon tamm ebet, - eme an Itron Killivere. 111
 - Fur eo bet evel un ael. Kontet en deus din un istor. 111
 "Adarre !" a soñjas Herri. Met urzh a voe roet dezhañ gant e vamm 111
 da vont diouzhtu d'ar gegin gant Madalen. 111
 Ar gegin a oa tefival, ha Madalen a oa tefival he fenn. Glav a rae 111
 atav. An horolaj a verke peder eur. Edo Madalen o naetaat podoù kouevr. 111
 Ne oa war an tan nemet soubenn o virviñ. Ne vije ket ul loa zoken da 111
 lipat. Teir eur c'hoazh da c'hortoz betek koan ! 111
 O ! pebezh endervezh enoëtis ! pebezh endervezh kollet ! 111
 (Pep gwir miret strizh) ROPARZ HEMON 111

Le Gérant : Mlle Y. Martin, 21, rue de Dixmude, St. Marc, Brest. 111
 Ronéotypé par Rincazaux, i, rue Alain Fournier, Brest. - CCPP. N° 36.242. 111



Revue mensuelle-N°18-Juin 1960

Kelaouenn vizek-Niv.18-Mezheven 1960

Abonnement annuel : 7 NF.

Koumanant-bloaz : 7 LN.

"CCP.RENNES-1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, Brest".

111
111
111
111
111
111
111
111

AR MIZ

KELTIA

111 AN DR.NKRUMAH E DULENN : E-doug ur weladenn en Iwerzhon, e reas an
111 Dr.Nkrumah, Kentañ Ministr Gana, ur brezegenn a bouez e Dulenn, d'an
111 18 Mae, dirak Kenstroll Iwerzhonat ar Broadoù Unanet. An Dr.Nkrumah,
111 gwisket e dilhad giz e vro, a lavaras "e oa mantrus ha spontus soñjal
111 edo tonkadur an denelezh a-bezh lezet etre daouarn renerien peder
111 broad hepken." Arabat, emezañ, lakaat planedenn an dud da vezañ aozet
111 diouzh politikach graet etre pevar Galloud, abalamour m'o deus ar re-se
111 armoù nukleel.

111 Pelloc'h e lavaras e oa ken sakr gwirioù ar broadoù en Azia hag en
111 Afrika hag en Iwerzhon. Ne dalvezje da netra da C'hana bezañ gounezet
111 hec'h emrenerezh ma chomje sujet pobloù all Afrika.

111 Ar re o deus stourmet evit frankiz Iwerzhon, emezañ, a ouie ne oa
111 ket o stourm hini ur vroad hepken, hogen darn eus ur stourm evit
111 frankiz ar bed-holl. En Iwerzhon e stourme ur bobl gwasket ha paourraet
111 ouzh ur bihanniver a renerien. Hevelep stourm a vez graet hiziv, emezañ,
111 en Aljeria, Afrika ar Reter ha Suafrika. "Pennañ kefridi ar Broadoù
111 Unanet eo aozañ kemm ar veli a-raok ma vo re ziwezhat da saveteiñ
111 bihanniver ar renerien diouzh efed o dallentez hag o follentez politikel."

111 UZIN-BOUED GIZ NEVEZ EN IWERZHON : D'an 29 Ebrel e voe roet keloù eus
111 un uzin-boued, a vo savet e Malla, e-kichen Corcaigh, e mervent
111 Iwerzhon, an hini kentañ eus ar seurt biskoazh savet er bed.

111 Mui-ouzh-mui ez eus ezhomm, en deiz a hiziv, eus boued-mir. Ar
111 boued-mir peurliesañ a vez lakaet e boestoù metal pe e boutailhoù
111 gwer. Er bloavezhioù diwezhañ eo deuet ar c'hiz da zisec'hañ, pe c'hoazh
111 da skornañ boued. N'eus ket pell, goude arnodoù graet e Bro-Skos, ez
111 eus bet kavet un doare all : ar boued, ur wech skornet, a vez disec'het
111 prim, ar skorn ennañ o treiñ raktal da aezhenn (pezhañ a anver sublimadur).
111 Evel-se, en ur goll kalz eus e bouez, ne goll ket e stumm, - hag, eno
111 emañ an dalc'h, ne goll tamm eus e vlaz (a lavarer da vihanañ). Ouzh-
111 penn se, e c'heller e virout pell amzer, n'eus forzh pelec'h. N'eus
111 ket ezhomm d'e lakaat en ur skornerez.

111 An uzin nevez a gousto 200.000 lur sterling (2.800.000 LN). Da
111 gentañ e tisec'ho legumaj, ha goude kig ha pesked, Labour a roio da
111 galz tud, koulz en uzin e-unan ha war ar maez. Spi a zo e vo un doare
111 efedus da stourm ouzh an divroañ.

111
111

111 "AR BED KELTIEK" en deus ezhomm eus ho koumanant hag eus ho profoù

111 E V I T B E V A Ñ

	DRE AN DOUAR	111
		111
		111
<u>AR C'HARR-NIJ SPIER</u> :	En emvod ar Sovied-Dreist e Moskov, e roas	111
	Kruchtchev da c'houzout e oa bet diskaret d'ar 1-añ a viz Mae ur	111
	c'harr-nij amerikan "tu bennak e Rusia". Ar c'harr-nij, emezañ, a oa	111
	bet distrujet war e urzh gant ur fuzeenn, ha tizhet diouzh an taol	111
	kentañ. An Amerikaned a lavaras neuze e tlee bezañ ur c'harr-nij-	111
	-oablouriezh en dije kollet e hent en ur dremen e-kichen harzoù Rusia,	111
	e tu ar c'hreisteiz. Kruchtchev, avat, en doa stegnet mat e antell.	111
	D'ar 7 Mae e tisklerie e oa bet diskaret ar c'harr-nij e-kichen	111
	Sverdlovsk, er Menezioù Oural, 3.200 Km. e-barzh Rusia. Al loman, un	111
	den 30 vloaz, ar C'habiten F.Powers, a oa en em saveteet dre harz-lamm,	111
	hag a oa bet prizoniet. Bez' e oa, eme Gruchtchev, ur spier e gopr	111
	Ajañs-Ditourerezh-Kreiz ar Stadoù-Unanet. E garr-nij, a oa gouest da	111
	nijal uhel-tre, a oa loc'het eus Pakistan hag a dlee treuziñ ar	111
	Soviedoù evit mont da zouarañ e Norvegia, en ur luc'hskeudenniñ uzinoù,	111
	nijvaoù ha diazezlec'hioù-brezel war e hent. Powers a oa gantañ	111
	arc'hant rusian, gall, alaman hag italian, gwalennoù aour, daou eurier	111
	aour, ur revolver, dilhad ha kement tra a vez roet d'ar spierien d'ober	111
	o c'hefridi. Urzh a oa bet roet dezhañ d'en em lazhañ kentoc'h eget	111
	kouezhañ ez vev etre daouarn ar Rusianed, hag un nadoz kontammet a oa	111
	gantañ evit seveniñ an urzh-se. Kruchtchev a ziskouezas luc'hskeudennoù	111
	kemeret gant Powers.	111
	D'an 8 Mae, gouarnamant ar Stadoù-Unanet a anzavas e oa bet	111
	kaset Powers da spiañ.	111
	An afer a reas trouz bras dre ar bed. An holl a oar e vez pep	111
	Stad kustum da gas spierien en holl Stadoù all, enebourien kouls ha	111
	mignoned. An dra-se a zo bet a-viskoazh. E pep bro ez eus ur servij-	111
	-ditourerezh ha spierezh ofisiel. Pezh a oa heverk amañ eo an "taol	111
	c'hoariva" aozet gant ar Rusianed.	111
	Herter, Sekretour-Stad ar Stadoù-Unanet, a zisklerias d'an 9 Mae	111
	e Washington e oa bet "eveshaet" ouzh harzoù ar Soviedoù gant an	111
	Amerikaned abaoe meur a vloaz, hag e oa bet kaset kirri-nij a-wechoù	111
	don e-barzh Rusia. An darvoud diwezhañ, emezañ, "a vefe talvoudus da	111
	ziskouez gwelloc'h pegen pouezus eo evit ar bed klask a-zevri ober	111
	emglev evit suraat ez efedus na ve graet argadoù-soupren."	111
	Ne oa ket echu an abadenn :	111
		111
<u>HEP KUZULIADeg AR BARR</u> :	Kruchtchev a zegouezhas e Pariz d'ar 14 Mae	111
	hag Eisenhower ha Macmillan antronoz evit kemer perzh e Kuzuliadeg ar	111
	Barr, a dlee digeriñ d'ar 16. Kruchtchev a reas diouzhtu ur brezegenn,	111
	o lavarout e rankje ar Stadoù-Unanet goulenn digarez evit bezañ kaset	111
	ur c'harr-nij spier a-us douar Rusia, kastizañ ar re gablus, ha	111
	prometif lezel hep ober hevelep traoù hiviziken.	111
	Anat e voe buan ne vije ket a Guzuliadeg. D'ar 17 Mae da noz, e	111
	voe embannet ur c'homunike a-berzh galloudoù ar C'hornog :	111
	"Prezidant ar Stadoù-Unanet, Prezidant Republik Frañs ha Kentañ	111
	Ministr ar Rouantelezh Unanet a notenn n'eus ket bet gallet, en abeg	111
	d'an emzalc'h kemeret gant Kadornad Kuzul Ministred Unaniezh ar	111
	Soviedoù, deraouiñ e Kuzuliadeg ar Barr imbourc'herezh ar c'hudennoù	111
	a oa bet asantet pleustriñ warno gant ar pevar a bennoù-Stad pe bennoù-	111
	-gouarnamant. Keuz o deus n'eus ket bet tu d'ober seurt breutadegoù,	111
	ken pouezus evit peoc'h ar bed. O c'hredenn divrall eo atav e tle an	111

111 holl gudennoù etrevroadel pennañ bezañ kompezet, n'eo ket dre ginnig
111 nag implij nerzh, hogen dre emzivizoù peoc'hus. Chom a reont prest da
111 gemer perzh e seurt emzivizoù da ne vern pe goulz dereat en amzer da
111 zont."

111 Eisenhower en deus graet un dra digustum en istor an diplomatiezh
111 o patroniañ labour e spierien. Sklaer eo avat ne felle ket da Gruch-
111 tchev, dre abeg pe abeg, e vije graet Kuzuliadeg ar Barr, hag en deus
111 kavet un digarez d'he foeltrañ.

111 D'an 19 Mae, Kruchtchev a guitaas Pariz da vont da Verlin-Reter.
111 Eno e reas ur brezegenn dirak un engroez komunourien, o prometif ne
111 raje "netra da c'hrevusaat an darempredoù etrevroadel na da zegas en-
111 -dro gwashañ maread ar Brezel Yen."

111 EMVOD AR GUMUNIEZH VREIZHVEURIAT : Kentañ Ministred ar Gumuniezh Vreizh-
111 veuriat (Breizh-Veur, Kanada, Suafrika, Kreizafrika, Gana, Pakistan,
111 Indez, Malezia, Aostralia, Zeland-Nevez) en em vodas e Londrez d'an 3
111 Mae. En anv Suafrika e teuas E.Louw, Ministr-Diavaez, e-lec'h Verwoerd,
111 Kentañ Ministr, a zo bet gloazet. Kudenn an "Apartheid" a voe pleustret
111 warni. D'an 9 Mae, ar vinstred a zalc'has un emvod kuzh. Louw, a oa
111 bet pedet da weladenniñ Gana, a voe digouviet.

111 AR STADOU-UNANET BOIKOTET GANT AN ARABED : Egiptiz a nac'h lezel listri
111 Israel, pe listri o tougen marc'hadourezh Israel, da dremen dre Ganol
111 Suez. D'o zro, simidi porzh New York a zivizas boikotif listri ar
111 Republik Arabek Unanet. Respont an Arabed a voe boikotif listri ar
111 Stadoù-Unanet, hag e kinnigjont ouzhpenn boikotif ar c'hirri-nij ha
111 chom hep prenañ marc'hadourezh amerikan. Emglev a voe en diwezh. Hogen
111 boikot an Arabed war Israel a chom atav.

111 AN DR.BANDA DIVAC'HET : An Dr.Banda, rener emsavididi Bro-Niasa, bet
111 karc'hariet e miz Meurzh warlene, a voe roet dezhañ e frankiz d'ar
111 1-añ Ebrel diwezhañ. Banda, a zo bremañ 55 bloaz, en deus tremenet
111 hogozik e holl vuhez e Londrez. Ne zistroas da Vro-Niasa nemet e 1958,
111 evit kemer perzh en emsav broadel.

111 DIZURZH E RODEZIA : D'an 8 Mae e voe labezet ha gloazet un niver a
111 Europiz e Rodezia an Hanternoz. Da heul an darvoudoù-se, Unaniezh ar
111 Vengleuzierien Europat a c'houlennas ma vije kaset kuit ar Gouarnour
111 Sir Evelyn Hone.

111 EMRENEREZH TOGO : E diwezh Ebrel e voe embannet emrenerzh Togo, 12-vet
111 Stad da vezañ dizalc'h en Afrika. Togo, dezhi gorread an Izelvroioù ha
111 Belgia kevret, enni ur milion bennak a dud, a vo bihanik e-keñver
111 Stadoù all Afrika. Betek ar C'hentañ Brezel-Bed e oa trevadenn alaman.
111 Frañs a voe karget da ren anezhi goude ar brezel-se. Un tamm distaget
111 diouzh Togo a voe fiziet e Breizh-Veur, hag a zo bremañ darn eus Gana.

111 "APARTHEID" : E "Ti ar Vodadenn", d'an 22 Ebrel, Erasmus, Ministr ar
111 Reizh, a lavaras e oa bet harzet '94 a dud wenn, 1451 a Afrikiz, ha 24
111 a dud a liv all abaoe ma voe embannet ar "stad-diwall" d'an 30 Meurzh.

111 TRUBUILH E TURKIA : Lezenn-vrezel a voe embannet e diwezh Ebrel en
111 Istanboul hag en Ankara da heul displegadegoù studierien a-enep ar
111 gouarnamant. Ar studierien a oa bet kounnaret gant digargadur evit ur

pred Ismet Inonu, rener kostezenn Republikan ar Bobl, ha 12 parlamant-
ad all, o doa stourmet ouzh ur mennad-lezenn o reif galloud-kontroll-
erezh war ar c'helaouennoù da gomiteoù parlamantel. Ar studierien a
c'houlenne dilez ar C'hentañ Ministr Menderes.

EN EC'HONDER

ADPLANEDENN-SKINWEL : D'ar 1-añ Ebrel e voe taolet eus ar C'hab Canav-
eral un adplanedenn 125 Kg., a zo he c'hefridi luc'hskeudennañ ar
c'houmoul. Ar skeudennoù, kemeret gant daou luc'hskeudenner, a vez en-
skrivet war ur vandenn vagnetek, ha kaset d'an Douar bep tro ma tremen
an adplanedenn (anvet TIROS I) a-us Jerze-Nevez pe Hawaii. Spi a zo
evel-se da studiañ gwelloc'h furmidigezh hag hent ar c'horventennoù.

MARV "SPOUTNIK III" : An adplanedenn SPOUTNIK III, bet taolet gant ar
Rusianed d'ar 15 Mae 1958, a voe pulluc'het en ur gouezhañ en aer-
gelc'h d'ar 6 Ebrel 1960, a-zioc'h Kanada, pa edo o kregiñ gant he
10.035-vet kelc'hdro.

ADPLANEDENN DA HARPAÑ AL LISTRI : An Amerikaned a daolas d'an 13 Ebrel
un adplanedenn graet evit skoazellañ ar voraerien. Ur voullenn eo,
dezhi 90 cm. a dreuz, he fouez 120 Kg. He bateriennoù, adkarget gant
an Heol, a dle padout 5 bloaz. Ar pal eo kas skinarouezioù d'al listri,
dezho da jediñ pelec'h emaint, eeunoc'h ha resisoc'h eget kent, ne
vern peseurt amzer a ra. A-walc'h e vefe kaout 4 adplanedenn evel-se
evit holl vorioù an Douar.

SKINGASER "PIONEER V" : D'an 8 Mae e voe lakaet da vont en-dro eus
Jodrell Bank, Bro-Saoz, ar skingaser 150 watad a oa bet lakaet e-barzh
PIONEER V, an adplanedenn bet taolet d'an 11 Meurzh etre an Douar hag
ar Werelaouen. Edo PIONEER V neuze un 13.000.000 Km. bennak diouzhimp.
Ar wech kentañ eo e kaser urzhioù d'un ardivink keid-all en ec'honder.

UN OABLESTR RUSIAN : Ar Rusianed a daolas d'ar 15 Mae (derc'hent pezh
a dlee bezañ Kuzuliadeg ar Barr) un adplanedenn nevez. Un oabllestr e
oa kentoc'h, graet evit dougen un den (daoust ne oa e-barzh, gouez
d'ar Rusianed, nemet ur jak graet e stumm un den). Treiñ a rae en 91
munutenn, war-dro 310 Km. a-zioc'h an Douar. Pezh a oa souezhus oa
pouez an oabllestr : 4 zonenn 1/2. Bez' e oa pounnerañ tra bet taolet
betek neuze en ec'honder. Logig al "loman-oabl" a boueze 2 donenn 1/2.
Gwask an aer hag ar rez-tomnder enni a veze reizhet e seurt doare ma
c'hellje un den bev ãñ enni. Distaget e c'helle bezañ dre gas skin-
arouezioù eus an Douar.

Distaget e voe e gwirionez d'an 20 Mae. Hogen ur fazi a oa bet
graet. An adplanedenn a voe kaset war un hent pelloc'h eget a-raok
diouzh an Douar, hag al logig, e-lec'h kouezhañ, a ambrougas anezhi.

OFERENN SANT ERWAN E SANT-MARK D'ar Sul 22 a viz Mae e voe un
oferenn e Sant-Mark, Brest, en enor
da Sant Erwan. Pep tra e brezhoneg.

Laouen e vefemp da embann keloù eus ar pezh a vez graet evit ar
brezhoneg er parrezioù gallekaet.

Daoust ha ne vez graet netra nemet e Sant-Mark ?

I S T O R

H A R Z O U

B R O - S I N A

E derou ar c'hantved-mañ e veze komzet alies eus "ar Riskl Melen", da lavarout eo, aloubadeg Europa gant Aziiz. Darvoudoù all a zistroas e-kreiz ar c'hantved evezh Kornogiz diouzh ar gudenn-se. Hogen dont a ra adarre war hor spered er bloavezhioù-mañ gant kresk Republik ar Bobl e Sina.

Nevez 'zo ez eus bet dael etre Sina hag Indez a-zivout harzoù an div vro. Er pennad-mañ e lakaer a-wel ur fed nebeut anavezet pe ankounac'haet : Sina a zo aet en amzer dremenet kalz pelloc'h en tu all d'he harzoù a vremañ eget na greder.

KREIZENN SINA

Pa lavarer "Sina" e soñjer diouzhtu en un hantergelc'h o valirañ er Mor Habask, etre ar Mor Melen ha Pleg-Mor Tonkin. E gwir, stumm an aod a zo hini un hantergelc'h hogos disi. Pa seller ouzh ur gartenn, neoazh, e weler en em astenn Sina pell-pell er reter betek Kachmir.

Diaes eo lakaat resis derou Sina evel bloc'h politikel distag. Ar greizenn hep mar a oa traonienn ar Stêr Velen. Savidigezh ar Vur Veur, evit difenn Sinaiz ouzh argadadegoù kantreerien ar gwalarn, en 3-vet kantved k.J.K. (1), a verk ur mare a bouez e furmidigezh ar bloc'h-se. Bro-Sina, er mare-se, a oa ar vro er c'hreisteiz d'ar Vur Veur betek ar Stêr Yangtze.

ASTENN-DIASTENN

Diwar neuze, ez eus bet en istor Sina mareadoù emastenn, ma'z eas he galloud hag he levezon pell diouzh ar greizenn, ha mareadoù all, ma'z eas galloud ha levezon war goazhañ, dindan taolioù alouberien.

AR REMZIAD HAN (206 k.J.K.-220 g.J.K.)

E gre ar remziad Han e kreskas Sina en un doare souezhus.

An impalaer Wou (140-85 k.J.K.) a dagas e 133 an Huned, a oa bet dalc'hmat oc'h argadifi hag o preizhata en hanternoz, o kas anezho en tu all d'ar Gouelec'h Gobi, hag o tizhout zoken, a lavarer, al Lenn Vaikal.

Ur wech dieubet diouzh an Huned, e skoas Sinaiz etrezek ar c'hornog. Beajourien o doa kaset keloù d'an impalaer eus broioù en tu-hont da Venezioù Pamir : Sogdiana, Baktria, ha dreist-holl Fergana, ma veze kavet ur ouenn gezeg burzhudus. Kannaded a voe dileuret, ha neuze, e 102 k.J.K., un arme. Ferganiz a voe trec'het hag ur bagad kezeg paket. Ar vro anvet hiziv Turkestan Sina (pe Sin-Kiang) a voe perc'hennet gant Sinaiz.

(1) Ar Vur Veur evel m'hec'h anavezomp bremañ, ne dle ket bezañ koshoc'h, diouzh an diavaez, eget ar 14-vet kantved g.J.K.

Pouezus e voe an darvoud-se. O treuziñ Menezioù Pamir, Sinaiz o 111
doa digoret, hep gouzout dezho, Hent ar Seiz etrezek ar Mor Kreiz- 111
douarek. Dre an hent-se e voe boulc'het kenwerzh etre Reter ha Kornog, 111
hag e teuas ar seiz hag ar braventezioù sinaat a lakaas merc'hed Roma 111
da bennfollañ pa weljont anezho evit ar wech kentañ. 111

Kreisteiz Sina a oa rannet etre Stadoù dizalc'h. Diwar 138 k.J.K. 111
e oant bet staget, dre gaer pe dre heg, ouzh an impalaeriezh. Ne chome 111
nemet ur Stad c'halloudus, Nan Yueh, oc'h enderc'hel pezh a zo hiziv 111
Kouang-Toung (gant Kanton da gêrbenn), Kouang-Si, Tonkin, hag Annam an 111
Hanternoz. Sujet e voe gant an impalaer Wou e 112 k.J.K., hag an 111
impalaeriezh astennet er c'hreisteiz dreist d'an harzoù a vremañ (e 111
pezh a zo hiziv hanternoz Vietnam). 111

En diwezh, diwar 109 k.J.K., e troas Wou a-enep ur Stad dizalc'h 111
oc'h en em astenn war Gorea ha Mandchouria ar C'hreisteiz. Taget e voe 111
dre zouar ha dre vor, trec'het, ha graet darn eus an impalaeriezh. 111

AR REMZIAD T'ANG (618-907)

Ar remziad Han a gouezhas er bloaz 220, gwanaet gant dizunvan- 111
iezhoù hag iriennoù e lez an impalaered. Ar pevar c'hantved war-lerc'h 111
a voe ur prantad a rannidigezhioù, a vrezelioù-diabarzh, hag a aloub- 111
erezh gant kantroerien an hanternoz hag ar gwalarn, Turked ha Mongoled, 111
koulz ha Tibetiz o tont eus ar mervent. An alouberien, gwir eo, a voe 111
buan sinaeket, gounezet gant ur sevenadur dreist d'o re. Sinaiz, 111
diouzh an tu all, a c'houzañvas levezon sevenadurioù estren. En amzer- 111
-se dreist-holl en em ledas dre Sina ar voudaegezh, deuet eus Indez, 111
o kevezañ gant ar gonfusiegezh, kredenn (pe filozofiezh) diwanet er 111
5-6-vet kantved k.J.K. er vro. 111


E 618, ur jeneral en doa trec'het an Durked a savas ar remziad 111
impalaered T'ang. 111

Ober istor brezelioù an impalaered T'ang, kontañ penaos e voent 111
trec'h ha trec'het tro-ha-tro, a ve re hir. A-walc'h e vo menegiñ pezh 111
a rejont evit ledañ o galloud en tu all d'o harzoù. 111

Da gentañ, startaat o beli e Turkestan, o tiarbenn an Durked en 111
hanternoz hag an Dibetiz er c'hreisteiz. Neuze, skoulmañ darempredoù 111
e 638 gant Persia. Sinaiz er 7-vet kantved a rene betek en tu kornog 111
d'ar Stêr Oksuz, er c'hreisteiz da Vor Aral, tost betek Mor Kaspia. 111
Besroueed o doa en Afganistan hag e Kachmir. Er biz, diwar 660, e voe 111
adc'hounezet Korea. 111

En oadvezh-se, a zo bet lesanvet an "Oadvezh Tefival" en Europa 111
(Breizh a oa a-benn bet savet gant ar Vrezhoned o tont eus Breizh-Veur) 111
e oa endeo ur "politikerezh-bed" : galloudoù bras oc'h en em zarem- 111
prediñ hag o kevezañ an eil gant egile eus hanternoz Afrika betek Mor 111
Japan, hag Europa (nemet Italia hag un tamm eus ar Balkanioù) er-maez 111
eus ar Froudad Veur-se. Bez' e oa "kêrioù-bed", evel Bizantion, 111
Aleksandria, Bagdad, hag, unan eus ar re vrasañ en o zouez, Kanton, 111
leun a C'hresianed, Siriiz, Arabed, Persed, Indeziz. 111

Impalaeriezh vras ar remziad T'ang a gouezhas en he foull a-daol- 111
-trumm en 8-vet kantved, taget gant Mongoled, Turked, Arabed ha 111
Tibetiz. Krakvevañ a reas betek 907. Korea a oa bet kollet e 758. 111
Hanternoz Sina a voe aloubet, hag ar c'hreisteiz rannet etre rouantel- 111
ezhioù bihan. 111



111 AR REMZIAD YUAN (1280-1368)

111
 111 Galloud politikel Sina a voe dasorc'het, n'eo ket gant Sinaiz,
 111 hogen gant ur remziad impalaered estren, Mongoled. E 1209 e voe
 111 boulc'het an aloubadeg vras gant Jengiz Kan. Peurechuet e voe gant e
 111 vab-bihan Koublai Kan, a savas ar remziad Yuan e 1280, pa'z eas da get
 111 e kreisteiz Sina ar remziad Song (960-1280), a zo brudetoc'h en istor
 111 an arz eget en istor ar brezel.

111 Beli ar Vongoled en em astennas eus ar Stêr Dnieper betek ar Mor
 111 Habask, eus ar Mor Arktek betek Malezia. Tibet ha Birmania a oa dindan
 111 o aotrouniezh. Japan hepken a zalc'has penn hag a vanas dieub. Ar
 111 braster-se, avat, ne badas ket ur c'hantved. Ar remziad Yuan a voe
 111 distrujet gant un emsavadeg kouerien, skuizh o vezañ mac'homet ha
 111 marnaoniet gant ar Vongoled ha gant ar renkadoù uhelañ a wad sinaat
 111 a oa en em lakaet a-du gant ar vistri nevez.

KIZADENN (15-vet-20-vet kantved)

Daou red a verzer en istor Sina er pemp kantved tremenet : diouzh
un tu, an estrenien oc'h ebarzhif Sina e pep doare (brezelel, relijiel,
sevenadurel, kenwerzhel) ; diouzh an tu all, Sina oc'h en em zifenn
gwellañ ma c'hell ouzh an ebarzhadur-se dre en em sachañ, en em
damolodif warni hec'h-unan.

Ar remziad impalaered Ming (1368-1644), Sinaiz rik anezho, a voe
diskaret gant Mandchoued, hag ar remziad mandchou Tch'ing a renas
betek derou hor c'hantved.

Gwanded Sina en 19-vet kantved a vroudias Europiz da lakaat o
zreid er vro. Goulenn a rejont ar gwir da genwerzhaf, ha pa voe
nac'het outo, e rejont brezel. Brezel gant Breizh-Veur e 1840, ha
perc'hennidigezh Hong-Kong gant ar Saozon e 1841. Brezel gant Breizh-
-Veur ha Bro-C'hall e 1856. Ar Rusianed a grignas tammoù eus Sina en
hanternoz, ar C'hallaoued er c'hreisteiz. Bez' e voe amzer an "Tachenn-
où Feurmet" (evit 90 pe 99 vloaz) : Kiao-Tcheou d'an Alamaned, Porzh-
-Arzhur d'ar Rusianed, Wei-Hai-Wei d'ar Saozon, Kouang-Tcheou-Wan d'ar
C'hallaoued e 1898. Sinaiz, evit stourm ouzh an estrenien, a grouas
kevredigezh kuzh an I'ho T'ouan (anvet "Bokserien" gant Europiz),
skoaziet gant an impalaerez-enebarzherez. Ar stourm a echuas e 1900
gant seziz al Legadidiou estren e Pekin, kemeridigezh ha gwastidigezh
kêr gant an Europiz, an Amerikaned hag ar Japaniz unanet.

Japan, a oa bet en 19-vet kantved arnevesaet diouzh skouer broioù
ar C'hornog, a glaskas en em astenn diwar goust Sina. Brezel a darzhas
etre an div vro e 1894. Sina a voe faezhet hag a rankas reiñ Formoza
da Japan, ha dilezel an aotrouniezh he doa dalc'het (dre anv da
vihanañ) war Gorea. (Korea a voe staget ouzh Japan e 1910).

Ar Republik a oa bet embannet e Sina e 1911. Gwall luziet eo bet
istor ar Republik-se, gwall strafuilhet, gant brezelioù a-ziabarzh hag
emell ar galloudoù estren : Rusia, Breizh-Veur, ha dreist-holl Japan.
E 1931, Japan a bakas Mandchouria, hag er bloavezhioù goude a aloubas
un darn vras eus Sina. An darn a chome c'hoazh dieub a zisklerias
brezel ouzh Japan e 1941, ur brezel a echuas gant drouziwezh Japan e
1945. Goude brezel-diabarzh etre nerzhioù ar Jeneral Tchiang Kai-Chek,
skoazellet gant ar Stadoù-Unanet, hag ar strollad Kouo-Min-Tang,
skoazellet gant ar Soviedoù, Kouo-Min-Tang a voe trec'h, hag a embannas
Republik ar Bobl e 1949.

TIBET

Sina a oa aet war gil a bep tu etre ar 15-vet hag an 20-vet kant-
ved. Diouzh un tu hepken, avat, tu ar mervent, e talc'has d'he
folitikerezh-emastenn. Eno emañ Tibet, a oa bet damc'hounezet en 13-
-vet kantved gant Koublai Kan. E 1720 e voe staget en he fezh ouzh
Sina. E 1888, Sinaiz a aloubas Sikkim, rannvroig a Vro-Indez harp ouzh
Nepal diouzh tu ar sav-heol. Ar Saozon neuze a glaskaas pellaat Sinaiz
diouzh Tibet, oc'h embann emrenerezh klok houmañ e 1914, pezh na voe
ket anavezet gant Sina. Tibet a vez sellet gant Sinaiz evel darn eus o
bro. A zo bet lakaet splann dirak ar bed-holl gant an darvoudoù
diwezhañ. Evit derc'hel start Tibet, avat, e rank Sinaiz kaout un hent
aes eus Sin-Kiang. An hent-se a rank tremen dre ur c'hogn eus Kachmir.

111 Ac'hano an tabut savet nevez 'zo etre Indez ha Sina.

111 REPUBLIK AR BOBL

111 Republik ar Bobl, renet gant komunourien, a zo enni :

111 1) An 18 rannvro (Kreizenn Sina).

111 2) Tibet.

111 3) Sin-Kiang (Turkestan Sina).

111 4) Mongolia-Diabarzh.

111 5) Mandchouria.

111 (Enez-Formoza a zo dalc'het gant Tchiang Kai-Chek).

111 Norz Korea ha Norz Vietnam, hep bezañ darn eus ar Republik, a zo

111 dindan he levezon. Ha bez' e vo ar bloavezhioù da zont ur maread-emastenn nevez ?

111 Hep mar, emañ galloud Sina o kreskiñ. Emellout a ra gwazh-ouzh-gwazh

111 e politikerezh ar bed-holl, o pouezañ kreñv war Rusia, ar Reter-Kreiz,

111 Afrika, Indez ha gevred Azia.

111 xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx

111 xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx

111 xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx xxx

111 *FILMOÙ*

111 SIVI

111 GOUEZ

111 Kredif a-walc'h a rafen ez eo Ingmar Bergman ar gwellañ film-

111 aozer a vremañ. War atiz un dezvarnour ez on aet da welout SIVI GOUEZ,

111 brudet evel e bennoberenn.

111 Pennden ar film svedat-mañ, ar C'helenner Borg, a zo dalc'het

111 e roll gant Viktor Sjöström, ur mailh e gwirionez. Estlammus eo pegen

111 naturel an doare ma c'halv da goun e yaouankiz, ha ma tiavaez e

111 saouzan e-kerz e hufivreoù. Amañ ez eus un oberenn a brederouriezh

111 vev, ouzhpenn an taolennoù fromus. N'eo ket graet evit an tolpadoù

111 a dra sur. Diskouezet e vez e-barzh ur fiñvskeudenndi bihan hag a

111 bourchas dalc'hmat filmoù eus an dibab.

111 Fellout a ra din hepken ober un nebeut evezhiadennoù a-zivout

111 an implij a vez graet eus kenarouezioù en hufivreoù evit pleustrif war

111 unan eus temoù ar film : an anken rak ar marv. (Un tem all eo hini

111 an digenvez o tont eus an emgarantez : an den a lavar n'en deus tamm

111 doujañs ouzh poanioù-spered an dud a zo gwanet a-benn ar fin gant ar

111 menoz emañ e-unan).

111 An anken rak ar marv eo a laka ar c'helenner da ober daou hurlink

111 hag a bouez kement war e spered ma teu da drec'hif war e zigasted

111 e-keñver e nesañ.

111 En ur straed didud, dirak un nor-borzh teñval, e chom sebezet

111 dirak un horolaj hep bizied : er marv ne vefe ket a amzer ? Ne

111 c'hellfed mui diforc'hañ an eil pred diouzh egile ?

111 Karr an Ankou a ya e-biou, hogen a chom sac'het ouzh post ul

111 lamp-straed. Er c'hrogad e tiahel ur rod, ha darbet eo d'ar c'helenner

111 bezañ flastret pa ziruilh war-du ennañ. Daoust hag e vez kenaroueziet

111 darvoudoù bras ar bed, er feur ma tennont da vuhez an den, gant ur rod?

Ul levr eñvorennoù nevez, embannet gant ar C'hlub Leyrioù iwerzhonek, 111
 a zo anvet "Rodoù Bras ar Vuhez". Marteze e vefe reizh menegiñ er 111
 c'heñver-se ivez "milinoù Doue" ar c'hrennlavar alaman, "hag a val 111
 gorrek, difazi-kaer avat". 111

En un huñvre all, e riskl ouzh an oabl koumoulek unvan ur bagad 111
 kavaned diniver o tournial. An hengoun alaman a zo anv ennañ eus un 111
 "hemolc'h gouez", kevatal gant kantreadeg an anaon en hengounioù 111
 breizhat hag iwerzhonat. Hag en danevell heniwerzhonek e par ar gavan 111
 Morrigan war ur c'hef e-kichen Kouc'houlan, kent dezhañ bout diskaret. 111
 Ar gavan a seblant bezañ bet degemeret eta da verkañ kannadez ar marv. 111
 Klevet em eus bet tud va c'horn-bro genidik o komz eus al "labous- 111
 -skrijer" (ar pouez-mouezh, souezhus a-walc'h, war "jer", evel pa vije 111
 "skrijaer"). Hervez ar vrud e vefe klevet o skrijal hir e-tal an ti ma 111
 vez un den war e dremenvar. Klevet diouzh an noz. Ne oa meneg ebet eus 111
 e liv. En abeg d'ar mare ne oa ket dav. Kavaned ar film-mañ, gant o 111
 zourni ankenius, a zo anezho "laboused-skrijerien" an abardaez-noz. 111

Meur a dra sirius all a vefe da zisplegañ a-zivout ar "Sivi Gouez" 111
 Na gredit ket ez eo ur film "pounner" abalamour da se. Bez' e c'hell 111
 bezañ gwelet e-giz un diduamant ivez, pe ur "fromer". Boued a zo ennañ 111
 evit a bep seurt blizidigezhioù. Un abeg c'hoazh evit lavarout ez eo 111
 ur bennoberenn-arz. 111

ALAN HEUSSAFF

=====
 =====
 =====

'' S K R I D O U N E V E Z ''
 '' ===== ''
 '' ===== ''


HOR YEZH, niv.10 (rummad nevez), 111
 Kentañ Trimiziad 1960. Trimiz- 111
 iek. Koumanant-bloaz, 10 LN. - 111

CCP.RENNES-1240-22, Mlle J. Queillé, 47, rue Notre-Dame, Guingamp. 111
 STURIER BLEIMOR - YAOUANKIZ, niv.13, Meurzh 1960. Trimiziek. Kouman- 111
 ant-bloaz, 6 LN. CCP.RENNES-137403, Yann Bouessel du Bourg, 38, Avenue 111
 Emile Zola, Paris, XV^e. 111

Pennadoù liesseurt a ra en dro-mañ danvez HOR YEZH. Ar c'hentañ 111
 pennad eus ur rumm studiennoù gant Y.Olier, "An Emsav a-raok ar Brezel 111
 Kentañ", dindan an titl "Frañsez Vallee", a veneg savidigezh ar gelaou-111
 enn "SPERED AR VRO" e 1903, an doug da beurunvaniñ ar yezh, d'he lakaat 111
 da glotañ gant ezhommoù ar bed a vremañ, da stagañ stourm ar yezh ouzh 111
 ar stourm broadel. Ret e vije bet lavarout ne oant ket traoù nevez- 111
 -holl. Seurt strivoù a oa bet graet en 19-vet kantved, hag a c'hell 111
 bezañ spurmantet zoken en 18-vet. - Pouezus eo ar gudenn meret gant 111
 P.Even, sevel e brezhoneg ar paperoù ofisiel. Gouzout a reer ez eus en 111
 Iwerzhon ur Burev karget da lakaat en iwerzhoneg holl lezennoù hag 111
 holl skridoù ofisiel ar Republik, un dra fur e-keñver amzer da zont ar 111
 yezh. Mat e ve dimp studiañ doareoù-ober ar Burev-se : an implij resis 111
 hag urzhiet eus pep ger ha pep tro-lavar. - Emañ HOR YEZH o vont da 111
 embann ul levraoueg, enni oberennoù klok. Ur menoz mat eo. 111

YAOUANKIZ ha STURIER BLEIMOR a zo bremañ unanet. E-tal pennadoù 111
 gallek ez eus pennadoù brezhonek dudius. Ezhomm a zo lakaat e brezhoneg 111
 bremañ tammoù eus lennegezh ar brezhoneg-krenn : amañ e kaver derou 111
 "Tremenvar an Itron Werc'hez Varia" (gant fazioù bihan hepken, evel 111
 enoentet e-lec'h engehentet). Daou bennad diwar-benn Kembre, gant Mona 111
 Maze ha Ronan Joleiz. Ur geriadurig, mat hag eeun, diwar-benn ar 111
marc'h-houarn. Notennoù. h.a. 111

ROPARZ HEMON



Hep poan ebet, hep torr-penn,
Forzh pelec'h, e giz pe c'hiz,
Pep den a c'hell deskif lenn
BREZHONEG EEUN en ur miz.

KANNAD AR YAOUANKIZ - 40

111 ISTAR AR BREZHONEG

111 Istar ar Brezhoneg, a lavarot marteze, a zo bet graet alies hag a
111 zo anavezet gant kement Breizhad a gar e yezh.

111 Ya, istor ar Brezhoneg a zo bet graet alies. Met ne gredan ket ez
111 eo anavezet koulz ha ma kreder. Ne vo ket fall eta e lakaat amañ berr-
111 -ha-berr, en un doare eeun, evit an dud yaouank ... hag ar re all.

111 AR BREZHONEG KOZH

111 Ar Brezhoneg a voe degaset da Vro-Arvorig war-dro ar 5-vet kant-
111 ved gant Bretoned (pe c'hoazh "Brezhoned") o tont eus Breizh-Veur. Ur
111 yezh keltiek eo, deuet eus ar yezh komzet gwechall gant ar Gelted. E
111 Bro-Arvorig e oa bet komzet ivez ur yezh keltiek en amzer gozh. Met pa
111 voe trec'het Arvorigiz gant ar Romaned (kentañ kantved kent Jezuz-
111 -Krist), e voe distrujet o yezh tamm-ha-tamm, hag al latin lakaet en
111 he lec'h. Ar Vrezhoned a roas da Arvorig un anv nevez, "Breizh", hag
111 ur yezh nevez, ar "Brezhoneg".

111 Ar Brezhoneg a oa neuze komzet gant an holl, gant ar renerien
111 koulz ha gant ar bobl, er c'huzh-heol d'ul linenn o vont eus Menez
111 Mikael ar Mor betek genou ar stêr Liger. Nebeut a skridoù a zo chomet
111 da ziskouez penaos e oa hor yezh en amzer-se (betek an 10-vet kantved).
111 Gwelloc'h anavezet eo koulskoude da heul kavadennoù ha labourioù an
111 Aotrou Fleuriot, graet er bloavezhioù-mañ. N'em eus ket ar gwir da
111 zisplegañ deoc'h c'hoazh petra en deus kavet (hag en deus bet ar
111 vadelezh da ziskouez din). Met lavarout a c'hellan e oa ar Brezhoneg
111 neuze ur yezh uhel ha glan, par da yezhoù ar Gelted all, Kelted
111 Iwerzhon ha Kembre. (E gwirionez e oa a-boan disheñvel diouzh yezh
111 Kembre).

111 AR BREZHONEG -KRENN

111 Breizh a voe gwastet en 10-vet kantved gant an Normaned. Neuze e
111 c'hoarvezas un taol fall gant ar Brezhoneg : dilezet e voe gant an
111 dud uhel, ar renerien. Etre an 10-vet hag an 20-vet kantved, ez eo
111 bet ar Brezhoneg yezh ar bobl. Bountet e voe betek er c'huzh-heol
111 d'ul linenn o vont eus pleg-mor Sant-Brieg betek genou ar stêr Wilen
111 (ha diwezhatoc'h betek ar Mor Bihan). An dud uhel, ha tamm-ha-tamm
111 tud ar c'hêrioù hag ar bourc'hioù, en em lakaas da gomz galleg. An
111 dud diwar ar maez hepken a zalc'has d'o yezh.

111 Ar Brezhoneg komzet etre an 11-vet hag ar 16-vet kantved a zo
111 anvet "Brezhoneg-Krenn". Skrivet e voe betek ar 17-vet kantved. Kalz,
111 an darn vuiañ hep mar, eus ar skridoù-se a zo aet da goll. Un nebeut
111 hepken a zo bet miret, peurliesañ e levrioù moulet er 16-vet hag er
111 17-vet kantved, ha saveteet dre vuzhud : dreist-holl pezhioù-
111 barzhoniezh evel "Buhez Mab-Den", "Melezour ar Marv", ha pezhioù-
111 -c'hoari evel "Ar Basion", "Buhez Santez Nonn", "Buhez Santez Barba",
111 "Buhez Sant Gwenole". Ar yezh n'eo mui ken glan hag a-raok. Ar
111 varzhed a veske gant o Brezhoneg ur bern gerioù gallek. Koulskoude,
111 arabat e vefe disprizañ ar skridoù-se. Graet int bet gant kalz a

evezh, gant tud desket hag o doa miret un tamm eus gouiziegezh barzhed 111
 kozh a zo kollet o skridoù. 111
 111

AR BREZHONEG RANNET

E-pad ar 17-vet kantved e voe kemmet an doare da skrivañ ar Brezh-111
 oneg. Ar yezh komzet a oa bet rannet abaoe pell e rannyezhoù. Da 111
 lavarout eo, tud Bro-Wened ne gomzent mui evel tud Kernev. Ar re-mañ 111
 ne gomzent mui evel tud Treger. Hag ar re-mañ c'hoazh ne gomzent mui 111
 evel tud Leon. Gwashoc'h zoken : e pep parrez e komze an dud un tammig 111
 disheñvel diouzh tud ar parrezioù e-kichen. 111

Er 17-vet kantved eta, e-lec'h ar Brezhoneg-Krenn, a oa bet yezh 111
skrivet an holl, e voe kemeret ar pleg da skrivañ evel ma komzed. En 111
 18-vet kantved e voe moulet kalz levrioù a relijion. Savet e voe ivez 111
 un niver bras a bezhioù-c'hoari, a veze displeget dirak ar bobl. Kalz 111
 eus ar pezhioù-c'hoari-se a zo bet miret, skrivet e kaieroù gant tud 111
diwar ar maez. An dud-se a veze douget da veskañ gerioù gallek gant o 111
 Brezhoneg evel tud amzer ar Brezhoneg-Krenn. Ne dleont ket kennebeut 111
 evit se bezañ disprizet : graet o deus eus o gwellañ, o kemer kalz a 111
 boan, dizesk evel ma oant, da lakaat dre skrid ar pezhioù-c'hoari a 111
 gavent ken brav. 111

En 18-vet kantved ivez e voe kroget da studiañ ar yezh gant tud 111
 evel Gregor Rostrenen ha Pelletier. 111
 111

AR "BREZHONEGOU" UNANET

Ul labour bras a voe graet en 19-vet hag en 20-vet kantved : 111
 labour studi ha labour reizhañ. Ar Gonideg (1775-1838) a voe ar 111
 c'hentañ "reizher". Urzh a lakaas en doare-skrivañ. E skouer a voe 111
 heuliet gant kalzik tud, an daou vrudetañ anezho Emil Ernault (1852- 111
 -1938) ha Frañsez Vallee (1860-1949). Ne oa ket a-walc'h reizhañ ar 111
 yezh, lemel diouti ar gerioù gallek bet kemeret hep ezhomm. Ret e oa 111
 ivez unaniñ ar rannyezhoù, evit reiñ da Vreizh pezh he doa kollet er 111
 17-vet kantved, pezh a rank pep bro kaout : un doare-skrivañ hepken. 111
 E 1907 e voe unanet teir rannyezh : re Leon, Kernev ha Treger. E 1941 111
 e voe unanet an holl rannyezhoù : hini Wened hag an teir all. Abaoe 111
 1941 he deus Breizh ur yezh skrivet, unan hepken, evel gwechall. 111
 111


AMZER DA ZONT AR BREZHONEG

Tud ar bobl, tud ar maezioù o deus miret o yezh, daoust d'ar 111
renerien, betek en deiz-mañ. Ne c'hellont mui herzel pell, avat. Emañ 111
 amzer da zont ar Brezhoneg etre daouarn ur bagadig stourmerien, tud 111
 desket, a dle ober evit yezh Vreizh pezh a zo bet graet gant ur bagadig 111
stourmerien evit yezh Israel. Ar stourmerien-se a rank komz, skrivañ 111
 ar Brezhoneg, hag e skignañ gant kement benveg a gaver er bed a vremañ. 111
 O ger-stur n'eo ket GOULENN, na GORTOZ, nag HUNVREAL. O ger-stur eo 111
 OBER. Skridoù a bep seurt a zo bet savet en 19-vet hag en 20-vet 111
 kantved, darn anezho kaer-tre. Met n'eo ket a-walc'h : kampoù, skolioù, 111
 bodadegoù a ranker aozañ bep bloaz, bep miz, bep sizhun, bemdez, hep 111
 skuizhañ. Ur yezh vihan a c'hell bevañ en amzer an nerzh atomek hag 111
 ar sputnikoù, mar bez tud c'hoantek hag ampart a fell dezho he lakaat 111
 da vevañ. 111

ROPARZ HEMON

=====
 C.C.P.P. N°36.242.

Le Gérant : Mlle Y. Martin, 21, rue de Dixmude, St. Marc, Brest. 111
 Ronéotypé par Rincazaux, 1, rue Alain Fournier, Brest. 111



Revue mensuelle-N°19-Juillet 1960 Kelaouenn vizek-Niv.19-Gouere 1960
 Abonnement annuel : 7 NF. Koumanant-bloaz : 7 LN.
 CCP.RENNES 1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, Brest.

111 XXX
 111 X
 111 X GOUEL AR BREZHONEG X
 111 X Da geñver GOUEL AR BREZHONEG, d'an 8 a viz Gouere, kavet ur X
 111 X c'houmananter nevez d' AR BED KELTIEK. X
 111 X
 111 XXX

AR MIZ

KELTIA

111 ABADENN AN ARTICHAOD : Displijadur al labourerien-douar e Breizh a vez
 111 displeget bremañ en un doare nevez : abadenn an artichoad. N'eus ket
 111 pell e voe ret devañ ur bern artichoad e bro Gastell-Paol, o vezañ na
 111 gaved ket a werzh dezho. Kouerien hanternoz Breizh o deus ijinet kas
 111 o-unan tumporelloù karget a artichoad da werzhañ e Pariz d'an dud war
 111 ar straed. Pezh o deus graet.

DRE AN DOUAR

111 JAPANIZ A-ENEP AN AMERIKANED : Eneberezh feuls a zo bet e Japan ouzh
 111 ar feur-emglev-kendifenn gant ar Stadoù-Unanet.
 111 Pa zegouezhas J.Hagerty, Sekretour-Kelaouerezh amerikan, en aer-
 111 borzh Tokio d'an 10 Mezheven evit aozañ beaj Eisenhower e Japan, e voe
 111 gronnet e garr-tan gant un engroez (studierien dreist-holl), a dorras
 111 gwerennoù, o kinnig troc'holiañ ar c'harr. Hagerty a rankas klask repu
 111 en ur viñsaskell amerikan, a zouaras e-kichen.
 111 Diwar neuze e voe kabaduilh bemdez. D'ar 15, ur plac'h a voe lazhet
 111 ha kantadoù a dud gloazet e krogadoù gant ar polis dirak Ti ar Parlamant.
 111 Ar gomunourien, anat eo, a vroude an emsaverien.
 111 D'ar 16 Mezheven e voe roet da c'houzout en doa gouarnamant Tokio,
 111 goulennet digant ar Prezidant Eisenhower chom hep dont da Japan.
 111 D'ar 17, ur sokialour brudet, Kawakami, a voe kontellet e Ti ar
 111 Parlamant gant un den yaouank. Se a greskas kounnar ar c'hostezennoù
 111 kleiz, a aozas un displegadedeg ramzel d'an 18.
 111 Daoust da se, an emglev nevez etre Japan hag ar Stadoù-Unanet a
 111 zeuas de vezañ lezenn d'an 18, tregont devezh goude asant ar Parlamant.
 111 Pal an emsaverien eo lakaat ar C'hentañ Ministr Kichi da zilezel e
 111 garg, ha lakaat divodañ ar Parlamant.

111 EISENHOWER ER RETER-PELLAÑ : Eisenhower a reas un dro er Reter-Pellañ e
 111 Mezheven. D'ar 14 ez errue er Filipinez, hag e voe degemeret-mat e
 111 Manila. Neuze ez eas da Formoza, e bourzh ul lestr-reder, ambrouget gant

listri-brezel all ha difennet gant ar seizhvet strollad-listri amerikan 111
 hogos en e bezh. En deiz ma tegouezhas e Formoza, e voe bombezet-ferv 111
 gant komunourien Sina an enezennoù dalc'het gant ar vroadelerien e-tal 111
 an douar-bras, hag ivez en deiz ma kuitaas. Eisenhower a voe degemeret 111
 e Taipei, kêrbenn Formoza, gant ar jeneral Tchiang Kai-Chek. Ac'hano ez 111
 eas da Enez-Okinawa, a oa gwechall da Japan, hag a zo bremañ dalc'het 111
 da ziazezlec'h-brezel gant an Amerikaned. Eno e voe graet displegadeg 111
 a-enep, tud o tougen skritelloù, warno "An Amerikaned d'ar gêr !" ha 111
 "Restaolit Okinawa da Japan !". D'an 18 (an deiz ma tlee bezañ e Japan) 111
 e voe graet degemer kaer dezhañ e Seoul, kêrbenn Korea ar C'hreisteiz. 111

GOURDROUZOU MALINOVSKI : Ar marechal Malinovski, ministr rusian an Em- 111
 zifenn, a lavaras d'an 30 Mae, en ur brezegenn graet dirak micherourien 111
 er C'hremlin, e vije taolet fuzeennoù war nep diazezlec'h bet implijet 111
 da gas kirri-nij war Rusia. Fellout a ra da c'houarnamant ar Soviedoù 111
 spontañ ar Stadoù evel Pakistan, Turkia, Norvegia, a genlabour gant ar 111
 Stadoù-Unanet. 111

AN DAEL ETRE RUSIA HAG AR STADOÙ-UNANET : Kuzul-Surentez ar Broadoù 111
 Unanet en em vodas d'an 23 Mae e New York da bleustrif war ar c'hlemm 111
 douget gant Rusia a-enep ar Stadoù-Unanet, da heul darvoud ar c'harr- 111
 -nij amerikan bet diskaret en Oural. Klemm ar Rusianed a voe diarbennet. 111
 Rusia ha Polonia hepken a votas a-du ; ar Stadoù-Unanet, Breizh-Veur, 111
 Frañs, Sina ar Vroadelerien, Italia, Ekuador a votas a-enep ; Tunizia 111
 ha Selan a chomas neptu. 111

HARZOÙ-LABOUR E GALL : Abaoe un nebeut ez a niver an harzoù-labour war 111
 gresk e Bro-C'hall, al labourerien oc'h enebif ouzh politikerezh-espern 111
 ar gouarnamant. Tud an hentoù-houarn hag ar c'hirri-boutin a ra harzoù- 111
 -labour-tro, da lavarout eo, darn anezho a chom hogos bemdez hep 111
 labourat, gwech en ul lec'h, gwech en egile. D'an 10 Mezheven e voe 111
 harz-labour 24 eur gant kargidi ar gouarnamant hag ar c'hêrioù. 111

TAOL-REVEULZI E TURKIA : D'ar 27 Mae, mintin a-bred, e voe diskaret 111
 gouarnamant Turkia gant an arme. An taol a oa bet aozet-evezhiek hag a 111
 voe sevenet hep skuilhañ gwad. Ar Prezidant Bayar hag an holl vinistred 111
 a voe harzet "evit o gwareziñ". Ar C'hentañ Ministr Menderes n'edo ket 111
 en Ankara. Paket e voe war ar maez. Ur strollad, anvet "Komite an 111
 Unanded Vroadel", en e benn ar Jeneral Gursel, a gemeras ar galloud. 111
 Strafulh a oa e Turkia abaoe pell, gant ar gouarnamant o klask 111
 mougañ pep eneberezh. Ar renerien nevez o deus lavaret chom feal d'an 111
 Emglev Atlantek. 111

Namik Gedik, a oa bet Ministr-Diabarzh e gouarnamant Menderes, a 111
 voe lazhet d'an 30 Mae o kouezhañ dre ur prenestr eus an ti ma oa bet 111
 bac'het ennañ. 111

VOTADEG KANTONEL EN ALJERIA : Hervez ar c'helaouennoù gall, 57 % eus ar 111
 voterien a gemeras perzh er votadeg kantonel en Aljeria e dibenn miz 111
 Mae. War-dro div drederenn eus ar re anvet a zo a-du gant politikerezh 111
 gouarnamant Frañs. En Aljer, avat, roll an "enteuzerien", bleniet gant 111
 an It.Lagaillarde (gwreg an depute bet bac'het abaoe emzispac'h miz 111
 Genver), a voe trec'h. Ar vroadelerien a-du gant FLN hag an darn vuiañ 111
 eus an enteuzerien a chomas hep votiñ. 111

- 111 UN EMGLEV EN ALJERIA ? : D'an 20 Mezheven, gouarnamant-da-c'horthoz
 111 ar vroadelerien aljeriat e Tuniz a roas da c'houzout e oa o vont da gas
 111 un den da Vro-C'hall da gomz gant gouarnamant Frañs. Ur strollad-
 111 -dileuridi a c'hellfe bezañ kaset goude, en o fenn an Ao.Ferhat Abbas.
 111 En e brezegenn diwezhañ, d'ar 14 Mezheven, Prezidant Frañs en doa
 111 kinniget d'ar vroadelerien en em glevout ganto evit echuiñ ar brezel,
 111 hag en dro-mañ hep goulenn diganto daskorifi o armoù.
 111
- 111 EMRENEREZH MALI : Mali, da lavarout eo Senegal ha Soudan ar C'hornog
 111 unanet, a zeuas da vezañ Stad dizalc'h e-barzh ar Gumuniezh C'hallaafrikat
 111 d'an 20 Mezheven.
 111
- 111 MESK E BRO-GONGO : Stad-diwall a voe embannet e rannvro Gatanga, e Kongo
 111 ar Velgiz, d'ar 14 Mezheven. Ar gostezenn greñvañ er rannvro a ginnige
 111 dispartiañ anezhi diouzh peurrest ar vro hag he stagañ ouzh Rodezia, -
 111 pezh a voe dislavaret goude.
 111 E Kerleopold edo P.Lumumba o klask sevel un unaniezh vroadel evit
 111 mirout na vije rannet ar vro etre meur a Stad dizalc'h. Ne voe ket roet
 111 aotre dezhañ d'hen ober gant Ministr belgiat Bro-Gongo, Van der
 111 Meersch, a gargas J.Kasavubu, rener ar gostezenn "Abako", da furmiñ ur
 111 gouarnamant. Lumumba koulskoude, a zalc'h e gostezenn 88 kador diwar 137
 111 er Parlamant, a voe lakaet e penn ar gouarnamant d'an 21. Kongo e dle
 111 kaout hec'h emrenerezh d'an 30 Mezheven.
 111
- 111 EICHMANN : Eichmann, an Alaman a damaller dezhañ bezañ kiriek eus muntr
 111 5 milion a Yuzevien e-pad ar brezel diwezhañ, a zo bet skrapet en
 111 Arc'hantina gant ur bagad Israeliz, ha kaset ganto da Israel evit bezañ
 111 barnet. D'an 8 Mezheven, gouarnamant Arc'hantina a c'houlennas groñs
 111 digant Israel daskorifi Eichmann a-benn ar sizhun. Klemm a zougas ivez
 111 a-enep Israel dirak ar Broadoù Unanet.
 111
- 111 KUBA HAG AR STADOÙ-UNANET : Gouarnamant Fidel Castro e Kuba a seblant
 111 tostaat mui-ouzh-mui ouzh ar Gomunourien. D'ar 27 Mae e voe roet da
 111 c'houzout ne vije mui skoazellet Kuba gant ar Stadoù-Unanet. Roet e veze
 111 da Guba etre 800.000 hag 1.000.000 LN bep bloaz, a veze implijet
 111 dreist-holl evit an nijerezh hag al labour-douar.
 111
- 111 KREN-DOUAR E CHILI : Ur c'hren-douar eus ar re vrasañ a wastas ur
 111 rannvro ec'hon eus Chili er c'hreisteiz da Santiago diwar an 21 Mae.
 111 Kêr g-Concepción, enni 500.000 den, a voe gwall hejet. D'ar 25 Mae,
 111 menezioù-tan en Andoù, darn anezho bet kousket abaoe 20 vloaz, a
 111 strinke maged ha ludu betek 6 Km. er vann. Daou venez-tan nevez a oa
 111 deuet er-maez eus an douar, ha div lenn nevez a voe furmet. Torosennadur
 111 ar vro a zo bet kemmet, hag ivez hini strad ar mor a-hed an aod.
 111 Dic'hallus eo niverifi resis niver an dud o deus kollet o buhez,
 111 5.000 marteze. Poblafisoù a-bezh o deus kollet pep tra, hag a zo di-
 111 c'houdor e yenijenn ar goañv.
 111 Toennoù-mor dirollet gant ar c'hren-douar a redas a-dreuz ar Mor
 111 Habask betek Hawaii, Zeland-Nevez, Japan hag aod kornog Norzamerika.
 111 Ar gwagennoù, dezho e lec'hioù 'zo ouzhpenn 10 m. a uhelder, o doa
 111 ruihet gant un herr a 600 Km/eur, a lavarar. Kalz a zistruj a voe
 111 graet.
 111 An douar a zalc'has da grenañ e Mezheven, o hadañ ar spont dre
 111 Vro-Chili.

EN EC'HONDER 111

AR "SPIER-OABL" : D'ar 24 Mae e voe taolet gant an Amerikaned "Midas" pe ar "Spier-Oabl", un adplanedenn 2 donenn 1/4. Kefridi ar "Spier-Oabl" eo reññ keloù eus bannadelloù. Pa sav ur vanadell er vann, e vez graet ur golonennad wrez gant an ardivink-bannañ e-pad war-dro 5 munutenn. Ar golonennad-se eo a vefe merzet gant an adplanedenn, ha kemenn kaset diouzhtu a-zivout al lec'h-bannañ ha treug ar vannadell.

```

-----
---  A M A Ñ  H A G  A H O N T  ---
---  |||      |||    |||    |||    |||  ---
---  |||      |||    |||    |||    |||  ---
-----

```

EUZHADENN LOC'H RIBH : E kreizig-kreiz Iwerzhon, en hanternoz da gêr Ath Luain (brudet dre he c'haslec'h-radio), ez eus ul lenn gaer anvet Loc'h Ribh, treuzet gant ar stêr Sionna : 25 Km. a hed, 11 Km. a dreuz en ur poent, leun a enezennoù bihan, warno dismantrou savadurioù relijiel eus an amzer gozh. Ne oa brudet betek bremañ nemet gant al lazhet-aerien a ya di da bakañ bekeded ha pesked all.

E miz Mae diwezhañ, tri beleg eus Dulenn a oa o lazhet en ur vag war al lenn, pa weljont, war-dro 9 eur 1/2 en abardaez, un 30 m. bennak diouto, un euzhadenn : he fenn hag he gouzoug a zeue er-maez eus an dour, ha pelloc'h e spurmantet unan eus gwalennoù he c'horf. Etre ar walenn-se hag ar penn e oa 2 m. Ar penn a oa strizh, ar walenn ken tev ha korf ur pikol eog. Unan eus ar veleien en doe amzer da dresañ ur vraskeudenn eus al loen war du-gin ur golo-lizher.

An dud a vev war ribl al lenn hag en enezennoù n'o deus biskoazh gwelet netra heñvel. Hogen warlene, daou Saoz, a oa o lazhet eno, a voe tapet o linenn ha stlejet o bag gant un dra bennak war-hed un nebeut kilometradoù. Hevelep tra a c'hoarvezas 30 vloaz 'zo gant un den eus ar vro. Hervez ur vojenn gozh, e veve e strad al lenn un euzhadenn a zebre an neuerien a-wechoù.

KRAPERIEN-VENEZIOU : E dibenn miz Mae e voe tizhet lein Menez Everest gant tri Sinaad diouzhtu an hanternoz. Ur bagad Indeziz, a glaske krapañ diouzhtu ar c'hreisteiz, a voe harzet gant ur skouflad.

Ur bagad Suised a bignas betek lein Menez Dhaulagiri, un 300 Km. diouzhtu Menez Everest, 26.795 troatad a uhelder, an uhelañ eus ar menezioù na oa ket bet tizhet o lein betek-hen.

UN ARM NEVEZ : Hervez ur gelaouenn amerikan, emañ skiantourien Rusia hag ar Stadoù-Unanet o labourat war un arm nevez, gwashoc'h c'hoazh eget ar vombezenn H. Ur vombezenn neutron eo, a c'hellfe lazhañ tud hep distrujañ an tiez nag ar mekanikoù. Skignañ a rafe ur skin yavrus, galloudusoc'h eget re ar vombezenn H. Hogen ne vefe ket a adkouezhadennoù tro-war-dro.

GERIADUR ISTOREL AR BREZHONEG, gant Roparz Hemon, embannet a gaieroù 100 pajenn, a c'hell bezañ rakprenet : 2 gajer 12 LN, - 5 kaier 30 LN. CCP.PARIS 16-093-13, Dr.G.Etienne, Maen-ar-Ya, Châteaulin.

111
111
111
111
111
111
111

AL LORZIF

MUIOC'H
A-ZIVOUT
MILDIU

111 An teir pe beder sizhun sec'hor hon eus bet adalek Pask a zo bet
111 a-walc'h evit degas mildiou war va avalenned. Warlene ne oa ket deuet
111 kent kreiz an hafiv. Disoñjet em boa e teu ar c'hleñved-se gant an
111 hinon, dreist-holl pa vez, evel em liorz, douar skafiv dindan ar gwez.
111 Unan eus va zeir avalenn vras a zo eus ar ouenn "Beauty of Bath",
111 hag a vleufiv abred. Koulz ha tremenet e oa he bleufiv pa'm eus taolet
111 kont e oa gwennaet lod eus he delioù. An div wezenn all a oa e-kreiz o
111 c'hlod, golet-holl a vleufiv, ha gant an amzer gaer a rae, e trawelen
111 un eostad puilh ...

111 Ar mildiou a vir ouzh ar frouezh da stagañ. Daoust hag e oa mildiou
111 ar greunennoùigoù gwenn-se ouzh troad ar bleuniennoù ? Pe vioù laou
111 glas ? Delioù krommet a oa ivez, pezh a zisklerie un enebour disheñvel
111 diouzh ar mildiou. O sellout pizh, em eus diskoachet un nebeut laou
111 glas, diheverz war du dindan an delioù.

111 Ne oa ket da zaleañ. Da gentañ e oa din talañ ouzh ar "c'hlizhenn".
111 Arabat e oa din louzaouif gant raz-soufr evel diagent, pa ne oa ket
111 digoret c'hoazh ar broisoù bleufiv. Displeget em eus ez eus gouennoù
111 kizidik ouzh ar soufr, "Tekenn Vazon" en o zouez. Ha n'on ket sur
111 c'hoazh peseurt goue. eo an div wezenn all. (Edont el liorz kent
111 din dont amañ). Tanavaet em eus ul louzoù anvet "Karathane", aozet
111 a-ratozh evit dizarbenn ar mildiou. Ha dav dezhi gant ar riboul !

111 Ne oa ket kalz avel, ha fiziet em eus ne zeuje ket da wir rakjed
111 an oablourien, o lavarout e raje glav en abardaez ! Koll amzer a rafed
111 o tifruañ ha glav o tont dindan 12 pe 18 eur. Rak amzer a rank al
111 louzoù evit gwastañ al louedennoù.

111 Ar bodouigoù hag a oa taget-kalz am eus kavet gwell o zroc'haf,
111 hag o zaolet em eus en ur pod-lastez. Gwelet e vo a-benn eizhtez pe
111 bemzektez ha n'em eus ket kemeret va arbennoù re ziwezhat.

111 Abaoe ur pennadig ez eus skourradoù glav. Gant na vezint ket
111 puilhoc'h ne riskl ket ar sper-bleufiv en div wezenn diwezhat. An avel
111 ivez a zo habask a-walc'h betek-hen.

111 Unan eus an avalenned a oa treutik a-walc'h, he skourroù o
111 kreskiñ a-dreuz, he ruskenn tarzhet e meur a dakad, hag er skarroù
111 koulz hag ouzh troad ar c'huchennadoù delioù ur stoubenn wenn kil-
111 pennek en desped d'al louzoù a strinken outi : darbet e voe din diskar
111 ar wezenn meur a wech. Ar stoubenn a rae deur din. Da gentañ e soñjen
111 e oa ur seurt laou, a reer anezho laou glas gloanek. Harzet he deus
111 avat ouzh al louzaouennoù a-enep amprevaned. Argrediñ a ran bremañ ez
111 eo ur seurt mildiou neudennek hag a dag ar gwiadoù en diabarzh, hag a
111 zo en abeg a se diaes-tre da zicuennañ. Ken gwanaet e oa ar wezenn ma
111 ne daolas nemet un hanter dousenn pennoù bleufiv, hag int holl gaonac'h
111 ma tiskonter ur gwidoroc'h, a chomas hourzet pa voe deuet da vent ur
111 graoñgelvezenn.

111 Krennañ a ris an holl skourroù kilweet ha blin, ha goleif ar
111 skarroù gant pentur plom gwenn. E-pad ar goañv em eus luduet en-dro
111 d'ar c'hef gant sulfatenn gali, hag a dle bezañ lañsus d'ar c'hoata.


111 Plijadur am eus bet o welout broisoù bleufiv o tiwanañ hag o
111 tigeriñ diouzh an druilh an nevez-amzer-mañ. Kennerzhet eo bet ar

wezenn. Dav e vo din reif fosfatenn dezhi ivez, evit ma ray gwelloc'h gwrizioù. 111

Div avalenn, ur brunenn hag ur berenn yaouank am eus plantet e-pad ar goañv. Louzaouet em eus anezho, goude krennañ o skourroù evit o stummañ gwelloc'h. Ar berenn hag unan eus an avalenned o deus taolet bleuñv. Graet em eus diouzh an ali arboellañ ar gwez pa vezont yaouank, ha mirout outo da zougen frouezh. Da gentañ e rankont ober o c'hresk ! Dougen frouezh, evel dougen bugale, a denn kalz war an nerzh. Lamet em eus eta o bleuñv diganto. 111

ALAN HEUSSAFF 111

15.5.60 111



S K R I D O Û N E V E Z
=====

SKOL, niv.10, Mezheven 1960, "AR C'HEMBRAEG HAG AR SKOL", gant an Ao. A.Ar C'halvez. - Trimiziek. Priz an niverenn : 4 LN. - Koumanant-bloaz : 10 LN. - CCP.RENNES 1911-06, Revue SKOL, Plouézec, C.d.N. 111

Unan c'hoazh eus ar studiadennoù resis bet roet dimp gant SKOL, gant taolennoù e-leizh hag ur gartenn, savet diwar dielloù ha gant harp Kembreiz o deus labouret war an dachenn. Pa gefverier pezh a vez graet evit kelennerzh ar yezh vroadel e Kembre gant ar pezh a vez graet e Breizh, e verzer diouzhtu gant pebezh poell ha pebezh parfeted e pleustrer e Breizh-Veur war gudennoù ar skol, - hag ivez pebezh frankiz a vez lezet gant ar pennadurezhioù lec'hel evit ren deskadurezh ar yugale. E Breizh e vezomp techet da arguziñ a-raok enklask, ha strobellet omp gant lezennoù ha reolennoù graet e Pariz hep teurel pled ouzh ezhommoù hor bro. Studiaden an Ao.Ar C'halvez a ya don, ha pleustriñ a ra, n'eo ket hepken war labour ar skol, hogen ivez war an endro : ar vuhez relijiel, kevredigezhel hag arboellerezhel. Lennet hag adlennet e tle bezañ gant holl stourmerien hon Emsav. 111

HOR YEZH, adniverenn 1, Mae 1960, "YEZHADUR BERR AR C'HERNEVEG", gant Goulc'hen Pennaod. - Trimiziek. Koumanant-bloaz : 10 LN. CCP.RENNES 1240-22, Mlle J. Queillé, 47, rue Notre-Dame, Guingamp. 111

HOR YEZH he deus divizet embann hiviziken, div wech ar bloaz, kaieroù evit deskifi ar yezhoù keltiek. Ar c'haier-mañ, ennañ 44 a bajennoù liesskrivet, a zo ur yezhadur berr eus ar c'herneveg, aozet diwar skouer "Yezhadur Berr ar C'hembraeg" gant Abeozen, bet embannet e 1942. 111

Ar yezh taolennet amañ a zo ar c'herneveg-krenn reizhekaet gant Morton Nance. Un daolenn sklaer eo, a roio d'ar studier un alberz eus ar yezh keltiek tostañ d'ar brezhoneg. Heñchañ a c'hell ar re a venno mont donoc'h er studi-se. 111

pe da ledañ o levezon warni pa ne c'hellent ket aloubiñ. 111
 Ar C'hallaoued hag ar Saozon eo a stourmas muiañ d'ober o mistri 111
 er broioù poblet gant Arabed. 111
 E 1535 e oa bet sinet etre Bro-C'hall ha Turkia pezh a anver 111
 "Kapituladurioù", o reiñ frankiz d'ar C'hallaoued da genwerzhañ en 111
 douaroù dindan beli an Nor Dreist. Kapituladurioù a voe graet ivez 111
 gant ar Saozon e 1580. Er 17-vet hag en 18-vet kantved e voe diazezet 111
 konsuled saoz ha gall, dreist-holl e Siria hag en Egipt. 111

EGIPT

E 1798, un arme c'hall, Napoleon Bonaparte en he fenn, a zouaras 111
 en Egipt. N'eo ket gwall sklaer petra e teue ar C'hallaoued d'ober eno. 111
 Distabilaat galloud ar Saozon er Reter hep mar. A-berzh gouarnamant 111
 Pariz, c'hoant d'en em zizober diouzh Bonaparte. A-berzh Bonaparte, 111
 c'hoant da zispenn roudoù Aleksandr Veur. Ar C'hallaoued a faezhas an 111
 Durked hep poan, en em ziazezas er vro, hag a voe kaset kuit e 1801 111
 gant ar Saozon hag an Durked unanet. 111

Bonaparte en doa klasket lakaat Arabed Egipt da "genlabourat" 111
 gantañ a-enep o mistri an Durked. En aner : an Arabed, sujet d'an 111
 Durked abaoe hir amzer, o doa kollet pep emskiant vroadel. Ha kouls- 111
 koude, aloubadenn ar C'hallaoued a verkas derou emrenerezh Egipt. 111

Un ofiser en arme durk, Mehemet Ali (1769-1849), a Vro-Albania 111
 war a greder, a zeuas, dre ijin ha dre itrik, da vezañ mestr en Egipt, 111
 gwech a-du gant an Durked, gwech a-enep dezho. Galloudoù Europa a 111
 viras outañ da gemer Istanboul, hogen anavezet e voe evel "Kediv", pe 111
 rener peuzdishual diouzh beli ar Sultan, en Egipt. Gwellaat a reas al 111
 labour-douar, dreist-holl gounidigezh ar c'hotoñs. Digeriñ a reas 111
 skolioù. Kas a reas studierien da Europa. Reiñ a reas da Egipt, en ur 111
 ger, stern ur Stad arnevez. 111

En eil hanterenn an 19-vet kantved, e kreskas c'hoazh pouez Egipt 111
 e-keñver politikerezh ha kenwerzh Europiz. Ar Saozon a savas hentoù- 111
 -houarn. Ar C'hallaoued a gleuzas kanol Suez, a voe digoret gant an 111
 impalaerez Ujani e 1869. Bro-Saoz a glaskas diouzhtu lakaat he c'hraban 111
 war ar ganol, pezh a reas e 1875, pa brenas Disraeli un darn vras eus 111
 ar c'henlodennoù digant ar C'hediv. E 1882, goude un emsavadeg en 111
 Aleksandria, e voe kaset un arme saoz "evit lakaat urzh". An arme saoz 111
 a chomas betek 1947 ! 111

SOUDAN

Bro-Soudan, er c'hreisteiz da Egipt, a oa bet aloubet ha perc'h- 111
 ennet gant Mehemet Ali. E warlerc'hidi o doa kaset Europiz da velestriñ 111
 ar vro-se. E 1883 e tarzhas un emsavadeg vras, renet gant Mahomed 111
 Ahmed, ar "Mahdi". Ar jeneral saoz Gordon, kaset da vougañ an emsav- 111
 adeg-se, a voe muntret e Kartoum e 1885. Ar "Mahdi" ne voe trec'het 111
 nemet e 1898, pa adkemerar ar Saozon Kartoum, dindan ar jeneral 111
 Kitchener. (Etretant o doa klasket ar C'hallaoued astenn o galloud 111
 betek an Nil, o tizhout Fachoda, er c'hreisteiz da Gartoum, e 1898, 111
 da vezañ dilojet ac'hano gant Kitchener). Diwar neuze, ha betek 1956, 111
 e vanas Bro-Soudan etre daouarn ar Saozon. 111

Emsavadeg ar "Mahdi" a oa relijiel, tamm ebet broadel. Spered ar 111
 vroadelezh ne oa ket dihonet c'hoazh. 111

===== 111

" B O U R D H A F A R S " "

AN INTANVEZ PAOUR (Kernev-Veur)

111 En ur barrez a Gernev-Veur e veze aozet ur gouel gant ar person
111 da Gala-Genver diouzh an noz. Bez' e oa c'hoarioù, sonerezh ha kaniri.
111 Roet e veze ivez da zebriñ ha da evañ. Ret e oa prenañ ur bilhed evit
111 mont.

111 Er barrez-se e veve un intañvez kozh-kozh, anvet Maria. Maria a
111 oa anavezet ha karet gant an holl.

111 Ur wech, da Zeiz ar Bloaz, e teuas un den d'he gwelout. An den-se
111 a vourre en traoù kozh. Goulennata a eure Maria diwar-benn hec'h
111 eñvorioù yacuankiz. En ur vont kuit, e lavaras d'an intañvez :

111 - Ha mont a reot-hu, Maria, da c'houel ar barrez fenozh ?

111 - Siwazh, - eme Varia, - n'eo ket ar c'hoant a vank din da vont.

111 Met n'em eus ket arc'hant da brenañ va bilhed.

111 An den a roas dezhi kerkent an arc'hant a oa ret.

111 Damc'houde e teuas merc'hed aotrou ar c'hastell da welout Maria.

111 - Maria, - emezo, - ha plijout a rafe deoc'h mont d'ar gouel

111 fenozh ?

111 - Ya sur, - eme Varia.

111 - Ma ! Dalit arc'hant da brenañ ho pilhed.

111 Ne oant ket aet mat er-maez eus an ti, ma teuas an aotrou person.

111 Hemañ a roas d'an intañvez ur bilhed evit netra.

111 - Aotrou person, - eme Varia, - marteze ne c'hellin ket mont.

111 - Ma ne c'hellit ket mont, - eme ar person madelezhuz, - gwerzhit

111 ho pilhed da unan bennak.

111 Maria a werzhas ar bilhed. D'an abardaez, e voe koulskoude e-
111 -touez ar re gentañ dirak dor ar sal.

111 - O Maria, - eme an den a oa eno o werzhañ bilhedoù, - deuit tre

111 da azezaf. N'hoc'h eus ket ezhomm da baeañ.

111 - Bennozh Doue deoc'h, aotrou, - eme Varia.

(Aozet diouzh ur pennad gant Gwynfrewy, e niv.70

AN LEF KERNEWEK, Hañv 1960)

111 AN LEF KERNEWEK a zo ar gelaouenn nemeti e kerneveg penn-da-benn.

111 Trimiziek. Koumanant-bloaz : 6s. pe 4 LN : 16 Trevu Rd., Camborne.

AR VATEZH NEVEZ (Sina)

111 Ur vatezh nevez deuet e ti un den pinvidik a voe gourc'hemennet
111 dezhi, da geñver Gouel al Leternioù, astenn un deltenn gotoñs el
111 liorz hag ober te, dezhañ da vont da evañ dindan an deltenn.

111 P'he devoe sentet, he mestr a c'houlennas outi :

111 - Ha graet hoc'h eus an dra-se biskoazh ?

111 - N'em eus ket, - emezi.


111 - Ho mestr kozh, moarvat, ne oa ket un den cheuc'h evelton, a

111 car ober an traoù war an ton bras.

111 - O nann, ne oa ket, - eme ar vatezh. - Da geñver Gouel al Let-

111 ernioù, ne rae nemet lakaat astenn un deltenn seiz alaouret hag evañ

111 gwinn kozh.



dimp chom war-lerc'h war an dachenn-se ivez.

Sonioù, kantoù ha kantoù anezho, a vez kanet dre ar bed, e pep yezh, gant an holl. Nebeut, avat, a zo bet lakaet e brezhoneg. Ret eo hen ober, ma ne fell

BAGEERGAN (Santa Lucia) : Sul mare luccica l'astro d'argento ...

1.
Goustad dindan al loar,
War c'horre boull al lenn,
Hor bagig skañv a ruz,
Kompez en aezhenn.

DISKAN

Amañ eo brav ar bed,
Hag e tisoñjer,
En noz evurus,
Trubuilh ha preder.

2.

Stered a bar en oabl,
Stered a bar en dour,
Ledet dirak hor sell
'Vel ur melezour.

3.
Ahont e kousk an aod,
Ahont e hun ar gwez.
Setu dre-holl o tont
Eur ar garantez.

4.

Evit ur predig berr,
E palez kaer an noz,
E tigor 'vit an dud
Dor ar baradoz.

5.

A-hed ur vuhez kriz,
Ez ene paour, o den,
Eñvor seurt nozvezh hud
'Vano da viken.

GLAV 'RA, GLAV 'RA, BERJERENN

1.

Glav 'ra, glav 'ra, berjerenn,
Ar c'houmoul a zo du,
Amañ dindan ar wezenn,
'Kouezh an dour a bep tu.
Sellit en oabl al luc'hed,
Hag an hent leun a bri.
Dastumit prim ho tefived,
~~Ha deomp e-barzh an ti.~~

An heol a bar a-nevez.
Amzer c'hoazh da lakaat
Ur pokig a garantez
War ho peg o kuitaat.

2.

Ho tornig a zo sklaset,
Me 'wel ez oc'h skuizh-bras,
Azezit war an oaled,
Ho skoazig ouzh va skoaz.
Gwellaat a ray marteze.
Ya, gwellaat a ray klok,
Berjerenn goant, dizale,
Mar roan deoc'h ur pok.

3.

Na spontit ket, berjerenn :
A-benn arc'hoazh ez in
Davet ho tad d'ho koulenn
Da vezañ pried din.

LUSKELLEREZH : Guten Abend, gute Nacht, mit Rosen bedacht ... (Brahms)

1.

En ho kavell, kouskit yac'h,
O rozenn a blac'h !
An neñv da reiñ deoc'h
Levenez ha peoc'h.
Kouskit flour, kouskit c'hwek,
C'hoarzh un ael war ho peg !

2.

Dre ho hufivre, nijit skañv,
O rozenn an hafiv !
D'ar vro ma n'eus bec'h,
Nag anken neblec'h.
Kouskit sioul, kouskit kloz,
Aelig dous, 'hed an noz !

PEP GWIR MIRET-STRIZH : Skrid brezhonek ar sonioù-mañ ne c'hell bezañ moulet, liesskrivet, lakaet war bladennoù nag embannet e doare ebet hep aotre. Evit kaout aotre, skrivañ d'AR BED KELTIEK.

Mar plij deoc'h kaout kanaouennoù war AR BED KELTIEK, skrivit dimp, hag e vo embannet re all en niverennoù da zont.



m
m
o

Hep poan ebet, hep torr-penn,
Forzh pelec'h, e giz pe c'hiz,
Pep den a c'hell deskiñ lenn
BREZHONEG EEUN en ur miz.

KANNAD AR YAOUANKIZ - 41

111 **PLADOU-SALADENN** Mamm Jermina an hini
111 eo a reas an droug.
111 Re a fougé a oa

111 enni. Tri miz a-raok an eured, e veze klevet, n'eus forzh pelec'h, en
111 he zi, e tiez he mignoned, er staliou, er marc'had, dirak an iliz
111 goude an oferenn :

111 - O ya, Jermina a zo o vont da zimeziñ. Ur paotr a-zoare. Me lavar
111 deoc'h, ne vint ket paour. Kavet o deus un ti dija. Etre ar pezh a zo
111 roet dezhañ gant e dad hag ar pezh a roomp-ni, va fried ha me, d'hor
111 merc'h, ne vanko netra e-barzh an ti.

111 - Ne vanko netra ?

111 - O nann. Bez' o deus arrebeuri, dilhad, listri, loaioù, ha me oar
111 petra c'hoazh. En deiz all hon eus graet ar gont. Na vanke netra,
111 netra, nemet, - a lavare o c'hoarzhin, - ur plad-saladenn marteze !

111 Pemzek deiz a-raok an eured, e teuas Herried da welout Jermina.

111 Herried oa he gwellañ mignonez, bet ganti e skol ar seurezed. Ur pakad
111 a oa ganti.

111 - Mat ! - eme Herried o lakaat ar pakad etre daouarn Jermina, - ne
111 ouien ket petra a raje plijadur dit. Prenet em eus dit ur plad-saladenn

111 - Dres ar pezh a vanke ! - eme ar vamm, a oa eno.

111 Ar plad a voe kavet brav, hag Herried trugarekaet mil gwech.

111 Antronoz e teuas Tonton Job. Tonton Job a oa paour-razh. Ur pakad
111 a oa gantañ ivez.

111 - Me a felle din, - emezañ da Jermina, - reiñ dit un dra bennak.

111 N'on ket evit prenañ traoù kaer. Met an draig-mañ marteze a vo talvoudus

111 Hag e tisc'hreas ar pakad e-unan. Bez' e oa ur plad-saladenn e gwer

111 - Mat e vo evit ar pemdez, - eme mamm Jermina pa voe aet Tonton

111 Job kuit.

111 Un hantereur goude e teue tud adarre, ar wech-mañ Tintin Emili hag
111 he gwaz. Ar re-mañ a oa pinvidik.

111 - Klevet hon eus, - eme Dintin Emili, - he deus Jermina dija kement

111 he deus ezhomm. Koulskoude hon eus prenet dezhi un dra da zerc'hel soñj

111 ac'hanomp. Un dra gozh eo : porselen Limoges. Taolit evezh o tigeriñ

111 ar pakad.

111 Ar pakad a oa bihan. A-boan o doa lavaret ar voereb heg he fried
111 kenavo ma voe digoret. Ur pladig-saladenn e oa.

111 - Mat ! - eme ar vamm. - N'eus ket tostoc'h d'o gwenneien eget an
111 dud pinvidik ! Ur servij te, pe ur servij kafe o dije gallet reiñ dit !

111 - O mamm, - eme Jermina, - koant eo. Marteze e vo mat da lakaat
111 bleunioù.

111 N'eo ket diaes ober roll ar pakadoù a voe degaset pe gaset d'an
111 ti e-pad an div sizhun-se. Ar roll a zo eeun : plad-saladenn, "idem",

111 "idem" ... hag "idem" betek ar fin.

111 Bez' e oant a bep liv, a bep ment, a bep stumm, darn a c'hiz kozh,

darn a c'hiz nevez, e gwer, e porselen, e feilhañs. Unan zoken a oa e 111
 koad, graet gant Ifig, ur martolod kozh a zeue da labourat al liorz, 111
 hag a ouie ober traoù burzhudus gant un tamm koad hag ur gontell. 111
 Tri fakad warn-ugent en holl. Ya, tri flad-saladenn warn-ugent ! 111
 - Unan c'hoazh, - eme Jermina o huanadif, - hag hor bo div 111
 zousenn. 111

Ha dres, pa zeuas Gustav, ar paotr yaouank, daou zevezh a-raok an 111
 eured, e oa ur pakad gantañ dindan e vrec'h. 111
 - Me n'em eus ket kalz a vignoned, - emezañ. - Met paotred va 111
 burev o deus roet din an dra-mañ. N'eo nemet ur plad-saladenn. 111

Mamm Jermina n'he doa ket lavaret ar wirionez penn-da-benn. Kalz 111
 traoù a vanke c'hoazh e ti he merc'h. Setu perak e lavaras da Jermina 111
 ha da C'hustav : 111

- Selaouit ! Re a draoù am eus da brenañ deoc'h c'hoazh. Ne rin 111
 ket eta re a zispign deiz an eured. E-lec'h aozañ ur pred kaer d'an 111
 dud, ne rin nemet ul "lunch". Ha me bromet deoc'h e vo saladenn ! 111

War an daol vras, er sal-debriñ, e oa bet lakaet ar pevar warn- 111
 -nugent a bladoù-saladenn. Bez' e oa letuz, sikorea, tomatez, kokombrez, 111
 endivez, avaloù-douar, artichaod, kaol gwenn, kaol ruz, kaol-fleur, 111
 asperjez, gant eoul ha gwinegr, gant sitroñs, gant maionez. Bez' e oa 111
 saladenn rusian, saladenn riz, saladenn besked. Bez' e oa saladenn 111
 frouezh. Pe e plijas pe ne blijas da dud an eured, ne ouzon ket. E-giz- 111
 -se e oa atav. 111

An abardaez a oa deuet. Gustav ha Jermina a oa aet en o beaj- 111
 -eured. Ne chome en ti nemet tad ha mamm Jermina. 111

Tad Jermina, ret eo anzav, a oa tommet-mat d'e benn. Rak ouzhpenn 111
 saladenn e oa bet banneoù, evel ma c'hellit kredif. Sec'hed en doa 111
 c'hoazh. Hag eñ mont d'ar sal-debriñ da welout ha ne chome ket ur 111
 voutailh hanter leun. 111

Mamm Jermina, eus ar gegin, a glevas un trouz heñvel ouzh ar 111
 c'hurun hag ur barrad-grizilh da heul. An den paour en doa diskaret an 111
 daol. Edo ar pladoù-saladenn war al leur, torret, bruzunet holl. Betek 111
 plad koad Ifig a oa faoutet e tannoù. 111

- Siwazh ! - a soñjas mamm Jermina o sankañ en he gwele, skuizh- 111
 -marv, - arabat din disoñjal prenañ dezho ur plad-saladenn. 111


ROPARZ HEMON 111

(Pep gwir miret-strizh) 111

***** 111
 Na c'hortozit ket da goumanantif pe da lakaat ho mignoned da 111
 goumanantif d' AR BED KELTIEK 111
 Plijadur ho po evit hoc'h arc'hant. 111

Kasit 7 lur nevez da : 111
 CCP.RENNES 1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue de Dixmude, Brest. 111

***** 111
 C.C.P.P. N°36.242. 111
 Le Gérant : Mlle Y.Martin, 21, rue de Dixmude, St.Marc, Brest. 111
 Ronéotypé par Rincazaux, 1, rue Alain Fournier, Brest. 111



Revue mensuelle-N°20-Août 1960

Kelaouenn vizek-Niv.20-Eost 1960

Abonnement annuel : 7 NF.

Koumanant-bloaz : 7 LN.

CCP.RENNES 1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, Brest.

=====

111 XXX

111 PROFOU : An Ao.A Ar C'halvez, 3 LN. - An Dim.M.Gourlaouen, 3 LN.

111 - An Dim.M.J.Marot, 10 LN. - An Ao.Pinaod, 3 LN. - An Ao.Souffes

111 Despre, 5 LN. - An Ao.Le Chapelier, 3 LN. - En holl : 27 LN.

111 Bennozh Doue d'ar brofourien !

111 XXX

B O D A D E G V E U R 1 9 6 0

111 BODADEG VEUR SKOURR BREIZH AR C'HENDALC'H KELTIEK a vo graet e

111 Keresperz, Louaneg, Bro-Dreger, d'ar Yaou 8 a viz Gwengolo.

111 Emgav da 10 eur.

ROLL-LABOUR

- 111 1) Envel Kadoriad ha Sekretour ar Vodadeg Veur.
- 111 2) Lenn danevellskrid Bodadeg Veur 1959.
- 111 3) Danevellskrid Teñzorier ar Skourr.
- 111 4) Danevellskrid Kadoriad ar Skourr.
- 111 5) Envel ar Poellgor evit 1960-63.
- 111 6) Ragaozafi labour ar Skourr e 1960-61.
- 111 7) Kudennoù all.

111 Notenn 1. - Ar Vodadeg Veur a zo digor d'an holl izili hag

111 harperien. Digor eo ivez d'ar vrezhonegerien n'int nag izili nag

111 harperien, gant aotre Kadoriad ar Vodadeg. N'eus nemet izili ar Skourr,

111 avat, a c'hell votiñ.

111 Notenn 2. - Ar Vodadeg Veur a vo graet war-lerc'h Retredig an

111 Unvaniezh Speredel, hogen, anat eo, distag diouti.

111 Ar re a fell dezho mont a dle koulskoude lenn evezhiek an embann

111 a zeu da heul, a-berzh aozerien ar Retredig.

111 Notenn 3. - Hervez Reolennoù-Diabarzh ar Skourr : "Er Vodadeg

111 Veur, pep ezel en deus ur vouezh. Un ezel evezant a c'hell kargañ un

111 ezel all da vouezhif en e anv. Ret eo dezhañ, avat, kas kemenn eus an

111 dra-se dre skrid da Sekretour ar Poellgor, pemzek devezh da vihanañ

111 a-raok devezh ar Vodadeg Veur".

111 O vezañ m'eo kouezhet klañv ar Sekretour, al lizhiri a dleo bezañ

111 kaset hevlene da Roparz Hemon, 1-A, Leeson Park, Ath Cliath (Eire)

111 a-raok ar 25 a viz Eost.

111 Kadoriad Skourr Breizh ar C'hendalc'h Keltiek

111 ROPARZ HEMON

111 12 Gouere 1960

=====

RETREDIG AN UNVANIEZH SPEREDEL

111

111

111

111

111

111

Ur Retredig a vo graet gant an UNVANIEZH SPEREDEL e Keresperz, Louaneg, Bro-Dreger, eus ar Merc'her 7 a viz Gwengolo, da 10 eur, betek ar Yaou 8, d'ar beure.

111

111

111

111

Ar re a fell dezho mont, koulz hag ar re a yelo da Vodadeg Veur SKOURR BREIZH AR C'HENDALC'H KELTIEK, d'an 8, a zo pedet da lenn an ali da heul :

111

111

Kas ar baperenn-mañ, leuniet (o varrennañ ha lemel kuit ar pezh na sell ket ouzhoc'h), ar c'hentañ ar gwellañ, d'ar chomlec'h-mañ : An Dimezell St.Gal de Pons, Keresperz, Louanec, C.duN.

111

111

111

111

(Ma ne fell ket deoc'h troc'hañ ho skouerenn eus AR BED KELTIEK, e c'hellit eilskrivañ, anat eo, war un tamm paper all)

111

111

111

111

DEVEZHIOU KERESPERZ 7-8 GWENGOLO

" 111

" 111

" 111

1^o Mont a rin da Retredig an Unvaniezh, d'ar 7.

" 111

Degouezhout a rin da ... eur.

" 111

Goulenn a ran bezañ lojet evit an noz eus ar Merc'her d'ar

" 111

Yaou, en ur gambr.

" 111

Degas a rin (N'em bo ket) ur sac'h-kousket (na) dilhad-gwele.

" 111

Kampañ a rin.

" 111

Goulenn a ran debriñ e Keresperz, da greisteiz, da noz.

" 111

En em zibab a rin evit va boued.

" 111

2^o Mont a rin da Vodadeg Veur ar Skourr, d'an 8.

" 111

Degouezhout a rin da ... eur.

" 111

Goulenn a ran debriñ e Keresperz da greisteiz.

" 111

En em zibab a rin evit va boued.

" 111

Respontit resis, mar plij.

111

111

Lavarit war un dro diwar-benn petra e plijfe deoc'h e vefe prezeget, pe evit devezh ar Retredig, pe evit devezh ar Skourr.

111

111

111

111

GERIADUR ISTOREL AR BREZHONEG, gant Roparz Hemon : B-BIVIDIK.

111

Liesskrivet. Embannet gant PREDER. Priz : 7,50 lur nevez,

111

CCP.PARIS 16.093-13, Dr.G.Etienne, Maen ar Ya, Châteaulin.

111

111

Diwezh al lizherenn B a vo embannet dizale.

111

Embannet e vo a gaieroù 100 pajenn.

111

Rakprenañ a c'heller 2 gaiet (12 LN.), pe 5 kaier (30 LN.)

111

111

111
111
111 X KENDALC' H KELTIEK X
111 X
111 X

111 Kendalc'h Keltiek 1960 a vo graet en Aberystwyth, Kembre, eus an
111 8 d'an 13 a viz Eost.

111 Karet hor bije embann roll ar C'hendalc'h en hon niverenn diwezhañ.
111 Hogen n'eo bet kaset dimp nemet e kreiz miz Gouere.

111 Lun 8 Eost, 18 eur : Ofis relijiel.

111 Meurzh 9 Eost : Beure. Prezegen-digerifi.

111 Endervezh : Tro d'al Liorzh-Dioren-Plant.

111 Abardaez : Sonadeg kembreat.

111 Merc'her 10 Eost : Beure : Prezegennoù ha Breutadeg a-zivout al
111 lennegezhioù keltiek a vremañ.

111 Endervezh : Tro dre vro Aberteifi.

111 Abardaez : Festival ar Yaouankiz Keltiek.

111 Beure : Ar sonerezh a vremañ er broioù keltiek.

111 Endervezh : Tro da Lenndi Broadel Kembre.

111 Abardaez : Festival etrekeltiek.

111 Gwener 12 Eost : Beure : Prezegennoù ha Breutadeg a-zivout an
111 arzoù-gwel hag an emsavioù yaouankiz er
111 broioù keltiek.

111 Endervezh : Breutadeg a-zivout levezon ar

111 c'helaouennoù hag ar skingaserezh war
111 sevenadurioù broadel ar Gelted.

111 Abardaez : Sonerezh gant sonaozourien a Gembre.

111 //////////////////////////////////////

AR MIZ

DRE AN DOUAR

111 MESK E BRO-GONGO : Soudarded kongoat en em savas d'ar 6 Gouere. Fellout
111 a rae dezho ma vije kresket o fae, ha dreist-holl ma vije kaset kuit o
111 ofiserien velgiat. Ar jeneral Janssen, a oa e penn an arme, a rankas
111 dilezel e garg. Dizurzh a voe e Kerleopold, hag e Thysville, 180 Km.
111 diouzh ar gêrbenn. N'eo ket hepken soudarded, hogen ivez polised hag
111 archerien en em savas. Europiz a voe taget. Kalz anezho a dec'has da
111 Vro-Gongo-Gornog pe da Angola.

111 An 8 a voe un devezh a spont evit an Europiz e Kerleopold. Bagadoù
111 soudarded emsavet a yae dre ar ruioù, o klask an dud wenn hag o kinnig
111 lazhañ an ofiserien a gavjent. Emglev a voe graet neuze etre ar
111 gouarnamant kongoat hag an emsaverien : an holl ofiserien a vefe holl
111 Kongoiz, ha ne vefe miret Europiz nemet da guzulieren.

111 D'an 9 Gouere, e teuas keloù grevus eus Bro-Gatanga, er reter.

111 Eno e oa bet taget Europiz gant soudarded kongoat, darn lazhet. Harz-
111 lammerien velgiat a voe kaset da Gerelesbed, kêrbenn ar rannvro. Re all
111 a voe kaset da Luluabourg, pelloc'h etrezek ar c'huzh-heol.

lll (eus ar broioù soviedek) war e lerc'h, o lezel dileuridi ar C'hornog
lll (Stadoù-Unanet, Breizh-Veur, Kanada, Frañs hag Italia) o-unan. Kudenn
lll an dizarmañ a voe lakaet gant ar Rusianed dirak ar Broadoù Unanet.

lll KARR-NIJ AMERIKAN DISKARET : Ur c'harr-nij amerikan RB-47 a oa aet d'ar
lll 1-añ Gouere diouzh diazezelec'h Brize Norton, Bro-Saoz, da ober un dro-
lll anavezadenniñ a-us morioù hanternoz Rusia, ha ne oa ket distroet. D'an
lll 11 Gouere (10 devezh goude !) ar Rusianed a roas da c'houzout e oa bet
lll diskaret ganto "a-us o dourioù broadel". Eus ar c'hwec'h den a oa e
lll bourzh, daou a oa bet saveteet hag a vije "barnet hervez al lezenn
lll soviedek en he strishañ". Notennoù-klemm a voe kaset d'ar Stadoù-Unanet,
lll da Vreizh-Veur ha da Norvegia. D'o zro, ar Stadoù-Unanet a gasas un
lll notenn enepklemm da Rusia, o lavarout e oa bet diskaret o c'harr-nij er
lll mor, war-hed 50 Km. da vihanañ diouzh an aod, hag o c'houlenn ma vije
lll roet o frankiz d'an daou nijer prizoniet. D'an 13 Gouere, e voe lakaet
lll ar gudenn gant Rusia dirak ar Broadoù Unanet.

lll KUBA HAG AR STADOÙ-UNANET : E diwezh Mezheven, gouarnamant Kuba a bakas
lll krog e purerezhioù eoul-maen ar gompagnunezh amerikan Texaco e Santiago,
lll war zigarez o doa nac'het ar renerien purañ "eoul ar gouarnamant" (da
lll lavarout eo, eoul deuet eus Rusia). D'ar 1-añ Gouere e voe paket krog e
lll purerezhioù ar gompagnunezh amerikan Esso hag ar gompagnunezh saoz-hag-
lll -izelvroat Shell. Hogoziak raktal e voe votet ul lezenn e Kongres Washing-
lll ton, o reiñ aotre d'ar Prezidant da zigreskiñ ebarzhadur sukr Kuba er
lll Stadoù-Unanet. Harz a voe lakaet gant Eisenhower war un darn vras eus
lll an ebarzhadur evit ar mare. Aotre a voe roet neuze da Brezidant Kuba
lll gant ar strollad-ministred da lakaat krog en holl vadoù amerikan en
lll enezenn diouzh ret.

lll Listri-eoul a gasas eoul-maen rusian eus ar Mor Du da Guba ! N'eus
lll ket, avat, a-walc'h a listri gant ar Rusianed evit kas kement a eoul ha
lll ma veze kaset eus Venezuela.

lll Rusia a lavaras prenañ ar sukr na vije ket gwerzhet d'ar Stadoù-
lll -Unanet, o kinnig bombezañ ar re-mañ, ma klaskjent emellout en aferioù
lll Kuba. Ar Stadoù-Unanet a respontas ne lezjent ket ar gomunourien da ren
lll eno. Ur c'hlemm graet gant Kuba a-enep ar Stadoù-Unanet dirak Kuzul
lll Surentez ar Broadoù Unanet a voe kaset gant ar re-mañ d'an 19 Gouere
lll dirak Aozadur Stadoù Amerika.

lll EMZIVIZOU-PEOC'H EVIT ALJERIA : Ar c'hentañ dileuridi ofisiel kaset gant
lll broadelourien Aljeria a zegouezhas e Bro-C'hall d'ar 25 Mezheven. Dont
lll a rejont gant ur c'harr-nij eus Tuniz. Ar c'harr-nij a zouaras en ur
lll c'horn eus aerborzh Orly, pell diouzh an engroez. Raktal e voe lakaet
lll an Aljeriz en ur viñsaskell, o c'hasas da brefeddi Melun. An emzivizoù,
lll graet e kuzh, a badas betek an 29. En deiz-se e voe embannet un notenn
lll a-berzh gouarnamant Frañs, o lavarout e oa bet roet da c'houzout d'an
lll dileuridi "penaos e c'helljed dere'hel kaozeadennoù evit echuif gant
lll enor an emgannoù." D'ar 4 Gouere, gouarnamant ar vroadelourien e Tuniz
lll a nac'he degemer kinnigoù ar C'hallaoued, o tiskleriañ e rankje o di-
lll leuridi kaout muioc'h a frankiz ma vijent kaset da Vro-C'hall.

lll KENNEDY DANVEZ-PREZIDANT ER STADOÙ-UNANET : Ar Senedour John F. Kennedy
lll a voe dibabet da danvez-prezidant gant an Demokrated e Los Angeles d'an
lll 13 Gouere. Kennedy n'en deus nemet 43 bloaz.

SKRIDOU NEVEZ

Ur pennad hir, leun a breder hag a gentelioù, skrivet-mat ivez,	111
"Katoligiezh ha Kultur", a ra danvez pouezusañ niv.16 AR BEDENN EVIT	111
AR VRO, Genver 1960. Da seveniñ c'hoant ar Vreizhiz katolik emskiantek	111
lakaat hor c'hultur da vleuniañ a-gevret gant ar Feiz, e vo ret dezho,	111
- beleien ha liked, - ober o labour o-unan (evel ma ranker ober war	111
bep tachenn all). Al labour a zo boulc'het-mat, rak AR BEDENN EVIT AR	111
VRO a zo an diazez, ar greizenn, a-unan gant troidigezh nevez ar Bibl	111
ha levrioùigoù embannet gant SKOL, hep kontañ studiadennoù BARR-HEOL.	111
N'on ket a-du gant ar re a glask e rannredennoù diforc'h diouzh an	111
Iliz an unaniezh etre Breizhegezh ha Relijion. Hogen kompren a ran o	111
displijadur gant beleien, leaned ha leanezed, ha kelennerien gatolik	111
diseblant-kaer ouzh hor Bro, - diseblant, pe washoc'h zoken.	111
Stagadenn vrezhonek LABOUR, Ebrel-Mae 1960, renet gant A.Toravel,	111
a zo leun a spered. "Deizlevr" Per Denez a zo un dra nevez, disheñvel	111
diouzh ar pezh a lenner e lec'h all.	111
E BARR-HEOL, niv.23, Mezheven 1960, ez eus evel boaz pennadoù	111
liesseurt, holl ken bev ha ken bev.	111
CELTIA, niv.3, Diskar-Amzer 1960, a ro dimp ur studiadenne a briz	111
war deiziadur Coligny.	111
Gourc'hemennoù da WANIG HA WENIG, niv.7, Mezheven 1960. En dro-	111
-mañ ez eus skeudennoù liesskrivet bravoc'h eget a-raok. Tamm-ha-tamm	111
e reomp hor mad eus ar gwellaennoù degaset el liesskrivañ (a zo galvet,	111
krediñ start a ran, da zistroadañ ar moulañ er bloavezhioù da zont).	111
Kannad KAMP ETREKELTIEK AR VREZHONEGERIEN, niv.31-32, Ebrel-	111
-Gouere 1960, a ro keloù eus ar c'hamp da vezañ dalc'het (a vo bet	111
dalc'het, pa zeuio al linennoù-mañ dindan sell hol lennerien) e	111
Plouenan.	111
AR VRO, niv.6, Mezheven 1960, eviti da vezañ dreist-holl e galleg,	111
a ra ul labour rekis. N'eus ket bet gwelloc'h abaoe marv STUR.	111
TREDE DISKULIADUR, niv.21, Mae 1960, a brezeg atav spiritigezh e	111
brezhoneg mat blaz Leon.	111
ROPARZ HEMON	111
AR BEDENN EVIT AR VRO : skrivañ d'an Dim.St.Gal de Pons, Keresperz	111
Louannec, C.d.N. - LABOUR : 2, rue de la Herse, St.Malo. - BARR-HEOL :	111
trimiziek, koumanant-bloaz 5 LN. CCP.91764-RENNES, Abbé La Clerc, rect.	111
Buhulien, C.duN. - CELTIA : 10 LN. evit 4 niverenn, CCP.RENNES 754-82,	111
J.Quatreboeufs, Merdrignac, C.d.N. - WANIG HA WENIG : trimiziek,	111
koumanant-bloaz 1,50 LN. CCP.RENNES 1705-96 Journal WANIG HA WENIG,	111
Plouézec, C.du N. - Kannad KAMP ETREKELTIEK AR VREZHONEGERIEN : skrivañ	111
d'an It.de Bellaing, 2, rue Pierre Le Gorrec, St.Brieuc. - AR VRO :	111
trimiziek, koumanant-bloaz 10 LN. CCP.NANTES 1493-79, J.Desbordes,	111
14, rue Colbert, Concarneau, Fin. - TREDE DISKULIADUR : skrivañ da	111
Rua Matias Aires (Consolação), São Paulo, Brasil.	111
KUZUL AR BREZHONEG	111
Kasit ur prc da GUZUL AR BREZHONEG, kreizenn ar	111
stourm evit ar Yezh : CCP.NANTES 1316-63,	111
L.Morvezen, 6, Avenue de La Gare, Concarneau.	111

SONEREZH

NOTENNADURH O RC'HANAOUENNOÙ

Darn eus ar c'hanaouennoù a embannomp war AR BED KELTIEK a zo war donioù anavezet, ha n'eus ket ezhomm d'o notenniñ evit al lennerien.

Re all, ayat, n'int ket anavezet e Breizh, pe mar dint anavezet, ez int tonioù un tamm re luziet da vezañ douget resis en eñvor tud ha n'int ket sonerien a vicher.

Ret eo eta o notenniñ. An notennadur boutin a gemer re a lec'h hag a zo diaes da liesskrivañ pe da voulañ. Eus an notennadurioù niverus dre lizherennoù pe sifroù, hini ebet ne blij dimp. An hini brudetañ, ar "solfa", a zo dispar da sonlenn, hogen diaes da c'hoari war ur piano pe ur benveg-sonerezh all.

Implij a reomp eta un notennadur nevez, eeun-kenañ, hanter hent etre an notennadur boutin hag ar re dre lizherennoù.

1) SKEUL AR C'HAN

SOL La Si Do Re Mi Fa Sol la si do re mi fa sol LA SI DO RE MI

(la = la an tonreizher)

2) UHELDED

d (=diezenn) e-lec'h al lizherenn diwezhañ a verk un notenn uhelaet : fd = fa uhelaet (lemm, diezenn).

b (= bemol) e-lec'h al lizherenn diwezhañ a verk un notenn izelaet : sb = si izelaet (blot, bemol).

Setu amañ, da skouer, ur skeulenn gromatek :

Do Dd Re Rd Mi Fa Fd Sol Sod la ld si do
do si sb la lb Sol Sob Fa Mi Mb Re Rb Do

Un notenn daouuhelaet a verker gant dd : ddd = do daouuhelaet.

Un notenn daouizelaet a verker gant bb : sbb = si daouizelaet.

3) HED

An hed a verker gant un arouez war-lerc'h an notenn :

= a verk ur grennenn

: fa=

: a verk ur wennenn

: fa:

- a verk un duenn

: fa-

' a verk ur grogegenn

: fa'

" a verk un hantergrogegenn

: fa"

) a verk ur balevarzhkrogegenn

: fa)

` a verk un notenn flastret (acciaccatura)

: fa`

+ a verk un notenn vresk evel ma kaver er sonerezh a c'hiz kozh (appogiatura)

: fa+

. a verk un notenn boentet

: fa:. fa-. fa'

^ a verk ur poent-ograou

: fa:^ fa-^

Da verkañ ur baouezenn ez implijer :	111
= : paouezenn dezhi hed ur grennenn.	111
: : - ur wennenn.	111
- : - un duenn.	111
' : - ur grogegenn.	111
" : - un hantergrogegenn.	111
) : - ur balevarzhkrogegenn.	111
: paouezenn hep talvoudegezh er rannvuzul.	111
Ar paouezennoù a vez poentet evel an notennoù.	111

Pa vez un heuliad notennoù, dezho holl un hevelep hed, e c'heller	111
o skrivañ stag-ouzh-stag :	111
solla' e-lec'h sol'la'	111
laSolFaSol" - la"Sol"Fa"Sol"	111
doremifa) - do)re)mi)fa)	111
fami` - fa`mi`	111
rbdo+ - rb+do+	111

4) AROUEZIOÙ ALL

/ a verk ur varrenn-vuzul.	111
// a c'heller lakaat evit echuiñ.	111
----- dindan notennoù a verk notennoù liammet : <u>faredo' do-re-</u>	111
. a-us al lizherenn gentañ a verk un notenn distaget . . .	111
(staccato) : Fa la	111
= a-us al lizherenn gentañ a verk diouzh ret =	111
un notenn sinkopet : re	111

EVEZHIADENN : O vezañ ma'z eus ur stroll-lizherennoù a-ziforc'h evit pep notenn (SOL diforc'h diouzh Sol ha diouzh sol, da skouer), n'eus ket ezhomm a alc'houezioù (alc'houez Sol, alc'houez Fa, h.a.) evel en notennadur boutin.

N'eus ket ezhomm kennebeut da lakaat sin an alc'houez, da lavarout eo, ar bemoloù pe diezennoù a weler e derou al linenn en notennadur boutin, ha n'int mat nemet da luziañ kanerien ha c'hoarierien (gwashañ si, evel ouzer, an notennadur boutin).

Dre se, n'eus ket ezhomm eus an arouez-adnaturif (biquadro).

Munudoù all a vo roet a-feur ma vo embannet kanaouennoù.

XX
 XX


Da heul e roomp div ganaouenn a dalvezo da skouer d'ar pezh a lavaromp uheloc'h.

Unan, "Karantez Den a zo Levenez Verr", sonerezh gant an Tad Martini, a zo anavezet dre-holl. Hogen an ton a zo un tammig luziet evit un darn vras eus ar ganerien. Setu perak e vez distummet peurliesañ.

Eben, "Ar Goañv a zo tremenet", beuregan alaman eus ar Grennamzer, a zo war un ton eeunik-eeunik, hogen n'eo ket anavezet, war a gredan, e Breizh.

KARANTEZ DEN A ZO LEVENEZ VERR

(G.B.Martini)



6/8

111 Do'/Fa-.Sol-./la-.la-la'/sb-sb'la'Sol'la'/Sol-.Sol-

111 Ka--ran-tez den a zo le-ve-----nez verr,

111 Do'/Re-.Mi-./Fa'Sol'la'Re'Sol'sb'/la-.Sol-laSolFaSol)/Fa-.

111 Hag an--ken don a bad a-hed ar vu-----hez.

111 Fa'/do-.re-./do're'mi'fa'mi're' /do-.sb-./la:./

111 Ro--et em eus va holl ene d'ur ve-----strez.

111 /si-.do- dd'/re-mi'fa'mi're'/do-.si-si"do"/do-.do-^

111 Ha trumm ez a di-ga----nin hep ur ger.

111 Do'/Fa-.Sol-./la-.la-la'/sb-sb'la'Sol'la'/Sol-.Sol-

(1)

111 Ka--ran-tez den a zo le-ve-----nez verr,

111 Do'/Re-.Mi-./Fa'Sol'la'Re'Sol'sb'/la-.Sol-laSolFaSol)/Fa- --./

111 Hag an--ken don a bad a-hed ar vu-----hez.

111 /lb-. lb- lb'/Sol-.Sol-Sol'/lb-.lbdo'lb'/Sol-.Sol-

111 "Vel dour ar stêr, hag a red hañv ha goañv,

111 Sol'/lb- lb' sb- sb'/dost'do'rbmb'fa'/ do-.rbdo+sb- ' /

111 In---gal ha flour e ve---zo va c'ha--ran-----tez,"

111 /sb-.sbdo'rb'/mb:./sb'sb'sb'sbdo'rb'/mb-do'lb-./

111 E--me---zi din, e-me-zi din a--li-----es.

111 /Sol-.SolFa'Mi'/Fa-.Fa-do'/sbdo'sb'lbFa' lb'/lb-.Sol-^

111 Me 'wel an dour. Hag hi, pe-lec'h e--mañ ?

111 Do'/Fa-.Sol-./la-.la- h.a.

111 Ka--ran-tez den h.a. evel en (1) betek : ... vuhez.

EVIT AR VUGALIGOÙ : BREURIG JAKEZ

1.

111 Breurig Jakez, breurig Jakez,

111 Kousket out ? Kousket out ?

111 Klev ar c'hog o kanañ,

111 Klev ar c'hloc'h o vrallañ :

111 Ki ri ko ! Bim baofñ bao !

2.

111 Breurig Jakez, breurig Jakez,

111 Bouzar out ? Bouzar out ?

111 Echu an dijuniñ !

111 Ret e vo dit yuniñ.

111 Te 'gar re da wele.

3.

111 Breurig Jakez, breurig Jakez,

111 Kreisteiz eo ! Kreisteiz eo !

111 Klev ar yod o vouilhañ,

111 Klev ar c'hig o fritañ.

111 Merenn eo. Hast afo !

4.

Breurig Jakez, breurig Jakez,

Maro out ? Maro out ?

Merenn a zo debret,

Hag ar pladoù skaotet.

Ne'z po mann, betek koan !

5.

Breurig Jakez, breurig Jakez,

Prest eo koan ! Prest eo koan !

Te vo re ziwzhat.

Ne vo tra da lipat.

Te 'raio kof goullo.

6.


Breurig Jakez, breurig Jakez,

Noz du eo ! Noz du eo !

Bremañ 'c'hellez gedal,

Bremañ 'c'hellez roc'hal :

Roc'h roc'h roc'h, 'vel ur broc'h.



AR GOAÑV A ZO TREMENET

(Der Winter ist vergangen ...)

Beuregan alaman eus ar Grennamzer)

C

1.
Ar goañv a zo tremenet.
Deut eo an amzer vrav.
An eostig en deus kanet
En noz er bodig skav.
Abred ez an er saonenn,
Va c'halon s'art ha drant.
Da ganañ ur ganaouenn
Evit va dousig koant.

Re-/Sol-Sol-la-re-/si:si-
do-/la-Sol-la-Fd-/Sol: -
Re-/Sol-Sol-la-re-/si:si-
do-/la-Sol-la-Fd-/Sol: -
Solla'/si-si-si-lasi'/do:do-
do-/si-Sol-la-dosi'/la: -
Re-/Sol-Sol-la-re-/si:si-
do-/la-Sol-la-Fd-/Sol: -

2.

Va dousig, o va dousig,
Me zo dirak ho ti.
Digorit ho prenestrig.
Diskouezit din ho fri.
Kent tarzh an deiz on savet,
Hag aet dre c'hlizh an noz,
Da ober deoc'h ur boked
A lili hag a roz.

3.
Pell amzer em eus kanet.
Ne respont ket ur ger.
He dor a zo morailhet.
He stalaf a zo serr.
Ha trumm, me 'ghev ar goukoug,
O krial din, me 'gred,
O krial leizh he gouzoug :
"Hec'h-unan n'emañ ket."

4.

Ar goañv a zo tremenet.
Adeo, va dous, adeo.
Va c'halon oa dudiet.
Ha bremañ, rannet eo.
Ne vezimp ket dimezet.
Ne chomin ket er vro.
Ne zougin ket ar boned.
Va dousig, kenavo !

PEP GWIR MIRET-STRIZH : Skrid brezhonek ar sonioù-mañ ne c'hell bezañ moulet, liesskrivet, lakaet war bladennoù nag embannet e doare ebet hep aotre. Evit kaout aotre, skrivañ d'AR BED KELTIEK.

|| B O U R D H A F A R S ||

AR POLTRED (Sina)

Ul livour en doa pentet ur poltred : eñ hag e wreg kichen-ha-kichen.

Ur mignon dezhañ, o tont en ti, a welas ar poltred hag a sellas pizh outañ.

AR MIGNON : - Piv eo ar vaouez-se ?

AL LIVOUR : - Va gwreg.

AR MIGNON : - Ho kwreg ? Perak eta hoc'h eus pentet un estrañjour en he c'hichen ?

UN ALI FUR

P'hoc'h eus kontet un istor mat, gortozit kant vloaz a-raok e gontañ adarre.



KANNAD AR YAOUANKIZ - 42

m
m
o

Hep poan ebet, hep torr-penn,
Forzh pelec'h, e giz pe c'hiz,
Pep den a c'hell deskiñ lenn
BREZHONEG EEUN en ur miz.

111 AR VOEST DU

111 En hafiv-se e oa deuet Sidoni da dremen
111 eizh devezh e ti he breur, tad Herve.
111 Herve ne gare ket e voereb. Diaes e vije bet da zen, e gwir, karout
111 Sidoni. Rak Sidoni ne gare den ebet.
111 "Eizh devezh", he doa lavaret. Koulskoude, bet e oa en ti abaoe dek
111 devezh, pa zegouezhas Paol, he breur yaouank. Tonton Paol a oa martolod.
111 Traoù a oa gantañ da reiñ d'an dud, evel kustum : ur c'horn-butun da dad
111 Herve ; da vamm Herve ur mouchouer brodet ; da Herve ... ur voest du.
111 Pegen brav e oa ar voest-se ! Lugernus-holl, gant tresadennoù aour
111 war ar golo. En Hong-Kong e oa bet prenet. Pa saved ar golo, e kaved
111 e-barzh daouzek boestig all, du ivez, renket an eil e-kichen eben.
111 - Ha me zo o vont da ziskouez dit un dra bennak, Herve, - eme
111 Donton Paol pa voent o-unan er gambr diouzh an noz. (Ret e oa bet
111 lakaat Paol e kambr Herve, rak ar gambr a vired evit kar pe vignon a
111 oa bet roet da Sidoni).
111 Tonton Paol a dennas unan eus ar boestoùigoù er-maez. Neuze e
111 pouezas gant e viz-meud war un tu eus ar voest, war un tu all gant e
111 viz-bihan. Hop ! un norig a savas er strad.
111 - Aze ez eus un toullig kuzh, - emezañ. - Te oar, da guzhat traoù.
111 Arabat lavarout da zen em eus diskouezet dit an dra-se.
111 ---
111 Tonton Paol a yeas kuit antronoz vintin. Herve en doe keuz. Henezh
111 oa ur paotr a zoare.
111 Da greisteiz, e-pad merenn, e lavaras Sidoni :
111 - Me n'em eus bet netra digant Paol.
111 - Ne ouie ket e oas-te amañ, - eme dad Herve.
111 Goude merenn, aet tad Herve d'e labour, ez eas mamm Herve ha
111 Sidoni da azezañ el liorz, hag Herve o c'hoari gant e voest du en o
111 c'hichen.
111 - Me n'em eus bet netra digant Paol, - eme Sidoni adarre.
111 - Met penaos en dije gouezet e oac'h-c'hwi amañ ? - eme he c'hoar-
111 -gaer.
111 - Ar voest du-se, - eme Sidoni, - a zo kalz re gaer evit ur
111 paotrig evel Herve. Torret e vo gantañ. Sellit ! Emañ o vountañ anezhi
111 er bouldrenn. Ur vezh eo !
111 Mamm Herve a gomprenas diouzhtu pezh a felle da Sidoni. Ne blije
111 ket dezhi tabutal gant he c'hoar-gaer.
111 - Gwir eo, - emezi eta. - Herve, ar voest-se a zo kalz re gaer
111 evit ur paotrig eus da oad. Ha ma rofes anezhi da Dintin Sidoni ?
111 Tintin Sidoni, me zo sur, a roio dit ...
111 - Me a roio dezhañ ul levr, - eme Sidoni.
111 - Ha me a roio dit ur wastell hag ur varrenn chokolad, - eme e
111 vamm.
111 Sidoni, ken buan hag ur c'hazh o lamm war ul logodenn, he doa
111 tapet ar voest. Herve a zeuas an dour en e zaoulagad. Ne oa netra
111 d'ober. Ne reas netra. Marteze, c'hwi bugale, ho pije graet un dra
111 bennak. Met c'hwi n'hoc'h eus ket ur voereb evel Sidoni.
111 ---

Sidoni a lakaas ar voest en he c'hambr war ar siminal. Antronoz 111
 vintin, e oa tost gwisket pa voe galvet d'an traoñ da sinañ evit ul 111
 lizher a oa deuet gant paotr ar post. Diskenn a reas, o lezel he dor di-111
 gor. Herve, o tremen dirak an nor, ne voe ket evit mirout da deurel ur 111
 sell ouzh "e" voest. Tabut a oa savet etre paotr ar post ha Sidoni, ha 111
 ne echue ket. Herve a yeas er gambr. War an daolig e-kichen ar gwele, e 111
 welas gwalenn aour e voereb, n'he doa ket bet amzer da lakaat war he 111
 biz a-raok diskenn. Ur menoz diaoulek a yeas en e benn. Kerkent soñjet 111
 ha graet : digeriñ a reas ar voest, kemer ar walenn, teurel anezhi en 111
 toullig kuzh, ha serrifiñ ar voest adarre. 111

En deiz-se e voe trouz en ti, me lavar : kallet gwalenn aour 111
 Sidoni ! Klasket e voe, ha diglasket, Herve o klask gant ar re all. 111
 Evel a c'hellit krediñ, ne voe ket kavet. 111

Mat ! En deiz war-lerc'h, mintin abred ivez, Sidoni a guitaas he 111
 c'hambr c'hoazh, ar wech-mañ da ober un dro en ul lec'hig bennak. Hag 111
 Herve en he c'hambr. En ur werenn e oa dent faos Sidoni. Hag an dent 111
 faos en toullig kuzh da zerc'hel kompagnunezh gant ar walenn ! 111

Sidoni ne lavaras netra. Marteze ne felle ket dezhi anzav he doa 111
 dent faos. Met ouzh taol e tebre goustadik-goustadik. Ma voe goulennet 111
 outi gant mamm Herve hag e oa klañv. 111

En abardaez-se, Herve a gavas e dro da zigeriñ ar voest du a-nevez. 111
 Gantañ en e zorn e oa Montr arc'hant Sidoni, bet laeret, chadenn hag 111
 all, diouzh godell he jiletenn c'hloan, he doa lezet war gein ur gador. 111
 Montr ha chadenn a yeas en toullig kuzh. 111

Antronoz, edo ar paotrig fall o c'hortoz e voereb da zont er-maez. 111
 Met an nor a chome serr. Da nav eur, Sidoni ne oa ket diskennet c'hoazh. 111
 Mamm Herve a yeas da skeiñ war an nor. Ur vouezh wan a respontas. Edo 111
 Sidoni en he gwele. 111

- Me ouie e oac'h klañv, - eme ar vamm. 111

- Ya, - eme Sidoni, - un diaoul bennak a zo o c'hoari war va zro. 111

- Un diaoul ? 111

- Ya, va gwalenn a zo aet gantañ. Va ... mat ! un dra all a zo aet 111
 gantañ. Ha bremañ va Montr. A zo gwashoc'h, klevet em eus a-hed an noz 111
 va Montr oc'h ober tik-tak. Koulskoude n'emañ ket er gambr. Klasket em 111
 eus. 111

Herve a oa deuet er gambr gant e vamm. E dad, na laboure ket en 111
 deiz-se, a oa deuet ivez. Den ne gomzas. Er sioulded vras e klevet : 111
 "tik-tak-tik-tak-tik-tak". Tad Herve a dostaas ouzh ar siminal, a grogas 111
 er voest du, he digoras. Ne voe ket pell evit gwelout e oa un toullig 111
 kuzh e-barzh, nag evit kavout an tu da sevel an norig vihan : gwalenn, 111
 dent faos, Montr ha chadenn a zeuas er-maez. 111

Sidoni a guitaas an ti en deiz-se ... o lezel ar voest er gambr. 111

- Herve, - eme e vamm d'ar paotrig (en doa anzavet e dorfed), - re 111
 yaouank out marteze da gompren pegen kriz eo ar pezh ac'h eus graet. Met 111
 kozh a-walc'h out da c'houzout ec'h eus graet un dra fall. Ar voest du 111
 ne vo ket roet dit en-dro. Lakaet e vo ganin ... en un toullig kuzh, 111
 ha ne vo ket diskouezet dit penaos digeriñ anezhañ. 111


ROPARZ HEMON 111

(Pep gwir miret-strizh) 111

C.C.P.P. N°36.242. 111

Le Gérant : Mlle Y.Martin, 21, rue de Dixmude, St.Marc, Brest. 111

Ronéotypé par Rincazaux, 1, rue Alain Fournier, Brest. 111



Revue mensuelle-N°21-Septembre 1960 Kelaouenn vizek-Niv.21-Gwengolo 1960
 Abonnement annuel : 7 NF. Koumanant-bloaz : 7 LN.
 CCP.RENNES 1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, Brest.

111 XXX
 111
 111 1860-1960
 111 D'ar 26 eus ar miz-mañ e kouezh kantvet deiz-ha-bloaz
 111 ganidigezh FRANSEZ VALLEE. Spi hon eus e vo merket an darvoud-se
 111 e doare pe zoare gant an holl strolladoù hag an holl gelaouennoù
 111 gouestlet d'hor Yezh.
 111 XXX

AR MIZ

111 AR C'HARR-NIJ RB-47 HAG AR BROADOU UNANET : E Kuzul-Surentez ar Broadou
 111 Unanet, d'ar 25 Gouere, dileuriad ar Stadoù-Unanet, Cabot Lodge, a
 111 lavaras e oa bet ar c'harr-nij amerikan RB-47, diskaret d'ar 1-af
 111 Gouere, taget gant ur c'harr-nij rusian, a glaskas ober dezhañ tostaat
 111 ouzh aodoù Rusia. Hent ar c'harr-nij RB-47 a zo bet heuliet resis,
 111 emezañ, gant ardivinkoù. An dileuriad saoz, Sir Pierson Dixon, a
 111 lavaras heñvel, o tiskleriañ ouzhpenn e oa bet kavet listri-spluj
 111 niverus, dianav o broadelezh, o spiañ gant ardivinkoù elektronek,
 111 nebeutoc'h eget 80 Km. diouzh aodoù Breizh-Veur.

111 EMZIVIZOU GALL-HAG-ALAMAN, SAOZ-HAG-ALAMAN : Emzivizoù a voe e kastell
 111 Rambouillet, e-kichen Pariz, etre Prezidant Frañs ha Kafseller
 111 Alamagn-Gornog e dibenn Gouere, evit kreffvaat, a lavarer, unded
 111 politikel Europa. E derou miz Eost, ez eas Kentañ Ministr Breizh-Veur
 111 da welout ar C'hañseller e Bonn.

111 KEMM E GOUARNAMANT BREIZH-VEUR : Da heul dilez Heathcot Amory, e voe
 111 graet kemmoù a bouez e gouarnamant Breizh-Veur d'ar 27 Gouere. Lord
 111 Home a voe anvet da Vinistr-Diavaez, Selwyn Lloyd da Gafseller an
 111 Echeder.

111 ARABAT DISOÑJAL !

111 XXX BODADEG VEUR SKOURR BREIZH AR C'HENDALC'H KELTIEK, e Louaneg, XXX
 111 XXX d'ar Yaou 8 a viz Gwengolo. XXX
 111 XXX RETREDIG AN UNVANIEZH SPEREDEL, e Louaneg ivez, XXX
 111 XXX d'ar Meurzh 7 a viz Gwengolo. XXX
 111 XXX XXX

HARZ-LABOUR E BREIZH-VEUR : Harz-labour a voe e kreiz miz Eost gant martoloded-kenwerzh e Breizh-Veur, en desped da ali renerien ar sindikadoù. An harz-labour, graet gant lod eus ar vartoloded hepken, a vefe bet atizet, a lavarer, gant komunourien.

EMRENEREZH KIPRENEZ : D'ar 1-añ Gouere e voe roet da c'houzout e oa bet graet en diwezh emglev etre Kipreneziz ha Saozon diwar-benn amzer da zont an enezenn. Kiprenez a vezo ur republik stag ouzh ar Gumuniezh Vreizhveurek, gant an Aotrou Makarios da brezidant hag an Dr.Kutchuk da isprezidant. An emrenerezh a voe embannet ouzh son ar c'hleier hag ar c'hanolioù etre ar 15 hag ar 16 a viz Eost da hanternoz.

TRUBUILH E TURKIA : Abaoe an taol-reveulzi a ziskaras gouarnamant Menderes e miz Mae, ez eus atav trubuilh e Turkia. D'an 3 Eost e voe lavaret e vije savet lezioù-barn ispisial. War un dro, 235 a jeneraled hag a amiraled a voe lakaet e retred, war zigarez yaouankaat renerezh an arme.

ATAV MESK E BRO-GONGO : Tri soudard belgiat ha c'hwezek soudard kongoat a voe lazhet en un emgann e Kalwezi, Katanga, d'an 22 Gouere.

En deiz-se, Lumumba a roas da c'houzout en doa graet emglev gant ur gompagnonezh amerikan evit kaout skoazell ekonomek ha teknikel.

E dibenn Gouere, Lumumba a reas un dro da C'hana, Bro-Saoz hag ar Stadoù-Unanet.

D'an 28 Gouere, ur bagad soudarded iwerzhonat, war-dro 600 anezho, a zouaras e reter ar vro, kaset a-berzh ar Broadoù Unanet. En deiz-se ivez, Sekretour Meur ar Broadoù Unanet, Hammarskjöld, a zegouezhas e Kerleopold.

D'an 3 Eost, Tchombe, Kentañ Ministr Katanga, a lavaras e vije enebet ouzh soudarded ar Broadoù Unanet mar klaskjent dont er vro. Embann a reas engalvadeg an arme. Soudarded ar Broadoù Unanet a dlee bezañ kaset da Gatanga d'ar 6 Eost. Goude ur weladenn gant an Is-sekretour an Dr.Bunche e Kerelesbed, avat, a voe kavet furoc'h gortoz, ha lakaat ar gudenn dirak ar Guzul Surentez e New York.

D'an 9 Eost, ar C'huzul Surentez a c'houlennas digant Belgia lemel he holl soudarded diouzh Katanga diouzhtu. Tchombe a lavaras neuze e lezje darn eus soudarded ar Broadoù Unanet da zont.

D'an 10 Eost e voe kann e Kerleopold etre tud a-du gant ar gouarnamant ha tud an "Abako", a c'houlenn ma ve Kongo ur Stad kevredel e-lec'h bezañ ur Stad kreizennet.

Hammarskjöld a errus e Kerlesbed gant soudarded svedat d'an 12 Eost, hag a voe degemeret mat gant Tchomb. Se a zisplijas da Lumumba, a zisklerias en doa e c'houarnamant "kollet fiziañs" e

Sekretour Meur ar Broadoù Unanet. Ur bagad all eus Iwerzhon a voe kaset da Vro-Gongo d'an 18 Eost. En deiz-se, e voe lakaet dalc'h war aerborzh Kerleopold gant nerzhioù ar Broadoù Unanet.

XX
Pep Breizhad emskiantek
a zo koumanantet
d' A R B E D K E L T I E K
ar gelaouenn VIZIEK
n'eus nemeti
Lakait ho holl vignoned
da goumanantif
XX

- 111 EMRENEREZH BRO-GONGO-GORNOG : An darn eus Bro-Gongo a oa dindan ar
111 C'hallaoued a embannas hec'h emrenerzh d'ar 15 Eost.
111
- 111 DIZURZH E RODEZIA : Dizurzhioù grevus a darzhas e Bulawayo, Rodezia ar
111 C'hreisteiz, e dibenn Gouere. Savadurioù a voe tangwallet, kirri e piaou
111 Europiz labezet. Soudarded a voe kaset gant ar gouarnamant, war urzh
111 rener ar vro, Sir Edgar Whitehead.
111
- 111 EMGLEV A-ZIVOUT BRO-NIASA : Emglev a voe skoulmet e Londrez d'ar 4
111 4 Eost a-zivout Bro-Niasa, a zo bremañ dindan warez Breizh-Veur. Hervez
111 an emglev-se (gant asant A.C.W.Dixon, a-berzh an dud wenn, hag an Dr.
111 H.Banda, a-berzh an dud du) e vo roet gwirioù d'an Europiz, d'an
111 Afrikiz hag d'an Aziiz a zo er vro, ha spi a zo "e c'hellint bevañ holl
111 etrus hiviziken".
111
- 111 LAZHADEG E-KICHEN ALJER : Ur broadeler aljeriat, Laklifi, barnet d'ar
111 marv e 1958 gant ar C'hallaoued, a voe dibennet e Lion d'an 30 Gouere.
111 Antronoz, er Chenoua, e-kichen Aljer, tud aet da gouronkafi war an
111 traezh a voe taget gant ur bagad soudarded aljeriat, a lakaas an tan en
111 ur c'hoad, hag a rastellas an traezh
111 leun a dud gant mindrailherezed.
111 Unnek den a voe lazhet.
111
- 111 SOUDARDED C'HALL LAKAET D'AR MARV :
111 D'an 12 Eost e voe roet da c'houzout
111 gant gouarnamant ar vroadelerien
111 aljeriat e Tuniz e oa bet barnet ha
111 lakaet d'ar marv daou soudard gall,
111 tamallet dezho bezañ graet "torfedoù
111 a-enep poblañs nannsoudard Aljeria".
111
- 111 RAKTRES-PEMP-BLOAZ EN INDEZ : Indez a zispigno 7.650 milion a lurioù
111 sterling evit seveniñ ur raktres-pemp-bloaz nevez. Kresket e vo dreist-
111 -holl al labour-douar hag an ijinerezh pounner. Leve ar vro a dle bout
111 uhelaet a 30%. 13.500.000 a gargidi nevez a vo. Deskadurezh a vo roet
111 hep paeañ d'an holl vugale. Douar a vo kaset da bep unan eus ar 500.000
111 a gêriadenoù a zo er vro, hag ur bern hentoù a vo savet.
111
- 111 "KENTAÑ MINISTREZ" E SELAN : An Itron Sirimavo Bandaranaike, 44 bloaz,
111 intañvez ar C'hentañ Ministr bet muntret warlene, a zo bet anvet da
111 "Gentañ Ministrez" e Selan. He c'hostezenn, "Kostezenn ar Frankiz", he
111 doa gounezet 75 a gadorioù (diwar 151) er votadeg. Skoazellet oa bet
111 gant komunourien ha trotskiourien. N'eus er bed-holl a Gentañ Ministrez
111 nemeti.
111
- 111 TAOL-REVEULTI E LAOS : Ar gouarnamant e Laos a voe diskaret d'an 9
111 Eost gant ur strollad soudarded, en o fenn ur c'habiten harzlammerien.
111
- 111 INDONEZIA HAG AN IZELVROIOU : Ar Prezidant Sukarno a zisklerias d'ar 17
111 Eost e oa torret an darempredoù diplomatek etre e vro hag an Izel-
111 vroioù. Tabut a zo etre an Izelvroioù hag Indonezia (emren abaoe 15
111 vloaz) a-zivout Gwinea-Nevez ar C'hornog.

BREIZHAD mat ha speredek

a lenn atav

AR BED KELTIEK

NIXON DANVEZ-PREZIDANT : Nixon, isprezidant ar Stadoù-Unanet, a voe dibabet da zanvez-prezidant gant ar Republikaned e Chicago d'ar 27 Gouere. 111
111
111
111

EMZIFENN AR STADOÙ-UNANET KREIZENNET : Servij-emzifenn ar Stadoù-Unanet a roas da c'houzout d'ar 17 Eost e oa bet savet ur Greizenn evit ken-urzhiañ "ur brezel hollnukleel", da heul ur vodadenn eus pennrenerien an arme. Bez' ez eo unan eus ar pouezusañ divizoù graet gant ar Pentagon. 111
111
111
111
111
111

PROSEZ F.G.POWERS : Prosez loman ar c'harr-nij amerikan U-2, bet diskaret e Rusia, a zigoras e Sal ar Peulioù e Moskov d'ar 17 Eost, dirak un engroez tud. Barnet e voe d'an 19 da vezañ dalc'het e-pad 10 vloaz. 111
111
111
111

EN EC'HONDER

DIV WAR UN DRO : Div adplanedenn a voe taolet eus ar C'hab Canaveral d'an 22 Mezheven diwar ur fuzeenn hepken. Lakaet oant bet war ur fuzeenn "Thor-Able-Star", en eil war gein eben. D'ar poent merket, e voent strinket en ec'honder war-bouez gwinterelloù. Kelc'hdreifñ a reont etre 730 ha 900 Km. diouzh an Douar. Unan a zo graet evit skoazellañ lomaniezh al listri hag ar c'hirri-nij, eben evit muzuliañ skinadur an Heol. Tremen a reont a-us Rusia en o beaj, hag e chomint 50 vloaz er vann, a lavarer. 111
111
111
111
111
111
111

ARNODOÙ RUSIAN ER MOR HABASK : E derou miz Gouere e voe taolet fuzeennoù rusian e-kreiz ar Mor Habask, war-hed 13.000 Km. An arnodoù-se, gouez d'ar Rusianed, a zo graet a-benn teurel fuzeennoù betek Meurzh hag ar Werelaouen, ha kas un den en ec'honder. 111
111
111
111

FUZEENNOÙ GIZ NEVEZ : An Amerikaned o deus kavet an tu da sevel fuzeennoù, enno ur c'heflusker a c'hell bezañ harzet ha lakaet da vont en-dro adarre en ec'honder. En doare-se e c'hellfed kemmñ hent un oabllestr, hag ober dezhañ distreiñ d'an Douar ur wech taolet. 111
111
111
111

AR VANNADELL "POLARIS" : D'an 21 Gouere e voe taolet div vannadell "Polaris" e-touez ar C'hab Canaveral diouzh ul lestr-spluj dindan vor. An div vannadell a dizhas o fal, 1.700 Km. ac'hano, e kreisteiz ar Mor Atlantek. 111
111
111
111

DISTRO EUS AN EC'HONDER : Un adplanedenn, "Discoverer XIII" a voe taolet eus Vandenberg, Kalifornia, d'an 10 Eost. Enni e oa ur glozenn karget a ardivinkoù, a gouezhas hag a voe kavet gant ur viñsaskell er Mor Habask : ar wech kentañ, war a greder, ma tistro un dra anterin d'an Douar eus an ec'honder. 111
111
111
111

"SKINADPLANEDENN" : D'an 12 Eost e taoljod eus ar C'hab Canaveral un adplanedenn e stumm ur baloñs 30 m. a dreuz. Ar baloñs a zo graet e plastik, warnañ ur gwiskad moan aluminom. Pa voe taolet, edo en ur glozenn, a dorras. Raktal, ur boultrenn bet lakaet a-barzh ar baloñs a c'hwezhas anezhañ. 111
111
111
111
111

Ar baloñs, anvet "Heklev", a vez implijet da dapout ha da adkas

111 d'an Douar kemennadurioù-radio. Ar c'hentañ kemennadur, graet gant ar
 111 Prezidant Eisenhower, a voe tapet e-giz-se ha skignet dre ar Stadoù-
 111 -Unanet. Gant ur 15 bennak eus hevelep balofisoù e ve tu da gas pellgomz,
 111 pellskridoù, pellskeudennoù ha zoken skinwel dre an Douar a-bezh.
 111 "Heklev" a c'hell bezañ gwelet o tremen en oabl en noz, ken
 111 skedus hag ur steredenn eil braster.

111 DAOU GI EN EC'HONDER : Ar Rusianed, na vennont ket chom war-lerc'h an
 111 Amerikaned e "redadeg an ec'honder", a gasas d'an 19 Eost un oablistr
 111 da dreifiñ 300 Km. er-maez, ennañ daou gi hag anevaled all. Tu a zo
 111 da skinwelout pezh a ra an anevaled.

=====

111 DA WERZHAN, hanter briz :
 111 ur "Vari-Typer"; e stad nevez. Skrivañ d'ar gelaouenn.

=====

111 KAMP ETREKELTIEK AR VREZHONEGERIEN

111 Ar C'hamp, dalc'het hevlene e skol an Ao.Troal, Plouenan, Leon,
 111 dindan renadur an Ao.R.Huon hag an It.de Bellaing, a zo bet mat daoust
 111 d'ar glav. Setu amañ roll ar prezegennoù a voe graet :

111 "Ar c'hudennoù arboellerezh e Bro-Leon", gant an Ao.Chapalain.

111 "An deskadurezh divyezhek", gant an Ao.A.Ar C'halvez.

111 "Kenvreuriezh ar Brezhoneg", "Embannadurioù ar Bibl", gant Maodez

111 Glanndour.

111 "Ar vuhez vreizhat e Pariz", gant Kerlann.

111 "An anvioù-lec'h", gant an Ao.Boucher.

111 "Ar sonaozourien vreizhat a vremañ", gant an It.de Bellaing.

111 "Barzhaz Breizh", gant Abeozen.

111 "A-enep an alkool", gant an Ao.Noel.

111 Un 70 bennak a dud a dremenas er C'hamp. Un arnodenn an Trec'h a
 111 voe graet. Spi hon e c'hellimp reiñ keloù hiroc'h diwezhatoc'h.

111 KENDALC'H KELTIEK ABERYSTWYTH : Pennadoù niverus a zo bet kaset dimp
 111 diwar-benn ar C'hendalc'h Keltiek, graet hevlene en Aberystwyth,
 111 Kembre, re ziwezhat, siwazh, da vezañ embannet en niverenn-mañ eus
 111 AR BED KELTIEK. Kavet e vint en niverennoù da zont.

=====

111 EVIT AR VRETONED VIHAN, a fell d'o c'herent e vent desavet

EVEL BRETONED

111 n'eus ket gwelloc'h eget

111 S K O L S A N T E R W A N

111 renet gant an Aotrou A.Ar C'halvez

111 e Ploueg-ar-Mor

=====

B O U R D H A F A R S

(eus Bro-Sina)

AR PESKED DOUJUS

Un impalaer a fellas dezhañ mont da besketa en ur stêr. Pesketaerien a oa eno, o pakañ pesked e-leizh. An impalaer, avat, kaer en doa, ne zeue pesk ebet en e gidell. Tud eus al Lez, a oa gantañ, a wele e dal o krizañ. Dizale, a soñjent, e vo ken fuloret ma tamanto dimp holl, ha ni digablus.

En o zouez e oa ur barzh. Evit habaskaat ar Mestr, e savas buan-ha-buan ar rimadell-mañ :

Ar munus a neufiv er stêr
A zo mat evit ar werin.
N'hellfe tapout an impalaer
Nemet balum pe zelfin.

AR C'HOUMOUL HAG AN IMPALAEER

Un impalaer a Vro-Sina a oa brudet evit e grezni. Un deiz ma edo o vale war unan eus savennoù e balez, e welas koumoul du en oabl.

- Deomp er goudor, - emezañ. - Bremaik e vo glav.
- Ne vo ket, - eme ur furlukin, a oa en e gichen.
- Ha perak ? - eme an impalaer.

- Ar c'houmoul-hont a zo re fur evit dont e kêr. Re a gresk a zo bet lakaet war an telloù-antren.

NAERED HA TAILHOÙ


En amzer-se e veze gwastet ar vro gant naered seurt na oa bet gwelet biskoazh. Du e oant, flaerius, divalav, ha ken binimus ma oad sur da vervel ur wech flemmet ganto. An naered-se, koulskoude, lazhet ha lakaet da sec'hañ, a oa prizius-meurbet : diouzh o c'horfoù e tenned ur poultr a baree ar goriou hag ar gouliou, zoken al loventez.

An impalaer a ginnigas ur gopr da gement den a lazhe unan eus an naered-se. Nebeut-tre a voe degaset d'al Lez, avat : re risklus e oa tostaat outo.

Ur menoz all a zeuas neuze e penn an impalaer. Lakaat a reas embann ne vije ket ret d'an neb a bakje un naer e-pad ar bloaz paeañ e dailhoù er bloaz-se. Kerkent e voe degaset kement a gorfoù naered d'al Lez ma ne ouie mui al louzaouerien petra ober ganto.

A R B E D K E L T I E K

ar gelaouenn vizisk
n'eus nemeti
e brezhoneg



D A N E V E L L A R G R A I L

(Lohengrin, Wagner)

C goustad-tre

LOHENGRIN (Tenor) :

	/' Mi'Mi'Mi'la- ' la'/dd'dd'si'.dd"si'la' -/	111
Pell-bras ez eus, en ur vro dizarempred,	/' la-la"la"dd-.dd'/mi'dd'dd'.si"la- -/	111
Ur c'hastell-krefiv, zo anvet Monsalvat.	/' mi'mi'.mi"mi-la'Sod"la"/dd'.la"Fd'Mi' -/	111
Un neved kaer, ar c'haerañ war an douar,	Mi-/Mi-la'la"la"dd'.dd"dd'..si)/la- - -	111
A sav, en ur sklerijenn veur, e-kreiz.	la'la".la)/dd-.dd'dd'dd'dd'..fd)/fd-mi' "	111
En neved-hont emañ al lestr burzhudus,	si"re're' 3re'dd'si'3 /mi'.mi"mi'.dd"la- '	111
A virer, teñzor sakr ha doujet-bras,	la'/la' " la"si'si're-.re'/dd- 3dd'si'la'3 dd-si'	111
Al lestr, a zegas hevoud leun d'an denelezh,	" si"/si'.si"dd'dd'mi're-re'/dd- 3dd'si'la'3 Mi-	111
Bet douget di gant aelez vat gwechall.	-/' la'la'.la"dd-.dd'/dd'.dd"dd'dd'mi-^si' "	111
Bep bloaz e nij ur goulm wenn eus an Neñvou,	Sod"/Sod'la'si'dd'rd'mi'fd'.rd"/mi- '	111
Evit bepred krefivaat e c'halloud hud.	mi'mi-. " mi"/la-la" " la'la'dd'dd'..fd)/fd:mi' "	111
Eñ eo ar Graal, a skign e nerzh kevrinus	mi"mi'dd'/la'la'si'.dd"re-.Sod'/la- -	111
War vagad feñl e varc'heien hael.	' dd'dd'..fd)/fd-.ld'ld'dd'dd'.rd"/rd:dd' '	111
Hag eus ar Graal, an neb a zo servijer,	' rd'/rd'.rd"dd'Sod'si'.si" 3si'ld'Sod'3/dd: -	111
Gant kalon c'hlan, a vezo trec'h d'ar bed-holl.	' rd"/rd- 3rd'dd'Sod'3 si-.si'/ld',ld" 3ld'Sod'Fd'3	111
Pep droug a vo harluet eus e ene,	rd"/rd- 3rd'dd'ld'3 dd'si'si-/ld'.ld" 3ld'Sod'Fd'3	111
Ha tec'hout a raio dirazañ noz ar marv.	/dd-dd'.dd"dd'dd'dd'.re"/mi-.dd'dd'si' '	111
Mar da da gantren pell dre vroioù estren,	si'/fd-fd"fd"re"si"mi'la're'.mi"/dd- '	111
O stourm evit ar gwir hep fellel tamm,	la"si"dd-rd'.dd"/sod-.fd'mi-.rd'/rd'dd' -	111
E vez dre nerzh ar Graal atav diwallet,	dd-dd'rd'/mi'.dd"dd-.dd"dd'.sd"/rd: -	111
Hag eñ dianav-krenn e-mesk an dud.	' rd'/mi-.Sod'si'si'dd'rd'/mi-..rd"rd-dd' "	111
Da viken, un hevelep kevrin santel	dd"/re-re'dd"si"fd'.si"si'.ld"/dd- -	111
A dle ouzh tud ar bed bout dalc'het kuzh.	' dd'mi'.mi"/rd' ' rd-fd'.fd"fd'fd'/fd'md' ' .	111
Al lezenn eo. Gwa neb a gred diskuliañ		111


111 mi"sod-.mi'/re- - re-dd'si'/mi:.Sod-^/la- -
 111 E anv hepken. Pellaat raktal a rank.
 111 - ' la'/dd-. ' dd-dd'.dd"/dd-.dd'dd-.dd'/rd-rd' '
 111 Padal, e roin deoc'h ar respont marvus :
 111 - mi-/lA:dd-dd'.dd"/mi'.dd"si'.dd"la- '^
 111 Ar Graal en deus va c'haset en ho pro.
 111 dd'/fd-.fd'fd'.dd"dd-/dd-.rd"md"sod-fd' ' /
 111 Ar marc'heg Parsifal ahont zo roue,
 111 /- mi-lA-..dd"/mi- ' mi'fd'.mi"re' " si"/la- - : //
 111 Ha me, o tud ! zo Lohengrin, e vab.
 111
 111 =====

M E 'G A R F I L O

111 (War don So Early in the Morning, kanaouenn-bobl eus ar Stadoù-Unanet)

111	1.	2/4
111	Me zo ur paotr a feson vat,	Sol'/Sol'sb'Mb'Sol'/Sol'Fa'Fa'.
111	Zo debret gant ar galonad.	Fa"/Fa'lb'Re'Fa'/Fa'Mb'Mb'
111	Me 'gar ur plac'h anvet Filo,	Sol'/Sol'sb'Mb'Sol'/Sol'Fa'Fa'.
111	Spontusañ paotrez zo er vro.	Fa"/Fa'lb'Re'Fa'/Fa'Mb'Mb'
111	Dre ar barrez hag ar c'hanton,	Mb"Fa"/Sol'Sol'Fa'.Mb"/Re'Fa' '
111	Meur a blac'h a gar ac'hanon.	Fa"Sol"/lb'lb'Sol'.Fa"/Mb'Sol' '
111	Me zo sur em eus o c'halon.	Sol"lb"/sb'sb'mb'.re"/re'do-
111	Siwazh, me 'gar Filo !	do'/sb'.sb"lb'Fa'/Mb-
111	2.	4.
111	Me zo moumoun Marivona.	Filo, tud vat, zo un diaoulez,
111	Me 'gred e plijan da Dina.	Rederez daonet, gaouierez.
111	Ha Katarin din a roio	He dent a grog, he zeod a dro,
111	He dorn, pa garin, hag afo.	He zroad a nij, he dorn a sko.
111	Marivona a zo koantik.	Hi zo diek ha diskempenn,
111	Tina vihan zo un aelig.	Frip he zrantell ha loudourenn,
111	Katarin a zo pinvidik.	Beg-a-raok, fri-furch, trabasenn.
111	Siwazh, me 'gar Filo !	Siwazh, me 'gar Filo.
111	3.	5.
111	Bez' eus div Jan ha div Jani,	Dizale vo graet an eured.
111	Teir Soazig ha peder Mari,	Filo ha me vo dimezet.
111	Bez' eus Helen, ha Liz, ha Flo,	Me 'm eus lakaet an toaz e go.
111	Holl bitilh o tont war va zro.	Ha bremañ, 'vel e vo e vo.
111	O ya, bez' eus ur rejimant.	En hon ti vo treut ar friko.
111	Ne 'm bo nemet an nec'hamant	Kann ha chabous ha yalc'h c'houllo.
111	D'ober mat va choaz, pa'm bo	Ma n'on ket dogan, chafis am bo.
111	Siwazh, me 'gar Filo ! c'hoant.	Siwazh, me 'gar Filo !

111 =====
 111 NOTENN : Evel ouzer, emañ ar c'hiz skrivañ an tonioù da vezañ kanet gant
 111 gwazed un eizhvedenn uheloc'h pa implijer an notennadur boutin
 111 (alc'houez Sol). Graet hon eus evel-se ivez, evit ma vo aesoc'h, d'ar re
 111 na ouzont ket sonlenn, c'hoari an ton war ur benveg-sonerezh ordinal.
 111 PEP GWIR MIRET-STRIZH : Skrid brezhonek ar sonioù-mañ ne c'hell bezañ
 111 moulet, liesskrivet, lakaet war bladenoù nag embannet e doare ebet
 111 hep aotre. Evit kacout aotre, skrivañ d'AR BED KELTIEK.



m
m
o

Hep poan ebet, hep torr-penn,
Forzh pelec'h, e giz pe c'hiz,
Pep den a c'hell deskiñ lenn
BREZHONEG EEUN en ur miz.

KANNAD AR YAOUANKIZ - 43

F R A N S E Z V A L L E E

=====

111
111
111
111
111
111 D'ar 26 a viz Gwengolo 1860, e voe ganet e Plounevez-Moedeg un
111 den a dlee bezañ unan eus tud veur hor bro : FRANSEZ VALLEE.

111 N'eus bet savet c'hoazh levr ebet diwar e benn. An neb a gonto
111 istor e vuhez a gonto ivez istor ar BREZHONEG adal diwezh an 19-vet
111 kantved betek 1949, bloaz e varv.

111 AR BREZHONEG EN AMZER YAOUANKIZ VALLEE

111
111 Frañsez Vallee (peurliesañ e skrive e anv "Vallee", ha n'eo ket
111 "Vallée") a veze komzet outañ galleg gant e gerent. Evel Ar Gonideg eta,
111 ne oa ket brezhoneger a-vihanik. Met evel Ar Gonideg, en doa klevet atav
111 tud o vrezhonegañ en-dro dezhañ. E-giz-se ne voe ket diaes dezhañ
111 deskiñ mat yezh e vro.

111 En amzer e yaouankiz e oa bev-mat ar brezhoneg dre-holl war vaeziou
111 Breizh-Izel. Ne oa ket deuet c'hoazh ar skolioù da ober o labour
111 distruj. E pep parrez e veze sarmonet, e veze kanet kantikoù, e veze
111 graet katekiz d'ar vugale e brezhoneg. Levrioù a relijion niverus a
111 veze moulet e brezhoneg, hag e vezent gwerzhet-mat ha lennet e pep
111 lec'h. E Bro-Dreger, e veze c'hoazh adskrivet e korn pe gorn ar
111 "misterioù" pe bezhioù-c'hoari santel a blije kement d'hon tadoù.

111 Ar brezhoneg a oa bet reizhet gant al Leonad Ar Gonideg (1775-
111 1838), ha stourmerien all a oa deuet d'e heul.

111 Daoust d'Ar Gonideg, avat, ha d'e heulierien, e chome c'hoazh kalz
111 da ober. Ar skrivagnerien, e-lec'h en em glevout da blegañ d'ur reolenm,
111 a oa gwelloc'h ganto peurliesañ skrivañ hervez o faltazi. Ha koll
111 amzer ha koll poan a raent evel-se.

111 STUDI

111
111 Vallee a gomprenas e ranke pep labour, evit bezañ frouezhus, bezañ
111 diazezet war ar studi, studi istor ar yezh adal an amzerioù koshañ,
111 studi ar yezhoù keltiek all, ivez studi aketus ar yezh komzet.

111 A-hed e vuhez e voe ur studier bras. Kement skrid brezhonek a
111 gouezhe etre e zaouarn, - ul levr pe un dornskrid kozh, ul levr eus an
111 amzer vremañ, ur ganaouenn, ur gazetenn, ul lizher zoken, - ne veze
111 ket hepken lennet gantañ, met studiet ger-ha-ger, ha studiañ a rae
111 ivez, n'eo ket hepken selaou, kement a veze lavaret dirazañ e brezhoneg,
111 dreist-holl gant tud ar bobl.

111 A zeiz da zeiz, e oa deuet a-benn da zeskiñ hor yezh gwelloc'h
111 eget den (nemet e vignon Emil Ernault marteze). Ar re a lenn e skridoù
111 a chom souezhet gant e ouiziegezh. Ha c'hoazh, n'en deus lakaet dre
111 skrid nemet un darn eus ar pezh a ouie.

STOURM

Brud en dije gounezet m'en dije karet sevel labourioù gouziziek e galleg, evel ma reas Jozeb Loth, da skouer. N'eo ket ar brud-se, avat, a felle dezhañ gounit. E gwirionez, ne glaskas biskoazh gounit brud ebet. Ar garantez a vage ouzh ar brezhoneg a oa re vras : ret oa dezhañ stourm evitañ. Studiañ ne oa ket a-walc'h.

Setu perak e savas e 1898 e gazetenn KROAZ AR VRETONED. Eus 1898 betek 1920 ez embannas KROAZ AR VRETONED bep sizhun, e brezhoneg penn-da-benn. Koulskoude, fall e oa e yec'hed, ha daoust ma kavas ken-labourerien, ne gavas ket a wir harperien, tud darev da ober al labour poanuis stag ouzh embannidigezh ur gazetenn. Ar pennadoù a veze kaset dezhañ da voulañ a veze skrivet fall alies, hag e ranke o c'hempenn, o reizhañ, a-wechoù o adskrivañ, hep ur bennozh Doue digant an aozer (brav zoken pa ne veze ket tamallet).

"UHEL HA GLAN"

An doujañs a vage Vallee ouzh yezh ar bobl ne vire ket outañ da welout e oa dleet sevel ur yezh skrivet "uhel ha glan", mat evit aozañ labourioù filozofiezh ha skiant, evit displegañ kement a sell ouzh buhez ar bed a vremañ. Poaniañ kalet a reas da sevel ar yezh-se. E-mesk ar gerioù a reomp ganto hiziv ez eus kalz a zo bet krouet pe adkavet gantañ. E "Notennoù diwar-benn ar Gelted Kozh" hag ar "Sketla" a zo diazez ar yezh a skrivomp. Ar c'heleier a embannomp bep miz war AR BED KELTIEK a zo graet diwar skouer ar c'heleier a embanne bep sizhun war GROAZ AR VRETONED.

Den ebet ne reas muioc'h egetañ evit unaniñ ar rannyezhoù. A drugarez dezhañ dreist-holl e voe savet e 1907 "Emglev ar Skrivagnerien", oc'h ober ur yezh hepken eus an teir rannyezh a Gernev, a Leon hag a Dreger.

UN DEN A BEOC'H

Tabutoù spontus a darzhe en e amzer etre ar Vretoned, diwar-benn relijion, politikerezh, hag, - ar re drenkañ marteze, - diwar-benn ar yezh. Enebet e voe outañ alies. Vallee a chomas muiañ na c'helle er-maez eus an tabutoù. Un den a beoc'h e oa. Zoken pa ranke respont an tamalloù graet outañ, e oa atav hep kasoni.

Pa voe skoulmet Emglev 1941, oc'h unaniñ rannyezh Wened ouzh an teir rannyezh bet unanet e 1907, en doe kalz a geuz, dre ma krede (ha ne oa ket faziet) e vije c'hwervaet an tabutoù diwar-benn an doare-skrivañ. Aon en doa ivez na vije diskaret an urzh en doa savet.

Pec'hed e vefe lavarout : ma vefe c'hoazh bev, e vefe a-du gant X pe gant Y. Un dra divalav eo lakaat hon tud veur en hon tabutoù a vremañ. Heuliomp kentoc'h ar skouer en deus roet dimp Vallee . sellout bepred ouzh mad ar vro hag ar yezh, studiañ ha stourm bepred ; diouzh e frouezh e vezo barnet labour pep unan.


ROPARZ HEMON

=====

C.C.P.P. N°36.242

Le Gérant : Mlle Y.Martin, 21, rue de Dixmude, St.Marc, Brest

Ronéotypé par Rincazaux, 1, rue Alain Fournier, Brest.



Revue mensuelle-N°22-October 1960 Kelaouenn vizeiek-Niv.22-Here 1960
Abonnement annuel : 7 NF. Koumanant-bloaz : 7 LN.
CCP.RENNES 1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, St.Marc, BREST.

PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON

111
111
111
111
111

AR MIZ

111 BRO-GONGO : An Ao.Hammarsklöld a voe kavet mat e obererezh e Bro-
111 Gongo en ur vodadeg ispisial eus ar C'huzul Surentez dalc'het e New
111 York d'an 21 Eost. Dileuridi Rusia ha Polonia hepken a enebas.
111 P_Lumumba a zisklerias d'ar 26 Eost e rankje nerzhioù ar Broadoù
111 Unanet dilezel Bro-Gongo kerkent ha ma vije aet ar soudarded velgiat
111 kuit.
111 D'ar 27, soudarded Lumumba a gemeras Bakwanga, kêrbenn rannvro
111 g-Kasai, a oa bet diskleriet "Stad dizalc'h" gant he rener A.Kalonji.
111 E Kasai e kaver unan eus pinvidikañ diamantegoù ar bed.
111 An nerzhioù belgiat a guitaas Bro-Gongo evit mat d'an 30 Eost.
111 (Lod, avat, a lavarer, a chomas).
111 D'ar 5 Gwengolo, ar Prezidant Kasavoubou a zisklerias diwar skin-
111 lec'h Kerleopold e oa bet kaset Lumumba kuit, hag anvet J.Ileo da
111 Gentañ Ministr en e blas. Nebeut goude, Lumumba a zeuas d'e dro d'ar
111 skinlec'h. Diskleriañ a reas e oa torret Kasavoubou diouzh e garg
111 evel treitour d'ar vro.
111 Diwar neuze e voe diaes gouzout piv oa mestr e Bro-Gongo. Nerzhioù
111 ar Broadoù Unanet a serras skinlec'h Kerleopold hag a strobas
111 roudennoù-douarañ an aerborzh da virout ouzh kirri-nij da implij
111 anezho.
111 Lumumba avat a voe votet fiziañs dezhañ gant div Gambr ar
111 Parlamant. D'an 8 Gwengolo ez eas soudarded Lumumba e-barzh Katanga.
111 Kuzul Surentez ar Broadoù Unanet, war c'houlenn Hammarskjöld, en
111 em vodas d'an 9. Daleet e voe, avat, gant darvoudoù nevez e Bro-Gongo.
111 D'an 10 e teuas ar c'heloù e oa bet dizarmet soudarded Lumumba
111 gant soudarded ar Broadoù Unanet. D'an 11, Lumumba a voe miret outañ
111 komz diwar skinlec'h Kerleopold gant un ofiser saoz yaouank e penn ur
111 bagad soudarded eus Gana. Dileuridi karget gant Lumumba da vont dirak
111 ar C'huzul Surentez a voe graet dezho distreiñ war o c'hiz pa errujont
111 e Kervrazza. Dileuridi all, kaset a-berzh ur gouarnamant nevez savet
111 gant Kasavoubou, o doa gallet mont da New York. Paotred Lumumba en em
111 zibabas a-benn ar fin da vont ivez.
111 Ken luziet e voe ar c'heloù goude se ma voe tost d'ar C'huzul
111 Surentez teurel an trebez war-lerc'h ar billig. Lumumba, a oa bet
111 bac'het d'an 12, a lavared, a oa en abardaez-se end-eeun o pourmen

gant ur c'harr-tan dre ruioù Kerleopold en ur huchal "Trec'h !" en ur megafon. 111

Un taol-souezh a c'hoarvezas d'ar 14 Gwengolo : ar C'horonal Jozeb Moboutou, penn uhelstrollad an arme, a embannas e vije renet Bro-Gongo gant an arme betek fin ar bloaz, o tiskar war un dro Lumumba, Kasavoubou hag ar C'hentañ Ministr Ileo. Reññ urzh a rae ivez d'an "deknikourien" rusian ha d'ar gannadourien soviedek da guitaat ar vro, pezh a rejont. 111

Dizurzhioù grevus a darzhas en devezh-se e Manono, Katanga, etre ar boliserien hag ar meuriad Balouba. 15 den, a lavarar, a voe lazhet. An dud wenn a oa eno a oa gwarezet gant Iwerzhoniz ar Broadoù Unanet. 111

D'ar 15 ez eas Lumumba d'ar C'hamp Leopold, e soñj lakaat an arme a-du gantañ. Ret e voe dezhañ, avat, klask repu e ti ofiserien c'hanaat ar Broadoù Unanet, a viras outañ da vezañ re wallgaset gant soudarded e vro. 111

D'ar 16 e voe divizet bodañ ur Vodadeg Veur ispisial eus ar Broadoù Unanet e New York da embreger kudennoù Bro-Gongo. 111

MALI DISRANNET : Bro-Senegal en em rannas d'an 21 Eost diouzh Soudan-Gornog, o tiskar evel-se Kevredad Mali. Pennabeg an disrann a ziskouez bezañ kevezerezh etre Modibo Keita, rener Soudan, ha Mamadou Dia ha Senghor, renerien Senegal. Modibo Keita a c'houlennas digant Kuzul Surentez ar Broadoù Unanet studiañ ar gudenn. 111

KRUCHTCHEV E FINLAND : Kruchtchev a zougouezhas d'an 2 Gwengolo en Helsinki, evit lidañ, emezañ, 60-vet deiz-ha-bloaz ar Prezidant Kekkoen. 111

BODADEG VEUR AR BROADOÙ UNANET : Pennoù-gouarnamant e-touez ar re vrudetañ eus ar bed a zeredas da New York da gemer perzh e Bodadeg Veur ar Broadoù Unanet (20 Gwengolo) : Kruchtchev, Kadar, Tito, Fidel Castro, Nehru, h.a. 111

Kruchtchev a guitaas Kaliningrad (Königsberg) e bourzh ar mor-dreizher "Baltika". Gouarnamant ar Stadoù Unanet a roas dezhañ da c'houzout e tleje chom e Manhattan. Heñvel a voe graet e-keñver Fidel Castro ha darn eus ar renerien soviedek. 111

KUZULIADEG SAN JOSE : Ministred-Diavaez gouarnamantoù Amerika en em vodas e San Jose, Kosta Rika, e miz Eost. Sinet e voe ur mennad o kondaoniñ emellerezh Nannamerikiz en aferioù Amerika. War se e kuitaas dileuridi Guba sal ar Guzuliadeg. 111

KORVENTENN ER STADOÙ-UNANET : Ur gorventenn lesanvet Donna a wastas aodoù atlantek ar Stadoù-Unanet e derou Gwengolo. Ouzhpenn 100 den a voe lazhet, ha distruj bras graet. 111

BALDOEN GOUESTLET E DIMEZIN : D'ar 16 Gwengolo e voe roet da c'houzout e oa gouestlet e dimeziñ ar Roue Baldoen eus Belgia hag ur Spagnolez, Doña Fabiola de Mora y Aragon. 111

=====
KAVIT MIGNONED NEVEZ DA A B K
 =====

111
111 KENDALC'H KELTIEK ABERYSTWYTH
111

111 Ar C'HENDALC'H KELTIEK a zo bet dalc'het hevlene en Aberystwyth,
111 eus an 8 d'an 13 a viz Eost. War-dro 100-150 den o deus heuliet atav
111 ar prezegennoù, hag, evit an abadennoù sonerezh ha kaniri roet diouzh
111 an noz, ez eo bet bepred leun-chouk ar sal. Unan eus an abadennoù-se
111 a zo bet skinet gant BBC Kembre, ha dileuridi eus ar broioù keltiek o
111 deus komzet ivez dirak uhelgomzer radio Kembre. Degemeret eo bet tud
111 ar C'hendalc'h gant uhelidi kêr Aberystwyth, - ar maer, ha rener ar
111 skol-veur, da skouer, - ha labourioù ar C'hendalc'h a zo bet danevellet
111 er c'hazetennoù, e saozneg hag e kembraeg. Kement-se da ziskouez
111 peseurt berzh-mat en deus bet ar C'hendalc'h.

111 DILEURIDI VREIZH Eus Breizh ne oa bet nemet 7 den o tont, goude m'eo
111 kouezhet klañv P.Lemoine, eus ar re o doa prometet
111 dont, ha dalc'het R.Huon er gêr gant diaezamantoù a bep seurt. Dileur-
111 idi Breizh a oa an It.de Bellaing, Yann Ar Beg hag e wreg, Armel
111 Geraod, Per Denez hag e wreg. Mantrus eo na vefe ket muioc'h a dud o
111 tont d'ar c'hendalc'hioù-

111 -se : gouzout a ran e
111 vezont graet e saozneg
111 hag ez eo hir ha koustus
111 ar veaj. Met talvezout a
111 reont ar boan e meur a
111 gefiver, hag ur gounid e
111 vefe kaout muioc'h a
111 Vrezhoned enno.

XXX
*
* Buhez ABK
* eus ar 15 Gouere d'ar 15 Eost :
*
* 7 koumanant a zo bet paeet
* (en o zouez 2 goumanant nevez)
*
* Profoù :
* An Ao.Kadoret 3 LN
* An Dim.M.Gourlaouen (1) ... 7 LN
* en holl : 10 LN
* (1) disofijet er rolloù
* embannet a-raok.
*
XXX

111 LABOUR Labour a zo bet
111 bet graet er
111 C'hendalc'hLse. Prezeg-
111 ennoù a zo bet diwar-
111 -benn lennegezhioù ar

111 broioù keltiek, an arz er broioù keltiek, an emsavioù yaouankiz, an
111 embannerezh hag ar skingomz. Kredif a ran ez eo bet an endervezh
111 diwezhañ, - diwar-benn an embannerezh hag ar radio, - an hini
111 plijusañ ha talvoudusañ-holl, zoken ma'z eo bet eehu an abadenn,
111 siwazh, a-raok ma vije bet amzer d'ober ar goulennoù ha da zivizout
111 da heul evel kustum. Kement a venozioù a zo bet displeget en abadenn-
111 -se (da bep hini er broioù keltiek d'ober e vad diouto), kement a
111 zisplegadurioù a zo bet roet, ma oa gant pep unan keuz ouzh he gwelout
111 oc'h echuiñ ken buan, - zoken da vont da gaout ur pred mat !
111 Un nebeut sifroù : e Kontelezh Keredigion (53.000 den o chom enni,
111 79,5% anezho kembraegerien) ez eus bet amprestet el levraouegoù
111 100.000 levr kembraek. Gwir eo ez eus bet amprestet 500.000 levr
111 saoznek e-pad ar memes amzer, met embannet e vez 20.000 levr saoznek
111 ar bloaz e Breizh-Veur, pa ne vez embannet nemet ur 100 bennak e
111 kembraeg. Raktresoù bras a zo da embann muioc'h a levrioù kembraek :
111 ur skoazell 25.000 lur sterling (war-dro 35 milion a lurioù kozh gall)
111 a vo roet evit levrioù bugale, hag ur skoazell all a 20.000 lur

sterling (war-dro 30 milion) a vo roet evit levrioù evit an dud en o oad. An arc'hant o tont eus keffioù ar skolioù, pe gefioù ar c'hêrioù ha kontelezhioù. Adalek 1930 en deus Urdd Gobaith Cymru gwerzhet ouzhpenn 300.000 levr kembraek, ha bep miz ez embannont kelaouennoù, a vez gwerzhet diouto ouzhpenn 40.000 skouerenn.

DIDUAMANT E-keffver diduamant eo bet ar C'hendalc'h unan eus ar re wellañ ivez. Teir abadenn sonerezh a zo bet diouzh an noz. An holl vroioù keltiek o deus kemeret perzh e div anezho. Ur wech muioc'h on bet bamet gant ar pezh a c'hell Kembreiz ober e-keffver sonerezh : strollad-kanourien Dinas Mawddwy, da skouer, a c'hell bezañ lakaet e-touez ar re wellañ en Europa. Hag ur gêr evel Aberystwyth, n'eo ket ur gêr vras (9.000 den enni, a gredan), he deus gallet diskouez deomp ur strollad kanañ penillion, ur strollad kanourien ha kanerezed eus Aelwyd an Urdd, hag ul laz kanourien madrigal, an holl anezho dispar. Emichañs n'eo deuet dirazomp nemet ar re wellañ e-touez strolladoù ar gêrig-se ; re all a zo, sur-mat. Ur skouer evidomp. Ur skouer all, a garfen e vefe heuliet e Breizh : displegañ barzhonegoù eilet gant an delenn, evel m'he deus graet Nansi Hayes ; eus ar fromusañ. Petra menegañ c'hoazh, kement a draoù brav a oa : "dawns y gloesen", sur-mat, an dañs gant botoù soliet e koad, un dañs-paoatr eus ar re souezhusañ. Hag, evel just, ma tilezer Kembre, dañsoù Iwerzhon ha Skos.

GWELADENNOU Teir gweladenn, ken talvoudus an eil hag eben, a zo bet graet : unan e Kreizenn-Studi al Louzeier, - brudet dre ar bed a-bezh, - e-lec'h ma vez studiet dreist-holl ar melchon hag ar c'herc'h, ha krouet seurtoù nevez hervez ezhommoù al labourerien-douar; unan el Levraoueg Vroadel, atav ken famus da welout evit ur Breizhad, kement a vez graet da saveteiñ ha da lakaat e gwel al levrioù kembraek; unan da abati kozh Ystrad Fflur, ha dre greiz Bro-Geredigion. N'oufen lavarout pehini eus ar gweladennoù-se a zo bet ar blijusañ.

AR C'HEMBRAEG Daoust hag e lavarin c'hoazh pebezh lec'h a enor en deus ar c'hembraeg e pep lec'h : gwelet e vez war ar skritelloù en holl ensavadurioù, komzet e vez gant ar gelennerien skol-veur koulz ha kargidi ar maerdi, ur yezh a vez sellet outi ha graet outi evel ur yezh.

DEGEMER MAT An degemer graet dar C'hendalc'h a zo bet eus an hegaratañ : degemeret omp bet gant tud ar maerdi, ar skol-veur, al Levraoueg Vroadel, ar Greizenn-Studi ar Plant, ar Gontelezh. Hag en tiez prevez e-lec'h m'omp bet lojet, hon eus kavet holl un degemer eus ar c'halonekañ, roet gant ur vignoniezh eeun ha didro. Lizheroù a drugarez (e kembraeg pe e brezhoneg) a zo bet kaset en anv ar Skourr hag en anv an dileuridi d'an Henadur H.I.Owen, maer Aberystwyth, d'ar Penngelenner Thomas Parry, rener ar Skol-Veur, d'an Ao.Philip Davies, sekretour a ti-kêr, d'an Dim.Roberts, sekretourez Skourr Kembre, d'an It.Phillips ha d'an It.R.O.Davies, e karg strollad al lojañ, d'ar C'helenner Jones-Pierce, en doa renet ar valeadenn en Ystrad Fflur, d'ar C'helenner Thomas, rener ar Greizenn-Studi ar Plant, d'an Ao.Jones, rener al Levraoueg Vroadel. Ul lizher e saozneg a zo

111 bet kaset ivez da Varnour-Meur Iwerzhon, Conchubar Maghuidir, hag a oa
111 e penn an dileuriadoù keltiek. D'an holl re-se hon eus lavaret hag ez
111 a lavaromp trugarez.

PER DENEZ

111 XXX
111 Ar c'hemennadurioù da ABK a dle bezañ kaset a-raok an 10 eus ar miz
111 d'an diwezhatañ evit bezañ embannet war niverenn ar miz goude. Kas
111 anezho da Roparz Hemon, 1-a, Leeson Park, Ath Cliath (Eire).

111 XXX

BODADeg VEUR SKOURR BREIZH
AR C'HENDALC'H KELTIEK

111 28 a dud o deus kemeret perzh er Vodadeg Veur, dalc'het e Louaneg,
111 d'an 8 a viz Gwengolo 1960. An Ao.AR FLOC'H, person Louaneg, a zo anvet
111 da gadoriad. An Dim.I.MARTIN a zo anvet da sekretourez.

111 LABOUR AR MINTIN

111 Lennet eo, gant ar c'hadoriad, danevellskrid ar Vodadeg Veur a
111 warlene.

111 Goude se, danevellskrid an Deñzorierez evit kontoù ar Skourr e
111 Breizh hag en Iwerzhon.

111 Erfin, danevellskrid Kadoriad ar Skourr.

111 Degaset eo da soñj d'an dud e tle bezañ e BREIZH e 1962 ar
111 C'hendalc'h Keltiek Etrevroadel, hag e vo ret, azalek penn kentañ 1961,
111 kregiñ da zastum arc'hant evit se.

111 Divizet eo goulenn digant an izili a zo er sal mouezhiañ evit
111 kement-mañ :

111 a) Asantiñ ober ar Vodadeg Veur hiviziken e-pad an hafv.

111 b) Adenvel ar Poellgor evel m'emañ, nemet, o vezañ m'eo roet
111 e zilez gant an Ao.DUBOURG, envel Youenn OLIER en e lec'h.

111 Displeget eo ar paperennoù-votif : an holl a zo a-du gant ar
111 ar c'hinnigoù.

111 Setu amañ roll ar Poellgor, anvet betek Bodadeg Veur 1963 :

111 An Ao.ROPARZ HEMON (Kadoriad), an Ao.P.DENEZ (Sekretour etre-
111 keltiek), an Dim.I.MARTIN (Teñzorierez ar Skourr ha Mererez ar
111 gelaouenn), an It.GALBRUN, an It.DE BELLAING, an Ao.Ao.L.AR FLOC'H,
111 KLERG, R.HUON, Y.AR BEG, P.EVEN, P.LEMOINE, Y.OLIER.

111 Divizet e voe ivez klask un den d'ober war-dro ar sekretouriezh
111 evit reiñ lañs d'an emvodoù.

111 LABOUR AN ENDERVEZH

111 A-zivout an emvodoù, an It.KEMERE a asant aozañ daou emvod e
111 Kemper, an hini kentañ da vezañ d'an 29 a viz Kerzu.

111 Ronan Huon a gomz dimp eus kreskidigezh AL LIAMM. E Gwengolo 1959
111 e oa 455 koumananter. E Gwengolo 1960 e oa 458, daoust ma'z eo bet
111 kollet 29 koumananter e-pad an amzer-se. Dirak an diaesterioù, ret e vo
111 marteze, pe ober un nebeut niverennoù bihanoc'h, pe kreskiñ priz ar
111 c'houmanant.

lll
lll
lll
lll
lll
lll
lll

MERC'HED, DRE DRUEZ ...

(Voi, che sapete ...

Nozze di Figaro, Mozart

hervez komzou Lorenzo da Ponte)

KERUBINO (Soprano) :

2/4 Andante con moto

lll Merc'hed, dre druez,
lll Klevit va doan !
lll Gant ar garantez,
lll Mervel a ran.
lll Gant ar garantez
lll Mervel a ran.

/sb-Fa'Fa'/do-Fa-/
/re-sb'.do"re'.mb"/do- -/
/re-mb'mi'/fa'.re"sb' '/
/do-rb're'/mb- -/
/fare'fa're'/domb'domb'/
/sb-la'.sb"do'.re"/sb- -/

lll Broudet e vezan,
lll Ha noz ha deiz.
lll Un tan hep ehan
lll A zev em c'hreiz.

/do-do'do'/remifare"do' '/
/Sol'.la"sb'do'/sb+la- -/
/re-mi'mi'/fa'.re"la' '/
/la'.re"do'si'/do- -/

lll Terzhienn zo ennon.
lll Va gwad a verv.
lll Se zo d'am c'halon
lll Ha dous ha c'hwerv.

/do-do'fa'/mido'sb' '/
/la-Fa'sb'/la+Sol- -/
/do-dore"mifa"/famiredo"sb' '/
/lb-Sol'Fa'/do- -/

lll Souden, va ene
lll A losk, a graz.
lll Ur pennad goude,
lll Ez on yen-sklas.

/do-do'do'/mb-rb-/
/rbsb'Sol'Rb'/Do- -/
/mbdo'mb'do'/sbrb'sbrb'/
/lb-do+sb'.lb"/lb- -/

lll Anken va spered
lll Zo lemm ha don.
lll Merc'hed, m'hoc'h asped,
lll Kollet ez on !

/do-do'do'/dorembre"do-/
/mb-re'do'/Sol:/
/mb-re'dd'/re-sb-/
/la-re're'/Sol- "


lll Atav e krenan.
lll Ne badan ket.
lll Atav e c'hedan,
lll Hep spi ebet.
lll Poan, noz ha beure,
lll A zo ganin.
lll Va foan koulskoude
lll Zo plijus din.

sb"sb"sb"/dosb"sb' "
sb"sb"sb"/Sol' '
do'do"do"/redo"do' "
do"do"do"/la- "
re"re"re"/mbre"re'
re're"re"/sb'
sb'mb'mb'/mb'.fa"re-/
/rb-do'sb'/Fa:/

lll Merc'hed, dre druez,
lll Klevit va doan !
lll Gant ar garantez,
lll Mervel a ran.
lll Gant ar garantez,
lll Mervel a ran.
lll Gant ar garantez,
lll Mervel a ran.

/sb-Fa'Fa'/do-Fa-/
/re-sb'.do"re'.mb"/do- -/
/re-mb'mi'/fa'.re"sb' '/
/do-rb're'/mb- -/
/fare'fa're'/domb'domb'/
/sb-Fa'.Fa'/Re- -/
/fare'fa're'/domb'domb'/
/sb-la'.sb"do'.re"/sb- -/

lll



LENA GOANT

(War un ton a Gembre : Mentra, Gwen.)

1.
Perak e vouzhit-hu,
Lena goant, Lena goant ?
Hag e rit selloù du,
Lena goant ?
Pa lugern flamm ar mintin,
Pa vez ar bed ken lirzhin,
Yaouankiz a rank c'hoarzhin.
Deut ganin-me, Lena goant.

2.
Ur roufenn war ho tal,
Lena goant, Lena goant !
O foei d'an nec'h, d'ar chal,
Lena goant !
C'hwil 'oar, ar gaerañ rozenn
Ne bado ket da viken.
An amzer prim a dremen.
Deut ganin-me, Lena goant.

2/4
Re'/Sol'.si"la'.do"/si-
re'.si"/Sol-la'.Fd"/Re- '
Re'/Sol'.si"la'.do"/si'.la"
Sollasi"dd"/re- '
re'/re'.do"si're'/re'do' '
do'/si'.la"Sol'si'/si'la' '
Re'/Sol'.si"do'la'/Fd'Re'
do'mi'/re"si'.la'.si"/Sol-^

3.
Ur skleurig war ho kweuz,
Lena goant, Lena goant !
Deut, n'ho po ket a geuz,
Lena goant !
Ho preder hag hoc'h enkreuz
A droio da levez,ez,
E liorz ar garantez.
Deut ganin-me, Lena goant.

EVIT AR VUGALIGOÙ : MALBROUG A YA D'AR BREZEL

1. Malbroug a ya d'ar brezel. (3 gwech) O vont a-dreñv an arched,
Pegoulz e teuy d'ar gêr ? (3 gwech) Pevar ofiser bras.

2. E wreg a zo glac'haret.
Pignat 'ra 'barzh an tour.

3. Ha pa ne c'hell mui pignat,
Uheloc'h ne da ket.

4. A-bell e wel he floc'hig,
Hag eñ gwisket e du.

5. - Va floc'hig, din livirit,
Perak e leñvit-hu ? -

6. - Bet on, itron, er brezel.
Gwelet em eus ho kwaz.

7. Ho kwaz e-barzh un arched.
E benn oa 'liv d'ar c'hoar.

8.
9. Gant unan oa e gleze,
Gant unan oa e dog.

10. Gant unan oa e chupenn,
Gant unan ne oa mann. -

11. An itron, p'he deus klevet,
A gouezh eus lein an tour.


12. A gouezh ouzh treid he floc'hig.
Izeloc'h ne da ket.

13. Hag en iliz o kanañ,
Oa pevar beleg bras.

14. O kanañ al Libera (3 gwech)
Da Valbroug ha d'e wreg.

(Ur wech hepken, goustad).

PEP GWIR MIRET-STRIZH : Skrid brezhonek ar sonioù-mañ ne c'hell bezañ moulet, liesskrivet, lakaet war blanedennoù nag embannet e doare ebet hep aotre. Evit kaout aotre aotre, skrivañ da ABK.



En ur miz
e c'hell ho mignoned
deskiñ DIAZEZ AR BREZHONEG
ha lenn DALC'HOMP !

Niv.44

DESKIÑ BREZHONEG

111
111
111

111 Emaomp e miz Here. Echu an ehan-skol pe an ehan-labour. Kalz a
111 dud a grog d'ar c'houlz-mañ gant studi ar brezhoneg.

111 Anaout a rit hep arvar, e-mesk ho mignoned, unan, - marteze
111 daou pe dri.

111 Bez' e c'hellit harpañ ar vignoned-se.

111 Lakaat a reomp :

111 1) Ez int tud speredek ha desket. (N'eus nemet tud speredek ha
111 desket, hiziv an deiz, a studi ar brezhoneg).

111 2) Ez int brogarourien. (Deskiñ brezhoneg a zo ur blijadur, met
111 an hini a gar Breizh en deus muioc'h a galon da zeskiñ eget ar re all).

111 AN DAOU HENT PENNAÑ

111 Bez' ez eus kant doaré da zeskiñ ur yezh.

111 Met setu amañ an daou hent pennañ da zeskiñ brezhoneg :

111 1) DESKIÑ DRE LIZHER : Roit d'ho mignoned ar chomlec'h-mañ :
111 Skol OBER, renet gant an Dimezell M.Gourlaouen, 30, rue de la Corderie.
111 Douarnenez. Ar c'hentelioù a vez graet evit netra. N'eus nemet an
111 timbroù da baeañ.

111 2) DESKIÑ GANT LEVRIOU : Ar re a gav gwelloc'h deskiñ o-unan,
111 hep kelenner, a rank prenañ daou levrig :

111 "Cours Élémentaire de Breton", gant Roparz Hemon, priz 4,20 LN.

111 "Grammaire Bretonne", gant Roparz Hemon, priz 3,10 LN.

111 (An daou levrig-se a vez graet ganto ivez e Skol OBER).

111 O frenañ a c'heller digant : P.Bodenan, Stang ar C'hoad,
111 Kerfeunteun (Fin.), CCP.Rennes 212-23.

111 O c'havout a c'heller ivez er stalioù-levrioù. Mar da ho mignoned
111 en ur stal-levrioù, lavarit dezho diwall : kinniget e vo dezho

111 marteze gant ar marc'hadour levrioù all da zeskiñ brezhoneg, gant
111 goloioù brav. Arabat d'ho mignoned bezañ touellet. Evit deskiñ mat ha

111 buan, n'eus netra par d'an daou levrig-se gant Roparz Hemon. Gant
111 an daou levrig-se e tesker DIAZEZ AR BREZHONEG.

111
111 DIAZEZ AR BREZHONEG

111 DIAZEZ AR BREZHONEG a zo ennañ ar gerioù retañ, war-dro 1400 en
111 holl. E-mesk ar 1400 ger-se, ez eus 400 da vihanañ a zo damanavezet

111 dija gant ho mignoned, dre ma'z int heñvel ouzh gerioù gallek, evel
111 pont, tour, karr, priz, koust, dant, kompren, h.a.h.a.

111 Ar MIL all a c'heller deskiñ e berr amzer.

111 DIAZEZ AR BREZHONEG n'eo ket bet graet n'eus forzh penaos. Roll
111 ar gerioù a zo bet savet gant Roparz Hemon goude labourioù hir,

111 hervez doareoù merket gant gouizieien vrudet. An doareoù-se o deus
111 talvezet da sevel DIAZEZ AR SAOZNEG ("Basic English", degemeret gant

gouarnamant Bro-Saoz). DIAZEZ AR GALLEG (evit kelenn galleg dre ar bed-holl), DIAZEZ AR SPAGNOLEG, DIAZEZ AR RUSIANEG, h.a. 111

Gant DIAZEZ AR BREZHONEG e c'heller kompren un darn vras eus ar skridoù brezhonek, ha lavarout an darn vrasañ eus ar pezh a zo ezhomm er vuhez. 111

LENN

An den a grog gant studi ar brezhoneg (pe ur yezh all, n'eus forzh pe hini) a labour mat e-pad ur pennad. Neuze e teu da skuizhañ. 90 % eus ar re o deus prenet levrioù da zeskiñ pe o deus heuliet un nebeut kentelioù a goll kalon. 111

Perak ? 111

Dre ma kav dezho e tremeno re hir amzer a-raok ma vint gouest da dennañ plijadur eus ar pezh a zeskont, pe da lakaat ar pezh o deus desket da dalvezout. 111

An dra-se a c'hoarvez peurliesañ goude ur miz. 111

Neuze eo dreist-holl e c'hellit harpañ ho mignoned. 111

Penaos o harpañ ? 111

Dre lakaat anezho da lenn, dre ziskouez dezho ez eus traoù a c'hellont lenn, ya, goude ur miz, zoken hep bezañ echuet studi ar "Cours Élémentaire". 111

Bez' ez eus hiziv ur rummad skridoù aes, graet a-ratozh, enno netra nemet gerioù DIAZEZ AR BREZHONEG ha gerioù aes all. 111

Setu amañ roll ar re a c'heller prenañ :

"Alanig an Tri Roue", romantig, 4,00 LN. 111

"An Ti a Drizek Siminal", romant-polis, 4,95 LN. 111

"Ar C'horf dindan Dreid va Zad-Kozh", romantig-polis, 0,50 LN. 111

(Goulenn anezho digant P.Bodenan pe en ur stal-levrioù). 111

Met, bez' ez eus gwelloc'h c'hoazh eget al levrioù-se d'ar re nevez aet war studi ar brezhoneg : DALC'HOMP, embannet bep miz war AR BED KELTIEK. 111

Lakañ ho mignoned da goumanantiñ d'AR BED KELTIEK. Ne goust nemet 7,00 LN. ar bloaz. (CCP.Rennes 1907-07, "Ar Bed Keltiek", 21, rue Dixmude, Brest). 111

N'eo ket hepken DALC'HOMP a c'hellint lenn. Gouest e vint da gompren hep re a boan keleier ar miz, ha darn eus ar pennadoù all. Kavout a raint, bep miz, kanacuennoù a c'hellint kanañ (un harp dispar d'an hini a zeske ur yezh). 111

C'hwi a c'hell ober kalz da greskiñ niver ar vrezhonegerien, dre reiñ harp hag ali d'ho mignoned. Met, dalc'hit soñj : na roit nemet harp talvoudus hag ali mat. 111


XX 111

XX 111

C.C.P.P. N° 36.242. 111

Le Gérant : Mlle Y.Martin, 21, rue de Dixmude, St.Marc. Brest. 111

Ronéotypé par Rincazaux, 1, rue Alain Fournier, Brest. 111



Revue mensuelle-N°23-Novembre 1960 Kelaouenn vizek-Niv.23-Du 1960
Abonnement annuel : 7 NF. Koumanant-bloaz : 7 LN.
CCP.RENNES 1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, St.Marc, BREST.

PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON

- 111
111
111
111
111
111 DRE AN DOUAR
- 111 BODADEG VEUR AR BROADOU UNANET : A-raok ar Vodadeg Veur e oa bet ur
111 vodadeg ispisial, a votas fiziañs d'an 19 Gwengolo d'ar Sekretour
111 Meur Hammarskjöld.
111 Ar Vodadeg Veur ordinal, ar bemzekvet, a zigoras d'an 20.
111 Dileuriad Iwerzhon, F.H.Boland, a voe anvet da Brezidant. 14 ezel
111 nevez a voe degemeret : Kameroun, Togo, Madagaskar, Somalia, Dahome,
111 Bro-Gongo, Niger, Volta-Uhelañ, Aod an Olifant, Tchad, Gabon, Republik
111 Kreiz-Afrika, Bro-Gongo-Gornog, Kiprenez.
111 D'an 22, Eisenhower a reas ur brezegenn, o c'houlenn ma vije
111 adkroget gant ar c'hendivizoù-dizarmañ, ma vije etrevroadelaet an
111 Ec'honder, ma vije harpet Afrika, ha dalc'het er-maez eus ar Brezel
111 Yen.
111 D'an 23 e voe tro Kruchtchev da gomz. Tagañ garv a reas Hammar-
111 skjöld, o kinnig ma vije lakaet e-lec'h ar Sekretour Meur ur stroll-
111 -seveniñ, enañ 3 den, unan a-berzh ar C'hornog, unan a-berzh ar
111 Stadoù Soviedek, unan a-berzh ar Stadoù neptu. Goulenn a reas ma vije
111 kaset pennlec'h ar Broadoù Unanet da Suis pe Aostria (pe Rusia !), ma
111 vije dizarmet diouzhtu, ha roet diouzhtu o emrenerezh d'an holl
111 drevadennoù.
111 D'an 28 e voe degemeret Senegal ha Mali (gwechall Soudan) er
111 Broadoù Unanet.
111 D'an 29 e reas Macmillan ur brezegenn, troc'het a vare da vare
111 gant Kruchtchev o youc'hal pe o skeiñ war an daol dirazañ.
111 D'an 30, Nehru, Soekarno, Naser, Tito ha Nkrumah a c'houlennas ma
111 vije emweladenn etre Kruchtchev hag Eisenhower, en aner, avat.
111 D'an 3 Here, Kruchtchev a c'houlennas ma roje Hammarskjöld e zilez.
111 Hemañ a nac'has.
111 Kruchtchev a guitaas ar Stadoù Unanet d'ar 14 Here. Kalz a drouz
111 en doa graet, ha nebeut a verzh.
111
111 KOSTEZENN-LABOUR BREIZH-VEUR EN ARVAR : E Bodadeg Veur ar Gostezenn-
111 -Labour, e Scarborough, e voe faezhet ar rener Hugh Gaitskell d'ar 5
111 Here, a-zivout kudenn an armoù atomek hag an emzifenn. Ar re a-du gant
111 dilezidigezh an armoù atomek en ur bellaat diouzh an Englev Atlantek
111 a c'hounezas (gant un usniver bihan e gwirionez : 3.303.000 a-enep
111 3.239.000). Orin an tabut, a zo kozh dija, eo : 1) c'hoant ar

Sindikadoù da c'hourc'hemenn, 2) gwarizi etre ar renerien, 3) ober- 111
erezh dre zindan ar gomunourien, a zo en em silet er Gostezenn evit he 111
dismantrañ, hag a ra o mad eus onestiz ar beoc'hgarourien. 111

EMRENEREZH NIGERIA : Emrenerezh Nigeria a voe embannet d'ar 1-afñ Here. 111
Ar vro-se, kement he gorread ha Frañs hag Italia lakaet a-gevret, a zo 111
enni 35 milion a dud. Chom a ra stag ouzh ar Gumuniezh Vreizhveurek. 111

DIZURZHIOU E RODEZIA : 7 Afrikad a voe lazhet, hag ouzhpenn 70 gloazet, 111
e-kichen Salisbury, Rodezia, d'an 8 Gwengolo, e-doug ar grevusañ diz- 111
urzhioù a zo bet biskoazh er vro-se. Stalioù a voe lakaet a-skrap, 111
kirri-tan dispennet, ha tud wenn labezet. 111

PIV A C'HOUARN E BRO-GONGO ? : D'an 20 Gwengolo, dre urzh ar C'horonal 111
Moboutou, e voe anvet ur "Skolaj Skolveurel" da ren Bro-Gongo betek 111
fin ar bloaz. E-lec'h ministred ez eus er c'huzul nevez studierien 111
gongoat, darn anezho nevez 'zo o heuliañ kentelioù e skolioù-meur hag 111
en uhelskolioù estren. An traoù, daoust da se, a chom gwall luziet er 111
vro, ha ne ouzer ket e gwirionez piv a ren. 111

SUAFRIKA A VO REPUBLIK : Er votadeg graet d'ar 5 Here e teuas an 111
trec'h gant gouarnamant Verwoerd. 849.958 a votas evit embann ar re- 111
publik, 775.978 a-enep. An dud wenn hepken o doa ar gwir da votiñ. 111

EN EC'HONDER

PAKET DIWAR NIJ : Ur glozenn distaget diouzh an adplanedenn "Discoverer 111
XIV" a voe paket en ur roued, 3.000 m. a-zioc'h Alaska, gant ur c'harr- 111
-nij amerikan d'an 19 Eost. Ar glozenn a voe dizoloet dre radar, hag 111
hi o kouezhañ diouzh an Ec'honder. Ur glozenn all, taolet gant 111
"Discoverer XV", a voe kavet er mor d'ar 15 Gwengolo. 111

DISTRO DIOUZH AN EC'HONDER : An oabllestr bet taolet gant ar Rusianed 111
d'an 19 Eost a zistroas d'an Douar d'an 21. An oabllestr a zouaras 111
diouzh un tu, hag ur glozenn, enni anevaled, diouzh un tu all. Daou gi 111
a oa e-barzh. Kavet e voent yac'h, hag ivez an anevaled all. 111

C'HWITADENN : D'ar 25 Gwengolo e klaskas an Amerikaned teurel un ad- 111
planedenn d'ober tro al Loar. Ur c'hwitadenn e voe, avat. 111

UN EMPENN MAGNETEK ER VANN : Eus Kab Kanaveral, d'ar 4 Here, e voe 111
bannet gant an Amerikaned un adplanedenn, anvet "Kourier I-B", enni un 111
doare empenn magnetek. Kemennadurioù a c'hell bezañ kaset drezañ dre 111
bellskriverez herrek-tre, 68.000 ger ar vunutenn. Ar Bibl a-bezh, a 111
gonter, a vefe enskrivet hag adkaset e 12 munutenn. Bez' ez eo an hini 111
gentañ en ur rouedad adplanedennoù da implijout gant serwij-kelaouiñ 111
an arme. Pouez : 250 Kg. Treuz : 1 m. 50. Kelc'hdroad : etre 800 ha 111
1200 Km. diouzh an Douar, o lakaat 105 munutenn da ober an dro. 111

LOGOD EN EC'HONDER : Teir logodenn du a voe taolet 1100 Km. diouzh an 111
Douar d'an 13 Here eus Kab Kanaveral, e-barzh ur glozenn heñvel ouzh 111
an hini a implijor evit tud. Kavet e voent bev-buhezek er Mor Atlantek. 111

ARBOELLEREZH

ARBOELLEREZH ETREVROADEL

Da wellaat an darempredoù hag ar genwerzh etrevroadel, e tivizas an drec'hourien, e 1944, krouiñ : 1) ar "Gevredigezh-Amprest Etrevroadel" (International Finance Corporation) evit prestañ war verr dermen ha, dre se, kempouezañ talvoudegezh ar moneizoù miret tamm pe damm digempouez abalamour da bolitikerezh gwarezeler ar Stadoù ; 2) an "Ti-Bank Etrevroadel evit an Adsevel hag an Araokaat" (T.B.E.) (The International Bank for Reconstruction and Development) evit prestañ war hir dermen da adkempenn ar broioù ha lakaat da dalvezout ar broioù warlerc'hiet. (En hor sevenadur e ranker kaout arc'hant da lakaat frouezh al labour da dalvezout evit ezhommoù ar vuhez).

Daoust d'e uhelvennad ez a an ti-bank hollvedel en-dro evel un ti-kenwerzh. E arc'hant a denn eus fiziadurioù e izili : 2% en aour pe zollared, 18% e moneiz-Stad an
 ez el, hag ar peurrest e stumm ur
 "gwarant" evit e amprestoù. Er
 bloavezhioù war-lerc'h ar brezel
 e teuas an darn vuiañ eus arc'hant
 e gefioù eus ar Stadoù-Unanet, lod
 digant ar gouarnamant, ha lod all
 digant unanoù : bankoù, kompagnun-
 ezhioù-asurafis, h.a... dindan
 stumm merkoù-leve. Er bloavezhioù
 diwezhañ, avat, ez eo aet lodenn
 ar broioù all war greskiñ, hag
 ouzhpenn an hanter eus fiziadurioù
 an tri bloavezh tremenet a zo
 deuet eus Alamagn ar C'hornog, da
 skouer. An dra-mañ, moarvat, a zo
 abalamour da vrud vat an ti-bank.
 Studiañ a ra gant ar brasañ evezh
 talvoudegezh kredour ha kenwerzh-
 -diavaez ar Stad oc'h amprestiñ,
 hag eveshaat a-dost al labourioù dre ma vezont graet, oc'h aliañ hag o skoazellañ evit ma vezo implijet e arc'hant en doare efedusañ. End-
 -eeun, sikour dispar e ouizieien war an arboellerezh ha war ar
 c'hudennoù micherel a zo deuet da vezañ unan eus perzhioù gwellañ
 an T.B.E.

XX			
X			X
X	<u>BUHEZ</u>	<u>A B K</u>	X
X	eus ar	15 Eost d'ar 15 Gwengolo	X
X			X
X	11	skod pe goumanant paeet	X
X		(1 evit 1959	X
X		8 evit 1960	X
X		2 evit 1961)	X
X			X
X	<u>Profoù :</u>		X
X	An Dim.A.Ar Meliner	4 LN	X
X	An Ao.Lurvois	1	X
X	An Dim.Keilhe	1	X
X			X
X	en holl :	6 LN	X
X			X
X	<u>Bennozh Doue d'hon harperien !</u>		X
XX			

Ne brest an T.E.B. nemet evit embregadurioù resis, ha ne bae nemet koust an enbroadurioù (an dud hag an danvezioù-labour lec'hel a rank an amprester o c'havout e-unan).

Dre vras, setu penaos e voe implijet madoù an ti-bank abaoe e grouidigezh : e 1947 ez eas kalz evit adsevel Europa, hag abaoe, an darn vuiañ eus an arc'hant a zo aet da sikour sevel milinoù-tredan hag hentoù-houarn en Azia, en Afrika hag en Amerika ar C'hreisteiz,

UR VAQUEZ KALONEK

... HA DEUET EO A-BENN !

An It.Eileen BEASLEY
a zo kalonek ha pennek.
Ha deuet eo a-benn !
12 gwech eo bet dirak
al lez-varn : nac'het he
doa paeañ tailhoù.

Perak ?

Abalamour na oa ket
skrivet paperennoù an
tailhanter e KEMBRAEG.

An It.Eileen BEASLEY
a lakaas ouzhpenn mil
den da sinañ ur c'houl-
ennadeg evit ma vije
skrivet ar paperennoù e
yezh ar vro.

Ha Kuzul Maeziat
Llanelli en deus pleget.
Ar paperennoù a vo
skrivet hiviziken e
kembraeg hag e saozneg.

dreist-holl. Labourerezh an dir e Bro- 111
-Japan hag en Indez a voe skoazellet 111
ivez, hag ijinerezhioù a voe krouet e 111
e kreisteiz Italia. 111

An T.E.B. ne fell ket dezhañ reiñ 111
harp da embregadurioù bras hepken, hag 111
evit tizhout ar re vihanoc'h en deus 111
digoret tiez-bank disteroc'h er broioù 111
ma prest dezho, evit gallout ingalañ 111
etre kompagnunezhioù bihan. D'an hevelep 111
ampresterien e ro an "Ti-Amprest Etre- 111
vroadel" war gred hep gwarant a-berzh 111
Stad. 111

Evelkent, da gas war-raok embreg- 111
adurioù dic'hounid, evel hentoù, 111
skolioù, ospitalioù hag aezamantou-kêr, 111
e oa ezhomm eus arc'hant amprestet 111
hervez divizoù laoskoc'h. Setu perak 111
emañ renerien an T.E.B. o krouiñ ar 111
"Gevredigezh Etrevroadel evit an 111
Araokaat" (International Development 111
Association) da brestañ arc'hant war 111
hir dermen ha gant interest izel. Dont 111
a ray an arc'hant digant izili an 111
T.E.B., met en dro-mañ e vezo savet 111
evel-hen : 10% en aour pe zollared 111
digant an holl, ar peurrest, en aour 111

ivez etre pemp gwech digant ar broadoù "araokaet" (da lavarout eo : an 111
darn vuiañ eus broadoù ar C'hornog, Bro-C'hall en o zouez), hag en o 111
moneiz-Stad digant ar re all. Ne vezo implijet al lodenn diwezhañ-mañ 111
nemet gant o c'housant hepken. En tu-hont, e c'hell n'eus forzh pe 111
ezel reiñ moneiz estren ouzhpenn e skodenn gant asant ar Stad he deus 111
hen moulet. An dra-mañ a roio tu da vroioù evel ar Stadoù-Unanet d'en 111
em zizober eus an arc'hant a zastumont diwar werzh ar redaolad eus o 111
eostoù (da Bakistan, da Japan, h.a.) 111

Ur seurt kevredigezh, splann eo, a zo bet krouet da skoaziañ ar 111
broioù damc'hounezet : adkavout a raint o arc'hant aet en diavaez evit 111
lakaat o bro da dalvezout, ha se, d'e dro, a greder, a roio lañs d'o 111
c'henwerzh gant an estren hag a zegaso aour dezho. Evel-se e "labouro" 111
an arc'hant er broioù-mañ da uhelaat o derez-bevañ. "Ar pezh," eme 111
renerien ar C'hornog, "a zo ar gwellañ respont d'ar gomunegezh." 111

Labour mat a ra an Ti-Bank Etrevroadel, evel m'hon eus gwelet, 111
hag unan eus an abegoù a ra deomp lakaat hor fiziañs ennañ eo ar 111
wevnded en deus diskouezet kaout evit krouiñ kevredigezhioù gouest da 111
zirouestlañ ar c'hudennoù m'eo enkrezet ganto ar broadoù dieub. 111

EWAN KONAN

Notenn : Gwelout "Kontouriezh", p.41, e niverenn 66 (Genver- 111
-C'hwevrer 1958) eus AL LIAMM evit geriennoù 'zo. 111

***** 111
***** 111

keltelezh

POUEZ AN
DAREMPREDOU
ETREKELTIK

Pep den en deus e venoz a-zivout an darempredoù etrekeltiek. Setu amañ hini an Ao.Y.OLIER, ar skrivagner brudet. ABK a garfe degemer ivez menozioù tud all.

Ar c'henlabour etre ar broioù keltiek a zo unan eus testennoù brudañ an Emsav abaoe ar penn-kentañ. Hogen ret eo anzav n'eo ket deuet a-benn Emsav Breizh, nag Emsavioù ar broioù keltiek all, da zont er-maez eus an diskleriadurioù romantel war an dachenn-se.

Moarvat, abaoe pell 'zo ez eus darempredoù etre ar Gelted : bodadegoù etrekeltiek a zo abaoe ouzhpenn kant vloaz, ha, siwazh, n'eo ket hor c'hendalc'hioù hiziv an deiz gwall zisheñvel diouzh kendalc'hioù ar c'hantved tremenet, - nemet spered lod eus ar gendalc'hidi a ve broadeloc'h evelato. Moarvat eo ledanoc'h hon anaoudegezh eus ar broioù keltiek all. Un toullad mat eus an emsaverion en hor bro o deus desket yezhoù keltiek all hag o deus studiet o lennegezhioù. ROPARZ HEMON e-barzh GWALARN a-raok ar brezel, hag abaoe fin ar brezel e-barzh AR BED KELTIK en deus graet kalz e sell da se. AL LIAMM hag HOR YEZH a ra labour dispar ivez. Hogen, setu dalc'h ar gudenn : n'omp ket deuet a-benn evit c'hoazh da sevel ur gwir genlabour, - pa ne ve nemet war dachenn ar sevenadurezh, - etre ar broioù keltiek.

E pelec'h eo bet dalc'hed Kendalc'h ar Skrivagnerion Geltiek, ar Vistri-Skol Geltiek ? Rak ret eo degemer n'eo ket ar C'hendalc'hioù Keltiek bloaziek evit ober ul labour resis, ha ne dizhont ket zoken menoz an dud er broioù keltiek. Evel-se eta e chom e-leizh da ober, zoken mar fell d'an Emsav etrekeltiek chom war sichenn strizh ar sevenadurezh.

LEDANAAT AN DACHENN Kavout a ra din avat e tleo an Emsav etrekeltiek mont kalz pelloc'h, anez dizeriañ ha mervel a-benn ar fin. Ouzh palioù uhel ha pouezus e ranko bukañ, ha ne c'hello ket chom hep mont war dachenn ar politikerezh.

Dres goude ar brezel diwezhañ e oa bet un adsav politikel breizhat ha n'en deus ket gallet padout, siwazh. E framm an adsav-se e oa bet savet ur gelaouenn bolitikel etrekeltiek, embannet en Iwerzhon, hag a zifenne gwirioù ar broioù keltiek, hogen dreist-holl gwirioù Breizh, a oa gwasket muioc'h eget boaz d'an ampoent. AN AMZER GELTIK an hini e oa.

Moarvat ne vevas ket pell ar gelaouenn-se, peogwir e plede dreist-holl gant Breizh end-eeun. Hogen ar soñj a oa en diazez anezhi a oa mat, hag a zlefe bezañ lakaet da dalvezout.

Ne gredan ket e vefe fur kemer ar stumm kazetenn he doa an dastumadenn-se. Gwelloc'h e vefe hini ur gelaouenn, a vije embannet bep 6 miz, lakaomp, hag a rofe ur rentañ-kont eus politikerezh ar broioù keltiek. Meneget em eus an dezo-se da sekretour Strollad Broadel Kembre, hag a-du e oa gantañ.

BREIZH HA KEMBRE Kredif a ran e vefe mat, da gentañ, diazezañ start 111
 ar c'henlabour etrekeltiek etre div vro damheñvel o 111
 stad, ha soñjal a ran evel just e Kembre ha Breizh. Moarvat ez eus ur 111
 skoilh a bouez war ur poent : n'hon eus ket e Breizh c'hoazh ur 111
 strollad broadel yac'h evel hini Kembre. Evel-se eta ez eo hor c'hent- 111
 añ añ dlead reiñ ur spered gwir vroadel ha keltiek d'ar strollad 111
 politikel nemetañ hon eus e Breizh, ar MOB. 111

D'ar c'houlz-se e c'hellfed ober ur vreuriezh eus ar strolladoù 111
 breizhat ha kembreat. Kendalc'hioù boutin a c'hellfent kaout, gwech e 111
 Breizh, gwech e Kembre. Diwezhatoc'h e teufe strolladoù ha kevred- 111
 igezhioù broadel ar broioù keltiek all da emezelañ er vreuriezh-se. 111

Mennad houmañ a zlefe bezañ lakaat splann kudenn ar broioù 111
 keltiek dirak menoz an dud er broioù all. Drezi ivez e c'hellfe ar 111
 broioù keltiek kregiñ da c'hoari ur roll etrevroadel. Ret eo da holl 111
 Europiz gouzout emañ ar Gelted a-enep d'ar re a asantfe da Europa 111
 rannet etre an "Douar Bras" hag an "Inizi" pe "Vroioù an Aodoù". Evel 111
 just e harpomp savidigezh Europa ar C'hwec'h n'eus forzh penaos, rak 111
 ur c'hammed war-du an unanidigezh ez eo. Gouzout a reomp emañ a-enep 111
 dezhi ar re a garfe e chomfe Europa rannet da vat, hogen ne asantomp 111
 da Europa Vihan ivez nemet evel ur broud da unanidigezh Europa a-bezh, 111
 rak ne c'hellomp ket degemer e vefe dispartiet ar broioù keltiek e 111
 div rannved disheñvel. 111

===

Eus kement-se holl e c'heller klozañ kement-mañ : ar c'henlabour 111
 etrekeltiek, hiziv an deiz, n'eo nemet un derou displetus a-grenn evit 111
 ar poent, rak ne zireñsis ha ne folklorel eo e dachenn, - sevenadurel 111
 sañset. Ha war ar marc'had ne dizh ket menoz an dud tamm ebet. 111

Ret eo eta ledanaat ha resisaat war un dro mennad an darempredoù 111
 etrekeltiek, stankaat anezho ar muiañ ar gwellañ. N'eus nemet an tu-se 111
 a ziogelo keltelezh hor bro, hag a bourchaso da Vreizh, adal bremañ, 111
 ur pouez etrevroadel. 111

YOUENN OLIER

Digant an It. DE BELLAING :

"Da gentañ, ho trugarekaat a 111
 reomp evit ar c'hanaouennoù 111
 kaset deomp. Darn anezho a zo 111

bet kanet e-pad an nozvezhioù laouen. Evit reoù all e vo ret deomp 111
 anavezout mat an ton a-raok o c'hanañ." 111

Digant an Ao.P. EVEN :

"Dudiet-tre omp bet, tud ar beilhadegoù tregeriat, gant ar 111
 c'hanaouennoù a vez embannet bremañ war A.B.K., ha peogwir ez int aes 111
 da zeskiñ, - o vezañ na'z eo anavezet an ton anezho, - o deus un 111
 dalvoudegezh vras evidomp." 111

Digant an Ao. Ewan KONAN :

"Tonket e vez kement linennad ho kelaouenn gant mall kerkent hag 111
 erruet. Monet a ra gant unan d'e gogn da lenn, ha diouzhtu e kri ar re 111

111 all a-gevret : "Piv en deus kemeret ABK ? Me ivez am eus c'hoant da
111 lenn anezhañ ! h.a."

111 Digant an Ao.LURVOIS :
111 Setu amañ va skodenn-vloaz gant ur gerig evit lavarout deoc'h
111 pegen plijus eo din da lenn AR BED KELTIEK, ur gelaouenn hag a stourm
111 gant kement a galon evit Breizh."

111 Digant an Ao.P.DENEZ :
111 "Va gourc'hemenoù kalonek a ran deoc'h evit AR BED KELTIEK :
111 laouen on bet o kavout war an niverenn diwezhañ kanaouennoù ganeoc'h,
111 hag ar gontadenn e brezhoneg eeun a zo atav plijus. Mat e vefe o ad-
111 embann holl a-gevret, pa vo peadra d'ober ul levr (marteze ez eus dija,
111 n'em eus ket sellet). Va bugale a lenn atav gant plijadur. A-hend-all e
111 vin laouen ma kendalc'hit da sevel komzoù evit kanaouennoù etrevroadel :
111 ganto ez eus alies ur varzhoniezh n'eus ket gant ar c'homzoù gallek."

111 EMVOD KEMPER E MIZ KERZU

111 D'an 29 a viz Kerzu ez eus emvod e Kemper gant Skourr
111 Breizh ar C'hendalc'h Keltiek.

111 Setu amañ ar c'hudennoù pennañ a vo studiet :

- 111 1) Skoazellañ ar "Beilhadegoù" hag o astenn dre Vreizh-
111 -Izel a-bezh (kinniget gant P.EVEN).
- 111 2) Ragaozañ Kendalc'h Keltiek 1962 (kinniget gant an
111 Itron DE BELLAING).
- 111 3) Sevel deiziadur emvodoù 1961 (kinniget gant ROPARZ
111 HEMON).


111 SKRIDOU NEVEZ

111 BARR-HEOL, niv.24, Gwengolo 1960. Trimiziek. Koumanant-bloaz, 5 LN.
111 CCP.Rennes 91-764, Abbé Le Clerc, Buhulien, C.du N.

111 Pep tra a zo mat en niverenn-mañ. Pennadoù savet gant tud o vevañ
111 er vro, o welout spis hec'h ezhommoù, ha kalonek a-walc'h da lavarout
111 fraez ar pezh a soñjont : ar Rener, an Ao.KLERG, hag e genlabourerien,
111 an AoAo.TROAL, L.AR FLOC'H, P.BOURDELLEZ, hag ivez BEBEAD. Ar yezh a zo
111 dreist. Pa weler ar boued-spered fonnus roet gant ar gelaouenn-mañ,
111 lennet gant un nebeut Bretoned hepken, hag an diotachoù lonket gant
111 miliadoù ha miliadoù diwar gazetenoù ha kazetenoù gallek, ez eus
111 peadra da brederiañ war frouezh an deskadurezh a roer d'hor pobl.

111 AR VRO, niv.7, Gwengolo 1960. Trimiziek, e brezhoneg hag e galleg.
111 10 LN ar bloaz.CCP.Nantes 1493-79, J.Desbordes, 14, rue Colbert, Concarneau.

111 Danvez-prederiañ puilh da neb a venn sturiañ un emsav politikel.
111 ROPARZ HEMON



NOZKAN
(Schubert)

111 1.
111 War ar pradeier /3la'sb'la'3 re-.la'/
111 Hag ar c'hoadeier, /3Sol'la'Sol'3 re-Sol' ' /
111 Sed an noz o tont. /la-.Sol' 3Sol'Fa'Mi'3 /Fa: - /
111 Goustad e tremen /3la'sb'la'3 fa-.la'/
111 Flourad an aezhenn, /3Sol'la'Sol'3 mi-.re'/
111 Karget-holl a frond. /do-.sb' 3sb'la'Sol'3 /la: - /
111 Gant an oabl e vo dizale /la'.dd"fa-.mi"/re'.la"Fa-.Re'/
111 Ledet e vantell aour, /sbd"o"+3sb'la'sb'3 re-.sb'/la:./
111 Ledet e vantell aour. /Solla"+3Sol'Fd'Sol'3 sb-.Sol'/Fa:./
111 Hag e luskell boem an hufivre /la'.dd"fa-.mi"/re'.la"Fd-.Re'/
111 Anken hon douar paour, /sidd"+3si'ld'si'3 re-.si'/la:./
111 Anken hon douar paour. /3mi'rd'mi'3 sol-.dd'/re:./

111 2. (ton evel a-us)
111 Dindan ar stered, Emañ trouz ar bed o tevel,
111 O muiañ-karet, Hag e striv hag e vall,
111 Deus, o deus ganin. Hag e striv hag e vall.
111 Tefizor kevrinus Ha dirazomp, sed o sevel
111 An noz vurzhodus Kened ur vuhez all,
111 A vo dit ha din. Kened ur vuhez all.

111 3.
111 Eurvad, eñvor, hevoud, ehan /la'.la"dd'.dd"mi'.mi"/re-dd- - /
111 D'hor c'halonoù blin. /la-.dd'mi'.re"/dd: - /
111 Dre al liorz, /fd-.mi' 3mi're'
111 e skleur ar stergann, dd'3 /si'.dd"re-si' ' /
111 O deus, o deus ganin, /sidd"+3si'ld'si'3 re-.si'/la:./
111 O deus, o deus ganin. /3mi'rd'mi'3 sol-.dd'/re:./re- -
111 O deus ganin. re-/sb:./la:./Fd: - //


KENAVO (Auld Lang Syne)

111 1. 2/4
111 Pa vezer gant mignoned vat, Do'/Fa'.Fa"Fa'la'/Sol'.Fa"Sol'
111 An amzer a zo berr. la'/Fa'.Fa"la'do'/re-
111 Atav e c'hoarvez re abred fa'/do'.la"la'Fa'/Sol'.Fa"Sol'
111 Ar poent da vont d'ar gêr. la'/Fa'.Re"Re'.Do"/Fa-.

111 DISKAN
111 Kenavo 'ta, mignoned ker, re'/do'.la"la'.Fa"/Sol'.Fa"Sol'
111 Mignoned, kenavo. la'/do'.la"la'.do"/re-
111 Kuitaat a reomp betek an deiz fa'/do'.la"la'Fa'/Sol'.Fa"Sol'
111 Ma teuimp holl en-dro. la'/Fa'.Re"Re'.Do"/Fa-.

111 2.
111 Ne vern pelec'h e vezimp holl, Ha bremañ, touomp dorn-ouzh-dorn
111 O kantren war ar bed, Da viken derc'hel kloz,
111 An Neñv da reifi dimp yec'hed mat, En amzer vray, en amzer fall,
111 Ha kalon vat bepred. D'hon holl vignoned kozh.





EVIT AR VUGALIGOÙ :

MONT A RAIMP D'AR CHASE

(War un ton a Vro-Skos, Charlie is my Darling)

O, mont a raimp d'ar chase,	C buan	111
D'ar chase, d'ar chase.	Sol'/Do'.Re"Mb'.Fa"Sol-do'.	111
O, mont a raimp d'ar chase,	Sol"/lb-do'.lb"Sol-do'.	111
Da bakañ Gwilh ar bleiz.	Sol"/Do'.Re"Mb'.Fa"Sol-do'.	111
	re"/mb'.mb"re'.do"do-.	111

1.

Anaout a rit-hu Gwilh ar bleiz,	do'/si'Sol'la'si'do'.re"mb'	111
'Zo 'chom e Koad-an-Nec'h ?	do'/si'.Sol"la'si'do-	111
C, hennezh eo ar gwashañ loen	re'/mb'.re"mb'.do"sb'Sol'Mb'	111
Hag a gavfed e nep lec'h.	Fa"Sol"/lb'.Fa"Sol'.Mb"Re-	111
O, mont a raimp d'ar chase,	Mb'.^Re"/Do'.Re"Mb'.Fa"Sol-do'.	111
D'ar chase, d'ar chase.	Sol"/lb-do'.lb"Sol-do'.	111
O, mont a raimp d'ar chase,	Do"/Do'.Re"Mb'.Fa"Sol-do'.	111
Da bakañ Gwilh ar bleiz.	re"/mb'.mb"re'.do"do-	111

2.

Daoulagad a zo en e benn,	O Gwilh zo fin ha Gwilh zo kreñv,	111
A lugern 'vel an tan.	Hag a ra troioù brein.	111
E vlev zo du, e deod zo ruz,	E-lec'h ur galon en e greiz,	111
Hag e zent a zo gwenn-kann.	Ez eus ur sac'h leun a vein.	111
O, mont a raimp ...	O, mont a raimp ...	111

3.

E-barzh ar c'hoad 'mañ ar bleiz kozh	Met kaer en deus, e vuhez fall	111
O kantren noz ha deiz.	Ne bado ket atav.	111
Ha noz ha deiz 'z a en e gof	A-benn ar fin e teuy an deiz	111
Kig ar vugaligoù geizh.	Ma vo Gwilhou paket-brav.	111
O, mont a raimp ...	O, mont a raimp ...	111

6.

En un toull don e vo lakaet,	111
Er c'hoad, dindan ar gwez.	111
Ar vugaligoù a vo drant,	111
Hag a zañso war e vez.	111
O, mont a raimp ...	111


=====
PEP GWIR MIRET-STRIZH : Skrid brezhonek ar sonioù-mañ ne c'hell bezañ moulet, liesskrivet, lakaet war bladennoù nag embannet e doare ebet hep aotre. Evit kaout aotre, skrivañ da ABK.
 =====

Nevez embannet : Roparz Hemon : GERIADUR ISTOREL AR BREZHONEG
 Rann II (kaer liesskrivet): BIZ-CHIPOT

Embannet gant PREDER. Priz : 7,50 lur nevez.
 CCP.Paris 16-093-13, Dr.G.Etienne, Châteaulin.

=====
 ooo
 =====

Ar c'hemennadurioù da ABK a dle bezañ kaset a-raok an 10 eus ar miz d'an diwezhatañ evit bezañ embannet war niverenn ar miz goude. Kas anezho da Roparz Hemon, 1-a, Leeson Park, Ath Cliath (Eire)



AR VAQUEZ RE FALL DA VONT D'AN IFERN

Niv.45

111 (Ar gontadenn-bobl-mañ a vez kontet e meur a stumm e meur a vro)

111 E bourc'hig Kerzeved e oa tud vat, eus ar re wellañ zoken. Kerzeved a oa ur skouer evit ar parrezioù tro-war-dro. Siwazh, en un ti bihan war ar maez, e-kichen ar vourc'h, e chome ur vaquez eus ar re washañ a zo bet biskoazh war an tamm douar-mañ.

111 Katellig a raed anezhi. Intañvez e oa. Pevar gwaz he doa kaset d'ar vered, ha ma n'he doa ket kaset ur pempvet, eo dre n'he doa ket kavet. Ken fall e oa ma ne felle da zen ebet tostaat outi muioc'h eget na oa ret.

111 Ar blcavezhioù a dremene, ha Katellig a yae atav war goshaat hep mont war wellaat. Er c'hontrol. N'he doa mui a gerent, hag ar vignoned he doa bet en amzer diroll he yaouankiz a oa holl marv, pe fachet-marv outi.

111 An Diaoul a gase e vevelien gwech an amzer da Gerzeved da welout ha ne oa ket un ene pe zaou da bakañ. Tro wenn a raent atav. Met an Diaoul ne rae forzh. C'hoarzhin a rae en e varv o soñjal e oa unan da vihanañ a zeuje da rostañ abred pe ziwezhat en e gaoter : ene Katellig.

111 Hag un deiz, e gwir, e c'hoarvezas pezh a ranke c'hoarvezout : ene Katellig a yeas diouzh he c'horf.

111 N'eo ket ur mevel a voe kaset en deiz-se da Gerzeved gant an Diaoul, met e vab-bihan. Ene Katellig a oa azezet war ur gador, o c'hortoz, en ur sellout ouzh he c'horf astennet war ar gwele. Ne oa den all ebet en ti. Den ebet ne ouie c'hoazh e oa marv.

111 Mab-bihan an Diaoul a zigoras an nor.

111 - Petra fell dit ? - eme Gatellig.

111 - Va zad-kozh en deus lavaret din degas ac'hanoc'h d'an ifern.

111 Katellig (pe ene Katellig kentoc'h) a savas hag a yeas war an hent, an diaoul bihan o trotañ en he c'hichen.

111 - Hag e kav da'z tad-kozh ez in-me gant un netraig eveldout ?

111 Pe oad ac'h eus, fri lous ?

111 - Triwec'h mil vloaz ha c'hoazh triwec'h mil ...

111 - Me 'zesko dit livañ gevier ! - eme Gatellig o tistagañ ur jodad gant an diaoul hag o sachañ war e skouarn.


111 Hemañ a oa ur forc'h gantañ en e zorn hag a glaskas en em zifenn. Katellig a grogas er forc'h. Kann a voe etrezo. Ne badas ket pell.

111 An diaoul a rankas tec'hout.

111 Katellig a daolas ar forc'h en ur park. D'ar poent-se dres, e tremene war an hent ur c'harr brav, sachet gant laboused gwenn, ennañ un ael hag ene ur bugel. Edo an ael o kas ar bugel-se da Zoue.


111 Katellig a bignas er c'harr hep bezañ pedet. Dizale en em gavjont dirak dor ar baradoz.

111 An ael a skoas war an nor. Sant Per, a-raok digerifi, a sellas dre ur prenestrig, evel ma ra atav. Ober sin a reas d'an ael da lezel an daou veajour da ziskenn eus ar c'harr ha da dostaat. Damzigerifi a reas hepken, a-walc'h d'ar bugel da dremen. Neuze, hep ur ger, e stlakas an nor ouzh fri Katellig. Ar vaquez kozh, gant ar vountadenn, a yeas da ruilhañ war ar reier lemm a zo e lein menez ar baradoz, hag a ruilhas



Revue mensuelle-No.24-Décembre 1960 Kelaouenn vizeiek-Niv.24-Kerzu 1960
 Abonnement annuel : 7 NF. Koumanant-bloaz : 7 LN.
 CCP.RENNES 1907-07, AR BED KELTIEK, 21, rue Dixmude, St.Marc, BREST.

PENNSKRIVAGNER : ROPARZ HEMON



111 I
 111 I
 111 I A. B. K. war 16 pajenn
 111 I
 111 I Er miz-mañ e teu ABK war 16 pajenn.
 111 I Niverenn Nedeleg eo.
 111 I Hogen ni a fell dimp lakaat 16 pajenn en niverenn ken alies
 111 I ha ma c'hellimp.
 111 I Ezhomm hon eus ac'hanoc'h. Ezhomm hon eus da gaout diouzhtu
 111 I adkoumanantou, skodoù, profoù. Ezhomm hon eus da gaout diouzhtu
 111 I koumananterien nevez. N'eo ket krakvevañ a fell dimp, hogen
 111 I kreskiñ ha mont war-raok atav.
 111 I ROPARZ HEMON

T A O L E N N

111	Ar miz	p.134
111	<u>Emvod Kemper</u> (26 Kerzu) - <u>Notennoù</u>	p.135
111	<u>Skridoù nevez</u> (Roparz Hemon)	p.136
111	<u>Lennegezh dre gomz</u> (Roparz Hemon)	p.137
111	<u>Beilhadeg Prad</u>	p.138
111	<u>An ti-annez a vremañ</u> (Ewan Konan)	p.139
111	<u>Kontoù Skourr Breizh</u>	p.140
111	<u>Ar sonaozourien vreizhat a vremañ</u> (V.de Bellaing)	p.141
111	<u>Kanomp</u> : <u>Nozvezh sioul</u> - <u>E-kreiz an noz</u>	p.144
111	- : <u>Kleierigoù</u>	p.145
111	- : <u>Ar C'hraou Nedeleg</u>	p.146
111	<u>DALC'HOMP</u> : <u>Amañ hag ahont</u>	p.147



		<u>DRE AN DOUAR</u>	111
mm mm	mmmmmm	<u>PREZIDANT NEVEZ AR STADOU-UNANET</u> : Ar Senedour	111
mm mm	mm mm	John Kennedy, demokrat, a voe anvet da	111
mm mm	mm mm	Brezidant ar Stadoù-Unanet d'an 8 Du, o	111
		trec'hiñ an Isprezidant Nixon, republikan. Eus ar 65 milion a dud a	111
		votas, nebeutoc'h eget 50,2 % a roas o mouezhioù da Gennedy, un tammig	111
		muioc'h eget 49,8 % a roas o mouezhioù da Nixon. Da lavarout eo, en deus	111
		bet Kennedy just a-walc'h evit gounit.	111
		<u>TRUBUILH E BRO-C'HALL</u> : D'an 3 Here e oa bet kann e Pariz, e-kichen palez	111
		ar Prezidant, etre poliserien ha yaouankiz o youc'hal "Aljeria a zo	111
		gall !" D'ar 24 Gwengolo, ur mennad-tamall a-enep ar gouarnamant er	111
		Vodadenn Vroadel a oa bet trec'het. D'ar 27 e oa bet displegadegoù e	111
		Pariz hag e kêrioù all evit echuiñ ar brezel en Aljeria. Un 100 bennak a	111
		dud a oa bet harzet, ha kalz gloazet en emgannoù gant ar boliserien.	111
		Ur mennad-lezenn kinniget gant ar gouarnamant evit krouiñ un "nerzh-	111
		-sko atomek", bet degemeret gant ar Vodadenn Vroadel a voe nac'het gant	111
		ar Sened.	111
		Prezidant Frañs a lavaras e vije graet referendom dre ar vro diwar-	111
		-benn amzer da zont Aljeria.	111
		<u>DIZURZHIOU EN ALJER</u> : Da geñver Gouel an Arsav-Brezel, d'an 11 Du, e voe	111
		dizurzhiou en Aljer a-berzh Europiz, enebourien da bolitikerezh De	111
		Gaulle. Emgann a voe a-hed an deiz etre an displegadegerien hag ar	111
		bolised. En abardaez e rankas ar re-mañ gervel an arme da zont war o	111
		sikour.	111
		<u>TAOL-SKARZH E TURKIA</u> : 14 eus izili ar strollad a rene Turkia abaoe	111
		diskar Menderes e miz Mae a voe lakaet er-maez d'an 13 Du gant ar	111
		Prezidant Gursel. Ar strollad-se, anvet Komite an Unaniezh Vroadel, a oa	111
		ennañ 37 a izili. Ar 14 den kaset kuit a oa bet, darn anezho, e-touez	111
		gwellañ skoazellerien Gursel.	111
		<u>IWERZHONIZ LAZHET E BRO-GONGO</u> : Ur bagad soudarded a Iwerzhon, e servij	111
		ar Broadoù-Unanet e Bro-Gongo, a voe tapet diwar api gant Afrikiz eus ar	111
		meuriad Balouba, d'an 8 Du, e Katanga. 9 a voe lazhet, ha 2 hepken a	111
		c'hellas saveteiñ o buhez.	111
		<u>KUBA HAG AR STADOU-UNANET</u> : Ar Stadoù-Unanet a lakaas harz d'an 19 Gwen-	111
		golo war hogos o holl ermaeziadurioù marc'hadourezh da Guba. Tenn emañ	111
		an traoù etre an div vro. D'ar 17 Du, da heul dizurzhiou e Gwatemala hag	111
		e Nikaragwa, e roas ar Prezidant Eisenhower urzh da listri-brezel eus ar	111
		Stadoù-Unanet da virout ouzh "komunourien" da zilestrañ er broioù-se. Ar	111
		"gomunourien"-se ne c'hellfent dont nemet eus Kuba.	111
		-----	111
		Nevez embannet : <u>GERIADUR ISTOREL AR BREZHONEG</u> , eil kaier liesskrivet	111
		(biz-chipot), gant <u>Roparz Hemon</u> . Embannet gant <u>PREDER</u> . Priz : 7,50 LN.	111
		Kas an arc'hant da : CCP.Paris 16-093-13, Dr.G.Etienne, Châteaulin.	111

EMVOD SKOURR BREIZH AR C'HENDALC'H KELTIEK

Emvod a vo e Kemper, d'ar Yaou 29 a viz Kerzu.

Emgav da 10 eur en "Hôtel de l'Odéon", 41, ru Jean Jaurès.

10 eur : Skoazellañ ar Beilhadegoù, hag o astenn dre Vreizh-Izel a-bezh. (Kinniget gant P.Even).

12 eur : pred a-gevret.

14 eur : 1) Ha tu a zo da embann adarre un Almanak evit ar bobl ? (Kinniget gant an Itron Kemere).

2) Ragaozañ Kendalc'h Keltiek 1962. (Kinniget gant an Itron de Bellaing).

3) Sevel deiziadur emvodoù 1961. (Kinniget gant Roparz Hemon).

Holl izili ar Skourr a zo pedet, ha brezhonegerien all ivez.

Ar re a fell dezho kemer ar pred en ostaleri (priz : war-dro 7,00 lur), kas kemenn diouzhtu, mar plij, d'an Itron Kemere, 26, ru Elie Fréron, Kemper.- Pellgomz 4-03.

GANIDIGEZH : Skourr Breizh hag ABK a gas o gwellañ gourc'hemenoù d'an Dr.G.Etienne ha d'e wreg, da geñver ganidigezh o merc'hig Brenda (5 a viz Here 1960).

I N O T E N N O U I

HEP BREZHONEG EN ARNODENNOU : Hervez un dekred ha skrid-embann eus an 12^e Gwengolo, ne vo mui aotreet an amprou-

ennoù diredi war ar "yezhoù rannvroel" en arnodenn ar vachelouriezh. Hervez ur skrid-embann eus an 21 Gwengolo, ne vint mui aotreet en arnodenn ar B.E.P.C. (Koulskoude, e oa bet divizet ober an amprouennoù-se er vachelouriezh gant lezenn an 11 Genver 1951). An Ao.F.Ters, prezidant Kervreizh, 72, ru Henri Régault, St.Cloud, S.&O., a gemer penn un emsav a vo e gefridi levezonañ ar parlamantidi hag an dud dre vras evit ma vo daskoret o lec'h d'ar "yezhoù rannvroel" en arnodennoù.

"GWREG AN TOER" SKINWELET : D'ar 25 Here e voe c'hoariet pezh-c'hoari T.Malemanche, "Gwreg an Toer" dre skinwel gant ar BBC, troet e kembraeg, dindan an titl "Gwraig y Tower", gant T.H.Parry-Williams hag Arzel Even.

LEVRIOU BREZHONEK E SANT-BRIEG : E Sant-Brieg e kaver levrioù brezhonek da brenañ e stal-levrioù an Ao.Genie, str.Sant Goueno. Bez' ez eus atav levrioù brezhonek er prenestr, lakaet a-wel dirak an holl.

I SKRIDOU NEVEZ I 111
I I 111

PREDER, niv.15-16, Du 1960. ISTOR AN EMSAV SEVENADUREL ABAOE AR BREZEL- 111
-BED KENTAN, gant Youenn OLIER. - Priz an niverenn-mañ : 7,50 LN. - 111
Koumanant da 4 niverenn : 12,00 LN. - Koumanant da 8 niverenn : 24,00 LN. 111
- CCP.16.093-13-Paris, Dr.Etienne, Châteaulin. 111

An niverenn-mañ eus PREDER a zo enni 124 a bajennoù liesskrivet- 111
-brav, a rafe ul levr moulet (ment ordinal) a war-dro 200 pajenn. 111

An titl, da'm meno, a zo re ledan. resisoc'h e vije bet lakaat, 111
e-lec'h ISTOR AN EMSAV SEVENADUREL, an talbenn-mañ : PREDERIADENNOU 111
A-ZIVOUT UN NEBEUT TUD EN EMSAV SEVENADUREL. Rak, evit ar studiadenñ da 111
vezañ hir, e vefe un istor klok eus an emsav sevenadurel (zoken war 111
dachenn ar yezh) kalz hiroc'h c'hoazh. En tu all d'ar strivoù graet 111
gant L.Herrieu, Y.Sohier, Meven Mordiern, h.a., ez eus oberennoù (Ar 111
Brezhoneg er Skol, ar skolioù dre lizher, hini GWALARN hag hini OBER, 111
ar c'hampoù-hañv, h.a.) hag ez eus tud e-leizh (n'int ket meneget zoken 111
amañ) o deus kemeret perzh en emsav-se. 111

Ur wech c'hoazh, o lenn studiadenñ Y.Olier, em eus merzet pegen 111
diaes eo labour an istorour, a glask tresañ spered un den diwar ar 111
skridoù en deus lezet war e lerc'h. Pezh a lavar Olier diwar-benn 111
Herrieu, Sohier, Meven Mordiern a dle bezañ gwir dre vras. Ne glot ket 111
ervat koulskoude ouzh an eñvor am eus miret eus komzoù an dud-se, am 111
eus kejet ganto ken alies. Evit ar pezh a lavar diwar va fenn, e tle 111
bezañ gwir dre vras ivez. Hogen pa skriv "... e krede Roparz Hemon", 111
"soñjal a rae Roparz Hemon", "... e felle da Roparz Hemon", e choman 111
souezhet. Penaos e c'heller displegañ ken resis ar pezh a greden, a 111
soñjen, a felle din ? 111

An hanterenn diwezhañ eus al levr (diwar ar bajenn 61) a zo 111
gouestlet da studi displeberidigezh uhelvennadoù Y.V.Perrot, diouzh un 111
tu, displeberidigezh uhelvennadoù Y.Sohier, diouzh an tu all, ha da 111
studi un nebeut arnodennoù nac'hus graet abaoe ar brezel. Ret e oa 111
marteze lakaat a-wel ar giladenn-se en emsav. Ret e oa marteze diskar 111
pennsturioù faos ledet gant tud 'zo. Ha Y.Olier a oar e ober a-zoare. 111
Hogen, hag ezhomm a zo kemer ur morzhol da derriñ ur vi, hag ur vi 111
brechet war ar marc'had ? Ha perak lezel a-gostez an darvoudoù pouezus- 111
añ en istor sevenadurel an 20 vloaz tremenet ? krouidigezh ar skolioù 111
brezhonek e Plistin hag e Ploueg-ar-Mor ? labour ar Skol dre lizher ? 111
kresk Kamp ar Vrezhonegerien ? embannidigezh al levrioù hag ar gazetenn 111
evit ar vugale ? savidigezh KUZUL AR BREZHONEG ? aozidigezh Beilhadegoù 111
Treger ? obererezh AL LIAMM ? emastenn ar c'helaouennoù hag an embann- 111
adurioù liesskrivet ? h.a. ? 111

Setu aze kalz rebechoù. Arabat krediñ daoust da se ez eo labour 111
Y.Olier hep talvoudegezh. Pell ac'hano ! Ul lec'h enorus en devo er 111
striv graet nevez 'zo da deurel sklerijenn war an Emsav breizhek. 111

ROPARZ HEMON 111

lll
 lll llll llll
 lll llll LENNEGEZH DRE GOMZ llll
 lll llll llll

lll Kalz a zo bet graet, kalz a vez graet atav, da reiñ da Vreizh ul
 lll lennegezh. Pa soñjer er skoilhoù a zo dirazomp, e c'heller lavarout ez
 lll eo burzhud : un toulladig tud, hogozik hep skoazell, oc'h embann
 lll levrioù ha kelaouennoù na vezont prenet nemet gant nebeutoc'h, -
 lll a-wechoù kalz nebeutoc'h, - eget 500 den. Peadra da zigalonekaat ar re
 lll galonekañ. Ha koulskoude ne zigalonekaomp ket. Da c'hobr hon eus bet
 lll diseblanted a-berzh hor pobl, goaperezh ha dismegañs hag heskinerezh
 lll a-berzh he renerien. Gwashoc'h zoken : darn eus hor skrivagnerien o
 lll deus paeet o fealded d'o bro ha d'he yezh gant an dienez, an harlu,
 lll ar prizon, ha zoken ar marv.

lll Ha daoust da se, n'eus ket meneg ganimp da baouez.

lll Soñjomp ervat koulskoude. Diskouezet hon eus ez eus tu da grouiñ
 lll ul lennegezh evit 500 den. Hogen ar brezhoneg a zo yezh ur bern tud, -
 lll ur milion, a lavarar. An niver-se, hep mar ebet, a ya war goazhañ
 lll bemdez. Lennegezh ar 500 a c'hell kreskiñ e-pad pell amzer c'hoazh,
 lll evel ma kresk bleunioù ha frouezh en un ti-gwer. Hag er-maez e vo frim
 lll ha distruj. Marteze er bloaz 2000 ne chomo mui netra.

lll An amzer, war a glevomp, a labour a-enep d'an holl yezhoù bihan :
 lll ar c'havadennoù nevez, an darempredoù o paotat etre an holl vroioù,
 lll ar fiñvskeudennoù, ar skingomz, ar skinwel, h.a. a ra droug dezho. Se
 lll a vez huchet dre-holl evel un diskan. Se a zo anat.

lll "Anat", evelato, ne dalv ket kement ha "gwir".

lll Pezh a zo gwir eo e teu kemmoù e doareoù-bevañ an dud gant
 lll kavadennoù ar ouiziegezh. Hogen gwall fin an hini a ziougano evit piv
 lll pe a-enep piv, evit petra pe a-enep petra e labour ar c'hemmoù-se.

lll Div skouer hepken :

lll 1) Hiziv e c'heller embann ur gazetenn, milionoù a niverennoù
 lll anezhi e berr amzer, hag o c'has e berr amzer dre ar bed-holl. Hogen
 lll un den hepken, gant ul liesskriverez, a c'hell embann ur gazetenn,
 lll m'en deus c'hoant, ha kas niverennoù anezhi e broioù pell, m'en deus
 lll c'hoant ivez.

lll 2) Hiziv e c'heller enskrivañ pladennoù, milionoù anezho, hag o
 lll gwerzhañ dre ar bed-holl. Hogen un den, m'en deus c'hoant, a c'hell
 lll enskrivañ pezh a gar war vandennoù magnetek, hag o c'has d'al lec'h
 lll ma kar. Gant an araokadennoù a vo graet en hent-se, ne vefen ket
 lll souezhet ma teufe ur gelaouenn vrezhonek war-vandenn vagnetek pe war
 lll bladenn blastik hep re zale.

lll Ha dres, da zont d'hor c'hraf :

lll Gant araokadennoù ar ouiziegezh, e teu al lennegezh komzet da
 lll gemer ul lec'h e buhez an denelezh brasoc'h eget al lec'h a zalc'he

a-raok ma voe ijinet ar moulañ. Hiziv dija, er broioù sevenet koulz hag er broioù all, ez eus muioc'h a selaouerien eget a lennerien.

Breizh a gemer perzh en emsav-se. Gwir eo, n'he deus ket c'hoazh a skingomzerezh broadel, n'he deus ket c'hoazh a skinwelerezh broadel. Hogen he mad a c'hell ober eus ar c'hiz nevez, selaou kentoc'h eget lenn, evit saveteiñ he yezh pa'z eo poent. An aozañ Beilhadegoù e bourc'hioù bihan Breizh-Izel, boulc'net gant Tregeriz, a zo an taol brasañ skoet abaoe pell er stourm evit ar brezhoneg. Gant youl ha skiant e c'hell kemañ penn-da-benn emzalc'h pobl ar vrezhonegerien e-keñver o yezh.

N'eo ket dre froudenn eo deraouet ABK da embann kanaouennoù. Frouezh prederadennoù hir, pouezet ha jedet-mat eo. Emaomp en hanterenn diwezhañ an ugentvet kantved war dreuzoù oadvezh nevez al lennegezh dre c'henou. Ha war al lennegezh dre c'henou e tleomp pleustriñ (hep dilezel al lennegezh dre skrid, sklaer eo).

Ha setu ur gefridi vras dirazomp : sevel, - adsevel kentoc'h, - ul lennegezh komzet, diwar deñzor pinvidik hol lennegezh kozh, koulz ha diwar ijin ar Vretoned a vremañ.

ROPARZ HEMON

XX
XX

----- Eil rummad Beilhadegoù Treger a zigoras d'an 29
I BEILHADEG PRAD I Here e Prad. Ur 500 a arvesterien, kozh ha
----- yaouank, a selaouas gant dudi an abadenn, aozet
gant an Ao. Fechant, skoazellet gant ar c'huzul-

-kêr ha tud eus ar barrez. Setu amañ ar roll : 1) Son ar Veilhadeg,
gant J.Flour ; 2) Me'm eus savet un dourell, gant J.Danniou ; 3) Kontad-
enn, gant M.Chapalain ; 4) Ar glesker, rimadell, gant merc'hed bihan
eus Prad ; 5) Ar vilin-avel, gant M.C.Roche hag Ivona Jak ; 6) Kontad-
enn, gant Y.Droniou ; 7) Sav Breizh-Izel, kan gant A.Bourdonneg ; 8)
Kontadenn, gant J.Flour ; 9) Kanaouennoù, gant J.Derrien ; 10) Stagañ
Brelevenez ouzh Lanuon, pezh-c'hoari, gant Y.Droniou, L.Ar C'hozh,
R.Keraodren ; 11) Buhez al labourer-douar, displeget gant M.Prad ; 12)
Chaseourien ar C'hozhvarc'had, gant Y.Bourdonneg ; 13) An durzhunell,
kan gant M.Koulo ha J.Prad ; 14) Kontadenn, gant L.Ollivier ; 15) Kan-
aouenn, gant F.Danno ; 16) Luskell va bag, kanaouenn, gant D.Bouvaine ;
17) Ar mañsoner, rimadell, gant Y.Droniou ; 18) Ar vestrez kollet, kan
gant P.Riou ; 19) an tri Añjeluz, kan, gant A.Brikier ; 20) Son akord-
eoñs, gant I.Jak ; 21) An armolud, gant Y.Droniou ha R.Keraodren.

Jorj Kadoudal ha Stefan Rivoallan a c'hoarias ar biñiou hag ar
vombard.

Gourc'hemennoù a zo dleet d'an holl, hep ankounac'haat P.Rogard ha
F.Danno.

Keloù a roimp eus beilhadegoù Pleuveur-Gaoter ha Rospez, kerkent
ha ma c'hellimp.

GALVADENN

Ha bremañ, izili ar Skourr, pedet oc'h d'en em gavout niverus e
Kemper, d'an 29 a viz Kerzu, evit astenn ar Beilhadegoù dre Vreizh-Izel.

111 I
 111 I AN TI - ANNEZ A VREMAÑ I
 111 I

111 Gant tremenidigezh ar pobloù eus un doare-bevañ diazezet war al
 111 labour-douar da unan diazezet war an ijinerezh, ez eo kemmet kefridi an
 111 ti. Gwechall ne oa an ti nemet ul lec'h da gousket ha da aozañ boued,
 111 ar peurrest eus an amzer o vezañ tremenet er-maez ; bremañ avat ez eo
 111 mui-ouzh-mui ul lec'h ma vever ennañ.

111 An annez a vremañ eta a rank bezañ muioc'h eget ur goudor.
 111 Rankout a ra ivez kaout aezamantoù da reiñ tro d'ar vuhez a hiziv da
 111 vezañ plijus hag efedus. Un ti yac'hus, da skouer, da studiañ pe da
 111 vevañ ennañ hep bezañ re wisket, a rank bezañ ennañ tost da ugent
 111 dereziad gwrez.

111 N'ouzon ket ha savet e veze gant koad e Breizh en henamzer.
 111 Moarvat e veze, rak tu a zo da grediñ o deus ar Vretoned digoadet kalz
 111 Arvorig evit gounit douar. Koulskoude, bremañ, tiez mein izel gant
 111 toennoù serzh a zo ur perzh dibar da Vreizh-Izel ha d'ar broioù keltiek
 111 all.

111 Abaoe ar brezel diwezhañ ez eus bet savet e Breizh, dreist-holl
 111 a-hed an aodoù, tiez marc'had-mat gant sikour ar gouarnamant. "H.L.M."
 111 a vez graet anezho. Stummet int evel ar re gozh, ar pezh a zo mat.
 111 Alies, zoken, ez int kaeroc'h. Mogerioù mein (benet pe get) an tiez
 111 kozh a zo bet kemeret o lec'h en tiez nevez-mañ gant mogerioù blokoù
 111 simant cheket en diavaez, ha gant un eilmoger danav e pri-poazh en
 111 diabarzh. Un araokadenn eo an dra-mañ. Tommoc'h ha sec'hoc'h eo an
 111 annezioù nevez, ha digoustusoc'h ivez. Koulskoude e van ur rebech
 111 bennak ganin a-enep dezho, ha setu ar re bennañ :

111 Treustoù koad ar plañchodoù hag an doenn a zo bepred douget gant ar
 111 voger-diavaez, ar pezh a ra dezho breinañ. Meur a remed a vefe d'an dra-
 111 -mañ, met meur a bajennad a yafe ganin da esaeañ o displegañ : dre vras,
 111 koulskoude, an treustoù a rankfe bezañ harpet war ur framm pe ur voger-
 111 -diabarzh skañv a-walc'h hag ur voger all a harzfe ouzh an amzer. Evit
 111 houmañ e c'hellfe, marteze, bezañ kavet un implij all d'ar greunvaen ha
 111 d'ar vein all a zo, evel m'hen gouzoc'h holl, o vont da get evel dafar-
 111 -tiez. Heskennat a c'heller bremañ an holl vein. Daoust ha ne c'hellfe
 111 ket plakennoù bras a bep seurt tevderioù bezañ dibezhiet gant ar
 111 vañsonerien da ober ar voger-diavaez ? An tu diaoz a vefe en diavaez, ar
 111 juntroù o vezañ eeun holl, met nann er memes linenn diouzh ret, hervez
 111 faltazi an tisavour. Meur a seurt maen a c'hellfe ivez bezañ kemmesket.

111 "N'eus netra nevez e kement-mañ," emezoc'h-hu. Géo, da'm meno.
 111 Juntroù plat ha stagelloù ouzh ar voger-diabarzh a ro tu da sevel
 111 mogerioù-diavaez, e n'eus forzh peseurt maen, eus a zek da bemzek
 111 santimetrad a devder. En Amerika ez eo boutin ar seurt mogerioù, rak
 111 buan e vezont savet, ha kaer int da welout, nemet implijet e vez
 111 kentoc'h mein faos pe mein razek, a zo stank-kenañ eno.

111 An toennoù maen-skjent a zo un dra o vont e-maez a c'hiz : koustus-
 111 -tre int drezo o-unan, ha koustus ar c'hoadañ a rank dougen o fouez.

Sklentennoù amiant ha ter, tached ha peget war un doenn skañvoc'h, a rafe al labour gwellikoc'h, ne gav ket deoc'h ? Kavet e vezont a bep seurt liv, zoken a liv gant ar vein-glas. Buanoc'h kalz eo o lec'hiañ, ha kalz digoustusoc'h int.

Ar prenestroù a vez bepred graet da zigeriñ dre ar c'hreiz. Klosoc'h ha digoustusoc'h e vefe prenestroù o tigeriñ war grec'h, hentet gant ur roudenn a bep tu, pe c'hoazh prenestroù-red. Adprenestroù, er goañv d'an nebeutañ, a erbedfe ivez danvez-tan. An dorjoù ragaozet gant o sternioù ne vezont ket implijet a-walc'h. Diwar-benn ar plastr hag ar plomerezh, e vefe kalz ivez da lavarout c'hoazh.

Dazont ar saverezh-tiez a ziskaro labourerezh ar maen-sklient ha traoù all c'hoazh moarvat. Seblantout a ra, evelato, degas lañs da labourerezh ar pri, ar simant, ha kemmañ a ray hini ar vein hag ar c'hoad. Deomp, Bretoned, eo d'ober hor mad eus an araokaat ha kavout implijoù nevez da zafar hor bro. Heuliañ hon amzer hag ijinañ a rankimp mar domp da vevañ diwar hor c'horniad, rak galvet eo ar maezioù anezhañ da ziboblañ war an "ton bras" en amzer da zont.

EWAN KONAN

=====

KONTOU SKOURR BREIZH AR C'HENDALC'H KELTIEK ; (11.11.59 da 15.8.60)

	<u>Dispign</u>	<u>Enkefiadur</u>	
arc'hant kozh abaoe warlene		56,80	111
3 skodenn evit 1959		17,00	111
75 - 1960		525,00	111
22 koumanant		154,50	111
Resevet digant KUZUL AR BREZHONEG		90,00	111
Profoù all		199,00	111
Skod da Vurev-Kreiz ar C'hendalc'h Keltiek	70,00		111
Taos war ar gont-red evit 1959 ha 1960	10,00		111
Taos-digeriñ ar gont-red 1907-07-Roazhon	12,50		111
Fakturenn ar mouler, Du 1959	67,44		111
- Kerzu	69,97		111
- Genver 1960	69,97		111
- C'hwevrer	68,85		111
- Meurzh	68,85		111
- Ebrel	68,65		111
- Mae	69,87		111
- Mezheven	68,85		111
- Gouere	68,85		111
- Eost	68,85		111
Fakturenn goloioù melen	120,00		111
Timbroù	81,02		111
Chom a ra e kef ar Skourr	58,63		111
	1.042,30	1.042,30	111
Lennet er Vodadeg Veur, Louaneg, 8 Gwengolo 1960			111
	AN DENZORIEREZ		111

111			
111	mmmm		1
111	m		1
111	m		1
111	mmmm	mmm mmm mm mm mm mm mm	1
111	m	m m m m m m m m m m	1
111	mmmm	mmm m m m m m m m m m	1
111	=====		1
111			1

111 Ar Vreizhiz a zo tud souezhus : stag int ouzh o bro betek bezañ
 111 techet da chom o buhez-pad en o c'horn-bro genidik, ha war un dro ez
 111 int gouest da redek bro, pell-pell, betek mont da zizoleiñ douaroù
 111 nevez. En o c'hanaouennoù ha barzhonegoù a wechall, ne gomzent nemet
 111 eus o iliz-parrez, o lanneier, o zi kozh, h.a., ha war gartennoù ar
 111 bed ez eus e-leizh a zouaroù dindan o anv.

111 Diwar an temz-spered a zaou du-se, e c'heller barn ar sonerezh
 111 breizhek. Chomet stag ouzhi e wruziennoù poblel, ez a war-raok en un
 111 doare souezhus, o heuliañ hep aon ar red nevez, ha bezañ zoken e penn
 111 an emsav sonerezhel arnevez.

111 E-pad pell amzer, hor sonaozourien o deus heuliet doare sonaozañ
 111 ar broioù all, klasel pe romantel. Bez' e oa neuze daou sonerezh di-
 111 stag : ar sonerezh pobl, kanet pe c'hoariet gant ar vombard hag ar
 111 biniou, kantikoù, kanaouennoù, tonioù evit dañsal ; hag ar sonerezh
 111 "uhel", evit ar hinvioù sonadeg, ar sonerezh simfonek. An daou distag-
 111 -krenn an eil diouzh egile.

111 BOURGAULT-DUCOUDRAY HA RE ALL E diwezh ar c'hantved diwezhañ, war-dro
 111 1880, ur sonour breizhat, anvet
 111 Bourgault-Ducoudray, sonaozour ampart, peogwir en doa bet e 1862 e
 111 Pariz ar Priz Roma, en devoe tro da vont da Vro-C'hres. Eno e voe de-
 111 dnet gant kanennoù kozh pobl C'hres, hag e tizoloas e oant tost da
 111 ganennoù Breizh dre o skeulennoù.

111 Da c'houde, Bourgault-Ducoudray en em lakaas da studiañ ar skeul-
 111 ennoù kozh er broioù keltiek, e Breizh, Kembre ha Bro-Skos, da zastum
 111 kanaouennoù, ha da sevel pezhioù sonerezh kaer-kenañ, o'h implijout
 111 ar modoù-se. Dre se e tiskouezas penaos e c'hellfe ar sonerezh simfonek
 111 ober e vad eus an distreiñ d'ar stummoù kozh bet miret betek neuze e
 111 c'hanaouennoù pobl hepken. Eñ an hini eo a skoulmas al liamm kentañ
 111 etre ar sonerezh pobl hag ar sonerezh uheloc'h.

111 Er c'hantved-se, en Europa a-bezh, ar sonourien a glaske tennañ
 111 eus gwriziennoù o bro un arz nevezet : Liszt en Hungaria, Grieg e
 111 Norvegia, Wagner en Alamagn, Maurice Emmanuel e Bro-C'hall, pep hini,
 111 e doare pe zoare, o tigeriñ un hent nevez.

111 E Breizh, war-lerc'h Bourgault-Ducoudray, e teuas meur a arzour,
 111 a heulias e roudoù. Ar re anavezetañ a zo : Gwion Ropartz, Paol
 111 Ladmiraault, Paol Ar Flemm, Yann Kras, Rhené-Baton, Loeiz Vuillemin,
 111 Loeiz Aubert, Morvan Duhamel, Yann Langlais, ha tostoc'h deomp, Jef
 111 Penven ha Noel Lancien.

111 DOAREOU HOR SONEREZH Pesurt arouezioù anatañ a zo re ar skol nevez-
 111 -se ? Daou dra dreist-holl : ul lusk gwevn-tre,
 111 hag implij ar skeulennoù a wechall.

111 Hon arzourien (kerkoulez livourien ha sonourien) he garont ket al
 111 linennoù troc'het, ar mentadoù resis. Gwelloc'h e kavont an troellennoù,
 111 al linennoù o vont war grec'h, war ziskenn gant faltazi. Plijout a ra

dezh o fram diresis hag a lez an awen da vont hervez he soñj, hep bezañ serret evel ul labous en ur gaoued re vihan. "Diouzh an dud a vuzuilh pep tra, hon dieubit, Aotrou !" en deus skrivet unan eus hor barzhed arnevez. 111

Setu perak o deus hor sonaozourien implijet alies-tre evit notennañ o sonerezh mentadoù ampar, da skouer 5/2, 7/2, 5/4, 7/4, 7/8, h.a. 111

Eil arouez ar sonerezh simfonek breizhat a zo implij ar skeulennoù A B C D h.a. (da lavarout eo, ar modoù anvet ivez lidian, hipolidian, frigian, h.a.), ouzhpenn ar modoù major ha minor. Ne oant ket bet dilezet e Breizh, a drugarez d'hor c'hantikoù ha d'hor c'hanaouennoù, evel ma lavaren deoc'h uheloc'h. Hor sonourien a vremañ, oc'h implijout anezho adarre, a sav ur sonerezh hag a glot kalz muioc'h gant o zemz-spered, hag a zo, dre se, tostoc'h d'hor c'halon. D'hor c'halon deomp, rak tud all a gav souezhus, iskis zoken, oberennoù 'zo, gant o c'hen-sonioù hardizh, o livsonioù dic'hortoz. N'eus forzh, hep aon e kendalc'h hor sonaozourien gant o hent. 111

AR RUMMAD KENTAN Meneget em eus bremaik un nebeut anvioù. Setu amañ doareoù ar re anavezetañ : 111

Gwion ROPARTZ, ganet e Gwengamp e 1864, marvet 5 bloaz 'zo, a oa an hini brudetañ, dre m'en doa skrivet kalz, ha dra ma voe rener laz-seniñ e-pad bloavezhioù. Beajet en doa kalz er broioù estren. E oberennoù a zo niverus-tre hag a lies seurt : hensonennoù, sonerezh-kambr evit daou, tri, pevar benveg pe vuic'h, c'hoariganoù, div simfonienn. Diouzh titloù e oberennoù, "Hemolc'h ar Roue Arzhur", "Kloc'h ar Re Varv", "Ar Vro", "Pesketaer Island", e weler penaos eo bet dedennet gant danvez Breizh. Met, daoust d'an titloù-se ha d'o danvez, e sonerezh n'eus ket ennañ kalz a berzhioù breizhat. G.Ropartz a oa bet diskibl César Franck, ha levezon ar sonour meur a zo chomet warnañ betek re. 111

Paul LADMIRAL, ganet e Naoned e 1877, ha marvet e diwezh ar brezel, e 1944, a zo an hini a ziskouez ar gwellañ skouer ar sonerezh breizhat arnevez. N'eo ket hepken danvez e oberennoù a zo diouzh e vro, hogen an teknik ouzhpenn. Implijet en deus kalz ar c'henreizhadur liesskeuliek hag ar mentadoù ampar. Skrivet en deus evit laz-seniñ ur "Rapsodienn ouezelek", "Kenc'hoarioù", ur c'hoarigan, "Myrddin", sonerezh evit "Tristan" (un drama skrivet gant Bédier, ur skrivagner gall), pezhioù sonerezh-kambr. Kentoniet en doa, evit o lakaat da vezañ anavezet e Breizh, kalz a ganennoù eus Bro-Skos, Bro-Gembre hag Iwerzhon, Paul Ladmiral a oa ur gwir vrogarour. Kelenner e Skol-Veur Sonerezh Naoned e oa, ha nac'het en doa mont da Bariz, ma oa bet kinniget dezhañ ur plas uhel, rak fellout a rae dezhañ chom e Breizh ha labourat evit e Vro hepken. 111

Yann KRAS, eus Brest, a oa ofiser a vor, pezh na viras ket outañ da skrivañ meur a dra gaer, awenet gant ar mor hag ivez gant ar broioù pell en doa anavezet a drugarez d'e vicher. Mervel a reas e Brest e 1932. Ur maen-koun savet dirak lennvor e gêr c'henidik a zegas soñj anezhañ. 111

Paul AR FLEMM, ganet e 1881 e-kichen Pempoull, a zo dezhañ ur sonerezh dioutañ e-unan. Implijet en deus kalz, eñ ivez, ar modoù kozh hag ar mentadoù ampar. En e yaouankiz en doa beajet dre Rusia, hag er Reter Pellañ, pezh a ledanaas c'hoazh e zremmwel arzel. 111

E sonerezh a zo a-wechoù diaes da gompren evit an dud n'int ket 111

lll boas ouzh toniadurioù dianav betek-hen. Tri bloaz 'zo eo bet c'hoariet
 lll en Opera e Pariz e c'hoarigan "Boemerezh ar Mor", ha n'en deus ket
 lll graet berzh. Kavet e oa bet re souezhus, re bell diouzh ar pezh a veze
 lll klevet peurliesañ. Bloaz goude, "Boemerezh ar Mor" a reas berzh bras
 lll e New York. Skrivet en doa, tregont vloaz 'zo, ur c'hoarigan all :
 lll "Eostig Sant-Malo", un oberenn blijus-kenañ, hag a vez c'hoariet
 lll c'hoazh alies evit brasañ plijadur ar selaouerien.

lll Paol Ar Flemm a zo bremañ e penn kevredigezhioù sonerezh e Pariz,
 lll met distreiñ a ra da Vreizh bep bloaz, rak chomet eo e galon tomm ouzh
 lll e vro c'henidik.

lll Arabat din chom hep menegiñ Morvan DUHAMEL. Er bloavezhioù 1920
 lll ha 1930, Duhamel en deus renet ul labour politikel hag arzel war un
 lll dro. Dastumet ha kentoniet en doa kantadoù a ganaouennoù pobl, hag al
 lll labour-se en deus servijet e meur a zoare d'hor sonourien a vremañ.

lll AN EIL RUMMAD Sonaozourien yaouank hon eus bremañ, hag a heuilh an
 lll hent digoret gant Bourgault-Ducoudray, Ropartz,
 lll Ladmirault. En o zouez e tleer menegiñ Jef PENVEN, an hini a seblant
 lll bezañ e penn ar skol arnevez breizhat-rik. N'en deus ket skrivet
 lll kement-se, met pep tra savet gantañ a zoug merk kizidigezh hor bro.
 lll Ken gwir eo, ma'z eo deuet darn eus e ganennoù, - skrivet koulskoude
 lll evit lazoù-kanañ kêrioù bras, - da vezañ degemeret gant ar bobl, ha
 lll kanet bremañ evel kanennoù pobl.

lll Kalz a anvioù a vefe c'hoazh da venegiñ. Ne c'heller ket e ken
 lll nebeut a amzer komz diwar-benn an holl sonourien, brudet mui pe vui.
 lll Met sur omp e vo klevet anv anezho.

lll LEC'H AR FOLKLOR ER SONEREZH ARNEVEZ Ha ret eo d'hor sonourien
 lll implijout ar folklor evit
 lll diazezañ o sonerezh ? Ne gav ket deomp. Hag e gwirionez, nebeut-tre
 lll anezho o deus graet. Da skouer, Gwion Ropartz, e niver bras e ober-
 lll ennoù, n'en deus savet nemet div anezho diwar un ton breizhek : ur
 lll simfonienn, hag e sonatenn e D minor evit piano ha violoñs. Paol
 lll Ladmirault en deus implijet tonioù keltiek da ziazez e "Rapsodienn
 lll ouezelek".

lll Klasket o deus kentoc'h reiñ d'o sonerezh dremm ene Breizh,
 lll muioc'h eget eilskrivañ traoù kozh, war zigarez chom e stumm ar vro.


lll Bez' e c'heller, da'm soñj, keñveriañ hor sonaozourien, - zoken
 lll ma n'int ket ken anavezet, - gant Jorj Enesco, Béla Bartók, Zoltán
 lll Kodály, dre m'o deus an hevelep pal : lakaat da dalvezout ijin
 lll sonerezhel o bro.

lll E-pad pell e oa chomet hor sonerezh war-lerc'h hol lennegezh hag
 lll an arzoù all. Hevelep tra a zo c'hoarvezet e pep bro, hervez klevet.
 lll Met abaoe 30 vloaz, hon emsav nevez a ziskouez emañ ar sonerezh oc'h
 lll adc'hounit buan an dachenn gollet.

lll Un dra vat e vefe en em glevout gant ar Gelted all war ar poent-
 lll -se, evit unaniñ hor strivadennoù, e sell da grouiñ ur greizenn sone-
 lll rezhel etrekeltiek.

V.DE BELLAING

lll (Prezegenn graet er C'hendalc'h Keltiek, Aberystwyth, Eost 1960)



KLEIERIGOU

(Ton ha komzoù hervez ar ganaouenn saoz
Jingle Bells)

111 1.
111 Gant va marc'hig ruz,
111 Staget ouzh ar c'harr,
111 Savet abred-mat,
111 'Maomp o vont d'ar foar.
111 Kleierigoù kouevr,
111 Gwriet ouzh ar vrid,
111 A-hed an hent a dint, a dint,
111 Hag hor c'halon a drid.

C buanik
/Mb'do'sb'lb'Mb- -/
/Mb'do'sb'lb'Fa- -/
/Fa'rb'do'sb'Sol- -/
/mb'mb'rb' sb'lb-. '/
/Mb'do'sb'lb'Mb- -/
/Mb'do'sb'lb'Fa- '
Fa'/Fa'rb'do'sb'mb'mb'mb'
mb'/fa'mb'rb'sb'lb-. '/

DISKAN

DISKAN

111 Kleierigoù, kleierigoù,
111 Sonit, sonit gae !
111 Ni hon-daou zo 'vont d'ar foar,
111 Va dousig koant ha me.
111 Kleierigoù, kleierigoù,
111 Sonit, sonit drant !
111 Ni hon-daou zo 'vont d'ar foar,
111 Me ha va dousig koant.

/do'do'do'do'do'do'do'do'
/do'mb'lb'.sb"do:/
/rb'rb'rb'.rb"rb'do'do'
do'/do'sb'sb'lb'sb'mb-./
/do'do'do'do'do'do'do'do'
/do'mb'lb'.sb"do:/
/rb'rb'rb'.rb"rb'do'do'
do'/mb'rb'do'sb'lb-. '/

2.

3.

111 Daoust d'an amzer du,
111 Daoust d'an avel yen,
111 N'hon eus chal ebet.
111 C'hoarzhin ne reomp ken.
111 Trotal 'ra ar jav.
111 Skuizhañ ne ra ket.
111 Evel e vestr, al loenig mat
111 A gav eo brav ar bed.

Tefival eo an oabl.
Bremañ 'raio glav.
Ne reomp forzh ebet.
C'hoarzhin 'reomp atav.
Hag ur vallin gozh,
Eus he skoaz da'm skoaz,
A ra, e feiz, a-us d'hor penn
Evel bolz an Nefy glas.

Ton treuzskeuliet evit sonlenn :

111 C Sol = Mb
111 /Sol'mi're'do'Sol- -/
111 /Sol'mi're'do'la- -/
111 /la'fa'mi're'si- -/
111 /sol'sol'fa're'do-. '/
111 /Sol'mi're'do'Sol- -/
111 /Sol'mi're'do'la- '
111 la'/la'fa'mi're'sol'sol'sol'
111 sol'/la'sol'fa're'do-. '/

DISKAN

/mi'mi'mi'mi'mi'mi'mi'mi'/
/mi'sol'do'.re"mi:/
/fa'fa'fa'.fa"fa'mi'mi'
mi'/mi're're'do're'sol-./
/mi'mi'mi'mi'mi'mi'mi'mi'/
/mi'sol'do'.re"mi:/
/fa'fa'fa'.fa"fa'mi'mi'
mi'/sol'fa'mi're'do-. '/

111 =====
111 Ar c'hemennadurioù da ABK a dle bezañ kaset a-raok an 10 eus ar miz,
111 d'an diwezatañ, evit embann war niverenn ar miz goude. Kas anezho da
111 Roparz Hemon, l-A, Leeson Park, Ath Cliath (Eire).
111 =====

111 ***** EVIT BREIZH HAG AR BREZHONEG *****
111 *****
111 ***** KOUMANANTIÑ D'AR BED KELTIEK *****
111 *****
111 =====

mm	m	m	m	m	m	m	m	mmm	mm	m	En ur miz
m	m	m	m	m	m	m	m	m	m	m	e c'hell ho mignoned
m	m	m	m	m	m	m	m	m	m	m	deskiñ DIAZEZ AR BREZHONEG
mm	m	m	m	m	m	m	m	m	m	o	ha lenn DALC'HOMP !

Niv.46

111	=====
111	XXX
111	XXX <u>A M A Ñ</u> <u>H A G</u> <u>A H O N T</u> XXX
111	XXX
111	=====

111 TRO AR BED DINDAN VOR

111 Al lestr nukleel amerikan Triton en deus graet tro ar bed dindan
 111 vor e 84 devezh, eus ar 16 a viz C'hwevrer d'an 10 a viz Meurzh er
 111 bloaz-mañ. Heuliet en deus tostik-tost an hent heuliet gant listri ar
 111 Portugalad Magalhães, pa rejont tro ar bed dre vor evit ar wech kentañ
 111 e 1519-1521. An Triton ne ziveuzas nemet div wech, da zilestrañ ur
 111 martolod klañv dirak Montevideo, Uruguay, ha dirak Kadiz, Spagn, da
 111 ober enor da Vagalhães, a yeas en hent diouzh ar porzh-se. Chom a reas
 111 dindan vor e-pad 83 deiz 10 eur 15 munutenn, well-wazh 10 m. dindan ar
 111 gorre, gant ur buander a 18 skoulmad. 183 den a oa el lestr. O vezañ ma
 111 vije bet re arvarus tremen dre strizh-mor Magalhães, avat, an Triton a
 111 dremenas er c'hreisteiz d'ar C'hab Horn.

111 AR MOR ARKTEK

111 Ur veaj a zo bet graet e mizioù kentañ ar bloaz-mañ dindan vor
 111 gant al lestr nukleel amerikan Sargo er Mor Arktek. Ur bern traoù nevez
 111 a zo bet kavet en 31 deiz ma padas ar veaj. Strad ar mor a zo plât ha
 111 priek tostik dre-holl. Pesked a voe gwelet, met n'int ket stank. An
 111 dour ne chom ket sioul, pell ac'hano. Bez' ez eus froudoù, a zo ingal,
 111 daoust ma'z eont buan-tre. Ar gwiskad skorn a zo dizingal, avat, a 3 m.
 111 a devder well-wazh, met kalz tevoc'h a-wechoù. Ur wech e voe kavet ne
 111 oa nemet 1 m.50 etre ar skorn hag ar strad.

111 LAMP ATOMEK

111 Ul lamp atomek "lugernusoc'h eget kreiz an Heol" a vefe bet ijinet
 111 er Stadoù-Unanet. Ar bannoù kaset ganti, e-lec'h skignañ evel ar re
 111 kaset gant ul lamp ordinal, a ya holl kenstur dirazo. E-giz-se, e
 111 c'hellfed sklerijennañ un darn vihan eus al Loar.

111 TROIDIGEZHIQU GIZ NEVEZ

111 Gwellaet e vez tamm-ha-tamm ar mekanikoù elektronek evit treiñ
 111 skridoù diwar ur yezh en ur yezh all. Treiñ ger-ouzh-ger a zo aes.

Lakaat ar mekanik da gompren reolennoù ar yezh a zo kalz diaesoc'h. Ar 111
 skeudennoù-lavar (evel, da skouer, "bezañ ganet d'ar Sador" evit lavarout 111
 "bezañ diskiant") a zo diaesoc'h c'hoazh. Un dra diaes ivez eo an 111
 doareoù disheñvel da stummañ al lizherennoù : lizherennoù-moul roman, 111
 italek, h.a., lizherennoù graet gant an dorn, gwechoù bras, gwechoù etre, 111
 gwechoù bihan. Daoust da se, ar mekanikoù a reer bremañ a c'hell labourat 111
 ken buan, a lavarar, ma ne vo ket a-walc'h a dud evit lenn an troidigezh- 111
 ioù. 111

3.400 Km. AN EUR

Ur c'harr-nij amerikan a reas 3.400 Km/eur e Kalifornia e deizioù 111
 kentañ miz Eost, ar buanañ ma oa aet biskoazh ur c'harr-nij un den ennañ. 111
 Taolet e voe a-zindan askell ur c'harr-nij all, 15.000 m. a-us d'an Douar. 111

O SEVEL BETEK 39.000 m.

Un nijer amerikan, ar Major Robert White, a savas gant ur c'harr-nij-111
 -fuzenn betek 39.000 m. a-us d'an Douar d'an 12 a viz Eost. Ac'hano, 111
 emezañ, e wele an Douar, an oabl glas-sklaer dindanañ, ha pep tra a-us 111
 d'e benn a oa glas-du. 111

KOARAÑ AVALOU

Ur mekanik evit koarañ avaloù a vo graet dizale e Bro-Israel. An 111
 avaloù koaret evel-se a zo bravoc'h da welout, a chom fresk pell amzer, 111
 ha (pezh a zo a bouez d'ar marc'hadour) ne gollont ket kalz eus o fouez. 111
 Orañjez, tomatez, meloñs, h.a. a c'hell bezañ koaret ivez. (Kaset dimp 111
 gant E.Konan). 111

≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ 111
 ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ ≡ 111

KAFE KALET

Ar c'hafe a zeuas da vezañ anavezet e kuzh-heol Europa war-dro 111
 diwezh ar 17-vet kantved. Er bloaz 1691, un Alamanez a voe kaset dezhi ur 111
 pakad greun kafe gant mignoned. Skrivañ a reas d'ezho d'o zrugarekaat. 111
 Klemm a rae koulskoude en he lizher. "Lakaet em eus," a skrive, "ar piz 111
 hoc'h eus kaset din eus Bro-Durkia da boazhañ gant kig. Met, daoust m'int 111
 chomet pell amzer war an tan, ne dint ket aet blot. O c'havet em eus 111
 gwall galet." 111

LEZIREGEZH

Edod o kontañ dirak Donizetti en doa savet Rossini un opera en eizh 111
 devezh. 111

"N'on ket souezhet," eme Donizetti. "Rossini a zo bet lezirek atav." 111

----- 111
 C.C.P.P. No.36.242. 111

Le Gérant : Mlle Y.Martin, 21, rue de Dixmude, St.Marc, Brest. 111

Ronéotypé par Rinciaux, 1, rue Alain Fournier, Brest. 111